


KENTELIOU EIL DEREZ

**BREZHONEG**

( 4 K )

SKOL AN EMSAV



## R A K L A V A R

- - - - -

Al levr-mañ zo an hini kentañ eus ur rummad dornlevrioù nevez aozet gant kelennerien SKOL AN EMISAV. E bal zo deskiñ ar yezh vrezhonek hag elfennoù kentañ hon lennegezh da skolidi an eil dorez, pe resisoc'h, da vugale etre 13 ha 15 vloaz (live ar pevare klas er skolioù gall, pe ar 2nd form er skolioù saoz). Graet eo eta e sell d'ur skol hollvrezhoneg.

E-kerz ar bloavezh-skol a zeu e teuy er-maez al levrioù o tennañ d'an danvezioù all : saozneg, istor, jedoniezh, douaroniezh h.a. Boulc'het eo ivez al labour a sell ar c'hlasoù izeloc'h, ha spi hon eus e teuy al levrioù-se er-maez hep dale.

Evel-se, tamm-ha-tamm, e vo gallet diorren un deskadurezh vrezhonek, ha brezhon, a gloto gant ezhommoù ar skolidi.

Penaos ober gant al levr-mañ ?

Gwellañ tra d'ober gantañ zo skol vrezhoneg dre gomz. Evit ar mare avat, n'eus ket skolioù hollvrezhoneg. Ra ziskouezo al levr-mañ an hent ! Pa vo gallet digeriñ ur seurt skol en ur gêr pe gêr eus Breizh, e c'hall al levr talvoud da steuñv d'ar c'helenner ha da zastumad lennadennoù ha poelladennoù d'ar skoliad.

Evit ar mare eta e talvezo dreist-holl d'ober skol vrezhoneg er gêr hag er skolioù dre lizher. Ennañ e kavo ar skoliad danvez a-walc'h evit ur bloavezh-skol a-bezh, o kentañ un curvezh bennak bemdez. Reizhet e vo ar poelladennoù gant kelennerien SKOL AN EMISAV. Ar re enskrivet e vo kaset dezho e koulz vat disklêriadurioù all a verko resisoc'h al labourioù d'ober hag ar c'houlz ma vo ranket kas ar poelladennoù. Ouzhpenn e vo roet dezho ul levrig skrivadennoù embannet distag.

Evit d'al levr-mañ bezañ aozet evit krennarded, e c'hall tud all ober gantañ er skol dre lizher, ma vez c'hoant ganto deskiñ pe peuzeskiñ ar brezhoneg lennegel. A-raok enskrivañ evelkent e vo mat dezho gouenn ali digant ur c'helenner eus SKOL AN EMISAV.

o o o o o o o

Meur a rum labourioù a gavor er roll-studi : yezhadur, studi ar skrivagnerien, dibunadurioù, ha poelladennoù, anezho skrivadennoù gant goulennoù, ha pennadoù-skrid liesseurt. Lakaat ar skolidi d'ober anaoudegezh donoc'h gant o yezh, setu e berr, pal an hol labourioù-se.

Rannet eo ar c'hontelioù etre 36 sizhunvezh, hag e pep sizhunvezh e kaver 7 kentel. Kemañ a ra niver al lennadennoù hag an dibunadurioù, hogen bep sizhunvezh e kavor ingal ur gentel yezhadur, ur skrivadenn hag un tamm pennad da sevel.

E pep kentel e vo kavet meneg eus al labour d'ober, hag ouzhpenn, evezhiadennoù ha displegadurioù d'ho skoazellañ onho labour. Met mard oc'h enskrivet e kevrenn eil derez SKOL AN E.S.A.V, e vo kaset deoc'h disklêriadurioù all war al labourioù a vo ret, danret pe diret ober, war al labourioù a vo da gas d'ar reizherezh pe a vano ganoc'h h.a.

Setu koulskoude un nebeut alioù hollek war an doare d'en em gemer gant al levr-mañ :

- Studi ar skriva-gerien.

Daou rum labourioù zo er rann-se : lennadennoù displeget a c'houlemañ dielfennañ don ha spis ur pennad dibabet, ha lennadennoù renet, a zo a-wechoù tannoù eus oberennoù klok.

Er mizioù kentañ e vo studiet div oberenn en o fezh : Bilzig ha Kavr-kañv an actrou Maer. Studiet e vint e stumm lennadennoù displeget ha lennadennoù renet a bep eil. Goude-se e tey pennadoù distag tennet diouz oberennoù hon gwellañ skrivagnerien.

Evit an holl labourioù-se oc'h erbedomp ac'hanoù da gaout ur c'haier ma vo skrivet warnañ an displegadurioù. A-hend-all e vo mat deoc'h ober alies gant ur geriadur, bep tro n'ho po da lenn ur pennad dibabet. Tapit ivez ar pleg da lenn a vouezhuhel, gant an ton a zere.

Er sizhunvezhoù kentañ e kaver e-leizh a vumadoù, a displegadurioù d'ho skoazhiañ ha d'ho heñvelien ho labour. Bep ma eot war-raok e vo nebeutoc'h-nebeutañ diouto. Ret e vo sevel ar poelladennoù hervez an doare boazet er sizhunioù kentañ.

- Yezhadur ha geriadur.

Gwechall e veze lakaet ar skolidi da embroger o c'houn, o "menor". Se n'eo ket mi diouz ar gelennoù a-vremañ. Gwell eo kalz mont d'an

testennoù, d'ar skouerioù a gavor er skridoù pe d'ar framadoù er yezh komzet. Bep tro ma vo gallet e vo mat d'ar skolidi tostaat ar skouerioù-se, o stroliañ, o c'heñveriañ, ha dizoleiñ pe gwiriañ drezañ e-unan ar "reolen" yezhadur.

- Dibunadur.

Kavet e vo paurvial alioù a-zivout an distagadur. Pa vo bet desket ur varzhoneg pe un tamm pennad komz-plaen e vo tu eilskrivañ anezho war ur c'haier, diwar goun. Mod-se ho po tro da embroger ho kounerezh ha da wiriañ ho reizhskrivadur.

- Reizhskrivadur.

Pa vo bet lennet deoc'h an destenn gant hini pe hini (pa vo tu), e respontot d'ar goulennoù. Pa zeuy ganoc'h ar boelladenn reizhet e tivankot ar fazioù ho poa graet goude klask en ho levr ar reolennoù ho poa ankouast.

- Pennad-skrid.

Heuliañ pizh, evel eo dleet, an alioù roet deoc'h e pep kentel. Div sizhun war deir e vo savet ar pennad war ar brouilhed, ha ne vo ket reizhet. Bep teir sizhun avat e vo ret sevel ur pennad klok ha kempenn.

Ar sizhun gentañ n'ho po ken nemet klask ar mennozioù, hag an titour a bep seurt, ha dibab ur steuñvern. Kendalc'het e vo an eil sizhun dre urzhiañ ar mennozioù ha dre gregiñ da sevel ar pennad. Etre pep kentel e c'hallot prederiañ c'hoazh, ha marteze e tiwano mennozioù nevez. Ar sizhun diwezhañ e vo pearskrivañ ho pennad (peurskrid). Merit hag adverit ar frazennoù a-raok o adskrivañ da vat war ar follem. Bez'e tleo ho poelladenn bezañ kaer ha difazi, naet ha kempenn, ha dreist-holl, hep fazioù skrivadur !

Kemerit ar boan, hag ar pleg, da heuliañ a-dost al labour raktreset gant o pep kentel. E-giz-se e vo urzhietoc'h ha frouezhusoc'h ho labour.

A-benn un nebeut sizhunvezhoù e vo mat deoc'h, ur wech da vat, sellout a-dost ouzh an notadurioù war ho poelladennoù reizhet. Ma ne gomprenit ket tra pe dra, met m'hoc'h eus ezhomm eus disklêriadurioù hiroc'h, skrivit d'ho kelenner.

Labourit ingal ha war ho plaen ; lakit aked en ho labour, evit ma vo brav ha kempenn.

Hon spi eo e vo kavet kalz skolidi yaouank oc'h ober gant al levr-mañ, ha dreist-holl kalz skolidi yaouank o kas an erv da benn.

F. FAVEREAU.

SLIZHUNNEZH KENTAN  
=====

Kentel 1

YEZHADUR

War ho roll-studi ez eus daou graf pennañ : ar verb hag ar frazenn. Studiet e vint en o hed. Hogen ret e vo dero'hel soñj eus ar c'hrefen all, bet studiet a-rak. Pa vlot war var eus natur pe gefridi ar ger-mañ-ger n'ho pe nemet digerif ho levr yezhadur.

Er gentel-mañ e vo studiet e Yezhadur Bras ar Brezhoneg "Diazez an Displegadur", §§ 171-178.

Foglladenn :

( Savit ur brouilhed a vano ganeoc'h, ha goude-se, sellit ouzh ar respontoù en ho levr.)

- 1) Petra a dalv da verkañ ar gour er skouerioù-mañ :
- Neuze e tavas - Ni a gerzhe - An dud a labouro - Pa vin skuizh - Komz a raent.
- 2) Peseurt verboù zo dezho un displegadur anreizh ? Roit skouerioù.
- 3) Savit pemp frazenn en ta-gouzañv.
- 4) Pegoulz e vez graet gant an tu enober ? Roit teir skouer.
- 5) Pet stumm zo d'an doare-gouro'hemenn ? Roit skouer ar verb "diwall".

+ + + + + + + + +

Kentel 2

LENNADENN DISPLEGET

Alioù :

Pal ar goulannoù eo ho lakmat da intent mat ar skrid, da welout fresshoc'h e binvidigezh hag e ster. A-rak respont avat e rankit lenn ar skrid meur a wech ha kompren kenent ger a zo ennañ. Neuze hepken e respontot d'ar goulannoù : all-skridvañ a reot ar gouleñ war ho keder, ha sevel ur respont aklaer ha kompenn. Ma n'ouzoc'h ket piv eo an aczer, titourit anezhañ : piv 'oa ? Pe vare an deus bevet ?... En diwezh e lennot ar skrid a vouezh uhel. Dre studiañ evel-se e teuet a-benn da verzout holl arvezioù ar skrid.

KROAZ AN HENT ( Barghez Breizh )

Evnig a gan er c'hoad uhel  
Ha melenik e zivaskell;  
E galonig rus, e benn glas  
Evnig a gan, beg ar wezenn vras.

Abredik mat eo diskennet  
War lezenn treuzoù hec'h oaled,  
Keit ha na oan gant na fater :  
Evnig mat, petra a glasker ?

Kement a c'herioù 'n deus laret  
 Ma'z eus rozennoù er boched :  
 - Kement un dous, va nignon,  
 A lakay laouen ho kalon.

Gwelen en eus, 'tal kroaz an hent  
 Dilun, ur plac'h evel ar sent;  
 Me 'yay disul d'an ofereñ  
 Hag he gwelen war an dachenn.

'Mañ he daoulagad en he fenn  
 Siklaeroc'h eget dour er werenn,  
 Hag he dentigoù naet ha gwenn  
 Zo kaeroc'h eget perlezenñ.

He daou zorn hag he divjod ru  
 Gwanoc'h eget laezh er pod du;  
 Ya, mar he gwelfoc'h, va nignon, laouen  
 Laouen a zoufe ho kalon.

P'an bofe kement a vill skoed  
 Hag en deus maridiz Pontkalek;  
 Ha p'an bofe ur vengleuz aour,  
 Ma n'en eus ar plac'h ne apour.

Na pa savje war dreuz hon nour  
 E-lec'h reden glas, bleunioù aour;  
 Na pa savjent leizh na liorz,  
 Ma n' n eus na dous, ne rñ forzh.

Kement tra 'dous e lezenn ret  
 An dour dous ar fountoun a red,  
 An dour 'ya d'an traoñ, d'an izel,  
 An tan d'an noñv ha d'an uhel.

Ar goulm a c'houl un neizhig klouz  
 Ar c'horf marv a c'houl ar fouz  
 Hag an ene ar baradouz.  
 Ha me ho kalonig, na dous.

Me a yelo pop lun vintin  
 Da groaz an hent, war na daoulin;  
 Me a yelo d'ar groaz nevez  
 Abalamour d'an c'harantez.

Goulennoù :

- 1) Pet lodenn zo er ganaouenn-se ?
- 2) Displegit ar gerioù-mañ : mengleuz, boched (roñt heñvelsterioù).
- 3) Peseurt ster zo d'ar verb "goul" en lōvet poz ?
- 4) Klaskit perak e kaver kalz stummoù -IG er ganaouenn ? (evnig, melenik, kalonig, abredik, dentigoù, neizhig h.a.)
- 5) Peseurt skudennoù a dalv da liavañ ar plac'h yaouank ?
- 6) Penaos e komprenit an tri foz diwezhañ ? Peseurt ster reñf dezho ?

+ + + + + + + + + +

Kontel 3

PENNAD-SKULD

Alloù :

Er sevel ur pennad-skuld ez eus tri frantad :

a) klask ar memizioù : da gentañ, eo ret melzañ mat an destenn kinniget deoc'h. He lenn piñh a randit. M'ouzhet, adskrivit anezhi war ur brouilhed. Goude-se laoskit ho faltazi hag ho preder da vont en-dro, ha notit war ho prouilhed, kaj-mesk, ar memizioù a zeu war ho spered.

b) gweñvidi : dafar n'eo ken ar memizioù-se; o urzhiañ hag o frannañ a randit bremañ. Penaos o strolleañ ? Memizioù a denn an eil d'egile, keallioù eus an hevelep tachenn a vo strollet a-gevret, evel just. Mont a reñt d'ober lodenn pe lodenn eus ar skuld, rak ul lodenn zo un terkad memizioù erest dre ar poell pe dre an anzer.

c) sevel ar skuld : aes kanañ e vo nous; n'ho po ken nemet sevel frazennoù reizh ha kompenn o tizplogeñ ar memizioù bet dibabet hag urzhiet ganaoc'h.

Pelladenn :

"G'hoarvezet eo ganaoc'h gwelout ul labous en ur wezenn. Kontit penaos e oa (rum, nous, liv, kan h.a.)."

Er gentel-mañ, n'ho po nemet klask ar memizioù ha kregiñ d'o urzhiañ.

+ + + + + + + + + +

Kontel 4

DIBUNADUR


Deskiñ dindan efvor pevar foz kontañ ar ganaouenn bet displeget ganaoc'h a-rak. Setu anañ un nebeut alloù :

- na bouezit ket atav e dibenn ur werzenn; g'it diouzh ar poentadur, rak ne g'ot ket atav ar frazennoù hag ar gwerzennoù. Arabat peouez goude "diskennet", da skouer.


- miret ez eus bet stummoù eus rannyezh Kerne, net n'o c'haver, koulz lavaret, nemet en dibenn (dour, klouz, fouz, barado...).

- enkreiz ha levezeg a gaver er varzhonag-mañ; n'ha dibunit ket en un doare unton. Pouezit war ar gerioù pennañ. Lakit a-wel laouenidigezh ar paotr pe gomz eus ar plac'h yaouank.

- n'ho c'h eus c'hoant da ganañ ar ganaouenn, setu anañ an ton :



Ev nig a gan er c'hoed u- hel Ha me lenik e ziv as- kell E



ga lonig ru, e benn glas Ev- nig a gan bag ar venni vras...

## Kontel 5

LENNADENN RENET : Bilzig gant Fañch al Loe.

a) Lenn, en Istor Lennorezh vrezhonek an amzer-vremañ, ar noll 184, p. 135. Goude-se, skrivit un diverrañ eus ar pennad war ho kaer (buhez F. al Loe, e oberennoù all...).

b) Ar romant e-unan : Lenn an digoradur ("Tro bourk Lokreg"), ha klask gwelout pegoulz e tremen an istor.

c) Brastros ar romant :

Tro bourk Lokreg.

Lodenn gentañ : BUGALEAJ BILZIG.

Bugaleaj Bilzig. E c'hinnivelezh.  
Bilzig e ti e vann-gozh Marc'harid.  
Tiegezh Izabel.  
Bilzig ha per an astroù person.  
Bilzig dirak ar barner.  
Bilzig oc'h a da glask an aluzen.  
Bilzig oc'h a d'an ti-nezañ.  
Bilzig hag e vennozhioù.  
Bilzig atav o pichotañ tra pe dra evit an tiegezh.  
Bilzig oc'h a d'ar c'hatekiz.  
Bilzig hag ar veltouterien.  
Bilzig ha Pipi.  
Bilzig ha kuzeg ar barner.  
Bilzig gwasket.  
Bilzig, Gargann ha nab an Astroù.  
Ar biladeg.

Eil lodenn : YAOUANKIZ BILZIG.

Bilzig, nous e bourzh "ar Gwennili".  
Nozvezh ar morgazhed.  
Bilzig oc'h a da glask beñt ha gwial evit ober kevell ha boutegoh.  
Bilzig war al Lev-Draezh.  
Neplog ar vataloded diwar-benn ar sent kozh.  
Bilzig ha Yann-o-benn-o-unan.  
Eured Jenedig.  
Bilzig e bourzh "ar Vran".  
Bilzig or gêr, goude peñse "ar Vran".  
Izher Bilzig d'e vann Izabel.

+ + + + + + + + +

## Kontel 6

SKRIVADENN

Ober gant ar stagadenn "Skrivadennoù", ha goude-se, respont d'ar goulennoù.

+ + + + + + + + +

## Kontel 7

LENNADENN DISPLEGET : "Tonkad Harid" gant Yann Mikael (ALIM 132/35-6).

Rene a droas diwar e gamoù hag a yeas da zastum e vinvioù. Reif a rejomp, Gwilh ha me, peadra d'an den da zebriñ ha da evañ, ken sec'hedek ha marmacriet e oa, ha goude ez ejomp gant an hent, Rene e penn, Gwilh war-lerc'h, ha me gant ar morlan. Ne fellas ket dezhañ azezañ em c'hichen. Chom a reas hanter c'hourvezet war leur al log, evit mirout na vefe gwelet gant an dud, kement a son en doa da vezañ anavezet. Buan e voe treuzet kêr, ar palmezegi, ha tizhet an ti-polis. Hon treizhad a oa atav war leur al log. Gortoz a raen gant un tamm nec'h ar c'houlz na rankfe Rene tremen dirak ar post. Harzet e vo pe ne vo ket ? An archer a roas dezhañ an urzh da chom e-sav. Ar morlan, o welout kement-se, a bennfolles, mall warnañ tec'hout kuit. Mui boan an boe da herzel outañ d'henn ober : gwelet e vije bet gant an archerien, ha tec'hout a vije bet en e zikouez kablus eus un dra bennak. O c'houzout n'o doa ket ar boliserien aljeriat merien en o bizied evit tennañ, e welen endao pezh a vije c'hourvezet. Pa voe deuet va zro da vezañ kontrolllet, ha me atav ouz ar red-gtur, o tennas an archer betek ennon da c'houlema digerin va faperioù : kartenn astro-bleniañ, kartenn piv-oc'h ha kartenn-labour. Sellout a reas pizh outo hep rannañ grik, hag o daskoras din neuze en un doare seven.

D'an anpoent-se e verzas ar morlan kluchet war al leur, oc'h ober van da vezañ klafv pe vezv. Goulemm a reas an archer ouzhin piv e oa an dar-se; respont a ris e oa anezhañ ur paotr o veajiñ dre samm, an boa keneret en c'harr war ribl an hent. Implijad e oa e Hassi Messoud, lec'h na tistoe bremañ goude un tamm ehan-labour. Evit e zigareziñ, e lavaris d'an archer en doa evet onchañs mioc'h eget bonz gant mignoned a-raok o c'huitaat. Daoust din gouzout e oa difennet groffs, hag a-berzh-stad, d'ar Vuzulidz evañ alkoool, e kave din na vefe ket ken grevus evit bezañ tanallet evit nevezenti ha bezañ tanallet evit un afer all. Ober a reas an archer tro al log, digeriñ a reas an nor all hag e krogas da hejañ ar morlan, o c'houlenmata anezhañ a vouzsh rok en arabeg. Van a re atav ar morlan da vezañ nozv evel n'eo boa goure'hemennet dezhañ. En diwezh e roas e baperioù d'eh archer. Hemañ o c'hemeraz hag a yeas er post. Ur pennadig goude e teuas on-dro gant ur roll-anvioù, hag e krogas d'eo c'heñveriañ gant hini ar morlan. Hep arvar e oa ar roll-se anvioù en dud klask warno gant ar polis, goude taol-dispac'h c'hwitet Ait Ahmed, ha soñjal a ris n'eo doa ar morlan netra da welout gant an dud-se : tu a oa evitañ enta da dremen hap tanall. An amzer a yeas e-biou; pizh e selle an archer ouz e roll. Diverrañ a reas kement ar c'hwizenn d'ouzh va c'hroc'henn na oa gloc'let va roched; war-dre dok our hanter e oa, an heol a domae start, ha poumeroc'h c'hoazh e oa an aer dindan houarn al log. Erfin ez echuas an archer gant e kontroll-anvioù; n'eo doa kavet netra da rebech ouz ar morlan. Flegañ a reas e falletoù, daskor a reas e baperioù d'an zreizhad, hag e roas urzh din da vont kuit. Dere'hol a ris war un huamad a zisenn, ha skarzhañ hep mi gortoz. Gwilh ha Rene, a oa o c'hedal oc'honon pelloc'h, a loc'has d'eo zro. Ober a ris penn kilometrad d'an nebeutañ kent d'ar morlan asantiñ teurel e bouez war an azezem, ken tem e oa bet evitañ an tremen dirak ar c'kontrollbest. Krenañ, lefiñ ha c'hoarzhin a reas war un dro, ken laouen e oa.

Goulennoù :

- 1) Fet lodenn a ya d'ober an destenn ?
- 2) Displegañ ar gerioù-mañ : palmezegi, kablus, treuzhad, kontrollbest.
- 3) Disklêriañ ster an troioù-lavar-mañ : "a droas diwar e gamoù", "n'o doa ket merien en o bizied evit tennañ", "teurel e bouez war an azezem".
- 4) Petra sañter e kalon ar morlan ? Pennas en en zalc'h ar blenier outañ ?

BILL SIZHUNVEZH  
=====

Kentel 1

YEZHADUR

Studiañ en ho levr an anv-verb hag an adanv-verb (pe anv-gwan-verb), §§ 179-186.

Boelladenn :

- 1) Grit ur roll eus dibennoù an anvioù-verb a anavezit.
  - 2) Roit teir skouer eus verboù na kema an dibenn hep na kemmafe ar ster, ha teir skouer all na kema ar ster war un dro gant an dibenn.
  - 3) Petra eo penurann ar verboù-mañ : regif - stekif - birvif - sevel-gervel - leuskel - gonit - gwirif - mezhur ?
  - 4) Pennas e vez savet an adanv-verb ?
  - 5) Klokait ar frazennoù-mañ gant ar stum a zere ( adanv pe adanv-verb ) :
- (digor pe digoret) An nor a oa bet ... ganti.  
Arabat lezel an nor ... e-pad an noz.
- (krog pe kroget) Pegoulz o deus ... da vont d'ar skol ?  
... eo da leñvañ.
- (stag pe staget) Pelec'h en deus ... ar c'hi ?  
Ar nare'h a oa ... ouzh ar voger.

+ + + + +

Kentel 2

LENNADENN REWET : Bilzig, pennadoù I ha II, "Bugaleaj Bilzig. E c'hiniy-elezh" ha "Bilzig e ti e vamm-gozh Marc'harid".

Lenn aketus an daou bennad-se. Diwar vont, notit war ho kaer an darvoudoù pennañ eus istor ar bugelig. Klaskit kompren ar gerentiezh a zo etre an holl dud er romant : a bouez eo melzañ an istor adal ar penn-kentañ. Klaskit penaos e lak F. al Iac al lenner da druezlñ ouzh reuzeudigezh an enziavad.

+ + + + +

Kentel 3

PENNAD-SKRIT

Adlennit an alichù a zo bet roet deoc'h p. 9. Hiziv enaoc'h gant an eil prantad : strollañ war ho kaer ar nemmoziou a zo deut d'ho spered. A bouez eo al labour-se, hag arabat e vo hen ober diwar herr. Mar deu nemmoziou all, strollit enezho ivez. Neuze, krogit da sevel ar steuñv. Ma welit enañ an dra-mañ-tra e-maez ar gudenn, na dervit ket, lamit anezhañ raktel.

+ + + + +

Kentel 4

LENNADENN DISPLEGET : Bilzig, pennad III, "Hiegezh Izabel".

Er pennad-se e weler Bilzig deut paotrig. Hir a-walc'h eo avat. Lenn a reot an deroù en ho levr, ha goude, e studiet an arroud-mañ :

Un devezh 'ta, Bilzig ac'h eas gant ar re all da c'hoari, ha, pa erruas ar vamm, goullio an ti : droug enni, evel just, sklaizh e oa hag o pecuez klevout tamall ha bugale da vevañ bet, gant knafarted all ar bourk, o laerezh piz ha fav e park ar Mestrogeg. Ha beo'h war Bilzig !

- Pennas, nic'hlog, foreant zo ac'hamout, o laerezh out bet, na 'peus-te ket a vevh ?... E-loc'h teuler evezh ouzh ar re vihan, eo'h ez gante da rodek, da dourvare'hat; gante eo'h ez er bagoù bihan, na our, bouzif a ri anezhe !...

Hag e gwirionez, re alies, pa ne veze ket o mamm ar gêr, e weler anezhe o ruzata war ar c'hoarreg, o c'haloupat war an aod, glet-dour-teil, pe o ruzañ o botoù leun a frigas hag a fank war an hentoù.

Evelkent gaou a oa bet lavaret d'ar vamm : pizenn na favenn n'o devoa taffvaet en deiz-se; met kmaer o devoa bet Bilzig hag an daou all stourm ouzh o mamm e oant bet tamallet hep abeg, Izabel a damas krog en un tamm kordenn vean.

- Na'n skoit ket, mamm Izabel, na ho ped, na'n skoit ket, en an' Doue, nan in ken d'an traezh, na 'chomo er gêr.

Ne anavez ket penaos, pa zillero an ti, peurliesañ e veze evit ober plij-adur d'eo c'hoar ha d'eo vreur. Eñ na c'hoarie ket, ral e veze, Katellig atav gantañ war e chouk. Izabel en en zouete a gement-se; un taolig pe zaoù he deus roet d'ar paotr, tuez dezai outañ.

- Faour kaezh bugel reuzeudik !

Ha, gant korn he savañjer, e seo'has e zaozou :

- Faour kaezh bugel !

Ur pokig dezhañ. Hag ar paotr :

- O, mamm Izabel !

Hag e ouste gwalc'h e galon.

Ne raio ken, nann, ne raio ken, a-grenn, er gêr e chomo, nan aio ken er bagoù, nan aio ken da c'haloupat. Gant e vreur hag e c'hoarezed, en traezh e c'hoarie, pa vo brav, hag er gêr pe vo divalav. Touet an deus, kreñchet en deus en e zorn dehoù, ha savet anezhañ dirak ar groez, met, siwazh ! naset ur bugelig nan eo ! Ha petra a fell deoc'h ? Ur paotr dek vloaz nan eo ket evelkent un den graet. Kalon vat en devoa, karantezus e-keñver e vamm, e vreur hag e c'hoarezed; karout a rae anezho a-greiz e galon : siwazh ! ankouais e oa ha, pa veze brav an anzer, tann an heol, pa vele ar vugale all o c'hoari en traezh pe er bourk, kelennoù, urzhioù, goue'hemmoù Izabel e-nebeudoù a sile dre e goun.

- Deus da c'hoari ! a lavare dezhañ ar gaffarted all.

- Domp d'an traezh, Bilzig ! a c'hourgonne Madalen ha Yannig.

- Brav e vo de-hont, war an traezh, c'hoari gant ar re all ! a c'hwezhe dezhañ, en e skourm, humadenn ar c'hoantegozh.

Ha Bilzig, nebeut-ha-nebeut gonezet, Katellig war e chouk, an daou all ouzh e heul, ha d'an traezh, ha da c'hoari. Rebec'h a ra dezhañ e goustiañs. O ! ne vo ket pell : bremaik, diouzhtu e vo distro. Bremaik, diouzhtu, pegoulz ? Ankouet gant ar paotr, en ur c'hoari, e vennoziou hag e le. Ankouac'haet an anzer d'ra-enet. Ankouac'haet, o ! na pebezh ger ! O ankouac'h, evurus an hini a zarempred-ez, evurus an ene eo'h eus displeget da vrumenn vadelazhus warmañ.

Ankouac'h, bugelig Doue, pleg da zivastell, deus war va barlenn, harp da benn war va c'halon, deus ha ne a gano dit. Luskallet gant va c'hanaouenn, karanteuz va buhez tranenet, serr da zaoulagad, kousk, bugelig, kousk da benn war va c'halon.

Chom aze, evit mirout na deufe ar c'houm, eus goualad va eñvor, ar c'houm

goapeer ha chifus da ziskouez din gant e viz, war an hent an eus heuliet, ar bleuvennoù n'em eus ket bet kuituilhet, ar frouezh mat ha dourek an eus bet disprizet. Kousk war va barlenn, ankounac'h, bugelig Doue, evit na deulo ken ar c'houn... Ha koulskoude, koulskoude, dihum, ankounac'h, dihum, dihum !... Sav war da zivaskell, kae ! kae ! Lez, lez ar c'houn, ya, lez ar c'houn da sklêrijennañ va memez.

Ha da guzh-heol e vuhez, piv na gar, a-rack mont da gouaket, lezel ar c'houn da vleniañ e spered a-us e zevezhoù evurus ? Ha, war dachenn ledan ar vuhez, piv na gar, ur wech c'hoazh, dibabañ e-touez ar bleunioù dic'hwez ar bleuvennigoù a c'hwez vat, o deus sklêrijennet e hent ha sedernaet e galon ?...

Goulennoù :

- 1) Displegañ ar gerioù-mañ : michieg, foreant, tourvarc'hat, gourgomz, chifus, huadenn a c'hoantegezh.
- 2) Peseurt diforc'h zo etre : kalennoù, urzhioù, gourc'hemennoù ?
- 3) Peseurt paotr eo Bilzig ? Penaos en em ren gant e vreur hag e c'hoarvezad ?
- 4) Displegañ emzalc'h ar skrivagner ouzh Bilzig.

+ + + + +

Kentel 5

DIBUNADUR : Bilzig, adal "Evelkent gaou..." betek "... gwalc'h e galon".

An taol-mañ eo bet kastizet Bilzig gant e vamm. Pedif hag aspedif a ra ar paotrig. Van ebet ne ra Izabel... Geo, truez he deus ouzh ar bugelig.

Teneraus eo an arroudenn-se. Klask a reot drevezañ mouezh ankeniet Bilzig ha mouezh Flour ar vamm.

+ + + + +

Kentel 6

SKRIVADENN

Grit da unan bemak lenn deoc'h testenn ar skrivadenn ha respontit d'ar goulennoù.

+ + + + +

Kentel 7

GWERZAOUEREZH

Lenn e Diarezoù ar sevel gwerzloù ar pennad "Gwerzniezh ha Barzhoniezh", ha studiañ "Kehed ar nouezhiadennoù", pp. 7-11.

Poglladenn :

- 1) Peseurt diforc'h zo etre ar gomz voutin hag ar varzhoniezh evidoc'h ?
- 2) Petra eo ur vouezhiadenenn ? Petra eo un arsav ? Skouerioù.
- 3) Rannit ar nouezhiadennoù er gwerzennoù-mañ : "Daoulagad, diskouarn, beg, da virviken zo kloz" (Kalloc'h) "Ur bistrak a zistag, lendrennek, div notenn" (L. Herriou).

TRIDE SILHOUNEZH  
=====

Kentel 1

YEZHADUR

Studiañ an anzerioù esun, §§ 189-193.

Poglladenn :

- 1) Disklêriañ ster ar verb implijet er frazennoù-mañ (boaz, diviz en dazont, -verb-lec'hiñ...) :

Hiziv en eus kalz labour d'ober.  
 D'ar marc-se e veze alies o chasael.  
 Edo o chon tost da Gastell-Paol.  
 Ar bleizl a zebr loened.  
 Ma teufe d'ober glav ez afemp en zi.  
 M'az pijs labourer startoc'h e vijes bet degemeret.  
 Gwechall o deveze an dud kalz bugale.  
 Mont a ran diouztu.  
 Emañ o paouez hen lavarout din.  
 Pegoulz edo an eured ?

- 2) Ikaat ar frazenn-mañ en holl anzerioù esun (trede gour lies) :  
 Ne redont ket buan !

+ + + + +

Kentel 2

LENNAENN DISPLEGET : Bilzig, pennad IV. "Bilzig ha per an aotroù person".

Lenn deroù ar pennad en ho levr a-rack studiañ an arroudenn-mañ :

An noventil-mañ en em sklignas dre ar bourk : al laer a zo bet er presbital !  
 An aotroù Kont, p'hen klevas, a deuas da c'hoult an doare.  
 - Iaerezh an aotroù person !...  
 An aotroù a lavaras d'e vevel :

- Buan, it da gerc'hat barnar Tremedern. Arabat eo leuskel ar gañfarted da ober o fennoù skañv, ret eo reiñ dezhe ur gentel hag a bego oute. Gwialenn ar barnar a deulo a-benn anezhe.

Barnar an aotroù, an aotroù Kerjantjili ur paotr yaouank kozh viret, a oa anavezet gant an holl, ha dreist-holl gent kañfarted ar vro; hag heñañ ivez a anavezet mat anezhe, ne oa ket evit o andurif dirak e zaoulagad. Goap a raent outañ, pa'n dezo evet un dakedennig, ur barnac'hig a re (hag alies ar baotred o devoa abeg da ober goap outañ); difrezañ a raent anezhañ : monkus e oa un toumig; ha pa veze tormet mat d'ar paotr kozh, e redent war e lerc'h, hag eo'h sent da anbroug anezhañ, en ur ganañ :

Kerjantjili, ar barveg gwenn,  
 Galoc'h bras, porpant lienn.  
 Esa a ras tapout anezhe; siwazh ! pommer e oa e c'haloc'h, hag eo'h se  
 gent e hent, en ur c'hrozmatat :  
 - Ar gwialenn ! ar gwialenn, kañfarted  
 Divez ar paotr kozh, ar vugale ne dostaent ket outañ, nan sent ket, e  
 c'hellit kredif, da c'houlenn digantañ e aluzen, rak, pa zegouezhe dezhañ tizhout  
 unan bemak anezhe, ac'han ! nouze ar gwialenn a c'hoarlez; ha, pa veze ur c'hleam

eneq hini pe hini eus ar baotred, gwir pe c'haou, ar wialenn ac'h ae en-dro. Brezel 'ta etre ar vugale hag ar barner. Kemenn an aotrou Kont a dalveze urzh d'ar paotr kozh : ar wialenn a labourer !

Ar barner a ziskennas ar c'hrav gant e zaou archer : unan eus ar re-mañ a yeas e pep ti.

- Urzh d'ar vugale da zont d'ar presbital, a-berzh an aotrou barner !  
Trefu er bourk, enkreiz e kalon ar galfarted... A ! mar galfent !... Ya, met re zivoc'h eo, ne c'hallfont ket tennañ, eus fin foñs o bouzellou, ar per o devoa debret. Siwazh ! pell, re bell e oa erzu ar per-se. Ha pegement a blij-adur o devoa gouzavet o tastun, o kumtailh, o tebrif ar per, ar c'hastrilhez ! Ha bremañ... Ha mar deo gwir, evel na prezeg an aotrou person, penaos ar binijenn a vo mchet war ar pec'hed... Ar wialenn ac'h aie war-raok.

Leouen ha seder neurbet e oa an aotrou barner o tiskenn ar c'hrav, gant e zaou archer.

#### Goulennoù :

- 1) Krennañ e pemp linenn deroù ar pennad-se.
- 2) Petore den eo ar barner ?
- 3) Petra 'soñj ar baotred eus an urzh da vont d'ar presbital ?
- 4) Notit an troidoù-lavar iskis (frazennoù diverb pe diechu...), displegit anezho, ha diskirrit ar perag eus o implij.

+ + + + + + + + +

#### Kentel 3

#### PENNAD-SKRID

Adkemerit an notennoù eus ar sizhun dremenet. Adwelit ar steuñv ho poa savet, kennit anezhañ diouz ret. Krogit da sevel ar pennad-skrid war ur brouilhed. Adlennit anezhañ, reizhit anezhañ, da lavarout eo lenit kement adlavar ha dislavar a zo ennañ, ha klaskit ar gerioù a gloc rik-ha-rik gant pep nemnoz. Adskrivit ar pennad war ur follem, ha lennit anezhañ adarre.

+ + + + + + + + +

#### Kentel 4

LENNADENN DISPLEGET : Bilzig, pennad V, "Bilzig dirak ar barner".

Trouz hag enkreiz er bourk; petra eo'h a'er d'ober d'ar vugale ? Hag ar vugale hag o c'herent d'ar presbital.

Evel just, Bilzig a zo bet galvet ar c'hentañ dirak ar barner. Hemañ a oa azezet ouzh taol ar sal vras, en e gichen, a-zhòù, ar person, a-gleiz, ar c'hure, an daou archer, hag ar sakrist e toull an nor, hag er-maez, el liorz, ar vugale hag o zad, war an daol, dirak ar barner, div wialenn ozilh.

Bilzig a sellas a-gorn ouzh ar barner, hag a-dreuz ouzh an div wialenn.

- Lavar din, nabig, ha te zo bet e gwezenn ber an aotrou person ?

- N'on ket, aotrou.

- Ma, n'eo ket te, nabig, a zo bet tapet gant ar sakrist o tebrif per ?

- Geo !

- Ar per-se, marteze, a oa kouzhet o-unan ez kenù ?

Ger ebet.

- Respont, nabig, ne vo ket graet a zroug dit, na vezes fur... Lavar ar wdrionez, N'out ket bet er wezenn ?

- Nann, aotrou.

- Gofit a ran, met bugale all a oa eno, ne oas-te ket, moarvat, da-unan, hag anavezout mat a rez-te ar re all. Lavar piv int ?

Bilzig ger ne runnas.

- Me oar ervat eo'h anavezot anezhe, lavar piv oa ganit, hag e vi laosket da vont, ha diougstu ! Piv a oa ganit ?

- Madelen, Yannig, Katellig, aotrou, a oa ganen.

- Degasit anezhe ennañ ! ene ar barner d'an archerien.

An tri bugelig a oa el liorz o c'hortoz o breur. An archer a dapas krog enne hag o boutas er sal.

Ar person, ar c'hure, ar sakrist, an archerien nan int ket bet evit en en v'irout da c'hoarzhin. Ha da c'hoarzhin ivez ar re a oa e-barzh an antre hag ar re a oa en diavaez. Ar barner ne c'hoarzh ket, droug ennañ, brondust e zivjed, fuc'hal a ras !

Un taol lagad a-gorn d'an archer :

- Krogit ennañ !... C'hoarzhin goap ouzh ar vamm, ouzh ar barner ! Krogit ennañ !... ar wialenn !...

- Na'n skoit ket, aotrou, n'eo ket me !

- Ober goap ! goap !... Lavar piv ?

Ger ne respontas ar paotr.

Un archer a dapas krog er wialenn.

- Piv ?... Lavar piv.

- 'Lavarin ket.

- A ! a ! 'Lavarin ket ?...

Pean a zo bet gant ar paotr, gweñ e gorf evel ur silienn; kroget en deus gant e zant e domn un archer. Setu en war an daol, lianmet troad ha domn.

- Lavarout a ri ?...

Ger.

Un taol !

En aer ar wialenn a c'hwaban. Ur skirijadem !

- 'Lavarin ket ! 'Lavarin ket !

Ar wialenn a bege ouzh kroc'hen e beñsoù : unan ! daou ! tri ! pevar ! pemp ! Sempet ar paotr... Pa deus ennañ, en-dro dezhañ e vreur hag e c'hoarezed o ouelañ, dirazañ ar barner hag ar person.

- Pennak out, nabig, pennak; imor fall a zo enmout, ijin fall, 'n eus aon. Diwall, nab, diwall, ha dalc'h mat, dindan eñvor, ar c'hoarzh fur ac'h an da zeskiñ dit :

Neb na sent ket ouzh ar stur

Ouzh ar "wialenn" a ralc' sur !

- N'eo ket me ! n'eo ket me ! a advouskonze ar paotr, en ur valbousennañ, n'eo ket me !

- Preñn da vregoù, hag ar-maez !

Bilzig a grogas e domn Katellig, an daou all d'e heul, liv ar marv en e ger-c'henn. Anketet, e galon a larme en e greiz, paon gantañ o tennañ e alan, an daerù o ruiñañ war e zivjed.

War e lerc'h, pemp pe c'hwec'h paotr all o deus tadvast blaz ar wialenn; hini anezhe ne zalc'has penn ouzh ar barner. Hag en hag ar person o deus klevet penn-da-benn an doare, klevet ivez penaos Bilzig n'en devoa bet nap perzh el laeroñsi; debret en devoa bet ur berenn, gwdr eo, met skañv e oa e bec'hed, kriz ar binijenn.

- N'eus forzh ! ene ar barner; ken gwazh an hini a zalc'h ar sac'h hag an hini a laka e-barzh.

Met an aotrou person n'oa ket ken skañv e vennoz, ha meur a wech, ha poll goude, pa welc ar paotr, e ras un distro war an arvest c'hoarzet en e sal, hag e

goustiañs dezhañ a rebeche gwialenn ar barner. Holl vuçale ar bourk en devoa gallet doñvat, Rilzig biskoazh. Rilzig, pa wele an aotrou person, a lakae e zorn war e beñsoù, ha da redak : knout a rae dezhañ e c'houzañve ar wialenn war e groc'hen.

Evit ar barner ar wialenn a oa e lezenn e-keñver ar baotred, ha na Rilzig nag e biniñenn n'o devoa war daolenn e eñvor klañvet o arrouden. Dir e galon enep an druez; e-pad e vuhez a vamer, gwelot en devoa gwazh, pegen gwazh, ha gwashoc'h c'hoazh, hag e goustiañs, pell amzer a oa abaoe, ne fiñve ken en e greiz; marv e oa ar proñvig bihan-se dirak piniñennoù ken distar : un taol gwialenn !...

Goulennoù :

- 1) Displegañ ar gerioù-mañ : bronduet, fuc'hal, pa deuas onnañ, advoukonze, liv ar marv en e gerc'henn. Roit heñvelsterioù.
- 2) Petra hon eus desket diwar-benn Rilzig ar pennad-se ?
- 3) Reseurt diforc'h zo etre ar barner hag ar person ?
- 4) Hag ankouant a ray Rilzig an taol gwialenn-se ? Perak ?

+ + + + +

Kentel 5

GWERZAOUREZH

Studiañ en ho levr "Kellusk pe Kenventerezh an taolioù-nouezh", pp. 12-16.

Poelladenn :

- 1) Petra eo div lezenn diazez ar c'hellusk ?
- 2) O kemer skouer diwar ar bajenn 13, merkit ar nouezhiadennoù toniet e daou boz kentañ "Kroaz an hent".
- 3) Petra eo gwerzennoù start ha gwerzennoù laosk ? Klaskit div skouer eus pep hini e "Kroaz an hent".

+ + + + +

Kentel 6

SKRIVADENN

Grit evel dalc'hmant, ha respontit d'ar goulennoù.

+ + + + +

Kentel 7

LENNADENN RENET : Pevar Skourr ar Mabinnod (tr. F.E. Abeozen) : Poell  
Prifis Deved - "Ar varc'hegerez dianav".

Mabinnodion eo an anv a reer eus un dastumadenn a zanevelloù skrivet e kembraeg-kreñn, ha narzhus pe romantek an danvez anezho. Da grediñ eo e voent skrivet e-tro an Ilvet kantved, hogen alies ez eo kilz koshoc'h an danvez eget ar skrid : niret ez eus bet ar Pevar Skourr hennojennoù, hengredannoù ha hanvoazioù Kelted Breizh-Veur.

Unvan eo ar Pevar Skourr; strollet e voent gant ur skrivagner, anezhañ ur barzh eus kreisteiz Kembre, sur a-walc'h. Eret eo an istor gant buhez Frederi mah Poell. Met an ozer a seblant bezañ graet implij eus nojennoù dizalc'h, lod anezho bet laknet endeo dre skrid.

Evit gouzout hiroc'h e vo nat deoc'h teurel ur sell war gentekrid Abeozen d'e droidigezh, e Preder 45-46.

Un dro edo en Arberz, e les pennañ, ma'z oa bet fardet enni ur banvez evitañ, hag un niver bras a wiziñ ouzh e heul. Goude an daolied kentañ, sevel a eure evit mont da valle, pignat a eure war lein ur grugell a oa e-zioc'h al lez ha na raed anezhi Gorsez Arberz.

- Aotrou, eme unan bennak eus al lez, galloud ar grugell eo, pe uheliad bennak a azeze warni, ned afe-efi ac'han hep unan eus an daou dra-mañ : bezañ resevet taolioù pe c'houlioù, pe bezañ gwelet un dra souezhus.
- N'eo den war droad evit mont d'he heul.
- Mat ! eme Boell, daoust hag unan bennak ez eus ac'hanoc'h o anavezout ar varc'hegerez ?
- N'eo ket, Aotrou, emezo.
- Aet unan bennak, emezañ, war he arbenn da c'houzout piv eo.

Unan a savas, ha pan en en gavas ganti war an hent, sede hi ast e-biou dezhañ. Heuliañ anezhi a eure ar gwellañ ma c'helle mont war e droad, ha seul vui na haste afo, seul vui e pellae dioutañ. Pa welas ne dalvez ket dezhañ mont d'he heul, e tistroas davet Poell hag e lavaras dezhañ :

- N'eo den war droad evit mont d'he heul.
- Mat ! eme Boell, kae d'al lez; kemer ar gwellañ marc'h a gavo dit, ha kne war he lerc'h.

Kemerout ar marc'h a reas ha mont war-raok. Deut er gompezen, kentrou a roas d'he varc'h, hogen seul vui na vroude al loen, seul vui e pellae-hi dioutañ. Kouslikoude kenderc'hel a rae ar varc'hegerez gant an hevelap kerghed ha kentoc'h. E varc'h-efi a zigalomas, ha pa welas ez ae an tigh anezhañ war zigreskiñ, e tistroas e-lec'h n'oa Poell.

Aotrou, emezañ, n'eo den evit heuliañ an itron-hont. N'oudan marc'h abet er vro evit hemañ, ha n'en deus ket talvezet ar bean din mont d'he heul dezhi.

- Hep nar, eme Boell, bez' ez eus e kement-se ur breou bennak. Deomp d'al lez. Antronoz, sevel a rajont ha trenen an amzer el lez betek koulz ar pred. Goude an daolied kentañ :
- Asa, eme Boell, deomp, an toullad ma'z oamp dec'h, d'ar grugell. Te, emezañ, da unan eus e floc'h, degas gant ar gwellañ marc'h a oufes war ar maezioù. Evel-se e reas ar floc'h, ha d'ar grugell ez ajont, ar marc'h ganto.

Hag evel n'edont azezet, gwelout a rajont ar vrag gant an hevelap marc'h, an hevelap dilhad en-dro dezhi, o tont gant an hevelap hent.

- Sed anañ, eme Boell, ar varc'hegerez dec'h. Bez e deare, gwaz, da vont da c'houzout piv eo.
- Aotrou, emezañ, ez laouen e rin kement-se.

Degouezhet oa neuze ar varc'hegerez e-tal dezho. Ar floc'h a bignas war varc'h; hogen a-raok dezhañ bezañ en en laknet ervat war an dibr, ez oa-hi ast e-biou hag ur pennad dioutañ. N'oa ket en he c'herghed muioc'h a vall eget an derc'hent. Mont d'ar paz-inkane a eure ar floc'h gant e varc'h, hag e soñje,

daoust peger goustad ez afe e loen, e tizhfe anezhi. Evel na ne zeus ket a-beñ d'hen ober, e roas gwestenn d'eo varc'h; ne dostas ket outi miloc'h eget kent, pan se a-zoug e gam, ha seul vui na haste e loen, seul vui e pellac'hi dioutañ : he c'herzhed koulskoude n'oa ket buanoc'h eget a-raok. Pa welas ar floc'h ne zegase ket da vat e redadem war he lerc'h, e teuas en-dro d'al lec'h m'edo Poell ennañ.

- Actrou, emezañ, n'oa ket ar marc'h evit ober estroget ac'h eus gwelet.

- Gwelet en eus, eme Boell, na dalvez ar boan da zen redek war he lerc'h.

Drezon-me ha Doue ! bez' he deus ur gofridi evit unan bennak eus ar blenenn-mañ, mar sotrefe dezhi he hast an amzer d'heil lavarout; evidomp-ni, deomp d'al lez.

Hag i ha dont d'al lez ha trenan an noz o kanañ hag oc'h evañ diouzh c'hoant.

#### Goulennoù :

- 1) Displegit ar gerioù-mañ : dibr, paz-inkane, floc'h, krugell.
- 2) An destenn-mañ a ro da anaout arvezioù eus buhez ar Grennamzer. Pere ?
- 3) Riv a c'hall bezañ ar varc'h-gereger ?

+ + + + +

#### PEVARE SIZHUNVEZH

=====

#### Kentel 1

#### YEZHADUR

Studiañ en ho Lev'r ar doare-divizout, §§ 268-270, hag an doare-gourc'hemenn, §§ 271 ha 237.

#### Poelladenn :

1) Petra a lavar an doare-divizout er frazennoù-mañ :

- "Ma klevfe ar sourd ha ma welfe ar c'hoz  
He badfe den e-barzh ar vro".  
"Lakaet e vije bet eno, ne oa ket da gredif en dije taolet pled e oa ast ar morfan".  
"Nann, den n'hen kredfe, nemet hen gwelet en defe".  
"Ne oa ket deut en he c'hredenn e vije skourjezet".  
"Ha tec'het e vefe merzh fall ar Vari-Vorjan ?"  
"Saozneg a vefe bet desket d'ur vacuez e 28 noz e Kiev".  
"Ha neuze, e-pad an noz, ho plije gwelet anezhe... o tebrif, oc'h evañ..."

2) Petra 'verk ar gourc'hemenn er frazennoù-mañ :

- "Klevet plv bennak en deus divskouarn da glevout".  
"Ra gompreno an nob a lemm".  
"Boueta na camed".  
"Selaouit gant truez pedennoù ho pugale..."

+ + + + +

#### Kentel 2

LENNADENN DISPLEGET : Bilzig, pennad VI, "Bilzig ac'h a da glask an aluzen".

Deut an hañv, hag evit Izabel an amzer a zienez, e-pad an hañv ne vez gwerzhiet na meskl na bigorned : n'etra da c'honit er vro a-raok an eost. Ret eo dezhe bevañ koulskoude; mont a rafont, e-vevar, da glask an aluzen.

E Breizh-Izel, e vezer nat evit ar paour, hag e pep ti e vo evitañ ur tamm bara, un tamm kig, alies ur stardellad soubenn. Izabel 'ta a heulic ar pardonioù; en-dro devezhioù ar pardon (derc'hent ar pardon, delz ar pardon ha delz an adpardon), an ozhac'h hag ar wreg a zigor frankoc'h ar yalc'h, an arc'h hag an arnel. Hag evel-se Izabel a zastume tarmoùgoù bara, ur bastellad kig bennak, bozadennoù bleud hag ur gwennegig bennak, evit bevañ e-pad ar sizhun. Gant ar pardonioù bras, an aluzennoù a veze fonnusoc'h, net ne gare ket o darempredif : re a bevien a gawe war an hentoù hag en-dro d'an iliz. Eno en en zastume, en en unene an dibab eus an dud dilezet gant Doue.

Na bet oc'h-hu e pardon Sant-Yann-ar-Biz, pe e pardon Kermitron ? Ma ! na n'oc'h ket bet, it, hag e welfet a bep seurt infamet... Gwelit henañ nac'hagnet e holl izili, henhont astemet a-hed e gorf war hent ar belerined, a glemm, a derm, klevit ef oc'h huanadif war e wall blanedenn : "Ho pet truez ouzh ur paour knezh !... Ho pet truez !..." Hannezh, azezet harp ouzh ar c'hleuz, e flac'hoeb en e gichen, euzhus da walout, a ziskouez e zivhar debrot gant ar goulioù hag ar c'hontron : "Sellit a druez ouzh un den reuzoudik, c'hwad hag a so yoc'h ha divac'h-agn." Darn all, tort a bep tu, kann, jilgann, penngann, a chalo, a manade, a glemme, a derm gwashoc'h-gwazh an eil eget egile, evit dispegañ diouzh yalc'h ar belerined un diner, ur gwennegig bennak nartez.

Deut ar noz, tort, kamm ha pennamm ha da redek, ankouset gante o gouliou, o c'hleavedoù, o siou. Ha neuze, e-pad an noz, ho pijs gwelet anezhe, marc'hed, gwazed ha bugale hag all, o tebrif, oc'h evañ, evel da veurlarjez, ar c'hig, ar bara, ar jistr, ar gwinn-ardant, gonezet gant o fedemou hag o c'hlemou...

E-pad na eo bet Izabel o tarempeidiñ ar pardonioù, Bilzig a reas anaoudegezh gant bugale ar bevien all, ha gante e teskas un toullad troioù-kaer : penaos e veze goulennet an aluzen pa veze gwreg an ti he-unan er gêr, ha penaos pa veze tud all ganti; penaos hep dispign gwenneg, prenañ ur vouchenn bara gwenn war daol ar stal; ha, p'o deze c'hoant kerent pe bere'henn ar vugale da zebriñ gad pe gonifl, penaos stignañ antell pe las er girzhier na tremene an anvealed gouez. Desket en devoa ivez en em bilat, hag, a-barzh un nebeudig, hini anezhe ne oa ken skañv a droad, ken prin a zorn, ha piladeg anezhi (ha se aliesoc'h eget benvez), ral e veze na ne zeue ket a-benn eus ar baotred all.

Goude pardon ar Rozera, Izabel, sklaizh a gorf hag a ene, o ren un hevelep buhez, a chomas er gêr : deut e oa an anzer da zastun meskl, bigorned ha koukous, ha gwelloc'h e oa ganti gonit he bara, daoust dezhañ bezañ du ha kalet, o vont d'an aod, evit gonit anezhañ oc'h astenn he dorn.

Gant he aluzennoù - pizh Izabel - evelkent he deus prenet ur garg mouded; ur voutenn, mesket gant tarmouigoù bezhin sec'h, a zalc'ho tomder en ti, e-pad ar goañv. Bleud he devoa en he arc'h, evit lakaat toaz e go; bara a vo ha kram-pouezh, ha pastelloù kig a oa a-zistreibilh ouzh an treust, evit ober soubenn.

Ahaoc na oa intañvez, biskoazh ken pinvidik all ne oa bet. Pinvidik, o ! pinvidik, Izabel !... Pinvidigezh Izabel ?... Daou c'her, judal a reont en eil ouzh egile. Pinvidigezh ! Gwenn maubet eo ar ger-se, en em astenn a ra adalek ar c'hastell betek en ti-soul. Ha piv a nivero al leve a ra pinvidigezh un den glorus ha piv ar dienez a ra hini Izabel ?

Ma, n'eus forzh !... Mont a eure 'ta adarre d'an aod gant he bugale. Evit ar boutegoù kentañ na werzhas, e-lec'h arc'hant, gloan e tegasas ganti d'ar gêr. Gloan he devoa ezhorn evit ober dilhad dezhi, d'ar vugale. Enkartiñ, nezañ, ober stenn a ouie; ar vugale o devo loersier, kanzolemou, kalabousemou gloan tom. Pitouilhez a riao Bilzig e-pad ar goañv-noz, pa c'h ofer d'an ti-nezañ. Izabel a nezo, a riao stann gant ar gloan hag ar pitouilh.

Hag evel-se gant poan he c'horf, nerzh he c'halon, Izabel he devoa adchraet he ziegozh distrujet gant ar marv, evurus pa selle ouzh he zi, hag ennañ pevar bugel deut da vat.

Goulennoù :

- 1) Remit ar pennañ e lodemou. Reit titloù dezho.
- 2) Displegit ar gerioù-mañ : dienez, ozhac'h, ur bastellad kig, bozadennoù bleud, kontron, divac'hagn, stignañ antell pe las, boutadegoù, kalabousemou, pitouilh.
- 3) Petore diforc'h zo etre "kamm", "jilgamm" ha "pennamm" ? Perak ar furn "loersier" ?
- 4) Petra a zeske Bilzig gant bugale ar beorien all ?

+ + + + +

Kentel 3

PENNAD-SKRIB

"Ho kamber, pe ur sal all a anavezit mat."

Deskiñ a rankit sellout, arvestiñ ouzh ar pezh a zo war ho tro, gwelout. Sellit pizh ouzh ar sal ho po dibabet. Ma n'hallit ket, azezit sioul ha klaskit

empenniñ ar sal-se.

Brenañ, kemerit ur folenn ha renabit ar pezh a welit. Na glaskit ket urzhiañ an traoù c'hoazh; notit kenent a zou d'ho spered.

Goude eo urzhiañ ha frumañ kenent-se, ha sevel ur steufñ. Klaskit mont atav eus ar pep hollek d'ar pep personelañ, d'ar munudoù. Na ankouait ket e vo kavet dudi e taolennadur ho kamber deoc'h-c'hwil !

D'ar fin, krogit da sevel unan eus lodemou ar pennañ. Na rit ket gant lavarennoù boutin evel "bez' ez eus...". Na rit ket dalc'hmat gant ar verb "bezañ" ! Ra vo nerzh, blas ha liv en ho tanevell.

+ + + + +

Kentel 4

MUNADUR : Bilzig, pennañ VI, adal "Na bet oc'h-hu..." betek "... ur gwennegig bennak marteze".

Livus kennañ eo an daolenn-se. Un arvest eo : eno emañ bodet holl reuzevidien ar c'horn-bro da gefvor ar pardon. N'eo ket hepken ar sell a gont; ken pouezus eo ar c'hleved.

Deoc'h brennañ da adkrouiñ an arvest-se. Tonius e vo ho moush, evel ez eo dleet. Arabat e vo ankouait evelkent e vez graet fent gant ar galzh-se ar pennañ war-lerc'h !

+ + + + +

Kentel 5

LENNADENN RENEF : Bilzig, pennañ VII, "Bilzig ac'h a d'an ti-nezañ".

Lemrit ar pennañ en e hed. Goude-se, krennit anezhañ e 7 pe 8 linenn. Ne vo ket dav deoc'h adkennet kaozhoù ar wrac'hed kozh pe marvailh Jarlig; displegit kentoc'h petra a veze graet en ti-nezañ, petore darampredoù a veze etre an holl dud-se, penaos e veze diverret an nozvezhoù goañv en anzer-se h.a.

+ + + + +

Kentel 6

SKRIVADENN

Grit evel kustan, ha respontit d'ar goulennou.

+ + + + +

Kentel 7

LENNADENN DISPLEGET : Bilzig, pennañ VIII, "Bilzig hag e vennoziou".

Er pennañ-mañ e tiskouez ar skrivagner deskadurezh ur peotrig peour diwar ar naez. En anzer-se ne oa ket skolioù; padal e tape ar vugale ur seurt deskadurezh all, sikiant-prenet... prenet digant ar vuhez, hag ivez digant ar re gozh. Bevañ a raent en ur gevredigezh bihan a-walc'h, n'en doa pep hini ul lec'h klenk enni. Keñveriañ a c'hallot ar vuhez-se gant an doareoù-bevañ a-vremañ.

Keit ha na pade ar goañv, Bilzig, en ti-nezañ, gant ar merc'hed, ar wazed, a zeake ar pezh o devoa o-unan deaket gant o zadol-kozh. Skol vat, ar gwellañ skol. A-nebeudol evel-se e sille en e eñvor, en e spered, nerzh ha furnez, holl gened e vamm-vro; arabat eo ankoumaç'haat he zec'h, he siñ, he youlou nat pe fall.

Evel-se ivez ar Vretoned yaouank, o c'halon hag o ens moulet war re o zadol-kozh, a reno o buhez, sklêrijmet gant ar skouerioù a deu dezhe eus fin foñs goul-ed ar bloavezhioù, pa oa o gouarn sidiget war douaroù ar Sav-Heol, a-raok na teuas o zad-kozh en enez Breizh.

Ha Bilzig, paotr abred, lema ha prin, a sune, a zene ar c'haezioù, al lavar-ioù, ar sonioù, ha dindan e eñvor digor-frank e tastume anezhe. Ha pa'c'h ae, ur wech an anzer, da vesa saout ha deved e amezegez war an torrod geotek, e-unanik, direk an dremmel, ar c'haezioù, al lavarioù, ar sonioù a deus da nij dirak daoul-agañ e goun. Alies, direk ar mor, e chome sommet da heuilh war ar wagem hent ur vag pe hiri ul lestr, pe a-dreuz an cabl nij ar gwenmilied, nij ar brini-mor. Na karet en dije bet mont gante ! Pelec'h, n'eus forzh pelec'h, gant na vije bet ast. Mont da vale, da redek bro evel "Paotr e Vazh Houarn", evit saveteiñ prifisezed; evel "Hignasennig", eñ ac'h aio ivez e karnofis alacuret, hag evel "Yann Hep Aon" netra ne vo kad d'hen spontañ. Hag e kane, ar paotrig emzivad, reuzeudik, direk ar mor, war an torrod :

Mari-Morgan, turlutud,  
Deus davedon d'ar Falud  
Hag ac'hane d'an Traezh-Gwenn  
Hag ac'hane d'ar Velevenn !

Kaer en deze kanañ, Mari-Morgan ne deus da gerc'hat anezhañ.

A-wechoù all, direk ar mor dirollet, war e spered en en skigne ul lizenn, ur vrumenn a velloni, ha neuze, goustadik, e fredone ur sonig bennak klevet gantañ en ti-nezañ, hag honañ dreist ar re all :

Doue da reiñ d'ar wezemig  
Avel doue ha glizhem demer,  
'Vit na vleurio ar rozemig,  
Pell diouti ar gwall-anzer !

Abred a-walc'h e c'hwezho  
Avel gwalarn war ar rozem  
Abred a-walc'h e stlabezo  
He delioù war hent an anken !

Ha daoust d'e baour knezh devezhioù da vezañ kalc'het gant an ezhomou, daoust d'an dienez da begañ war e groc'hen ha war e galon, abeg e kave ar paotr evelkent e nerzh e yaouankiz, da leuskol e vennozioù da nijal, gwenmilied dibreder, a-dreuz cabl koumoulek an huñvroù.

Hag a-greiz an nebeutañ a-wechoù, keit ha na veze o soñjal evel-se en e stad, alies e netra :

- "Bilzig ! Bilzig ! a grde warmañ Madalen pe Yannig, Bilzig, ar vuoc'h a zo o laerezh !..." pe "Poent eo deomp mont d'ar gêr... Selaou : an dañvad bihan a vee war-lerc'h e vamm" :

Mannig kozh, deus "d'an der"

- Gwir eo ! ene Bilzig. Met selaouit bremañ petra respont ar vamm-dañvadez : "Pa'm bo debret, tamm ac'hann, tamm alese, ne a yelo !"

**Goulennoù :**

1) Displegit ar gerioù-mañ : "holl gened e vamm-vro", "he zec'h, he siñ, he youlou nat pe fall", torrod, lizenn.

2) Petra eo natur ha kefridi ar gerioù-mañ : abred ("paotr abred"), en deza, klevet ("klevet gantañ en ti-nezañ").

3) Pelec'h emañ Bilzig ? Gant petra eo dalc'het e soñj ?

4) Petore deskadurezh en deus bet Bilzig ?

‡ ‡ ‡ ‡ ‡ ‡ ‡ ‡ ‡ ‡ ‡ ‡ ‡ ‡ ‡ ‡

PEMPET SILZHUNVEZH  
=====

**Kentel 1**

**YEZHADUR**

Studiañ an dezo-disklêriañ, §§ 254-259.

**Poelladenn :**

- 1) Savit teir frazenn na verko an amzer-vremañ ur boaz.
- 2) Daoust hag e reer alies gant ar strizhtremened er yezh komzet ? Skouerioù.
- 3) Displegit ar perag eus an implij-mañ : "Hag e peklont un naver bras a besked, betek na rogo o rouedoù".
- 4) Displegit implij furnoù ar verboù er frazennoù-mañ :

"Ar c'harr-tan a chmas a-sav e-kichen an ti. Un aotrou ha div itron a giskennas. Amerikaned gant, da vamm diouz e dilhad. Yann ha Jani a zalc'he da labourat. Gant korn o lagad koulskoude e welont an tri estren o tostaat." (R. Hemon)

"Pa vege brav an amzer, ez ae ar vugale da c'hoari en ur park bras a-dreñv an ti. E penn ar park e oa un dorgennig, hag ouzh troid an dorgennig-se gwez-avalou... Eno e kloved ar "mouezhioù burzhudus". Pa huched "A", ur vouezh a-bell a respont "A"... (R. Hemon).

+ + + + + + + + + + +

**Kentel 2**

**LENNADENN RENET :** Bilzig, pennad IX, "Bilzig atav o pichotañ tra pe dra evit an tiegezh".

Lenit ar pennad. Soñjit nat el lezennoù a oa o ren en amzer-se. Iaknet e vezent da dalvoud gant ar valtouterien war an aod, ha gant Gargann, ar gward, e-barzh koad an aotrou.

**Goulennoù :**

- 1) Displegit ar gerioù-mañ : narvor, gourlenn, siket, diacchañ, drastet.
- 2) Renablit ar gerioù a dem d'ar pesketaerezh.
- 3) Klaskit kompren emalc'h Bilzig e-keñver al lezenn. Penaos displegit an dre-se ? Perak e hañval an aotrou tuiñ gantañ a-enep al lezenn ? Petra 'soñjit ?

Kentel 3

FENNAD-SKRID

Lennit aketus an destenn 'kinniget deoc'h en ho levrig poelladennoù. Adskrivit anezhi war ho kaier. Frederiit a-zevri warni, rak arebat he neizh a-drouz ! Petra a c'houlennet ouzhoc'h ? Savit bevannoù d'an destenn. Neuze, krogit da glask mennoziou. Dreist-holl munudoù, traoùigoù a roy blaz d'ho pennad.

Dalc'hit da brederiañ evit an deizioù. Pa zeuy mennoziou all d'ho spered, lakit anezho dre skrid, da heul ar re all.

+ + + + +

Kentel 4

LINNAENN DISPLEGET : Itron vuzhodus Trevison, gant Loeiz Herrieu.

Tannet eo an arroud-mañ eus Da c'hortoz Kreiznoz, ur strobard kontadennoù enbannet e 1942. Klaskit e-barzh Istor al Lennerezh..., nell. 56 ha 268 : piv eo Loeiz Herrieu ? Petore kalaouenn en deus ronet ? Petra en deus skrivet ?

Jili, maridiz Trevison, her pizone er ble 1717. Chon a rae e-barzh gant e bried Anna an Neiz, hag o ziegesh. Jili a oa penn-ligvez re Trevison. Ofisour en armeioù roue Frañs, donet a rae da vevidi d'e gastell pa veze dizever.

Tri ble ha hanter-kant en doa Jili a pa zegouezhas ar pezh a yeer da gonz anezhoñ. Ampart e oa c'hoazh ha dibilh. E blijadur a veze jiboosaat ar c'hirvi, stank d'ar c'houlz-se er c'hornad-bro ha, dreist-holl e koadoù Trevison.

Estroc'h eget dezhoñ e plije ar c'hig karv. Jiboosaerion ar vro, labourdizion ha koadizion a gave an tu, ur wezh bemak an amzer, da zonet d'ober o vro, a-guzh, da gadoù ar c'hastell. Da noz e vourrent ar gwellañ tostaat, surc'h na vezant a ober o zaol hep bout gwelet.

Tostaat a rae d'an Nedeleg. Evshaet-on doa tud ar c'hastell penaos e karge muioc'h ar vigierion d'ar jiber d'an teuzen-se ag ar ble. Setu perak ec'h a bet karget Frañsez, ar gward, d'ober troiadoù d'an noz evit spontiñ ar skraperion.

Dou zez kent an Nedeleg, ar ble na konzant anezhoñ, e tiskaras ar vro un tarzhad anev spontus, el na weler neur a wezh e Breizh d'ar sasun-se. "Un noz ag an dibab evit ar jiboosaerion", a soñje Frañsez. Hag eñ, pa oa krapet an holl d'o c'hambroù, da vonet, gromet mat en ur vantell ballin, d'en en guzhat en ur goban banal en doa savet, ar nizic'h kent, e-kreiz ur bod lore, ar vevenn ar c'hoad.

Loar-gann-gar e oa, splann dezhoñ da welout ar jiboosaerion ar vale. C'hwezhiñ a rae ar gorventenn a gaouadoù konnaret. Barroù ar gwaz e dorre hag a chourike unan doc'h-an arall, ha hudal a rae begoù ar c'hoad kroaz gant an avel o tremen.

A daolù e treuze herrus, diwar drema disliv al loar, tamoù koulou du a-dizh, par na c'hellent, trona ar sav-heol, el a pa vehe bet holl diaouled an ifern doc'h o chaboutat. Neuze e kouezhe, kemesk, tapennoù glav bras ha greun grizil ha darzhe ar ar barroù.

Nend eo ket bourrus bout o vale. Ha neozh, un hanter eur bemak goude mend eo bodet, ena hañval gant Frañsez klevout el trouz treid roñsed o tonet du-hont ar rabin ar c'hastell.

Piv an diaoul a zeuhe, d'ar pred-mañ ha gant roñsed, hep bout kaset gourc'hemenn d'an Aotrou ?

Gant an avel o hudal, na c'hell ket Frañsez heuilh an trouz o tostaat; setu perak ena souezhet mat, un herradig ar-lerc'h, o welout o tibouk a-dal dezhoñ ur c'harron, daou jav doc'htoñ, o vonet d'ar pevar-zroad. Treiñ a reont groñs ar ar c'hilazenn hag ec'h eont d'arrest, daou gant paz bemak doc'htoñ, just e-tal ur

yoc'h deil sec'h rastellet eno dezhoñ er sasun tremenet.

Dialc'het eo ar roñsed, ha sevel a ra diarnezhe ur vogedenn graet a c'hwezhe hag a c'hilav. Bec'h mend int arrestet, na sailh d'an diaz, a-zlar brich ar peotr-karr, daou aotrou gwisket mat, mantelloù gante ha luzhet lein o fas gant tamoù darvez du. Tostaat a reont d'ar c'harron hag e tigoront an nor da zaou aotrou arall hañval doc'hte, hag a denn er-maez eus ar c'harr, div bal ha daou strep. Goude e wel o tonet tre ivez ur vaouez yaouank, gwisket holl e gwenn, el a pa zeuhe a eurediñ, ur vantell vourc'z pommer taolet ar he diskoaz.

Frañsez ne oui petra soñjal.

A pa zizolo al loar, e c'hell gwelout splannoc'h an dud. Ur goantenn a ziskouez bout ar vaouez yaouank. Laret e vehe ena liammet he daouarn ardreñv he c'hain, rak ne weler anad erbet anezhe.

Hep konz, ar pevar gwaz a grog er benveger hag en en laka da grouzidiñ un toull, doc'h kostez ar yoc'h deil. Diskouez a reont e vehe herr amezhe, rak labourant a reont a-zevri. A piv deus bet bec'het e-pad ur c'hardeur bemak, ec'h arrestont. Unan anezhe - ar mestr moarvat - a dosta d'ar vaouez yaouank. Rok ha tamallus, e konz doc'hti. Met re bell int ha re greñv huderezh ar gwaz evit na c'hell Frañsez klevout holl ar pezh a laront. Neozh, a pa zeu d'an avel-dro c'hwezhiñ d'e du, e klev darnoù divz. Galleg ha brezhoneg zo gante. Ganet e Sant-Gonard, Frañsez a oui mat ar brezhoneg, hag el-se e teu da gompren ar c'honzoù a zeu betegzou.

Klevout a ra atav an aotrou o larout, e galleg :

"Peseurt ardoù ! Perak ne vennit ket konz galleg ?"

Hag un tammig goude : "Perak n'hooc'h eus ket vennet monet da gousket gant ar 'Regent' ?"

Ar wezh-mañ e klev mouezh douz ar vaouez yaouank o respont e brezhoneg :

"An den-se n'en deus gwir erbet amon-ne. Nend on ket dinezet dezhoñ, moarvat !"

"C'hwil he c'hlev, tudjentil ?" ena ar c'honzour o treiñ trana e ganeurtead.

Dere'hel he c'hlev, hep na glev Frañsez konz erbet kan, namet ar vaouez yaouank o larout gant nerzh : "Kantoc'h mervel eget bout kousiet, zoken d'ur roue !"

Hag an den da respont e galleg hepred : "Hana, el na karzet ! Goff a rit petra en deus laret ar 'Regent' ! Nag ur penn aheurtet a blac'h ! Ger ardanez Trevison a jaojehe doc'hooc'h, biskoazh gwel !"

Un nebeudig amzer c'hoazh hag e wel Frañsez ar pevar den o fardañ, en un taol, ar ar vaouez yaouank ha doc'h he diskar en toull o deus kleuziet.

Daoust dezhi diskrap ha gann, enberr ena goloet gant deil ha douar.

Hiriziñ a ra Frañsez ha bec'h en deus o parrat a huchal. Met petra 'ray-mañ doc'h pevar den hag a zo pechafis armaj gante ?

Goulernoù :

1) Liv ar gwenedeg zo war an destenn-se. A-ratozh-kaer hon eus miret furchoù gwenedek na vezont ket kavet nemer er yezh unvan a-vremañ. Grit ur roll berr anezho (gerioù, fumoù verboù h.a.), ha lakit e-tal ar furn unvan a anavezit.

2) Displegañ ar gerioù-mañ : piaouañ, dibilh, bourrañ, jiboosaerion, strep, dialc'het, roñsed, fardañ, parrat.

3) Penaos e teu ar skrivagner a-benn da lakaat spouron da ziwanañ el lenner ?

+ + + + +

Kentel 5

DIBUNADUR : Itron vuzhodus Trevison, adal "Loar-gann-gar..." betek "... d'an Aotrou".

Skrijus a-walo'h eo an tamm pennad-se. Noz eo. Eneur war var eus un dra bennak. Taclit evezh ouzh ar yezh : brav-kaer eo. Gant aked bras eo bet dibabet ar gerioù, ar re a denn d'an trouz, da skouer. Taclit pled ivez ouzh lusk flour ar frazennoù. Enno ez eus skrij ha barzhoniezh war un dro. Lakit an dra-se anat en ho tibunadur.

+ + + + + + + + +

Kentel 6

SKRIVADENN

Grit evel kustun, ha respontit d'ar goulennoù.

+ + + + + + + + +

Kentel 7

GWERZAUBREZH

Studiañ en ho levr "Kenglot pe Kengnerezh ar Sonioù", pp. 17-20.

Poelladenn :

- 1) Petra eo ur glotenn ?
- 2) Hag-eñ e anavezit skouerioù all a rimadelloù pe grennlavarioù enno klotennoù ?
- 3) Petra eo ur glotenn diabarzh, pe "enklotenn" ? A-belec'h e teu dinp an doare-se da werzaouiñ ?
- 4) Islinennit an enklottennoù en arroud-mañ eus Buhez Nab-den (16vet kantved) :

Pa vezo da gig marv-nik yen,  
Nod eus kar war an douar serten,  
Me 'dest, nag estren nep heni,  
Na tud da di, na da brled,  
Na ve mar dispar ez karsot,  
En deurfe ket da welot mui.

+ + + + + + + + +

C'HWEC'HVET SIZHUNVEZH

=====

Kentel 1

YEZHADUR

Studiañ an displegadur gant OBER, §§ 245-246, hag ar verboù-danskoazellafi, §§ 247-253.

Poelladenn :

- 1) Roit tri displegadur ar verb KAVOUT, anzer-vremañ, eil gour unan.
- 2) Klokait gant RANKOUT pe DLEOUT, hervez ar ster :

An holl dud a ... mervel.

Avel a ... bezañ, rak kouezhet 'oa an ti en e boull.

Trist eo d'un den ... goulenn an aluzen.

Anañ e ... bezañ.

Pegement a ... ne deoc'h ?

Ne ... ket komz ken rust ouzh da c'hoar !

- 3) Savit teir frazenn gant FELLOUT.

+ + + + + + + + +

Kentel 2

LENNADENN DISPLEGET : Itron vuzhodus Trevison, gant L. Herriou.

Souezhet, treboulet ha nec'hañset mat e oa bet tud Trevison d'ar pezh a zegouezhas, en noz-se, en o c'hastell.

E-leizh a dud, ar o lerc'h, a zo bet treboulet o klevout ar re gozh, a vidad da vidad, o komz ag an doare.

Me zo bet unan anezhe.

Mechal piv oa ar vaouez yaouank-se ?

Piv an dudjential en doa hec'h interret e bev ?

Pezh torfed he doa-hi graet ?

Pennas he doa-hi kuitaat kastell Trevison ?...

Holl an atersoù-se, ha re 'rall c'hoazh, a rae pep unan, a chome hep respont erbet.

Graet en eus int ivez, en ur c'hoantaat kaout an tu, un deiz bennak, da vonet ac'hoel da welout ar c'hastell.

Kavet an boa eñ, un deiz.

Degouezhet dirak an nor-dal hag he deus lakaet kamant a speredoù da soñjal, me 'chomas ne huñvreour ha mut, da sellout doc'h an div dourellenn ront, diazezet ar bileroù kornek, hag a daole armon selloù du o c'hwec'h lagad teñval ha divalvann, al evit tamall din na c'hoant da c'hoñt ar pezh a zloe narse chonel kuzhet.

Monet a ris neozh en diabarzh.

Ha ne ha goulenn, gant ar gward, na ambroug dre ar c'hastell, goulle kaer a dud, d'ar c'houlz-se, ha dindan kouezh e rivin, e meur a dachad.

Monet a ran ar e lerc'h, dre an diri he doa heuliet ar vaouez yaouank-hont, etre divrec'h nevelion Trevison. Digor a ra din ar gambr lec'h na'e'h oa bet lakaet.

"Tra souezhus, eme ar gward, en ur ziskouez din ar c'hantolor-brec'hek doc'h ar siminal, da goulz ar bokedoù, 'lies e teu, pa vez digor ar fenestr, taollob-gwanen da skourrañ doc'h ar c'hantolor-se, a larer en doa douget goul an Itron.

Met ne c'heller ket o dere'hel. Achap a reont goude bout diskaizhet, evit monet d'ar c'hoadoù da verifi en o frankiz. Brenañ, tud zo a lar e welont d'an noz, un itron gwisket e gwenn, o kantren en-dro d'ar c'hastell. N'en eus ket ne he gwel- et gwezh erbet neozh. Met a pa dostaer dezhi, e tianad, en un taol, a larer, el un derenn a splannder al loar pa zeu d'un tamm kogus tremen diâr he fas.

Ac'halese, ec'h eomp d'ar chapel, neuze dilezet ha mouest. Enañ neozh pep tra en e lec'h ha gwelout a ran an tachad lec'h na oa skourret gouel an Itron, hag a zeu merc'hed yaouank en-dro da boket dezhoñ, kent eurediñ evit kaout efrusted.

Kollet eo bet ar gouel, e-pad an Dispac'h. Ne chom mui enta ag an Itron vuzhuñus, er c'hastell, namet ar c'houm kevrenus anezhi.

Hag ec'h an, ar-lerc'h na ambrougour, betek ar solieroù, lec'h na choman batet da goudaj nerzhus hag ingochet ag ar bravañ, en doenn pomar a c'holo ar c'hastell. Gwelout a ran ar brochoù koad a zalc'h ar mein-glas bras en o lec'h, hag a zeu ar begoù anezhe, hir el ar biz, e diabarzh ar solier. Laret 'vehe emma tokennet an tostad gant senesoù niverus ha flemmus.

En un taol, e tegouezhomp gant solier un dourellenn. En ur gognell e welan levrou kozh, goloet a viad kevrid ha hanter debret d'an astuz.

Al levrou kozh na filin bepred. N'hellan ket parreat aga arrest etalte hag a o zastornat. Bout en eus evite an doujañs en deus an den evit relegoù, met re- egoù hag en dehe gouarnet o ene.

Kont a ran unan anezhe da sellout doc'htoñ.

"Kozh traoù, eme ar gward, ha ne reont 'met steurniñ ar solier. Un deiz bennak o diskennin evit o loskiñ.

- O loskiñ ! emeve dezhoñ. Abalanour da Zoue, na rit ket an dra-se hep bout o diskouezet d'un den desket bennak. Marse ec'h eus en o zouezh levrou dibaot.

- C'hwid 'gred, eme ar gward, gant ur gwenc'hoarzh."

Ha ne da gemer daou pe tri arall. Unan anezhe e choman pellik da sellout doc'htoñ. Leun eo a engravadurioù ar zür, kozh ha kurius.

"C'hwid 'hell her c'has gansoc'h, eme ar gward. Unan nebeutoc'h da loskiñ !"

Ha ne d'heil lakeat en sac'h-beaj, goude bout c'hwizhet diârnezhoñ un troc'had heuen graet a ludu ouzhpenn kant blead tremenet.

Goude bout echuet tro ar c'hastell ha roet gwerzh-butun d'ar gward, ne aet ha kuitat ar c'hastell, na spered trebuletoc'h c'hoazh eget kent. Brenañ emma hañval ganin bout anvet en Itron. Aet on en hec'h anal hag e kreska ennon ar c'hoant da c'hoñt pum dezhi. He gwalleur hag he c'hened a denera ma c'halon. Ne ouian ket petra 'rchen evit degouezh, en un taol, gant he spurmant, dindan gwez derv uhel ar rabin a heulian evit pellaat. C'hoantaat a ran bout unan ag ar gwez kozh-se hag en deus he gwelet o tremen.

Souezhus eo na c'hell an den en em stagiñ el-se doc'h tud ha n'en deus ket anvet, ha donet d'o c'harout, zoken a pa ne ve ket sur emant bet biskoazh bev. Bourriñ a ra hor spered daremprediñ kevriñoù, bravast d'hor faltazi, hag a zeu d'hon digoll a drugezh ar pezh a gouezh dindan hor skiantoù.

Dout e oan atav d'ar gêr a nan baleadem, levezon ennon bout gwelet ur c'has- tell kaer; met klouarnek ivez forzh n'em boa gelllet splannat, tamm erbet, tefvalded an doare souezhus-se.

En ur zegouezh er gêr, em boa skarzhet na sac'h-beaj ha kavet e-barzh al levr kozh deut ganin a-zu-hont, ha n'em boe mui soñj anezhoñ...

Goulennoù :

- 1) Pet lodenn a ya d'ober an destenn-se ?
- 2) Pinvidik-mor eo yezh L. Herrieu. Renablit ar gerioù rouez pe wenedek rik, displegit o ster, ha roit heñvalsterioù. Grit ur roll eus furnoù gwenedek ar verboù.
- 3) Fremet oc'h bet gant ar gontadem. Klaskit perak. Diwar-se, displegit penaos e oar L. Herrieu tennañ evezh al lenner.

Kentel 3

PENNAD-SEKRD

Adlennit testenn ar pennad, gant aon n'ho pefe komprenet a-dreuz tra pe dra. Adwelit buan-ha-buan roll ar memmoziou ho poa kavet, ha c'hwennit didruer kenent nemnoz na glot ket gant an destenn.

Brenañ, strivit da strolleañ he evezhiademoù, evel hoc'h eus desket ober. Klaskit dalc'hmat kempouezañ lodemoù ho pennad. Na lakit ket lerc'h-ouzh-lerc'h un tamm pennad dek linenn, trust ha teuc'h, hag ur bajennad hanter eus ar c'hentañ! Rekis eo eta kaout darvez a-walc'h evit pep lodenn, kement-ha-kement, e gwirionez.

Peurekrivit ho pennad. Reizhit ar fazioù ho poa graet war ar brouilhed. Eil- skrivit ha lennit en-dro ar pezh hoc'h eus aozet.

+ + + + + + + + +

Kentel 4

LENNADENN FENEF : Bilzig, pennad X, "Bilzig ac'h a d'ar c'hatekiz".

Hirik eo ar pennad-se. Lennit anezhañ en e hed avat. Taolit pled ouzh ar gerioù, an troioù-lavar. Taolit evezh ouzh an dud ivez. Ar romant a ro d'imp ur sellad eus ar c'hentañ war ar stuzegzh diwar ar maez 200 vloaz zo. Rak felllet en deus d'an aozer, se zo sklaer, chom tostik-tost d'ar wirionez istorel, kem- ent ha na oa gallet, da vitanañ.

Goulennoù :

- 1) Petore den eo ar c'hure ? Hag ar person ?
- 2) Hag androet eo spered Bilzig abaoe deroù ar romant ? Displegit.

+ + + + + + + + +

Kentel 5

GWERZAOUEREZH

Studiañ en ho levr "Diazezoù ar c'hengan", pp. 20-24 hag "Ar glotenn dibenn", pp. 24-28.

Poelladenn :

- 1) Pet sonenn diazez a gaver e brezhoneg ?
- 2) Roit teir skouer eus kensonemoù blot, ha teir all eus kensonemoù kalet.
- 3) Pegoulz e vez barr ar glotenn ? Pegoulz e vez pinvidik ? Klaskit skouarioù.

+ + + + + + + + +

Kentel 6

SKRIVADENN

Grit evel dalc'hmat, ha respontit d'ar goulennoù.

## Kartel 7

LENNALENN DISPLEGET : Poell Priñs Deved, "C'hoari ar broc'h er sac'h".

Gwaol a zistroas d'e gouaroh, Poell eus e du a zeuas e Deved. Ar bloavezh-se a dremenas pep unan anezho betek koulz ar banvez e lez Heveiz Hen. Gwaol nab Klud a zeuas d'ar banvez a bet fardet evitañ; diraez al lez a eure, ha laouen e voed outañ. Poell, Penn Announ, eus e da, gant e varzhien, kant a dud anezho, a zeuas d'al liorzh, hevez n'oa bet gourc'hemennet dezhañ gant Riamon, ar sac'h gantañ. Gwiskañ kozh truilhoù en-dro dezhañ a eure Poell, ha kemerout en e droid botoù bras. Pan ouezas edo o teraouñ an evadeg, e saludas Gwaol nab Klud hag e genseurt-ed, gwazed ha gorragez.

- Doue da roio mad dit, eme Wael, ra vo e vennoz warnout.  
- Aotroh, eme Poell, Doue d'as paso. Ur gouleñn an eus da ober ouzhit.  
- Degemer mat dezhañ, eme Wael, ha mard eo ur gouleñn doreat a rez ouzhin, ez laouen ez po anezhañ.  
- Doreat sur, Aotroh, eme Poell, ne c'houlennan nemet dire ezhoñ. Sed ar gouleñn a ran : leun a voued ar sac'h bihan a weler.  
- Ur reizh a c'houlenn eo, eme Wael, hag ez laouen ez pezo anezhañ. Roit dezhañ boued.

Hag un niyer bras a gargidi ha sevel ha kregidi da leuniañ ar sac'h. Pegement bennak na taolod amañ ne zeus ket leunoc'h eget kent.

- Va ene, eme Wael, ha leun e vo biken da sac'h ?  
- Ne vo ket, drezon-me ha Doue ! eme Poell, petra bennak na lakafed amañ, nemet un denjentil, dezhañ doareoù ha galloud, a savfe da voustrañ gant e zaou droad ar boued er sac'h en ur lavarout : "A-walc'h ez eus lakast amañ".  
- Ao ! difennour, eme Riamon ouzh Gwaol nab Klud, dav buan.  
- Sevel a rin ez laouen, eme Wael.

Hag eñ ha sevel ha lakast e zaou droad er sac'h. Poell a droas ar sac'h betek na voe Gwaol dreist-penn e-barzh; hag eñ dille ha serrif ar sac'h hag ober ur skoulm warnañ gant al lerennoù, ha seniñ gant e gorn-boud. Ha neuze, sed e dieg-ozh war al lez; tapout a rejont krog e kement hini oa deut gant Gwaol, hag o lakast en ereoù. Teurel diwarnañ e-unan an truilhoù, ar botoù hag an dilhad digempenn a reas Poell.

Pep unan eus e dud, ra zeue e-barzh, a roe un taol war ar sac'h, hag a c'houl-enne : "Petra zo amañ ?" - "Ur broc'h", eme ar re all. Sed ar c'hoari a raent : pep hini a zarc'haoue un taol war ar sac'h, pe gant e droad pe gant un dreujenn; hag evel-se e rajont c'hoari ar sac'h : pep unan, dre ma teus, a c'houlenne : "Pe c'hoari a rit-hu er c'hiz-se ?" - "C'hoari ar broc'h er sac'h", emezo. Ha sed ar wech kentañ na voe c'hoariet "ar broc'h er sac'h".

- Aotroh, eme ar gour er sac'h ouzh Poell, na teurvezfes va selaou, n'eo ket ur c'hastiz ouzh va renk bezañ kement en ur sac'h.

- Aotroh, eme Heveiz Hen, gwdr e lavar. Reizh eo dit e selaou. N'eo ket kement-se ur c'hastiz outañ.

- Ya, eme Poell, da ali a heuilhin diwar e benn.  
- Sed an ali ac'h eus da heuliañ, eme Riamon neuze. En ur stad enaout na tere ouzhit dic'hoartañ ar c'houlennerien hag ar sonerien. Lez hemañ d'hen ober ez lec'h, emezi, ha kemer digantañ gouestloù na ne vezo biken nag enklask na taol-droukrans diwar e benn. Kastizet a-walc'h eo bet gant kement-mañ.  
- Bez' en devo an dra-se laouen, eme ar gour er sac'h.  
- Ha me a gavo mat kement-se, eme Poell, mard eo aviz Heveiz ha Riamon.  
- Aviz omp war ar poent-se, emezo.  
- Asantiñ a ran, eme Poell. Klask a gretafe evidout.  
- Ni a gretao evit Gwaol, eme Heveiz, betek na vezo dizalc'h e dud da zont da gred evitañ.

Lezet e voe neuze da vont kuit eus ar sac'h hag e dudjentil divac'het.  
- Gouleñn brenañ gouestloù digant Gwaol, eme Heveiz. Anacut a reomp nep div bennak na c'heller e gemerout digantañ.  
Rollañ ar ouestloù a reas Heveiz.

- Reizh da-unan da englev, eme Wael.  
- A-walc'h eo din evel n'eo bet reizhet gant Riamon, eme Poell.  
Kavet e voe mat an englev gant ar ouestloù.  
- Mat ! eme Wael, gloazet on, taolioù fall an eus resevet; ezhoñ an eus da gibellat; mont kuit a rin, mar kavez mat. Tudjentil a lezin amañ en lec'h evit respont da gement hini a ray ur gouleñn ouzhit.  
- Ez laouen, eme Poell, gra kement-se.

Ha Gwaol ha mont stresek e gouaroh.  
Neuze e voe kempennet ar sal vras evit Poell, e dud ha tud al lez. Ouzh taol ez ejont, hag azezañ pep unan evel m'gant azezet bloaz oa, en abardaez-se. Debrif a rejont, hag evañ, hag ar c'houlz a zeuas da vont da gousket. D'o c'hamb e eas Poell ha Riamon, ha tremen an nozvezh el levenez hag er blijadur.

Antronoz e yaouanidiz an deiz :  
- Aotroh, eme Riamon, sav ha stag da zic'hoartañ ar sonerien; chom hiziv hep nac'h ouzh den ar pezh a venno.  
- Kement-se a rin ez laouen, eme Poell, hiziv an deiz ha benvez, tra na pado ar banvez-mañ.

Sevel a eure Poell, ha lakast embann da bedif an holl c'houlennerien ha sonerien d'en en ziskouez ha menegiñ dezho e vefe dic'hoantet pep hini diouz e youl hag e stultenn. Sed a voe graet.

## Goulennoù :

- 1) Displegañ ar gerioù-mañ : lez, evadeg, gouestloù.
- 2) Petra eo ar furm "sure" ?
- 3) Pennas e komz an dud-se an eil ouzh egile ? Perak ? Notit an traoù-lavar dic'hizet. Displegit anezho.

+ + + + + + + + +

SEIZHET SIZHUNVEZH  
=====

Kentel 1

YEZHADUR

Studiañ "Taolennoù an Displegadur", pp. 124-127 : ar verb reizh "karout" hag ar verb amreizh "bousta".  
Studiañ ivez ar verboù OBER, MONT ha GOUZOUT, pp. 142-149.  
Kement a studiet hiziv a ouzo'h endeo enic'hañs. Hogen rekis eo anaout ervat displegadur ar verboù. Evid gwiriañ ho kouiziegezh, goulennit ouzh unan bennak hoc'h aters war an amzerioù, ar gourioù...

Poelladenn :

- 1) E pe amzer hag e peseurt gour e vo amreizh ar verb "peakata" ? Savit ur frazenn gant pep furm amreizh.
- 2) Klokaat gant GRIT pe RIT, evel na tere :  
... ho labour ! Ma n'hen ... ket hiziv e vo re ziwizhat ! Petra ... aze ?  
Na ... ket evel-se ! Mar ... evel-se e vo c'hwitet ! Ne ... nemet c'hoarzhin !
- 3) Pegoulz ober gant ar furm "a" ha pegoulz gant "kae" e doare-gour-hemenn ar verb MONT ?
- 4) Pegoulz e kouezh G ar bennrann e displegadur GOUZOUT ?
- 5) Pet displegadur zo d'ar verb GOUZOUT ? Perak ? Fehini a implijit c'hwit ? Ha tro hoc'h eus bet da gavout ar stumm "gouez" pe "goui" ? Pelec'h ?

+ + + + +

Kentel 2

LENNADENN DISELEKET : Bilzig, pennad XI, "Bilzig hag ar valtouterien".

Bilzig 'ta, e-pad ar goañv, a rede an aoc'h ha tra pe dra e tiaoche. Droug er valtouterien o redek war e lerc'h.

Ur wech, etre doub-deiz ha doub-moz, goude un taol-anzer, Bilzig a oa o furchal kerreg an enezenn : rust e oa ar mor. Sablantout a eure dezhañ, e-mesk enonn an tarzhioù-mor, gwelout peñseoù o tent d'an daze. D'ar red e teuas da gaut Jarlig kozh, en ivez o vesa ar mor, kuzhet e-dreñv ur garreg, war lain an enezenn.

Na pedal na klevas e oa peñse war an aod, ha Jarlig kerreg hag ar paotr en daze.

- Barrikennoù didalet, gwin a oa enne ! eme ar paotr kozh. Daoust ha ne gavomp-ni ket unan, unanik hepken en he fezh ?...
- Ha gwin beg e deod e lipe e vuzell, froñsal a rae e fri.
- Gwin, paotr, gwin !... Klaskomp en ur c'hogn bennak... Marteze.
- Petra 'vo graet ?... N'omp ket evit he zennañ ac'hann !...
- Hag ar valtouterien ?...
- Ar valtouterien ?... eme Jarlig kozh. A ! ya, ar valtouterien !... Kae, ha d'ar red, dindan beg ar Roc'h-Vran. Eno e ri un tannig tantad gant lann ha raden sec'h.
- Un tantad, Jarlig ?
- Ya, paotr, hag hast afo, ha ken buan all an distro.
- Bilzig, sonnet dirak an den kozh :
- Un tantad ! ober tan !...
- Ken divaoue-se out deut da vezañ, te ?... Hag ar valtouterien !... Buan-ha-buan ec'h afont da dannañ... a ! a !... du-hont, d'an tantad, ha da lavarout o fed-ennoù, hag e-pad an amzer-se, ni... ar gwin...

Hag ar paotr d'ar red, e-dreuz an aod, da veg ar Roc'h-Vran.  
Jarlig kozh, daoust d'e gozhni, n'oa ket hualet. Eet eo betek e di e-unan hag hini Izabel, hag o-zri, Jarlig, Jobig, e vreo'h hag Izabel gant pep a varaz, ha d'an enezenn.

Ac'hann, pa errujont, e waljont an tantad.  
- Un tantad ? eme Izabel.  
- Ar valtouterien a zo du-hont o tonnañ, a respontas Jarlig, ha Bilzig ne zaleo ket.

Toullt ar varrikenn gant ur vimeled, leumlet ar barazoù.  
- Arabat vo deomp ober re a drouz evelkent ! eme Jarlig... Met setu Bilzig...  
Ha pep a varazad win war o fenn hag int d'ar gër, maltouter ebet n'o deus kavet war o hent : ast e oant, ha d'ar red, da welout an tantad.

Antronoz vintin, n'oa brud dre ar bouk nemet eus tantad beg ar Roc'h-Vran, hag eus ar barrikennoù gwin didalet, kavet war an aod en-dro d'an enezenn. Tre ar mor, en izelvor, leun a dud o redek an aoc'h ; an darn vuiañ a oa en-dro d'an enezenn ha da Veg ar C'hastell, pep hini o klask tañva ar gwin.

Ar valtouterien gant o fuzuilhoù, o sabrinier, o fistolennoù, a daole evezh mat. Un toulladig martlodet a gavas, e gaolien ur garreg ur varrikenn en he fezh. Hag int a daolioù main d'he didalañ. Galvet o deus ar re a oa en o c'hichen da gemer o ferzh er varrikenn. Gwazed ha merc'hed hag all, gant o botoù koad, ha da evañ ! da evañ !... Graet o deus, kement ha ker bihan, ken ma en em unanas en-dro d'ar varrikenn un toullad mat a dud, ha pep hini en deus bet e votezad gwin.

Ar valtouterien a gouezhas war an taol : degemeret mat int bet, difrezet, les-anvet : "Didalvez ! Chas gourien !" Ha pep hini evelkent en ur youc'h, a eve, a eve. Ha botez pe votez ac'h as atav er varrikenn.

Gallet o deus evelkent, ar valtouterien, gant kalz a boan, lakaat ar gwin da redek. Neuz, ho piñe bet klevet kasrañ choloz ha jabadao a zo bet biakoazh klevet, e Breizh-Izel, etre Montroulez ha Lannion. Bezañ oa eno moarvat, daou pe dri c'hant den, gwazed, merc'hed, kañfarted, trefust, trelatet o fenn, hanter-vev pe vezv darn anezhe, hag a gria, a youc'he, a suttelle en-dro d'ar valtouterien. An arvest-se en em zirolle e-mesk ar c'herreg, a-us d'an taolioù-mor a deus da fregañ dindan o zradid :  
- Chas gourien ! Loened lous ! Amprevaned !...

Ha pedal na dreist trous ar choloz, kruz an tarzhioù-mor er gaoliennoù hir, setu e sav ur vouezhig sklaer diwar kern uhelañ Beg ar C'hastell. Pep hini a anavezoe an ton hag ivez ar son, son ar Brigadier, ar maltouter.

War beg ar garreg, Bilzig hag un toullad paotred ha paotreded a gane ar c'hann ; ar wazed hag ar merc'hed, d'an traoñ adalek Beg ar C'hastell betek an enezenn, a zis-kane. Riv en devoa graet an ouidell-se ? Riv ? Tamall a reed anezhi da Jarlig kozh.

Goulennoù :

- 1) Lennit fin ar pennad-se en ho levr.
- 2) Displegit ar gerioù-mañ : maltouter, "etre doub-deiz ha doub-moz", peñseoù, daze, divaoue, baraz, gwinleled, "egaolien ar garreg", difrezañ (pe drevezañ).
- 3) Perak al liester "sabinier" ?
- 4) Perak eo gwelet fall ar valtouterien gant an holl dud ?
- 5) Perak en em glev mat Bilzig ha Jarlig kozh ?

+ + + + +

## Kontel 3

## PENNADESKRILD

"Un ti pe ur savadur a anavezit mat."

Arabat krediñ ez eo heñval ar boelladenn-se ouzh hini ar pevare sizhunvezh. Hiziv emao'h an ur gudenn : ret eo deoc'h dibab. Kount an holl diez a anavezit, ha klaskit dibab an hini a anavezit ar muiañ.

N'hallit ket, evel just, diskouez ar savadur en e holl vumudoù; re hir e vefe, hag arabadus ivez. Ne skrivit ket evit touristed ! Dibab a rankot ober adarre.

Lekomp e taolennfec'h ur c'hastell pe ur maner. Da gentañ, e root diskladuridiou diwar-benn ar stum diavaez; da c'houde, e teskrivot ar sal-mañ-sal. Tresit daou vann war ho kaer, ha neuze, leugnit anezho. A bouez bras eo ar livioù hag ar stummoù, anez e vo flakik ho taolennadur. A-henñ-all ez eus un toullad geriennoù o tennañ d'an disavouriezh; grit ganto, met na implijit ket anezho a-dreuz hag a-hed; klaskit da gentañ o ster resis.

Ront eo bremañ sevel un tamm eus ar boelladenn (war ur bruvilhed). Grit dalc'hmat gant gerioù resis, ha diwallit da vezañ re "sec'h" !

+ + + + + + + + +

## Kontel 4

## DIBUNADUR : Bilzig, pennad XII, "Bilzig ha Pipi".

Setu anañ ur pennad berr ha farsus. Lennit anezhañ en ho levr, ha goude, studit an arroudenñ-mañ e sell d'he dibunañ :

"Bilzig a stagas, ha start, n'hen asur deoc'h, gant un tamm neud gouel, ar gastolorenn ouzh lost Pipi... Kizidik c'hoazh, ar paour kaezh lost, abaoe ma oa bet d'arbet dezhi bezañ bet friket gant botez koad Jojo.

Hast gant Pipi da gilezel e graou ha da bellaat diouzh ar gaffarted.

- Er-maez, kozh ki !... er-maez !...

Un taol bakh dezhañ war e geln, er-maez ! Un taol troad dezhañ en e reor ha dindan skrijadennoù ar baotred... houp ! ul lamm hag eñ war an hent. Tennet a boan ! evurus !... Met petra, petra ? Drign ! drign ! baof ! baof ! Ar gastolorenn a lamm war e lerc'h, eus an eil maen d'egile. Ha Pipi da redek. Houp ! houp ! Met ar gastolorenn daonet, kroeg en e lost, ne zistage ket. Houp ! houp ! D'an daoulamm ruz, hag ar vugale war o lerc'h o youc'hal. Ar vein a fron en-dro dezhañ. Buan, buanoc'h c'hoazh !... Pipi diot-may... Pelec'h ec'h a ?... Drign ! drign !

- Hu ! hu ! Pipi... a grille ar baotred, Bilzig er penn kontañ."

Evel a welit ez eus kilz estlammadelloù en arroudenñ-se. Distank tre ar verboù, lakit a-wel ar mesk, an trouz, strafuilh ar c'hi, goap ar baotred... Al linennoù-se a ranko bezañ dibunet prin, en ur ziwall avat da zigaj ar gerioù.

+ + + + + + + + +

## Kontel 5

## LENNADENN RENNET : Bilzig, pennadoù XIII ha XIV, "Bilzig ha kazeg ar barner" ha "Bilzig gwasket".

Gouzañvet en doa kilz, ar paotrig Bilzig. Paour-glez ha ma oa, hag emzivad war ar marc'had, en doa bec'h o'n en zifenn. Met kresket eo bremañ. Kroeg eo da dalvoud da dudigoù ar barrez ar gwall bet graet outañ...

Goude lenn an daou bennad-se, grit un diverrañ anezho war ho kaer.

+ + + + + + + + +

## Kontel 6

## SKRIVADENN

Grit evel kustur, ha respontit d'ar goulennoù.

+ + + + + + + + +

## Kontel 7

## LENNADENN DISPLEGET : Bilzig, pennad XV, "Bilzig, Gargam ha nab an aotroù".

E ti Izabel ar vugale a greske, Bilzig a deus da vezañ ur paotr kreñv. Hag e-pad ar goañv en devoa sikouret e vann da besketa, da vezina ha da werzhañ ar pesked, ar c'hrogin hag ar bezhin troc'h ha disol. Deut an haf, ha gentañ an heol tomm, ar mor plaen ha kompez, an haf, bemnoz Dous, lounedigezh ar vugale. Na gwelout a rit-ha anezho, e korf o roched, diaro'hen, o bragoù troñset gante betek o daoulin, o redek war an aod, o klask kontalleged, malkoned, tareleged, pe er poullou-treazh, er moriennoù, oc'h ober redadegoù gant o bagoù : gobiri, goeletiner, teirgwemloù gredet dezhe gant o zadoù. Pa deulo ar mor war an a-raok, sellit oute o neuñv : emaint evel pesked en-dro d'ar c'herrig, pe o vageal er bagoù bihan.

Bilzig ha Yannig, goude o festekerezh, pedal na c'hallent tennañ o zread gante er-maez an ti, ha d'ar red war ar porzh da c'hoari gant ar re all, da neuñv, da vageal.

An deiz-se, Bilzig hag e vreur o devoa bet e aotre digant Saig Jelvest da vont en e vag :

- Kae e-barzh, paotr, a c'hoari'hemmas Saig da Vilzig, met bez aketus da deuller dezhi he eor, e-lec'h na hen kavi.

Mab an aotroù, ur paotr a bevarzek vloaz, an aotroù Beskont, a lavare Gargam, leizh e c'henoù eus ar ger-se, - an aotroù Beskont 'ta a falvezas dezhañ, an deiz-se ivez, mont da ober un tammig tro war ar mor. War e benn e dok garlantez, en e dreid botoù boukloù arc'hant, gwasket gentañ e borzant vilouez ruz hag e vragoù seiz malanijet. Brav-hal an aotroù Beskont, ur verc'hodennig. Hag eñ war ar porzh, heuliet a-dost gant Gargam, hemañ e wlaenn gentañ atav an e zorn.

Paotr a bevarzek vloaz 'ta, an aotroù, ha strizh, ur glazard a baotr heñvel ouzh e vann hep he madelezh, lorc'h ennañ. Klevit 'ta, na oa ket evelkent nab e dad hep abeg : nab ur C'hont !... Na c'hwil a zo beskont ? Beskont evel ma lavare ar garabassen en he yezh a Leonardez. "Beskont" a rae Jarlig kozh en ur zifrezañ anezhi. Beskont ? Ha nan on ket, a-drugarez Dous. Ma vije bet Jarlig kozh hag ar re all beskonted, noarvat n'o dije ket goapaet evel-se. Rak, hag an c'hredit, nar karit, stankoc'h eo ar veskonted war douar Breizh-Izel eget ar bili war aod Forzh-Bilzig. Ha pep hini a denne e dok d'ar beskont, ivez d'e vevel, c'hoarzhin goap a raent dioute a-bell. A-dost ? a-dost gweñ-ral livenn o c'hein. Ha soupl o izili diraze, met peoc'h !... Kizidik neurbet eo ar vartoloded, hag arabat eo harlinkat anezhe war un heveler doare.

An aotroù beskont hag e vevel a oa, o-daou war ar porzh, c'hoant dezhe da vont war ar mor. Gargam a welas ur vag-vihan ha daou vugel e-barzh, hag eñ da hopal :

- Ho ! ho ! hop !...

Van ne reas Bilzig (efi a oa er vag gant e vreur) : anavezet nat en devoa Gargam hag e vestr; dalc'het koun en devoa en taolioù-gwialenn o devoa, ur sulvezh a voe, kinkisset dezhañ e beñsoù hag e zivvorzhed. Debrñ gedon an aotrou !... Hag abaoe brezel etre ar paotr ha Gargam... Mar galle !... Ya, met Bilzig ne oa nemet ur paour kaezh paotr, ha, rak aon ouzh gwashoc'h "Ho ! ho ! hop !", e teuas en aod.

- An aotrou yaouank a fell dezhañ mont da ober un dro vageal.  
- Mat ! Deuit er vag.  
Yanrig a larnas er mor, evit tostaat ar vag ouzh ar chaoser. Dour er vag dreist ar vregaj. Bilzig a oa diarc'hen, forzh ne rae ouzh an dour-mor. An aotrou hag ar mevel er vag. Flak ! flak ! a ra an dour er vag brañsigellet, strinkañ a ra a bep tu, karget gante o botoù. Botoù ler rubanet an aotrou !  
Gargam a c'hrozole :  
- Mic'hieg zo ac'hanout ! Perak n'ac'h eus-te ket taolet dour er-maez ?  
- Amzer din n'ho peus ket roet.  
- A ! a ! Louidig bihan !... Te e... e... e... A ! te e... n'en eus ket ankounac'haet.

- Na ne, eme Bilzig outañ e-uman, na ne...  
Hag e poleo goustadik.  
- Ha ne stignez-te ken da higennoù war an traezh, dindan koad Kerodren ?  
- Geo !  
- Ha lasoù marteze er girzhier ?  
Ha Gargam a roas un taol-gwialenn, ha sec'h, war listenn ar vag. Van ne reas ar paotr, hag ar vag ac'h ae, war he fouez, plaen ar mor, luf evel ur sklaseñ. Graet gant hon martolod an dro d'ar bagoù bras ha d'ar gobiri eorlet er porzh, seder neurbet an aotrou Beskont, sutellat a ras ur sonig gallek (ne ouie ket brezhoneg), ur son desket gantañ du-se e Bro-C'hall.  
Gargam a selaoue sutell e vestr, Bilzig a varailhe.  
Echu ar sutelladenn, Gargam, en ur c'hoarzhin, a lavaras d'ar paotr :

- Ma ! Neuze blazet mat kig gad ?  
N'eo ket peurfall.  
A ! a ! n'eo ket peurfall ?  
Nann ! nann !

A ! a ! Hag e vousec'hoarzh Gargam.  
- Ha blaz ar gwialenn nan eo ket peurfall ivez, moarvat, met ankounac'haet ec'h eus-te ?  
- Fell e pad blaz an traoù nat ! eme ar paotr.  
- Gwellit 'ta, figus an aotrou, mar plij; heugñ na rez-te ket dirak ar c'hig-ber ? Kig-ber da ur fri lous evel da hind-te !... Diwall, mar kerez, rak mar tapen ac'hanout !... Kroc'hen kurunou ! ya ! ya ! mar tapen ac'hanout !...  
Hag ar gwialenn en e zorn a c'hwibane. Pañt ! pañt !  
- Ne dapfet ket ac'hanon, n'eo ket skañv a-walc'h ho troad.  
- Skañv a-walc'h, mammouz ! mic'hieg !... Diwall ! Laka ac'hanonp en aod ha buan pe... (Bilzig a vousec'hoarzh)... pe war da benn ec'h ez da vont er mor.  
Graet en dije Gargam ar pezh a lavare. Siwazh ! na poleat na roefvat ne ouie.  
- Hast afo kas ac'hanonp en aod.  
- Qu'y a-t-il, Gargam ? eme an aotrou.  
- Rien, Monsieur le Vicomte.  
- Quel dommage de rentrer !... Restons encore un peu.  
- Le garçon dit qu'il lui faut aller à terre !...  
- N'eo ket gwir, aotrou, eme Bilzig : gaou a lavar.  
Klevet nat en devoa komzou ar paotr yaouank, ha na ne gaozee ket ar galleg, Bilzig evelkent, abaoe na oa bet er skol gant ar c'hure, her c'hompren a ras.  
- Buan en aod, mammouz ! a c'hrozole Gargam.  
- Gaou, Gargam ! Gaou !  
Hag a-nerzh e gorf, ar paotr a boleo. Brañsigellet a rae ar vag. An aotrou

evurus a c'hoarzh. Gargam ne c'hoarzh ket.

- Gaou, Gargam ! a adlavare Bilzig.

Gargam a ziode. Ne grede ket dirak e vestr...

Tostaat a reont d'ar bord. Savet an daou-vertolod en o sav. Kra... a... a... ag... ag !! Miarag ar vag vihan a dour beg ur garradig, ar Garreg Du. Hag an aotrou hag e vevel a gouezhas o-daou war o reor, an aotrou e foñs ar vag, en dour, ar mevel war he listenn. Fomner, gwall bomer Gargam, skañv ha lespoñj un temmig ar vag, pladañ a eure. Ha Gargam hag e veskont, o-daou war o c'hrabanou, o parlochat en dour-mor. Ha da grial diwar-bouez o fenn. Lec'h ne oa ket da youc'hal ! Daou pe dri drotad dour ne oa ken dindan kein ar vag, brev an amzer anezhi.

An daou beñse a savas en o sav, hag int war an traezh, treantet, nemet diver-adur ne cart. Gwisemant voulouz ruz ha seiz melanijet ar beskont, hag e dok gar-lantezet ? Un dreez. Ha Gargam mezhek, droug emañ, a fuc'he.

Bilzig evelte a oa kouezet er mor; hast n'en devoa ket da zont en aod, aon dezhañ : gwialenn Gargam !

Goulennoù :

- 1) Lemmit dibenn ar pennad en ho levr.
- 2) Dileplegañ ar gerioù-mañ : bezhina, bezhin troc'h ha disol, morlennou, kerriki, eor, mero'hoqennig, strizh (er skrid), glazard, harlinkat, parlochat.
- 3) Renablit ar gerioù o temañ d'ar bagoù ha d'ar pesked.
- 4) Peseurt den eo Gargam ? Penaos en em zalc'h Bilzig dirazañ ?

+ + + + + + + + +

## ELZHVET SIZHUNVEZH

=====

Kentel 1YEZHADUR

Studiañ displegadur ar verboù BOUT hag ENDEVOUT, hag an evezhiadennoù da heul, pp. 130-140.

Poelladenn :

1) Displegañ an implij eus ar furmoù islinennet :

"Hanteret e oa niz here hag edon o c'hortoz an daou veajour abaoe eizh deiz bennak, pa c'hoarvezas un darvoud a bouez bras. Ur nintinvezh, pa oan c'hoazh kousket mik, e teredas Gwener d'an ti, en ur c'hammif a-bouez e beun : "Mestr ! mestr ! emaint o tont, emaint o tont !... Va armoù a laoskis war va lerc'h rak n'edon ket war-c'head da gaout ezhomm anezho. Da heul Gwener e redis betek an duchenn, e-lec'h ma vezend ken lies-all o tiwall. (Abrobin)

2) Klokaat gant EUS, EMAN, EO, EUS :

Pelec'h ... Alan ? - En ti ... va breur - E-pad an hañv e ... gwelet kalz touristed - Lazhet ... bet kalz tud er brezel - Ne ... ket labourer da sul - Deut ... amañ -

3) Eilpennañ ar frazennoù-mañ, oc'h ober gant EUS pe gant EO :

Kalz tud zo en ti.  
Va breur zo dimezet.  
Ur c'heneil din zo deut d'an gwelout.  
Levrioù zo bet roet d'ar vugale.  
Daou di zo bet savet eno.  
Ur verc'h zo bet ganet dezho.

4) Roit doare-gourc'hemenn ENDEVOUT, eil gour unan ha lies.

+ + + + + + + + +

Kentel 2

LENNADENN RENET : Rilziz, pennad XVI, "Ar biladeg".

Grit un diverrañ eus ar pennad (10 linenn).

+ + + + + + + + +

Kentel 3PENNAD-SKRID

Testenn an eizhvet sizhunvezh en ho levriz poelladennoù. Klaskit ar mennoziou. Boazet oc'h bremañ ouzh an doare d'ober. Krogit da urzhiañ ar mennoziou bep ma teuint.

+ + + + + + + + +

Kentel 4

LENNADENN DISPLEGANT : Un ti hep oaled, gant Loeiz Herriou.

El an dud kozh-fall ha diskaloneket, n'helle ket en em zijebañ ag ar soñjoù du-se. He bugale a wale gant tristez, e washas dezhi bennez. Ober a raent pesh a hellent evit distroññ he spered hag he lakaat da gavout berroc'h hec'h amzer : Poan gollet ! Bet e vehe bet dezhi distroññ da Gêrpoull, hag an dra-se n'helle ket...

Ar vedesinerion ne raent netra dezhi.

Hag he spered a wanae taol ha taol. Meur a zaiz ne ouie ket mui forzh kaer petra 'rae. Ar greiz an deiz ec'h eluas ar gouloù, pe kargif a rae he sec'hier darter a sukr, troc'hif a rae bara hep dober, ha kant tra dibenn arall a ziskoueze splann ec'h oa cheñchet armezhi.

Da noz, e komze kreñv. An-dro he saout e veze, d'al liesañ; larout a rae o anvioù. Meur a wezh e oa doc'h ar c'hazh e komze : her gervel a rae, goulen a rae gantof perak e selle ker fall doc'hti. Gwezh ec'h ne hec'h albac'hem gant he labour..

Un dra vat c'hoazh, dirañj ne oa ket ha ne glasket ket monet er-maez.

Divourvaat a rae neozh ar vuhez eviti hag ivez evit he vugale. Deut eo ar gouzañv hag e zaizioù berr ha teñval. Berreat ha teñvalaat a rae bennez ivez he zann spered.

Ha setu an Nedeleg.

Lakaet en deus Anna ha Joheb en o soñj monet d'an ofereñn a greiznoz, n'o deus c'hoazh biskoazh gwelet en ur gêr vras.

Ast eo Mari-Perrin abred d'he gwele. Ne gousk ket, net chom a ra didrouz dindan he liñselioù gwenn, o varbotat doc'hti hec'h-unan.

Da unnek eur hanter e lar Anna doc'hti :

"Ha mamm, ec'h a Joheb ha me d'an ofereñn a greiznoz. Ne vehomp ket pell. Ne ficheet ket, hema ?

- D'an ofereñn a greiznoz ! Arc'hoazh emañ an Nedeleg ?

- Met ya.

.. Sellit êlkent ! Ne ouian ket mui penaos e trenen an anzer ar na c'hain ..."

Hag an daou bried yaouank a-raok, goude bout alc'houezet an nor, gant aon na vehe deut soñj d'o mamm da zonet ar o lerc'h.

Kentizh achu an ofereñn, e teunt d'ar gêr.

O tagouezh e-tal o dor, e idlont. Trouz koad o tarzhal en tan a zeu bet' o diskouarn, ha d'o difron e sav blaz ar rousin losket hag ar moged.

Enañ sur an tan en tu 'rall !

Fomañl, Job a zigor an nor, a elun an tredan : ur bouilhad moged a sailh d'o daoulagad. A-dal d'ar faos oaled e sav ar flamm, hanter hant d'an doublaj.

Digor a ra a-herr ar fenestra, rak n'en deus ket a harz ! Gwintif a ra ur podad dour ar an tan. Gwall vall e oa : kroget eo er blañcheris koad sarr hag emberr ec'h oa an tan en ti a-bezh.

Nag e vuzi ? E-kreiz ar moged hag a droc'h e anal, he c'hav astennet ar he gwelo.

A pa vihana ar moged e kompren petra zo degouezet.

Ar-lerc'h mand int ast d'an ofereñn, soñj en Nedeleg degaset da Vari, en deus ivez dilunet, en he spered gwanaet, koun an anzer dremenet, na selle el ur pec'hed chom hep lakaat un etev en he sininal.

Savet he deus ha kemeret ar bern koad boestoù kozh a c'hwesha Anna he zan gante en he forneg. Paket he deus ar c'head-se e-tal ar faos-sininal, harp doc'h ar skod derv a servij da Joheb da faoutif e goad. Ha hi ha boutif an tan enne hep soñjal ne oa toull sininal orbet da gemer ar moged.

Rak lezet o deus un ti hep ene evit donet da chom d'un ti hep oaled.

Ker klog el mand eo ar ganbr, emberr ena leun a voged hag ar gaezh Mari-Perrin ho deus kavet, doc'h moged he diwezhañ selenn Nedeleg, un distav d'he foanioù.

Larout a rae atav e vougeze er gêr-se !

Goulennoù :

- 1) Displegit ar gerioù-mañ : dober, tra dibenn, albac'henn, divourruasaat, fichañ, kentizh, bouilhad, plañcheris, skod, selamm, "aistav d'he foarioù".
- 2) Petra 'verk an dibenn -AL e tarzhal ? (d.h. e gwenadeg) Roit verboù all evel skouerioù.
- 3) Perak, a soñj deoc'h, eo klafivet spered ar vacuez kozh ? Perak ken trumm ?

+ + + + +

Kentel 5

DEUNADUR : Un ti hep caled, adal "A pa vihana..." betek an dibenn.

Trist eo an tamm pennad-se. En en lazhet eo ar vacuez kozh dre zegouezh, dre ma kave dezhi e oa c'hoazh en he zi kozh. Ean kanañ eo ar pennad-se, ha dis- kouez a ra kizidigezh hag arz Loeiz Herrieu.

Deoc'h-c'hwil d'hen dibunañ war ho plañ, hag en un doare froums.

+ + + + +

Kentel 6

SKRIVADENN

Klaskit testenn an eizhvet sizhunvezh, ha respontit d'ar goulennoù.

+ + + + +

Kentel 7

GWERZAOUREZH

Studiañ ar glotenn diabarzh, pe "enklotenn", pp. 28-34.

Poglladenn :

- 1) Petra eo ur glotenn diabarzh pe enklotenn ?
- 2) Islinannit an enklotenoù er gwerzennoù-mañ :

"Pan deu hon aecruant kogant d'hen tourmantañ Ar C'hig, ha'n Drouk-spered, hag ar Bed, a gredan, Koumaat ar beder rod a dieomp d'an trot sikañv Ha'n marv a Jezuz Krist, na ray dimp resistañ." (Melegour ar Marv)

"Kalon ar gwaz, er c'hoadoù bras lazhet, E sas lintrus ar roz ruz zo kuzhet, Roz gwenn a vir o c'halir koantiri Ar plac'h, hag hi, yen er pri, dislivet." (Roparz Hemon)

"O vale, gant trouz ha tounnac'h, O c'hloc'h a-vrall er nare'hallac'h, Pep doug, pep c'hoant yac'h a vac'hont. Ha n'eus, dre blous na dre g'ar, Nep heklez na vlej o gevien Hag o risign taer divergont." (Roparz Hemon)

NAVET SIZHUNVEZH  
=====

Kentel 1

Y'ZHADUR

Studiañ an "Dirreizherioù" er verboù, §§ 198-205.

Poglladenn :

- 1) Displegit ar verboù etre kromelloù evel ma tere :

Perak ne (FIZIañ, amzer-vremañ, 21 gour lies) ket an dra-se emon ? Hag e (DIGERañ, strizhtremened, 3<sup>e</sup> gour unan) ur wech ouzhpenn. Pa wali ar vag e (NEULañ, dazont, 21 gour unan) etrezek enni. Bezit truez d'ar re a (POANLañ, amzer-vremañ) evidoc'h ! Ar bloaz a zeu e (HEULLañ, dazont, 1<sup>st</sup> gour unan) kentelioù amzerzh.

- 2) Pegoulz e wana pemrann ar verb ? Skouerioù.

- 3) Lakaat en amzer da zont :

Piv a laka an doubier war an daol ?  
Va zad a ro din arc'hant.  
Pa zeu an nevez-amzer, e c'holo an delioù an holl vez.  
Pa zeu da walout ac'hanon e sko war an nor.

- 4) Savit div frazenn gant TSURVEZout, unan en doare-gouro'hemenn, unan er strizhtremened, hag addisplegit ster ar verb bep tro.

+ + + + +

Kentel 2

LENNADENN DISPLEGET : Bilzig, Eil lodenn, pennad I, "Bilzig, nous e bourzh 'Ar Gwennili'".

Setu Bilzig nous e bourzh ar Gwennili, ur vag nevez-flann. E-pad ar goañv, Saig Jelvost a ras ar beaketaerezh, e-hed an aod, gant rouedoù stank, drag pe sein. Gant an drag e pesketae pleised, lizanned, balbanned, toulboud, rused, toulhed a bep liv : toulhed-traezh, toulhed-rouz, toulhed-ajdn. Bao'hañ a rae en e sein pesked-red : braoged, mailhi.

E-pad an hañv, dilezet an drag hag ar sein, ar Gwennili ac'h ae pell er-maez en-dro d'ar Velevenn, d'ar Gorjegoh, pe war bazennoù Treoger da lakaat e gevell, da stignañ e gardin higennoù hag e rouedoù boull evit pesketa silloù, rased ha ret- oned, marc'hlisti, travanked, legistri, givri-mor. Arc'hant a c'honzeser, net garv ar vicher : er vuhez-mañ, netra evit netra.

E-pad ar goañv, taolet an drag er-maez, rankout a rafer he sachañ eus goueled ar mor, tennañ anezhi er vag. Ha pa vez yen an amzer, gleb an dilhad, kropet an daouarn, an ivin-rev er bizled, m'hen asur deoc'h, n'eo ket ar vicher un dibab evit ur penn-hêr pinvidik. Ha pa yud, pa sikrij an avel en drisoù, en obañhoù, ne vez ket brav kennebeut bezañ er vag, dindan ar glav, dindan strinkadennoù an tarzhioù-mor.

Ma ! Petra oc'h-c'hwil ganet ? Leva hoo'h sus-c'hwil ? Marteze den a vad uhel ? Ket. Ma ! Ret eo neuze deoc'h gont ho para gant c'hwizenn ha skuzhder ho korf : ret. Ar marteled, gont a ra e hini o rullhal e gorf dizant, hep klenn, e-hed an devezhoù, an nozvezhoù, dindan an holl amzer, evit tapout pesked da werzhañ d'an neb o faeo. Anez da se ?... Bara, na kig na krapouezh ne vo war blenken.

e di, hag e tier an dud a vor peurvuiañ enne a-leizh a vugale, hir ha lemm o dent. An arc'hant a gompaz ar boan, a livirit-hu. Gwir ? Gaoz ?... Evelkent ar boan a zo un tamm, ur bastell eus ar vuhez mchet gant skañgher ha grevusted an izili, hag alies gant ankrez ar galon. Ar gwemneion a roit da Saig Jelvest evit e besketaerezh, na petra o deus bet koustet deoc'h, den pinvidik ? Hag e-pad na oc'h en ho kwele, tom deoc'h, kousket mat, e rised e vuhez Bilzig, ar paotrig a drizek vloaz, a zo dindan ar glav pe ar gwall-anzoz o pesketa evidoc'h al legestr, ar c'havr-mor a zebrfet warc'hoazh d'ho lein pe d'ho koan.

Hag abalamour da betra leuskel da nijal ar memnoziou dibreder-se a-dreuz oabl bac'h hag arneuek an dud paour ? Gwir eo. Abalamour da betra ? Kontant int eus o stad. Kontant ?... Doujet d'o stad, lavaram ket. Paour eo ar pesketaer ha paour e vezo. Kalet e blanedenn, na piv he disc'hralo ? Piv he zorro ? C'hwil ? Me ? Hennañ ? Henhont ? Arabat eo dit, paour kaezh, lakaat da fizlafs en dud lent ha dishegar, gra da vicher, gonez da c'hoar, doug da vec'h hep klamm na trugarez.

Ma eo evurus Bilzig, laouen neurbet oc'h ambarc'h e bourzh ar Gwennili, gwall figus e vefe bet ar paotr, na na vije ket bet : mall a oa war e blas. Mous e bourzh ar Gwennili, gwellañ bag a oa e-barzh ar porzh, hag he c'habiten, brudet ar gwellañ e-touez ar re wellañ eus ar besketaerien hag ar vartoloded.

Saig Jelvest, ar c'habiten, a oa ur gwaz, na oa unan : un den a c'hwec'h troat-ad, ledan e c'hoùg; e zourarn, div c'holyach; a-blom war e draid, e ziv votez-koad, hep gaoz, a oa heñvel ouzh div laouer doaz. E benn, ront ha moal evel ur vilienn, a oa garlantezet a vlev, ur gwechall, dislivet bremañ, ho pije lavaret gant dour-saon. E fri ledan a oa frank-digor, ha dindan e ambrankoù louet ha druz, daou lagad bihan a skode lemm gwr-c'hlas, siket den gartañ an e benn. Stagit ouzh groñj Saig un troc'had bary, louet ivez, ledan evel ur bal, rust evel sekrap, hir ha fonnus evel foann er prad dourek; ur jod dezhañ, peurvuiañ e jod kleiz, koeñvet gant ur chik ken tev hag ho pil-meud, ha, pa'n boa lavaret deoc'h penaos den biskoazh ne glevas Saig Jelvest, memes e-kreiz ar gwashañ degouezh, o sevel e vouezh ur wech uheloc'h eget ebant, ec'h anavezfet parc'hem ar Gwennili, kerkoulz ha me.

Souezhet oc'h bremañ na eo bet lesanvet "ar Marv". Buanoc'h evitañ ne c'h oa ket, net eveltañ ec'h ezrue d'e ampoent. Ha na oa kabiten war acozh Bro-C'hall ha Bro-Saoz, pa deus gant e c'hoar da Duall-ar-C'hirmi da gargañ gwinizh pe gerc'h, ha na veze laouen, pa veze fall an amzer anezhi, o welout penn barvek Saig Jelvest o leviat e c'hoar.

- Arabat eo koll an Norz (hamezh a oa e c'her), a lavare d'ar c'habiten, en ur evañ ar werennad gwir-antant a veze kluniget dezhañ.

Ha Bilzig ?... Bilzig a oa mous e bourzh ar Gwennili gant un hevelep kabiten, lorc'h emañ; hag abaoe nan ne ken da c'hoarri gant ar vugale all. Tra pe dra en dezo atav da ober er bagoù : teuler dour eus luseo ar vag vras gant ar skop; lakaat ar gouelioù, ar skoujob, an drisoù da sec'haf; lardañ ar wern, ar stae, ar poleoù, astenn ar fard war ar bili evit o disgwañ; divailañ an drag pe ar sein evit o dresañ; koltariñ, livañ ar vag vihan pe an hini vras.

Ha Bilzig atav da heul e batron evel ur c'hi bihan, ha Saig ivez a gare gwelout ar paotr en e gichen, en-dro dezhañ, o tont hag o vont, dever emañ.

Goulennoù :

- 1) Lemn dibenn ar pennad en ho levr.
- 2) Displegañ ar gerioù-mañ : bazennoù, kevall, kropet, ivin-rev, "oabl bac'h hag arneuek", dishegar, golvach, leviat e c'hoar.
- 3) Grit ur roll eus ar gerioù o tennañ d'ar pesked, d'ar pesketa ha d'ar bigi. Klaskit o ster, net na adskrivit ket an displegadurioù war ho knaer.
- 4) Petore den eo Saig Jelvest ?

Kentel 3

PENNAD-SKRIL

Kenerit brouilhed ar sizhun dreanen. Adverit ar memnoziou, ha klaskit gwelout ha siklaer eo ar steufv ho poa dibabet. Skarzhit kement memnoz, kenant evozhidenn na denn ket ez-geun d'an destenn. A-raok stagañ da sevel ar pennad, adlemnit an destenn hec'h-unan, na vlot sur n'oc'h ket aet a-dreuz.

Kent adskriveañ ho pennad, adlemnit anezhañ aketus. Gwirrit ster ar gerioù a implijit : e brezhoneg ez eus kalz gerioù heñvel pe danheñvel o ster; ur gounid e vo deoc'h chon hep ober dalc'hat gant an hevelep re. Arabat gwallgeañ pinvidigezh ho yezh !

+ + + + +

Kentel 4

LENNADENN DISPLEGET : Bilzig, pennad II, "Nozvezh ar morgazhed".

Arabab eo eta bezañ aonik pa vezer war ar vicher-se, na kennebeut kizidik. Ret eo d'ar paour kaezh mont, mont atav dindan n'eus forzh petore anzer, evit gorit e vara hag hini e diegezh.

Koll e vuhez gant ar Gwennili eo bet darbet dezhañ : ur wech dreist-holl. Kontañ a rin-me deoc'h an dro-se ?

Un nozvezh a ziwez niz du, ar Gwennili a oa o tragiñ etre Beg-ar-Fri hag ar C'hadoroù-Bihan. Bouk an anzer ha teñval, ur briz rout a avel, daou riz er gouel bras. An drag er-maez, an daou vartolod a oa en tilhar oc'h ober ur voredadenn, Bilzig a oa war ar varrenn, Saig gourvezet en dieglav en abourzh, e-kichen ar paotr.

- Pa vi erru, eme Saig, da ziskregiñ ar garreg a ra Beg-ar-Fri eus ar steredenn a welez aze en e noroa, e tilhni ac'hanon; ivez na c'hoarvez un dra bennak all.

Bilzig eta, ar varrenn en e zorn, a levie; heuilh a rae aketus ar steredenn a zigore, gwechig e veze, he lagad a-zindan ar malkemnoù gwentet gant an avel. Goustañ, goustañ, ar vag a dostae ouzh ar merkoù. Pommer an drag.

- Daoust hag hi a vefe krog en ur garreg bennak ?  
 Sebiantout a ra dezhañ evelkent penaos ar vag ac'h a, ac'h a nebeut ha neb-oudoù. Ha koulskoude er merkoù emañ. Setu karreg Beg-ar-Fri, setu ar steredenn; emaint an eil dre eben.

Hag en noz teñval ar Gwennili ac'h a, ac'h a, pommer; kouszhañ a ra e plegioù ar gwagennoù, sevel a ra war o c'hein, plegat dindan an avel, glibet gant ar strinkadennoù.

Ur wech c'hoazh ar paotr a sell ouzh ar merkoù. Skoret, eoriet eo ar vag !  
 - Saig ! Saig ! eme ar paotr, dilunet !...

- Petra ? Petra ?
- Ar vag ne c'h a ken war an arack.
- Er merkoù out ?
- Ya, gwelit hoc'h-unan.
- Krog out er garreg.
- 'Gav ket din. Bezhin moarvat, ur sae'had bezhin.
- Dilunet ar re all ? Arabat... Amin ar gouel bras da welout.
- Ha Saig a sachas war ar grelling.
- Pommer an diaoul eo !... Ec'h eomp da goll hon nozvezh... Amin ar gouel stae... Dilun ar re all... Savit, paotred !
- An daou vartolod a wiskas o forpant.
- N'eo ket ret, paotred... Tomm a-walc'h ho pe bremaik; emañ 'zo un dra bennak da sachañ diouz ar mor.

Hag ar pevar den a sache : ho ! ho ! ho !

- Daoust petra an diaoul a zo e-barzh ? Petra ?... Birviken ne c'hallfomp tennañ ar roued er vag, birviken !  
Kement ha kement evelkent o deus sachet war ar greling, seblantout a ra dezha penaos an drag a zo diskrog.

Un tammig ehan.  
- Da vihanañ ar roued ne vo ket kollet, nag ar fard.  
Echu an diskuzhadem.  
- Ur c'hrog all, paotred !...  
A-merzh o c'horf o deus sachet.  
- Ya, ya, distag eo... Deomp eo... Sevel a ra d'an neoc'h !... Ho ! ho ! ho !  
Setu ar perch war-c'horre an dour.  
- Tê !... Sell !... eme unan eus ar vartoloded, sell ! Ur vorgazhem !  
Ur vorgazhem war listenn ar vag. Setu unan all, hag unan all. An drag he deus kavet ur c'hloedad morgazhed.  
- Leun eo an drag.  
- Leun, sell !... Ar nor a verv gante !...  
- Petra vo graet ?... Petra ?  
- Troc'h ar greling, Saig, eme ar vartoloded; bremaik ar vag a vo leun gante.  
- Troc'hañ ar greling ?... Koll hon drag ?... Nann ! Nann ! a lavaras Saig.  
- N'hoac'h eus-ha ket, Saig, klevet komz eus ar vag-se a Lokano, c'hwil 'oar nan eus ket kait-se, hag a zo bet aet d'ar foñs gant ur gang morgazhed. Hag er vag, deut d'ar goulenn, a zo bet kavet petra, a gav deoc'h ? Petra ?... Eskem ar vartoloded, sunet, krignet gant al loened-se.  
- D'ar foñs ec'h afomp gante, eme egile... Troc'h ar greling, Saig... Debret e vefomp gante en bev !...  
- Arabat koll an Nort, paotred !... Koll hon drag ! Netra da c'honit e-pad penzektez... Dalc'homp an Nort, paotred ! Ret eo, a c'hrogolas Saig.  
- Dont a reont warnomp a-vill-vein.  
- N'eus forzh, eme Saig, n'eus forzh... N'eo ket leun ar vag c'hoac'h !  
Goulenn-deiz a save : bremañ e welod anezhe evel ur blojad merien e-barzh an drag, deut war-c'horre an dour. Hag ar morgazhed ha da neuñv, da gupat, hag ar vartoloded, o c'hontell gante en o dom, a droc'he, a droc'he. Evit unan troc'het, kant a grape, a bigne er vag.  
- En bev e tebrfont ac'hanomp !

#### Goulennoù :

- 1) Displegeañ ar gerioù-mañ : tilher, moredadem, malkennoù, merkoù, strink-ademnoù, listenn, klodad, blojad merien.
- 2) Grit adarre ur roll eus gerioù ar vartoloded, ha klaskit o ster.
- 3) Petore tanz-speired a ziskouez Saig kaout er pennad-mañ ?

+ + + + + + + + +

#### Kentel 5

#### GWERZAOUREZH

Studiañ en ho levr "Penaos stummañ ha penaos strolleañ ar gwerzennoù", pp. 35-44.

#### Poelladenn :

Niverit ar muezhiadennoù ha merkit an arsav, diouzh ret :

"Paskoù Hir, ar c'hemenner,  
Zo aet da ober al laer,  
Aberdaez noz digwener.

"N'helle mui ober bragoù :  
Aet an dud d'an armeoù  
Ouzh re Vro-C'hall hag o rou !" (Ar C'horred, Barzhaz Breizh)

"Neb a wele Jeff àr an aod  
Dreñt he legad, ruz he divjod :

"Neb a wele Jeff er pardon,  
A deus joa en e galon.

"Neb he gwele àr he gwele,  
Gant truez outi a ouele.

"Gant truez ouz ar plac'hig klañv  
Ker gwenn evel ul lilienn hañv." (Bleuniou Mae, Barzhaz Breizh)

"Er straed heñvel bepred, netra ne gemm  
Nemet an eabl, an eabl ha na ra van  
Nag eus an dud e kar'har o ziez  
Nag eus an dud o tremen, stouet o fenn  
Staget ouz an douar gant o freder." (Roparz Hemon)

+ + + + + + + + +

#### Kentel 6

#### SKRIVADENN

Grit evel dalc'hmat, ha respontit d'ar goulennoù.

+ + + + + + + + +

#### Kentel 7

#### LENNADENN RENET : Bugale Lir

Goude tañva lennegezh Kembre ar Grennamzer e vo mat deoc'h kaout un albez eus her lennegezh Iwerzhon. Tennet eo ar pennad-mañ diouzh Tonkadur Bugale Lir. An danevell-se zo deut betek ennomp en un dornakrid eus an l'vst kantved. Padal ez eo kalz koshoù an danvez : e-harvez, e temfe da cadveth registorel ar Maen. Emd e kaver anv eus De Danann, ar pevare eus ar meridiou a aloubas Iwerzhon, hag ivez eus doueed evel Dagda...

#### EREZ AOIFE

Alies-neurbet e teue Bodh Dearg da Lez Lir dre garantez ouz ar vugale. O c'hemer a ras en e di e-pad hir amzer, ha neuze o lezel da zistreiñ. Ha pe veze lidet barvez an Oad gant an De Danann e Lez Lir, er vugale-se e vourrent an abeg da gened hag eounde o c'hourfoù. E gweleoù dirak o zad e koukent, ha boas 'oa hemañ da sevel bep beure ha mont da c'hourvez e-touez e vugale.  
Sed a c'hoarvezas koulskoude : un tan a eraz a grogas e kalon Aoife abalanour da gement-se, hag e sellas ouz bugale he c'hoar gant enebiezh ha kasoni. An neuze a reas da vezañ klañv e-pad an darn vrasañ eus ar bloaz. Ha goude-se un argarzh

taol gvarizi ha gourvenn a ijinas e-enep bugale Lir.

Un daiz e lakmas sterniañ he c'harr, hag e kasas ar vugale ganti. Hag hi en hent etrezek ti he zad. Fionnguala ne felle ket dezhi mont, o c'houzout e klaska Aoife ober droug dezho pe o lazhañ: dra he hufvra he doa gwelet ar mamoz trubard a ziwan e spered Aoife. Ne oa ket, avat, evit herzel ouzh an tonkadur a oa engortoz eviti.

War an hent e lavaras Aoife d'he zad :  
"Leahit, emezi, pevar bugel Lir, o deus lamet diouzhin karentez o zad. A bep seurt goprou ho pezo diganin."

"Naren, enezo, evit ganeomp-ni ne vint ket lazhet. Un torfed fallakr out mennet da ober, ha kouz az pezo da vezañ e ziskalliet."

O welout na sentent ket, e temmas he c'hleze da lazhañ hec'h-unan bugale Lir. Hogen he gwagelezh, hag he laoskentez natur, ha gwanded ha spered a viras outi. Ewel-se ez ejont war-du ar Reter betek glan Loc'h Dairbreac'h, hag eno e harzjont o c'hezañ.

Neuze e kemmas Aoife da vugale Lir mont da gouronkañ ha da neuñf war al lenn. Mont a rejont. Drougitu m'o gwelas war an douar, e stokas Aoife outo gant ur wialenn hud drouzel, m'o lakas da bevar alarc'h gwann-kann.

Neuze e troas pevar bugel Lir o dremm davet ar vaouez. Fionnguala a gonzas outi ewel-hen :

"Fall an torfed ac'h eus graet, Aoife, hag un taol ganas eo bezañ hon distrujet hep abeg. Talvezet e vo dit hep mar. Ha kouzhañ a ri en abeg da se. Rak n'eo ket brasoc'h da c'halloud-diskar eget drouzelezh hor c'hameiled. Lavar decmp eta peur e vo tarmen d'hor reuz."

"Hag e rin, eme Aoife. Ha gwazh a se deoc'h p'hoc'h eus goulennot. Sad an temen a lakas d'ho pou : pa vo unanet maouez an Dehoù gant Gour ar C'hleiz; da lavarout eo, pa vo unanet Lairgen, nab Colman, nab Cobtao'h, nab roue Connac'ht ha Deoc'h, nerc'h Fingin, nab Aod Alainn, rous Muma. Ha peogwir hoc'h eus goulennot, nignon ebet na galloud ebet ne c'hellio lamel ar stummoc'h-se diwarc'h kent na vict chomet tri c'hant vloaz war Loc'h Dairbreac'h, ha tri c'hant vloaz war froud ar Macil, etre Iwerzhon hag Alba, ha tri c'hant vloaz e Lorrus Domann hag Inis Gludaire Brendaim. Ha sed ar pezh a c'hoarvezo ganeoc'h."

War se, kouz a zeuas da Aoife, hag e lavaras :  
"O vezañ na c'hellan ket ho frealzif nag ho tiboaniañ hiviziken, ho prezeg a virot, ha gwerziñ klemmvanus a ganot, m'o devo nibien an Douar c'hoant da gousket ouzh ho klevout, ha kanerezh ebet ne vo par d'ho hini. Ho skiant hag ho poell a vano ganeoc'h, ha n'ho pezo doan ebet o vezañ e stumm evned."

Hag e kanas ar ganeur-mañ :  
"Kennavo deoc'h, bugale Lir,  
Gwann ho tremol, sirat ho teod,  
Brasat reuz da yaouankiz flour  
'Gortoz nav c'hant vloaz war an domn."

KASTIZ AOIFE

War-lerc'h ar ganeur-mañ e voe sterniet he c'harr da Aoife, hag hi ha mont davet he zad. Degeneret mat e voe gant uhelidi al lez. He zad a c'houlennas perak n'he doa ket kaset bugale Lir ganti.

"Touñ a ran dit, emezi, n'out ket karet gant Lir. Ha ne grad ket kas dit o vugale, gant aon na vefent dalc'het ganti."

"Souezhet on a se, a lavaras Bodh Deary, rak keroc'h eo din ar vugale-se eget va bugale-me."

Hag e soñjas Bodh Deary ennañ e-unan e oa un taol trubarderezh he doa c'hoariet ar vaouez-se ouzh ar vugale. Kennada a gasas war-du an hanternoz da Lez Fionng'haid. Lir a c'houlennas perak e teuent.  
"Da gerc'hat da vugale", enezo.

"Deoust ha n'int ket degouezhet a-unan gant Aoife ?" enezañ.  
"N'int ket, eme ar gannaded, hag hervez Aoife, te eo ac'h eus miret outo da vont."

Doaniet hag enkrezet e voe Lir o klevout ar c'heloc'h-se. Rak maizet en doa e oa bet nac'hagnet pe lazhet e vugale. Paket e voe e loaned da Lir antronoz beure mat, hag en hent, etrezek ar mervent, betek na tizhas glann Loc'h Dairbreac'h.

Fa welas ar varc'hekadeg o tont, e kanas Fionnguala ar ganeur-mañ :

"Ra vo deut mat ar varc'heien  
A welan tost da Loc'h Dairbreac'h.  
Ur strollad nerzhus, kevrenus  
A zo deut bremañ war hol lerc'h."

Degouezhet e-kichen ar ribl, e verzas Lir e oa gant an evned-se mouezhioc'h tud, hag e c'houlennas perak.

"Klev 'ta neuze, Lir nab Lugaid, eme Fionnguala, ez omp-ni da bevar bugel strobinnellet gant da vreg ha c'hoar hor mamm dre erez ha gvarizi."

"Ne c'heller ket, eme Lir, lakant ho stumoc'h da zont warnoc'h adarre ?"

"Ne c'heller ket, eme Fionnguala, ha ne c'hellio den mont war hor skoazell ken na vo unanet Maouez an Dehoù gant Gour ar C'hleiz, an amzer na tevio ar Faiz hag an douegezh en Iwerzhon."

Fa glevas Lir hag e dud, teir leivadeg a c'hlaoc'har, a geuz hag a anken a rejont etrezek an neñv.

"Ha c'hwil a fell deoc'h, eme Lir, dont ganeomp, pa'z eo chomet ganeoc'h hoc'h evnor hag ho skiant ?"

"Ne c'hellomp ket, eme Fionnguala, mont kevret gant den hiviziken : hogen hor yezh, ar gouezeleg, hon eus c'hoazh; hag e c'hellomp ober kanerezh klemmvanus, na vo boemet tud an douar ouzh hor c'hlevout. Chomit ganeomp en noz-mañ, hag e kavinp evidoc'h."

Lir hag e dud a chomas da selaou ouzh kan an elerc'h war c'hlaun Loc'h Dairbreac'h. Hag e vanjont kousket en diwez. Antronoz vintin e savas Lir da vont da Lez Bodh Deary.

Tanallet e voe dezhañ bezañ deut hep e vugale.

"Siwazh, eme Lir, ne n'eo ket na felle ket din kas va bugale enañ. Hogen Aoife da advech'h a c'hoar o mamm, he deus o zroet e pevar alarc'h gwann-kann."

Skrijañ a reas Bodh o klevout ar c'heloc'h-se. Rak anaout a ras e oa gadr. Hag eñ da rebech start Aoife :

"Gwashoc'h, emezañ, e vo dit an taol-mañ eget da vugale Lir. Distrobinnellet e vint e poent, hag ez ay o enoc'h d'ar baradoz."

Hag e c'houlennas outi pe stumm a vije ar gwashañ ganti mont ennañ : "Stumm un aerouant", a respontas.

"Er stumm-se ez i eta."

En ur gonz e skoas outi gant ur wialenn-hud drouzel, na'z eas-hi d'un aerouant. Ha raktal e nijas kuit. Hag un aerouant eo c'hoazh, ha bez' e vo da virviken.

"Er stumm-se ez i eta."

En ur gonz e skoas outi gant ur wialenn-hud drouzel, na'z eas-hi d'un aerouant. Ha raktal e nijas kuit. Hag un aerouant eo c'hoazh, ha bez' e vo da virviken.

"Er stumm-se ez i eta."

En ur gonz e skoas outi gant ur wialenn-hud drouzel, na'z eas-hi d'un aerouant. Ha raktal e nijas kuit. Hag un aerouant eo c'hoazh, ha bez' e vo da virviken.

"Er stumm-se ez i eta."

En ur gonz e skoas outi gant ur wialenn-hud drouzel, na'z eas-hi d'un aerouant. Ha raktal e nijas kuit. Hag un aerouant eo c'hoazh, ha bez' e vo da virviken.

"Er stumm-se ez i eta."

En ur gonz e skoas outi gant ur wialenn-hud drouzel, na'z eas-hi d'un aerouant. Ha raktal e nijas kuit. Hag un aerouant eo c'hoazh, ha bez' e vo da virviken.

"Er stumm-se ez i eta."

En ur gonz e skoas outi gant ur wialenn-hud drouzel, na'z eas-hi d'un aerouant. Ha raktal e nijas kuit. Hag un aerouant eo c'hoazh, ha bez' e vo da virviken.

"Er stumm-se ez i eta."

En ur gonz e skoas outi gant ur wialenn-hud drouzel, na'z eas-hi d'un aerouant. Ha raktal e nijas kuit. Hag un aerouant eo c'hoazh, ha bez' e vo da virviken.

"Er stumm-se ez i eta."

En ur gonz e skoas outi gant ur wialenn-hud drouzel, na'z eas-hi d'un aerouant. Ha raktal e nijas kuit. Hag un aerouant eo c'hoazh, ha bez' e vo da virviken.

"Er stumm-se ez i eta."

En ur gonz e skoas outi gant ur wialenn-hud drouzel, na'z eas-hi d'un aerouant. Ha raktal e nijas kuit. Hag un aerouant eo c'hoazh, ha bez' e vo da virviken.

"Er stumm-se ez i eta."

En ur gonz e skoas outi gant ur wialenn-hud drouzel, na'z eas-hi d'un aerouant. Ha raktal e nijas kuit. Hag un aerouant eo c'hoazh, ha bez' e vo da virviken.

"Er stumm-se ez i eta."

En ur gonz e skoas outi gant ur wialenn-hud drouzel, na'z eas-hi d'un aerouant. Ha raktal e nijas kuit. Hag un aerouant eo c'hoazh, ha bez' e vo da virviken.

"Er stumm-se ez i eta."

En ur gonz e skoas outi gant ur wialenn-hud drouzel, na'z eas-hi d'un aerouant. Ha raktal e nijas kuit. Hag un aerouant eo c'hoazh, ha bez' e vo da virviken.

"Er stumm-se ez i eta."

En ur gonz e skoas outi gant ur wialenn-hud drouzel, na'z eas-hi d'un aerouant. Ha raktal e nijas kuit. Hag un aerouant eo c'hoazh, ha bez' e vo da virviken.

"Er stumm-se ez i eta."

En ur gonz e skoas outi gant ur wialenn-hud drouzel, na'z eas-hi d'un aerouant. Ha raktal e nijas kuit. Hag un aerouant eo c'hoazh, ha bez' e vo da virviken.

"Er stumm-se ez i eta."

En ur gonz e skoas outi gant ur wialenn-hud drouzel, na'z eas-hi d'un aerouant. Ha raktal e nijas kuit. Hag un aerouant eo c'hoazh, ha bez' e vo da virviken.

"Er stumm-se ez i eta."

En ur gonz e skoas outi gant ur wialenn-hud drouzel, na'z eas-hi d'un aerouant. Ha raktal e nijas kuit. Hag un aerouant eo c'hoazh, ha bez' e vo da virviken.

"Er stumm-se ez i eta."

En ur gonz e skoas outi gant ur wialenn-hud drouzel, na'z eas-hi d'un aerouant. Ha raktal e nijas kuit. Hag un aerouant eo c'hoazh, ha bez' e vo da virviken.

"Er stumm-se ez i eta."

En ur gonz e skoas outi gant ur wialenn-hud drouzel, na'z eas-hi d'un aerouant. Ha raktal e nijas kuit. Hag un aerouant eo c'hoazh, ha bez' e vo da virviken.

"Er stumm-se ez i eta."

En ur gonz e skoas outi gant ur wialenn-hud drouzel, na'z eas-hi d'un aerouant. Ha raktal e nijas kuit. Hag un aerouant eo c'hoazh, ha bez' e vo da virviken.

"Er stumm-se ez i eta."

En ur gonz e skoas outi gant ur wialenn-hud drouzel, na'z eas-hi d'un aerouant. Ha raktal e nijas kuit. Hag un aerouant eo c'hoazh, ha bez' e vo da virviken.

"Er stumm-se ez i eta."

En ur gonz e skoas outi gant ur wialenn-hud drouzel, na'z eas-hi d'un aerouant. Ha raktal e nijas kuit. Hag un aerouant eo c'hoazh, ha bez' e vo da virviken.

"Er stumm-se ez i eta."

En ur gonz e skoas outi gant ur wialenn-hud drouzel, na'z eas-hi d'un aerouant. Ha raktal e nijas kuit. Hag un aerouant eo c'hoazh, ha bez' e vo da virviken.

"Er stumm-se ez i eta."

En ur gonz e skoas outi gant ur wialenn-hud drouzel, na'z eas-hi d'un aerouant. Ha raktal e nijas kuit. Hag un aerouant eo c'hoazh, ha bez' e vo da virviken.

"Er stumm-se ez i eta."

En ur gonz e skoas outi gant ur wialenn-hud drouzel, na'z eas-hi d'un aerouant. Ha raktal e nijas kuit. Hag un aerouant eo c'hoazh, ha bez' e vo da virviken.

"Er stumm-se ez i eta."

En ur gonz e skoas outi gant ur wialenn-hud drouzel, na'z eas-hi d'un aerouant. Ha raktal e nijas kuit. Hag un aerouant eo c'hoazh, ha bez' e vo da virviken.

"Er stumm-se ez i eta."

En ur gonz e skoas outi gant ur wialenn-hud drouzel, na'z eas-hi d'un aerouant. Ha raktal e nijas kuit. Hag un aerouant eo c'hoazh, ha bez' e vo da virviken.

"Er stumm-se ez i eta."

En ur gonz e skoas outi gant ur wialenn-hud drouzel, na'z eas-hi d'un aerouant. Ha raktal e nijas kuit. Hag un aerouant eo c'hoazh, ha bez' e vo da virviken.

"Er stumm-se ez i eta."

En ur gonz e skoas outi gant ur wialenn-hud drouzel, na'z eas-hi d'un aerouant. Ha raktal e nijas kuit. Hag un aerouant eo c'hoazh, ha bez' e vo da virviken.

"Er stumm-se ez i eta."

+ + + + + + + + +

DEKVEF SILZHUNVEZH  
=====

Kantel 1

YEZHADUR

Studiañ an amzerioù kevrennek, §§ 194-197 ha 260-262.

Poelladenn :

1) Klokaat gant ar verb-skoazell a zero :

Kerzhet ... (me) e-pad ur c'hardeur - Kouezhet ... (hi) war he glin - Savet ...  
(i) da zek eur - Lemmet ... (añ) diwar e wele - Baloet ... (ni) a-hed an deiz -  
Nijet ... al labous kuit - En em lazhet ... ar peour kaezh.

2) Petra eo un amzer adkevrennek ? Savit teir frazenn enno un amzer adkevrennek.

3) E peseurt lavarennoù e vez kavet an tremened kent ? Roit div skouer.

4) Savit div frazenn enno ur peurdremened o verkañ ar boaz.

+ + + + +

Kantel 2

LENNADENN DISPLEGET : Bilzig, pennad III, "Bilzig ac'h a da glask beñt ha gwial evit ober kevell ha boutegoù".

... - Riv en deus dit-te, paotr, desket an istor-se ? eme an itron Tremedern, o tiskoach he fenn eus e-drek dor-dal ar chapel.

Deut e oa d'ar chapel evit he c'hampenn, he fentañ; he merc'h yaouank hag ur vatezh a oa ganti.

- Deus anañ, paotr, deus anañ !

Hag er chapel e tiskouezas dezhañ un daolenn hanter dislivet.

- Na gwelout a rez-te an daou varc'hag ? Sell oute o-daou war ar c'hilazenn, an hini yaouank divarc'het, an henañ o vont d'hen lazhañ. Setu int oc'h en em vriata. Ha sell er c'hogn-mañ. War an daolenn-mañ, sell, paotr, sell ouzh ar balog a zo dirazout daoulinet. An den santel-se ? An aotrou Don Mikael an Nobletz, an diwezhañ eus gouenn aotrou yaouank Tremedern. Hemezh eo, paotrig, an hini a rae e-dreuz ar c'hoad, eus a Gergwalc'h d'ar chapel, ar prosezioner kaer a sponte Lokdregiz pac'h aent abred eus ar beure da Lannour pe da Vontroulez... Ha bremañ, bugaligoù, n'hoc'h eus-hu netra ken da ober ?

- Nam, itron.

- Ma ! It er c'hoad da glask spouenn din evit ober va garlantezioù, ha goude ne a roio deoc'h pep a dra vat da dañva goude ho merenn.

Bilzig a glenkas e veñt hag e wial er porched.

- It gante ivez, va merc'hig, da redek, da c'hoari er c'hoad... Ro da zorn dezhi, eme an itron da Vadalen.

Abaf ar vugale e kompagnunezh dimezell ar c'hastell, dimezell Tremedern, ur baotrezig strizh. En feiz, Katellig a oa ur bolez e-kichen an dimezell, ha koul-skoude o devoa ar memes oad.

- Pet vloaz ac'h eus-te, Katellig ?

Homañ, he biz-yod ganti siket en he fri, ger ne rampe.

- Eizh vloaz, itron, eme Bilzig.

- Eizh vloaz. Yaouankoc'h eget va merc'h... It da redek er c'hoad, ha das-

turit din spouenn hag ur vleuñvennig bennak. Taolit evezh outi, ha diwallit na errufe droug ganti.

- O, ya, itron.

Hag ar vugale d'ar red d'an traoñ gant ar vali, hag en ur redadenn int bet diskennet er saon. Hag int o tibab spouenn e-harz ar gwez fav.

Bilzig ha Yarnig o-daou a oa ast un tammig pelloc'h da glask bleunioù, ha padal hag int o klevout ur gwadenn.

- Bilzig ! Bilzig !

Ha Bilzig d'ar red.

- Petra a zo c'hoarvezet ?

- An dimezell ! An dimezell !

- Petra ?

- Flemmet ! Flemmet !

Hag ar baotrezig, harp ouzh ar wezenn, liv ar marv en he c'haro'henn, a ouale, he dorn kleiz serret en he dorn dehoù, ar gwad o tiverañ eus he biz-neud.

Gant ar wialenn a oa gantañ en e zorn, Bilzig en deus furchet ar spouenn, kavet an naer-wiber. Un taol-gwialenn dezhi war he fenn, hag hi narv.

Bilzig, meur a wech, en devoa bet gwelet paotred flemmet pa dremenent lann Bernenez evit mont da besketa d'an Traezh-Gwenn : unan a sune ar gouli, unan all gant un tamm neud-goual a starde an ezel. Bilzig a zigornas e gontell, lema evel un aotenn. Moustrañ a eure war biz an dimezell, faoutet gantañ ar gouli. Gwadañ a rae.

- 'Gwelit ket, dimezell, 'gwelit ket.

Starlet en deus dezhi he brec'h gant un tamm neud-goual er-dro d'he ilin. Denet, sunet en deus ar gouli evit sachañ er-maez ar bulum gant ar gwad.

Koefvet eo ar biz hag an dorn.

- Kae, Madalen, da lavarout d'an itron dont anañ buan-ha-buan !

Hag e-pad an amzer-se, Bilzig a sune, a sune ar biz.

P'he deus bet ar vamm gwelet he factrezig er stad-se, darbet eo bet dezhi bezañ senplet.

- Petra, petra zo c'hoarvezet ?

- Flemmet eo bet, itron.

- O ! Jezuz 'ta va Doue ! Buan, buan ul louzaouer !... Kerzh, paotr, red d'ar c'hastell... Ur maval buan da glask ar medisin, ha daou da zougen va bugelig betek ar gêr.

Bilzig en ur redadenn ac'h eas d'ar c'hastell, graet en deus e gefridi. Douget eo bet an dimezell d'ar c'hastell, lakaet en he gwele. Erru al louzaouer. Dispaket an dorn hag ar biz.

An itron a lavaras dezhañ penaos Bilzig en devoa ledenaet ar gouli, sunet ar gwad ha liammet dezhi he brec'h.

- Pelec'h emañ ar gwaz-se ? eme al louzaouer.

Bilzig gant an tri all a oa er-maez, er porzh, o c'hortoz, a-raok mont d'ar gêr, goñt an deare. Klasket ha kavet eo bet Bilzig.

- Te eo ar paotr en deus digoret ar gouli, sunet ar gwad ha liammet ar vrec'h-se ?

- Ya, ya, eme Bilzig, aon dezhañ, ken na grene, dirak ar bugelig kon gwenn ha liñselioù he gwele : aon dezhañ ? marteze, marteze... ivez dirak an den kozh barvek.

- Ya, ya, ne eo, aotrou, ne... .

- E gwirionez - hag e zorn a oa war benn ar paotr - hemañ eo an hini en deus savetaet buhez ho merc'h, itron. Anez eñ... Sunet en deus ar bulum. Gwelit : an dorn ne gweñ ken, ar vrec'h eus an ilin betek ar skoaz a zo digoefv... A-benn un nebeut devezhioù, ho merc'h, itron, a vo yac'h-peak.

Bilzig, pa glevas kenent-se, a ziskennas eus ar ganbr, ha gent e vreur hag e c'hoarvezet, hag eñ d'ar chapel da gener e veñt hag e wial.

- Arabat eo koll an Nort, a lavarfe Saig, eme Bilzig dezhañ e-unan en ur vouse'hoarzhin. Koll ar beñt !

Goulennoù :

- 1) Displegiñ ar gerioù-mañ : diskoach, "an hini yaouank divare'het", beñt, abañ, "yaotrezig strizh", saon, bulun, louzaouer.
- 2) Petra soñjal eus an itron Tremenadern ?
- 3) Displegiñ emzalc'h ar vugale dirak "dimezell" ar c'hastell.

+ + + + +

Kentel 3PENNAD-SKRID

"Ur goual n'hoc'h eus kemeret perzh ennañ."

Setu aze un destenn disheñvel-kaer diouzh an tair all : betek-han, ne oa d'ober nemet deskrivañ an dra-mañ-tra, difiñv ha diflach. Hiziv e vo ret teurel pled ouzh an amzer hag ouzh heuliad an darvoudoù.

Daou skoilh zo da barraat oute :

- klask danevellañ ar gouel penn-da-benn, rak pe e vo hir hag arabadus ho pennad, pe e vo diwar-c'horre, ha dre-se, dizudi.
- pouezañ betek re war deroù ar gouel, kement ha ken bihan na ve ret kuzhañ dibenn ar pennad, hag e gremañ en un nebeut linemoù. Digempouez e ve ho skrid.

Petra ober ?

Da gentañ, ehanañ ha prederiañ ur pennadig a-raok dibab ar gouel a zanevellot; neuze, gwelout bevemoù an destenn ha sevel ur steuñv berr, met resis. Klenkiñ prantadoù ar gouel e pep a lodenn. E-giz-se e tremenet e-biou d'an daou skoilh meneged uheloc'hik.

Goude-se, klaskit ar memoziou. Mat e ve, marteze, rannañ ho "tafar" : stummoù, livioù, fiñvoù, trouzioù h.a.

Deskiñ hiziv an doare da sevel ur digoradur. Se ne vez ket graet prin-ha-prin. Dev eo d'al lemmer gouzout fraezh, ha diouzhtu, eus petra enaoch'o vont da gomz. Berr ha resis e tle bezañ an digoradur. Evit-se, respontit d'an tri goulennoù-mañ : pelec'h (pelec'h e tremen ar gouel, e berr gomz), pegoulz (mare-bloaz, da be boent eus an deiz...) ha gant piv (ho tud, pe ho kerent, pe gant nignoned, pe hoc'h-unan-kaer).

Savit war ur broullenn an digoradur hag al lodenn eus ar pennad a hañvalio deoc'h bezañ pouezusañ pe dudiusañ.

+ + + + +

Kentel 4DIBONADUR : Bilzig, "Nozvezh ar morgazhed".

Deskiñ dindan eñvor an arroud-mañ, anezhañ heuliad ar pennad bet displeget ganeoc'h er sizhun all. Klask a ra an cozar lakaat al lemm da gompren pegen euzhus, pegen spontus e voe an nozvezh-se evit ar vartoloded. Setu perak ez eo kentelius ton an arroud.

"Na gouzavfet hoc'h eus-hu bet, ur wech bennak, brec'hioù gweñv ha ramplius evel kroc'hen ur sillenn, oc'h astenn o spegoù yen war ho troad pe war ho kof-gar ? Na gwalet hoc'h eus-hu ur vorgazhed en he zoull, en ur poull, oc'h heoliañ, ya,

oc'h heoliañ ?... Hep aon e sell ouzhoc'h. Lakait ho troad en dour : goustad beg ur vrec'h, evel un naer, a dro en-dro d'ho troad. N'oc'h ket, nan eus den kap... Den ne c'houzavfas hep fiñval un hevelep stokadem... Sellit outi, pegen lemm eo he lagad gwer-c'hlas, hanter-digor war he mammenn, sklaer evel skorn, kriz evel hini ur c'hazh klañv arajet, evel hini un naer-wiber, o c'hortoz piv da dagañ. Meret hoc'h eus-hu bet, ur wech bennak, gant ho taouarn, o c'horfoù diaskorn, gwak ha gweñv ken nerzhus ? Ha kroget o deus ennoc'h gant o beg du, kalet evel dir, lemm evel un notenn ? Labezat oc'h-hu bet gant o livaj ken du hag huzil ar sinital ?

+ + + + +

Kentel 5LENNADENN DISPLEGET : Bilzig, pennad IV, "Bilzig war al Lev-Draezh".

Ma ! Ur yaouezh a viz genver, Saig en devoa roet un taol sain ha tapet un toulladig braoed. Izabel a brenas daou vortegad.

Hi oc'h aio gant unan anezhe da Elistin, Bilzig ha Madalen oc'h aio da werzhañ o hini da Lemun. Ret e vo d'an daou vugel sevel abred evit erruout e Lemun da goulz ar marc'had.

- N'ho pe-hu ket aon o trouziñ al Lev-Draezh ? a c'houlennas ar vamm digante.
- O ! nann, nann Izabel. Brav eo an amzer, sklaer e vo al lear. Ha piv a fellfe dezhañ ober droug deomp-ni, daou baour keazh eveldeomp-ni ? Nann, nann Izabel, den ne lavaro ger deomp.

Pep a skudellad souhenn al laezh o deus debret. Kregiñ a rejont pep hini en un dorgenn eus ar bouteg.

Hir e oa an hent : c'hwec'h lev d'an nebeutañ. Treuzet gante aod Loldreg, savet gante torrod an Arvor, setu int dirak al Lev-Draezh. Tair eur bennak e tlee bezañ d'ar c'houla-se, sklaer al lear, sioul an noz; kruz an taolioù-mor hepken a glevet war aod Loldreg ha war al Lev.

Kent erruout gant feuteun Sant-Efflan, e vez ret diskenn un dousen bennak a bazemmoù. Bilzig ha Madalen a azezas war ar bazemmoù evit ober un diskiuzhadenn - pommer eo ur boutegad peskad - a-raok diskenn war draezh al Lev. Al Lev-Draezh ! Tri ger spontus neurbet !

Sioul, an eil stok ouzh egile, o bouteg en o c'hichen, an daou vugel a sante o c'halon o lannat en o c'hreiz dirak an draezhedenn vras, ken bras, ken ledan ha ken brudet, hag en an astenn dreze, adalek Sant-Efflan betek Lonikaal. Kruz hepken an taolioù-mor o fregañ war an traezh a dorre sioulder an noz hag a luskelle gant e vouezh heñvel-heñvel an dachenn morgousket dindan lizern dansklaer al lear.

Ha diraze, a-zehoù, Roc'h-al-Lez, siklêrijennet eus o za, evel ur peul-naen en e sav, a save e benn a-us d'al Lev, uhel, hag he zroc'he e daou rann. An hent a heulie ar gourlen; en en gromañ a rae en-dro dezhañ : pleg berr n'o devoa ar spontoù diantket diantket warnañ danevelloù euzhus neurbet. Eno, en-dro d'ar Roc'h... Ha Bilzig, pet gwech en devoa bet en ti-nezañ klevet ar besketarieren...

Ha brenañ, aezet war ur bazemmoù vaen a ziskenn d'al Lev dirak Roc'h-al-Lez, an holl draoù spontus-se a save war e eñvor hag a lakae e galon da lannat en e greiz. Eno... ar besketarieren - e-unan en devoa klevet anezhe en ti-nezañ o lavarout - pa vezent o tragiñ war an aod, skeltr an noz, meur a wech o devoa bet klevet youc'hademmoù euzhus ar peour keazh tremenad muntret war al Lev.

Ha Bilzig, elfek, e zaoulagad hag e zivskouarn gantañ digor-frank, stigmet, bantet etrezek ar Roc'h, daoust hag-efi n'en deus ket, a-dreuz kruz ar noz, klevet du-hont... Daoust hag-efi... O ! ya, du-hont, du-hont !... Hag ur c'hwereñv sklaset a zivore eus e dal, hag ur grenidienn a grine e groc'hen. Ha kaer en deus brenañ selaou, sioulder an draezhedenn n'eo torret nemet gant trouz ar nor o fregañ war an traezh. Daoust hag-efi... e vefe gdir ?

Madalen, skañh, ar baourez kaezh, morgousket harp ouzh skoaz he breur, ne wela na ne gleve netra.

Rilzig a sellas outi, hag en e benn e troidelle mennoziou dishegar mairbet : ar paotr, m'hen asur, n'oa ket gwall c'hlorus. Karer en dije bet bezañ en e wela, kousket mat, e-lec'h bezañ aezet war bazenn skaliereù Sant-Efflan, ha mail n'en devoa ket da vont gant an hent a dro er-dro da Roc'h-al-Laz.

Evelkent ret eo dezhañ erruout e Lemnon pa zigoro ar marc'had. Ec'h as da sevel en e sav :

- Sell, emezañ, en ur reiañ un taol ilin da Vadalen, sell.
- Hag ar baotrezig dihanet a sellas. Hag e traoñ ar pazemoù e weljont un aotrou hag un itron. Un aotrou hag un itron d'ar c'houlz-se eus an noz ?...
- Petra a rit-tu aze ? eme ar gwaz, ha divergont, d'an daou vugel.
- Oc'h ober... un diskañh, aotrou.
- Peg teod Rilzig ouz e traoñ, sec'h e gorzailhenn evel tont. Madalen a oa krog en e zorn hag a grene evel un delienn. Rilzig ivez, ha koulskoude ar paotr ne oa nag abaf na kabon, pell ac'hane : Rilzig a grene gant an aon.
- Da belec'h it-tu evel-se ?
- Da Lemnon, aotrou.
- Da Lemnon ?... Da ober petra ?
- Da werzhañ hon fosked, aotrou.

Goulennoù :

- 1) Lemnit dibenn ar pennad en ho levr.
- 2) Displegañ ar gerioù-mañ : elfek, skeltr, kabon, bantet, fregañ, troidellat, tont.
- 3) Perak ar furn "ur yaouvezh" ?
- 4) Perak en deus Rilzig kement-se aon ?

+ + + + + + + + +

Kentel 6

SKRIVADENN

Klaskit testenn ar sizhun, ha respontit d'ar goulennoù.

+ + + + + + + + +

Kentel 7

LENNADENN RENET : Rilzig, pennad V, "Displeg ar vartoloded diwar-benn ar sent kozh".

Goulennoù :

- 1) Displegañ ar gerioù-mañ : klufan, goañvennoù, darouseddennoù, gwenadennoù, dindan gazel-ge, teusk.
- 2) O studiañ ar pennad-se, displegit e berr gerioù buhez ar re gozh e Breizh daou c'hant vloaz zo.

+ + + + + + + + +

UNNEKVEZ SIZHUNVEZH  
=====

Kentel 1

YEZHADUR

Studiañ an tu-gouzañv, §§ 207 ha 210-216.

Poelladenn :

- 1) Peseurt verboù a vez laket en tu-gouzañv ? Skouerioù.
- 2) Hilpennañ ar frazennoù-mañ, ha kemmañ stumm ar verb BOUT :

An den-se zo marvet dec'h - Tri den zo deut - Labour zo bet graet gantañ - E vreur zo bet kaset di - Ur c'henderv dezhañ zo en en gavet - Kalz tud zo bet lazhet.

- 3) Lakaat ar frazennoù-mañ en tu-gouzañv :

Rankout a reer diwall diouzh al laeron.  
Ne zleer ket sellout ouzh an traoù-se !  
Ambat eo ober van ouzh an dud-se.

+ + + + + + + + +

Kentel 2

LENNADENN RENET : Rilzig, pennadoù VI ha VII, "Rilzig ha Yann-e-benn-e-unan" ha "Sured Janedig".

Lemnit an daou pennad-se en ho levr. Klaskit kompren ster an holl c'harioù a zo enno. Petra a zesk dimp ar pennad kentañ diwar-benn spered Rilzig ? En ail, perak e fell da Janedig dineziañ ouzh ar marc'hag ?  
Skrivañ a raot ar respontoù d'ar goulennoù-se war ho kaiser, berr-ha-berr.

+ + + + + + + + +

Kentel 3

PENNAD-SKRID

Lemnit aketus testenn ar pennad-skrid (e-barzh al levrig poelladennoù). Ad-skrivit anezhi. Klaskit mennoziou, ha krogit d'oc urzhiañ bep teuint, zoken na vez ret deoc'h adkompenn ho steuñv goude-se. Taolit pled ouzh an alioù bet roet deoc'h diaraok.

Klaskit adal bremañ mennoziou pennañ ho tigoradur.

+ + + + + + + + +

Kentel 4

LENNADENN DISPLEGET : Rilzig, pennad VIII, "Rilzig e bourzh 'Ar Vran'".

... Gant Ar Vran Rilzig a frikas kranked e-pad daou vloaz.  
Deut ar paotr da vezañ ur gwaz, paotr yaouank a drivoc'h vloaz, paotr kreñv ha kalonek, paotr ivez a skiant vat, lemm a spered, ha, gant alioù ha kemmañ ar

c'habiten, ur martolod eus ar re wellañ. Ne oa ket ur garreg etre Brest ha Sant-Malo ha n'aveze ket. Goñt a rae d'ar marvor pe gant ar mareoù bras eus ar gourlen hag an daze, nerzh ar mare en-dro d'ar c'herreg pe en antre ar porzhioù. Dindan eñvor Bilzig en devoa desket an holl draoù-se. Ha, keit ha ma oa bet gant Ar Vran, Bilzig a gavas abeg, neur a wech, da implij e sikant a vartolod ha nerzh e galon. Bilzig, evel n'en devoa dezhañ desket Saig Jelyvest, ne goll ket an Nort.

En en blijout a rae Bilzig e bourzh Ar Vran, gonit mat a rae, ha c'hoant n'en devoa ket da goll e gabiten, ken rust gant ar re all ha ken dic'hlorus gantañ, ha ken mat.

Met Bilzig n'en devoa ken kalz amzer da chom e bourzh Ar Vran.

Ar Vran a oa bet o tiskargañ had lin e Lendregen, hag a oa gortozet e Perroz evit kargañ gwinih evit Montroulez. Miz du anezhi. Berr an deiz.

- Alo ! paotred, soukomp ur pennadig hag eo'h errufomp er gêr evit Nedeleg hag an deiz kentañ ar bloaz. P'hon devo diskarget hon gwinih e Montroulez, e teu-fomp d'ar gêr, evit trenen ar gouelioù. Alo ! paotred, un tammig soukadenn !...

Hag ar baotred a boaric, tre ma c'hallent, gant plijadur.

Lastret ar c'hobar, diskennet gant ar stêr. Er-maez ar mor zo gros, reut an avel.

- Mar gallfomp tapout Perroz a-rack an noz ! Petra a lavarit ?...

Avel su, ha du an noz.

- A zo gwall antre e Perroz, eme unan eus ar vartoloded.

- Goñt a ran, a respontas ar c'habiten. Mar chom an avel en e su, e tapfomp Perroz, met mar deu d'e west, hañ hañ! mar deu d'e west !... Fall an amzer... Met chom anañ ?... Ar Vran a zo kreñv. Chom anañ ?... Pegeit ?... Da vihanañ, pa vefomp e Perroz, ne vefomp ket gwall bell eus ar gêr... Alo ! paotred, petra, petra a refomp ?

- Eomp ! eomp ! eme unan eus ar vartoloded, eomp ! Tre a zo, ha gant an tre, daoust d'an avel da vezañ a-benn... loveal a refomp.

- Ha ma ne washia ket an amzer, a lavaras ar c'habiten, a dra sur e kouskfomp e Perroz.

Ur ruz er gouel bras, ha gent he gouel stae hag he fok bihan, Ar Vran a sik he diaraog el lamn. An taolioù-mor a freg war ar pont. Gwall fall eo evelkent an amzer, ha gwall rust ar nor.

- Erruout a rafomp-ni e antre Perroz a-rack an noz ? Enk, enk eo, kerreg a bep a du.

- An avel a zo deut d'e su, a-benn-krak. Gant an abardaez barradob-arnev a sav, glav hag avel.

- Ret e vo deomp kemerout daou ruz, eme ar c'habiten. An avel a gresk... Anin ar fok.

Tri ruz er gouel bras, ur ruz er gouel stae. Trawalc'h gant Ar Vran da ober. Dre ma teus an noz, an amzer a washas. Tourmantig a ra. Ar Vran a zalo'h penn. Ar Vran dindan he zri ruz a sav war ar wagenn evel ul labous. Met an noz a deu, a deu buan.

- Poent eo deomp erruout, a lavaras unan eus ar vartoloded; poent eo deomp : bremaik ne welfer pekad.

Bilzig a oa azezet hanter gourvezet e disglav al listenn en avel, an daou vartolod all en e gichen, serret en o siraj. Ar c'habiten, reut en e sav, stag ouzh ar varrenn, e zaoulagad war ar c'hompas siklêrijennet gant ur c'houlouenn, a levie. An taolioù-mor a gouezha war ar pont, hag an dour a ruilhe dre an dalajoù. Tourmant ruz. An avel a c'hwibane, a skrize, a yude en drisoù, en obaichoù. An taolioù-mor a stropo hag a frego war diaraog Ar Vran. N'eus forzh.

- Tourmant ruz ! a c'hrozolas ar c'habiten. Ma vije un tammig gwel... Da-pod, ken du hag e fin foñs an ifern.

Un taol-mor a deus hag a gouezhas war Ar Vran, a ziframmas ar c'habiten diouzh ar varrenn, hag a begas anezhañ ouzh al listenn, evurus na n'eo ket aet

er-maez. Semplet. Lakaet eo bet en e c'hourvez a-hed al listenn dic'hlaviet. Bilzig a lammas war ar varrenn.

- Un taol-mor diwar ur garreg... ret eo deomp pellaat ac'hann. Paravire ! Adieu vat. Chañje !

Hag Ar Vran a viras a vorñ.

- Pelec'h omp ? a c'houlennas ar c'habiten, deut emañ e-aman.

- N'ouzomp ket kalz... It d'ho kamb, kabiten... N'eus forzh petra a c'hoarvezo, e vefet galvet.

- Ket, ket, paotr. E-tal da gichen e chomdin... Ne deomp ket bezañ pell eus an antre... Ma welfed ur dra bemak !...

Met kaer o devoa sellout, gwel ebet ne welfed nemet ar mor dirolllet, na trouz ne glevet nemet trouz an taolioù-mor o fregañ en-dro d'ar Ar Vran, nemet yud an avel er gresnant.

Hag Ar Vran a lamme a-dreuz eonenn an tarzhioù-mor eus an eil wagenn d'eben.

- Pelec'h omp ?

- En antre, noarvat, eme Bilzig. Ma vije bremañ un tamm siklêrijenn, e vefomp saveteet.

- Poan hon devo, Bilzig, va faotr, d'en em denañ ac'hann !...

Ne oa ket e gonz gantañ peurechuet. Kraanaak ! Ar Vran he deus staket er garreg. Bilzig war ar varrenn ne gollas ket an Nort : petra ober ?

- Herr er c'hobar ! herr er c'hobar !... Avel er gouelioù, ma savo Ar Vran war ar garreg, uhel, uhelañ na c'hallio, pe marteze a c'hallio lammat dreist war 'zo dour a-walc'h warni !... Herr er c'hobar !...

Ul lam euzhus ! Un taol-mor a grevas war Ar Vran, a c'hloas anezhi hed-hed, a savas anezhi, ha, pa gouezhas, ur strak : ar wern d'an trañ a-rez ar pont. An taolioù-mor, evel chas-blediz, a yud en-dro d'ar c'hobar. Sachañ, diframmañ a reont kement a gavont war o hent. Ya, met ar paour kaezh Bran a sav gant pep taol. Ar vag vihan a zo friket war ar pont : an delezioù, ar roevioù a ruilh, a ziruilh, a-dreuz hag a-hed.

Un taol-mor all, Ar Vran war he c'hain, hag e kouezhas war ur garreg all. Hemañ a oa skoazellet gant ar garreg he devoa lammet Ar Vran dreist. Eno ar paour kaezh gobar a chomas start; evel ur genn eo en em siket etre daou veg karreg. Eno e chomo.

Bilzig, krog er varrenn, a zo astennet a-hed e gorf : ne oa ket bet diframmet gant an taol-mor.

An taolioù-mor a yud war Ar Vran disantret. Met tre a zo hag ac'hane ne'o'h alo ket : skoret mat eo.

Bilzig a savas neuze en e sav.

Hag an dabu all ?... Aet er-maez gant an taol-mor euzhus a fregas warno.

#### Goulennoù :

- 1) Displegañ ar gerioù-mañ : "frikañ kraked", marvor, dic'hlorus, gobar, lastrañ, stropañ, "herr er c'hobar", delezioù.
- 2) Grit adarre ur roll eus gerioù ar vartoloded, ha klaskit o ster.
- 3) Displegit buhez an dud war vor gwechall, hervez n'he c'havit en arroud-se.
- 4) Petere paotr eo deut Bilzig da vezañ ?

+ + + + + + + + +

Kentel 7

DIBUNADUR : Bilzig, "Bilzig e bourzh 'Ar Vran'".

Beun ha plesen eo an tamm danevell-se. Fromus e tleo bezañ ho tibunadur.

"An derzhienn a gouezhas war ar c'habiten; ar boan-izili hag ar yenijenn en devoa tapet a greskas e gleñved. Bannoz an alter a lakae e wad da virvifi. An aotrou person a deuas d'e welout.

- Gwall klañv eo ar c'habiten, emezañ. 'M eus aon, poan en devo d'en em dennañ alese.

Pa deuas emañ e-unan, an aotrou person a lavaras dezhañ an doare.

- D'ur martolod evelloc'h-hu, emezañ, e c'haller lavarout ar wirionez.

Blankaat a rae buan-ha-buan, hag an derzhienn nag an alter ne dremenent. Kof-esset eo bet, ha nouet ar c'hlañvour.

Glaoda a c'houlennas digant ar beleg degas gantañ tra da skrivañ ar pezh en devoa da lavarout dezhañ : paotr yaouank kozh viret e oa Glaoda.

C'hwech dezvazh goude peñse Ar Vran e varvas he c'habiten. Bilzig atav a chomas gant e gabiten, e-pad na eo bet e buhez, ha war e arched en deus taolet ar c'hentañ dour benniget.

- Mat eo bet em c'heñver. Doue da bardone e anaoñ !...

Hag e-unanik goude an interemant e teuas d'an ostaleri hag eno e ouelas, e ouelas gwalc'h e galon."

+ + + + +

Kentel 6

SKRIVADENN

Grit evel dalc'hmat; respontit d'ar goulennoù.

+ + + + +

Kentel 7

GWERZAOUPEZH

Studiañ "Penaos stummañ ha penaos strolleañ ar gwerzennoù", pp. 45-58.

Poelladenn :

Rannañ ar gwerzennoù-mañ, ha displegañ penaos int strollet :

"Anañ 'mañ toull ar pec'hed. Al loened ar ma zro, Mouezhiou an droug a glevan o hudadennoù lous : Ma c'halon a zo du-se en ilizoù didrouz Lec'h ma taoulin gredus martoloded man bro." (Y.E. Kalloc'h)

"An evn a c'heiz en deil war dav pa sav ar goañv da vervel : Er reklon setu dreist ar roc'hell kloc'h hon Deiz o c'hervel !

Ur gwent a red er vered vut;

Ur gwent e vouezh leun enkreuz put

A c'hwezh drezomp." (Y.E. Jari)

"Me 'm eus ur arc'hig argant er gêr e ti na zad, An hini en digorfe en defe kalonad !

"Hag emañ teir naer-wiber o c'horif vi aerouant.

Mar deu na aerouant da vat, neuze 'vo nec'hamant

"Mar deu na aerouant da vat, e vo gwall nec'hamant;

Seizh lev war-dro ac'halenn e teuy da deurel tan." (Loeiza hag Abalar, Bargaz Breizh)

DAOUZKIVET SIZHUNVEZH

=====

Kentel 1

YEZHADUR

Studiañ ar verboù emober hag ar verboù dic'hour, §§ 217-224.

Poelladenn :

- 1) Klasidit tdi verb emober dre ostum, ha nann dre o ster. Savit pep a frazenn ganto.
- 2) Savit div frazenn all, enno verboù kenemober.
- 3) Pe verboù a vez displeget war skouer Fellout ? Roit ur skouer eus pep hini.

+ + + + +

Kentel 2

LENNADENN DISPLEGET : Bilzig, pennadoù IX ha X, "Bilzig er gêr, goude peñse Ar Vran" ha "Izher Bilzig d'e vran Izabel".

Lennit ar pennad kentañ en ho levr. Berr eo. Goude-se, studiañ an arroud diwezhañ-mañ :

Naoned, an 20 a viz mae 1787.

Va mamm ger Izabel,

Abaoe hon disparti petra nevez en tiegezh ? Setu an hañv : ar vugale d'ar c'houlz-bloaz n'o devez ket anzer da vezañ klañv. Ha c'hwi, mamm, taolit evezh ivez d'ho yec'hed.

Evidon-me ur veaj vat an eus graet. Brav eo bet an anzer, hag Ar Vardikita gant he martoloded a zo erruet e stad vat en Naoned. Ur gêr vras, mamm Izabel : Montroulez en he c'heñver a zo ur gêrig. Gebird, biskinemoù, goaletinier, teir-gwerzioù a zo niverus, stag a-hed ar c'haedoù. Noz-deiz, kargañ, diskargañ a reont marc'hadourezh deut eus pevar c'horn ar bed. Biskoazh n'hoc'h eus gwalet un hovel-ep keflusk.

Evel na oa bet divizet gant kabiten Ar Vardikita, kent kuitaat Montroulez, dilezet en eus bet e viskinenn, evit mont war roll Ar Gornaouez, un teirgwerz karrez eus an Naoned, ul lestr a bemp kant tonell nevez-flam? Gantañ eo'h an da ober ur veaj daou vloaz.

Daou vloaz, mamm Izabel !... A-henn an distro, Madalen a vo plac'h yaouank. Ha Yannig ?... Ha Katellig ?... Ha c'hwi, mamm ?... Doue d'ho kendelo'her e yec'hed !

Genen a zo ur martolod eus a Bemenez, Kerlirzhin : Mourzig, c'had 'oar, a veze graet anezhañ. An eil kabiten, ur paotr yaouank a eizh vloaz war-n-ugant, a zo ginidik eus Enez Vazh. Hag ar mous emni a zo eus Plougenou. Ar re all a zo Bloc'higed pe C'hallaouez.

Disul d'ar beure e kuitafomp ar porzh, hag en hent etrezek an Indez ha Sina.

Petra a livdir-me deoc'h ouzhpenn ?... En en diwallit, en en gendalc'hit evit ho vugale, evit ivez ho paotr koshañ, eñ drouk gwechall, hoc'h eus ranket gourdrouz ken alies, hag evelkent, mamm Izabel, ho kare eus a-greiz e galon.

Ur pok start da Vadalen, da Yannig, da Katellig, ha deoc'h ivez, va

mamm, evit ho maelezh e-keñver ur bugelig emzivad. Bannozh Doue deoc'h, hag ur pok start, start deoc'h, va mamm ger !

Va memnoz alies a deulo karantezus da nijal etrezek va bourkig; dont a raio da azezañ ganeoc'h ho-pevar war an oaled e-pad ar goañv-noz; ganeoc'h e teuo da ober ur goareadenn, da respont ar pedemoñ, kent monet da gousket.

Ha c'hwi, neketa, mamm Izabel, ur wechig an anzer, a raio un tammig distro war an hini a zo set pell, pell !... Ha pa grozo ar mor war vili ar Vranioù, war gerreg an aochoù, pa yudo an avel er gwez tilh a zo el liorz a-drek an ti, c'hwi, neketa, va mamm ger, a savo ho memnoz etrezek an hini a zo set kuit, c'hwi a lavaro ur bedennig evit an hini a zo pell diouzh e vro, pell diouzh ar re a gar hag a zo bet evitañ bepred trugarezus, bepred madelezhus.

Ur poidig c'hoazh d'an breur ha d'am c'hoarezed. Ha deoc'h, mamm Izabel, ur pok anaoudet ha karantezus digant ho mab henañ.

Y. TANGI  
martolod  
e bourzh Ar Gornmaoeg  
eus an Naoned.

Soulennoù :

- 1) Displegad ar gerioù-nañ : keflusk, Bloc'higed, biakinemoù.
- 2) Deout hag-eñ eo bet plijet deoc'h ar romant-se ? Displegit ar perag ?
- 3) Yaouank eo Bilzig c'hoazh. Ijinit petoze buhez a reno diwar ar mare na kuitomp anezhañ.

+ + + + + + + + +

Kantel 3

LENNAD-SKRID

Kemerit ar brouilhed ho poa savet ar signun dremenet. Lakit urzh er memnozhioù. Krogit gant an digoradur, evel n'hoc'h eus desket ober nebeut zo. Taolit evezh da genstegañ al lodemoñ : arabat eo e ve nep troc'h a-grenn. Tremerit un en doare akuit eus an eil lodenn d'eben.

Lakit aked da suvel ho framemoù. Mar kav deoc'h eo ansteriek ar ger-nañ-ger pe luziet ar frazeur-nañ-frazeur, lamit anezho diouzhtu hag adkemerit ho pluenn. Neuze, adleun hag adskrivañ.

+ + + + + + + + +

Kantel 4

LENNADENN D'ESPLEDI : Hefiverzh ar Roc'h Veur, gant Yeun ar Gow.

Klaskit gouzout piv 'oa Yeun ar Gow. Sellout en Istor al Lennegezh, §§ 200 ha 254.

Sicoul ha sen e oa ar mor dindan sklour al loar en he c'hann. Un aezhenn fresk ha yac'hus o c'hwezhañ e gouelioù ar vag, he c'hase d'ar red war an doureier ec'hon ha luskellus. Ne oa nep houlen na tarzh ha ne glevet ket, zoken, an disterañ groz-mol nag hiboud gant kerreg lemm ar Raz. Peg er vaol, e taffvas Gwenoù Gwilcher an eurvad da vageal en noz splenn ha da analat ken dibroder hag ar vorvaouted a weled

war an deiz, o nijal e barr an oabl.

"Bremaik, emezañ a vouezh uhel, e vimp tost d'ar Roc'h Veur hag e c'hellimp teuler hor rouedoù. Ha klevout a rez, Yann Foukad ?" Dan, avat, ne respontas ha Gwenoù, sebezst, a glaskas e gavennad a-dréñv skeud ar gouelioù teñval. "Sell 'ta, emezañ o souezhañ, ha chomet e vije Yann er gêr ? Me 'grede, koulskoude, e oa deut d'an heul war ar vag !"

Teñval e dal hag ankeniet holl, e sellas ouzh ar mor a bep tu d'ar vag. "Ha kouezhet e vije bet er poull, emezañ, ha chomet emañ da veuziñ ? Ha kement-se ne c'hell ket bezañ c'hoarvezet hep gouzout din ! Mil gurun ! Un trous bennak an bije klevet, moarvat !" Hag eñ da hopal a-bouez-penn. "Yann Foukad, Yann Foukad ! e pelec'h emaut, loen an diaoul ?" Met e vouezh a chomas direspont e-us d'an doureier teñval ha divent.

Evel-se e-unanik-penn edo er vag, anat e oa dezhañ e oa bet beuzet ar Foukad, e wellañ nignon a-viskoazh. Mantret hag set bihan e galon, e lavaras Gwenoù outañ e-unan : "Paour kaezh Yann, set eo eta d'ar bed all, Doue d'e hardono ! Plijet gant Sant Yann, e baeron, ha Sant Per, mestr bras ar basketourien kaout truez outañ hag e lemel kuit eus tan ar Purgator !"

Hogen petra a lavaro ar Foukadem, pa vin distro d'ar porzh, o c'houzout eo chomet he gwaz er mor ? Sivazh ! petra a glevin ganti ? Kumm'hennoù spontus, moarvat, ha chafis an bo na n'am zanall ket d'her bezañ taolet er mor. Un teod wber he deus hounezh ha gouest eo da lakaat an dud da grediñ em bo muntret he fried. Ha petra en em gavo da c'houde ? Un enklask marteze ha, piv a oar, reuz ha prosez a-berzh tud al lez-varn.

Aon a begas emañ hag e klaskas eñvortañ penaos e oa deut soñj dezhañ da vont war vor, an noz-se, gant Yann Foukad, e gevelen-pesketa. Hogen e spered strafuilhet ne oa ket evit prederiañ a-zoare hag evel ur morc'hed poumner ha dispis a waske war e galon. Hag e kendalc'he klanmus gant an hevelep sorodenn : "N'eo ket dre wall-zegouezh hep mar eo kouezhet ar reuzeudig er mor. Anez e vije chomet war e c'horre, rak neuñf a oule evel ur pesk, ha va galvet en dije d'e denañ er-maez. Me 'grad kentoc'h en deus bet c'hoant d'en an gistrujiñ ha, pa n'edon ket war evezh, en deus kavet tro d'en an rifañ di-c'ous eus ar vag ha da vont d'ar strad. N'en em gleva ket mat gant e wreg, ar paour kaezh, pa'z eo houmañ ur geben gwashoc'h eget hini Iokrenan. Aet e oa skizh, d'am meno, o c'houzav ar gwall vuhez a rae ar Foukadem dezhañ bemaiz. Marf eo gdir kement-se, ha porak ne vefe ket, ez on didanall kour dirak Doue, daoust d'an teodadoù a vo lavaret diwar va fenn.

A-nebeudig e teuas Gwenoù da gaout koun eus ar pezh en devoa graet an derc'hent ha tann-ha-tann, evel pa vije bet oc'h arvestiñ ouzh ur fill, e welas pe implij en devoa graet eus e zevazh.

Abred e oa savet diouzh ar mintin ha gant peadra da zebrifi ha da evañ en e baner, e oa set d'ar porzh. Diskenn a reas en e vag ha nebeut goude ec'h en em gavas gant Yann Foukad d'e dro. Kerent e lakaont da oual hag e kemerjont penn an hent evit ober un droiad pesketa.

Sivazh dezho ! ne oa ket imoret ar pesked da begañ hag e rejont tro-wann koulz lavarout. War-dro an abardaez n'eo devoa tapet nemet un div pe deir douemmad brilli, a-vec'h peadra dezho ha d'e sud da gouiniñ. Hag int-i, neuze, da gistrifi d'am douar hag, evit en em frealziñ da vevañ graet kaez, o trañf e tavarn ar Peurlip da c'hleb-iañ o gourlañchemm set sec'h-korn dindan an heol hafiv. Ur banne gwid rus, c'hwi, 'oar, a c'houlen alies meur a hini all war e lero'h hag, evel-se, e skarzjont ouzhpenn ur voutailhad e ser teuler o mallozh war o dic'hafis.

Diwezhat a-walc'h e oa p'an em gavas Gwenoù er gêr. Ne oa ket neuz a dra sur, pell ac'hano zoken, hogen anat e oa warmañ n'edo ket diwar an dour. Bewech na veze badaoust ez ae droug e Katell, e wreg.

Teñval he fenn kerent ha n'her gwelas e tistagas dezhañ, kintus he mouezh : "Ac'hanta ! lonker daonet, trenk da doull adarre ! Ha d'an eur-nañ o tont da glask da goan, pa'm eus gwelst da vag o tistreñf d'ar porzh ouzhpenn teir eur zo ?"

Ur paotr taer e oa Gwenole ha ne c'houzañve ket nemeur an teodadoù hag ar gourdrouzoù. Hep chon da dabal, e skoas un taol mailh-dorn ken kalet war an daol-  
voued ma lakaas ar pladoù, al lorioù hag ar skudilli d'ober warni ur pezh lamm :  
"Mil marc'hast an diaoul !" a c'hammas-efi, brouezet o skarañ en-maez eus an ti, an  
mor o strakal war e lerc'h.

A-ganmedoù hir e kerzhas d'ar porzh hag eno, war ar c'hae, e kavas Yann Fouk-  
ad, tapet gantañ ur gwall deñsadem digant e bried. Hag an eil da zisklêriañ d'egile  
pe zagerer o devoa bet er gêr. Ma n'eo ket ur vuhez war an douar bezañ e ser ar  
nerc'hed-se, emezo, kaeomp da avelañ hor pennoù war ar mor. Didrouzusoc'h e vo deomp!  
Hag int-i raktal er vag ha da gemerout an hent a gase d'an donvor.

Goulennoù :

- 1) Displegañ ar gerioù-mañ : sen, en he c'ham, morvaouted, kavandañ, kun-  
u'hennoù, keveler, en en ripañ, koben, lakaat da ouel, kintus, brouezet, skarañ.
- 2) Disklêriañ daou ster an drolemm "e ser" en arroud-mañ.
- 3) Petra a zesk ar pennad dimp war vuhez ar besketourien ?
- 4) Petra !soñj Gwenole eus "marv" e geneil ?

+ + + + +

Kentel 5

GWERZAOUEREZH

Studiañ "Pennaos e vez roet neuz d'ur varzhoneg", pp. 59-62.

Poelladenn :

- 1) Petra eo ur werz, ha Petra ur son ? Pare a anavezit ?
- 2) Studiañ drezoc'h hoc'h-uman gwerzaouerezh an arroud-mañ :

"Ar niz neurzh, gant e vorzhelioù,  
A zou da skeiñ war hon dorioù;  
Ar gwez a bleg gant glav a-builh;  
An doenn a strakal gant ar grizilh.

"Hogen n'eo ket e vorzhelioù  
Hepken, a sko war hon dorioù;  
N'eo ket ar grizilh hepken  
A lak da strakal an doenn;

"Ned eo ket hepken ar grizilh;  
N'eo ket ar glav a zarc'h a-builh;  
Gwashoc'h eget avel ha glav  
Ar Saizon fall an hini eo !" (Stourm an Tregont, Barzhaz Breizh)

+ + + + +

Kentel 6

SKRIVADENN

Testenn an l2vet sizhunvezh. Respontit d'ar goulennoù.

Kentel 7

LENNADENN RENET : Tonkadur Bugale Lir.

AN ELERO'H WAR LOC'H DAIRBREAC'H

Evit Bodh Dearg hag an De Danann, betek glenn Loc'h Dairbreac'h ez ejont. Hag  
eno kampañ ha selaou kan an elerc'h. Mibien Milead ivez a zeredas eus pep korn Iwer-  
zhon da ganpañ war c'hlann al lenn ha selaou. Rak, gouez d'an danevellourien, ne voe  
biskoazh klevet en Iwerzhon kanennoù da gefveriañ gant re an elerc'h-se. Hag e vez-  
ent bennez o displegañ nardailhoù hag o tiviz gant tud Iwerzhon, hag o vreutaat gant  
o mistri, o c'hendi-dibien hag o holl vignoned en hevelep giz. Ha bennoz e vezant  
oc'h ober kanerezh-hud klemmavus neurbet, ma kousko flour ha didrabas neb a selaou,  
ne vern pe glesfed pe boan a oa warnañ. Ha laouen ha seder e vezed goude-se.

E-doug tri c'hant vloaz e chomas kempet mibien Milead hag an De Danann war-dro  
Loc'h Dairbreac'h. Neuz e lavaras Fionnguala d'he breudeur :

"Hag anaout a rit-hu, breudeur," emezi, "e vo echu antronoz an amzervezh hon  
eus da dremen arañ ?"

Glac'har ha saouzan a grogas e mibien Lir pa glevjont. Rak heñvel e oa bet  
dezhio bezañ tud keit ha ma chomat war Loc'h Dairbreac'h, o tiviz gant o c'henedled.  
Ha bremañ rankout mont war froud koumarez, araoc'h ar Macil en hanternoz.

D'an de'z diwezhañ, beure mat, ez ejont da gimidiñ diouzh Bodh Dearg hag o  
zad. Hag e kmas Fionnguala ar ganem-mañ :

"Kenavo dit, Bodh Dearg,  
Gouizieg brudet ha fur,  
Kenavo dit, hon tad,  
Lir a Lez Fionnac'haid.

"Diwar an deiz-mañ 'vimp  
Hep hor nignoned vat,  
Hep klevout mouezh un den  
War dorioù yen ar Macil.

"Hon dilhad kaer a vo  
Tommo c'harv ar mor sall,  
'Hed an deiz, 'hed an noz,  
Fall diouzh ar re hor c'har."

Hag e kemerjont o nij, uhel, skañv, aeral, betek froud ar Macil, etre Alba hag  
Iwerzhon. Ma voe doaniet Iwerzhoniz. Dre-holl e voe lakast berz lazhañ un alarc'h.

AN ELERO'H WAR AR MAOIL

Fall e voe an amzer war ar Macil da vugale Lir. O welout an adoù ec'hon an-  
dro dezho e voent leun a reuz, a riv hag a roc'h. Ne voe netra dezho pep droug o  
doa gouzañvet betek-hen e-skoaz an droug a c'houzañvjont war ar froud-se.

Un noz e teuas ur reklon bras.

"Va breudeur garet," ems Fionnguala, "hep mar e vimp rannet an ail diouzh ar  
re all gant ar barrad-amzer-mañ. Dibabomp ul lec'h eta ma c'hellimp en an gavout,  
mard eo youl Doue e vimp rannet."

"Dibabomp, va c'hoar," emezo, "da lec'h emvodañ Karreg ar Reuniged, peogwir  
hec'h anavezomp-holl."

Pa zeuas hanternoz e c'houzgas an avel, hag e kreskas lañs hag aroun an toum-  
où, hag e targaas al luc'hed, hag e voe skubet an dour gant ar gorventenn c'harv, ma  
voe skignet bugale Lir war ar mor bras, pell diouzh an aod, pep unan hep gouzout da  
belec'h oa bet kaset ar re all.

En diwezh, avat, e sioulaas an amevenn, hag e teuas ur c'halm flour. Hec'h-  
unan-penn en em gavas Fionnguala war ar Macil. Ne wete ket he breudeur. An holl noz-  
vezh e chomas war Garreg ar Reuniged, o sellout ouzh ar mor tro-war-dro, betek ar

goulou-deiz, na verzas Conn o tont daveti, poumer e benn, gieb e eskell. Ha deut mat e voe d'he c'halon. Fiac'hra a zeuas ivez, yen ha gieb ha skuzh-divi. N'helled ket meizañ pezh a lavare, kement a riv hag a boan en doa bet.

"Ma teufe Aod davedomp, na laouen e vefemp bremañ !" eme Fiomnguala.

Danc'houde e weljont Aod o tont, dic'hled e benn, didorr e eskell. Degeneret mat e voe gant e c'hoar. Dindan pluñv hec'h askre e lakas Aod, Fiac'hra dindan hec'h askell dehoù, ha Conn dindan hec'h askell gleiz.

"Breudeur," eme Fiomnguala, "daoust pegen garv eo bet an noz tremenet, meur a nozvezh heñvel outi hor bo c'hoazh da dremen."

Fall amzer e chomas bugale Iir goude-se, o c'houzafiv anoused hag azrec'h. Ken na zeuas un noz ken yen, n'o doa gwalet netra a-raok heñvel ouzh rev, yenijenn, erc'h hag avel an noz-se. Hag e reas Fiomngu 'a ar ganem-mañ :

|                   |                   |
|-------------------|-------------------|
| "Fall ar bed-mañ, | "Dindan va fluñv, |
| Yender an noz,    | Kousket o deus,   |
| Eraster an erc'h, | Henozh en doan.   |
| Garvder ar gwent. | Fall ar bed-mañ." |

Ha pell amzer adarre e c'houzafivas bugale Iir. Ken na zeuas un noz all, m'ed-ont war Garreg ar Reuniged. Kala genver e oa. Skornañ a reas an doureier, ha pep unan a voe skornet el lec'h na edo; o zred hag o eskell a begas ouzh ar garreg, na n'oant ket goust da fival. Ken start o strivjont koulskoude na chomas kroch'en o zred ha pluñv o brusk ha beg o eskell stag ouzh ar roc'h.

"Siwash, bugale Iir," eme Fiomnguala, "e stad fall enaomp, rak n'hellomp mui gouzafiv an dour sall, ha berzet eo ouzhp bezañ e lec'h all. Ma teu an dour sall en hor goulioù, neuze mervel a rankimp."

Hag e reas ur ganem :

"Gwall rec'het omp fenez,  
Gant hor c'horfoù dibluñv,  
Yen d'hor sol waldik,  
Ar reier rust, diblaen.

"Ker hol lezvam ouzhp,  
O c'hoar ! n' hon enep,  
Ouzh hor c'has war ar nor,  
E stum elerc'h marhus.

"Hor c'houronk war an aod :  
Spoun an dom hag ar fru.  
Hol lod e fest ar bier :  
Holen c'hwery ar nor louet."

Padal e rankjont mont, ha daoust pegen flemus ha kriz e voe dezho an dour, ne oant ket evit tac'hout, nag evit en em wareziñ. En trubuilh-se e voent betek na kreskas o fluñv adarre warno hag o eskell, ha ma voe peurbareet o gloazioù.

Un deiz na oant ast betek genou ar Banna en hanternoz, e weljont un anheuliadeg kaer hag unliv a vare'heden, dindano mire'hed gwenn-dinann, o tont rag-geun eus ar morvent.

"Hag anaout a rit an anheuliadeg-se, bugale Iir ?" eme Fiomnguala.

"Ne reomp ket," enezo.

War se ez ejont strezek an aod d'o anavezout. Hag e weljont Aod Aitfiosac'h ha Fergus Fite'hiollac'h, nibden Bodh Dearg, hag un dederenn eus strollad ar varc'hegourien ganto. O klask an elerc'h oant bet abaoz pell. Fenaos, a c'houlennas bugale Iir, ez ae ar bed gant an De Danann, ha dreist-holl gant o zad, Bodh Dearg hag o zud.

"Mat," enezo. "Faint holl a-gevret, e Lez Fiomnac'haid, o tebrif Fest an Oad, drant ha sedez, hep preder na skuzhvezh, na keuz nemet o vezañ hepdoc'h."

"Evidomp," eme Fiomnguala, "reuzedik eo hor buhez."

TRIZEKVEZ  
SIZHUNVEZH  
=====

Kentel 1

YEZHADUR

Studiañ en ho levr ar rannhoù er c'hadamaent, §§ 225-231.

Poslladenn :

1) Klokaat gant ar rannhoù gaozere :

"Alies ..m boa ranket dija treuziñ Alamagn eus an eil penn ar vro d'egile ha tonket .. oan, war .. greden, d'ober kenend-all ur wech ouzhpenn. Tamm ebet ne .. zigplije sin ar seurt degouezh rak c'hoant ..m boa da welout daoust hag ober .. ra ar Voched evel ar pobloù all, kemmañ o genou goude bezañ koll. Un draig hepken .. oan daoubenn-et ganti : pousurt degener .. vije graet d'am c'hi Miss en trenioù alaman ?..."

"Bennoz d'an argadennoù-se .. ae buan war greskiñ brud vat ar vrigadenn ha stankoc'h-stank .. teue d'hon darempredif pemoù bras a bep seurt." (Jarl Priel)

2) Pegoulz ne vez ket lakmat a rannig dirak ar verb ? Skouerioù.

3) Pegoulz e c'haller lakmat ar rannig e penn ar frazenn ? Roit teir skouer.

+ + + + + + + + +

Kentel 2

LENNADENN DISPLEGET : Karr-kañv an aotrou Maer, gant Youenn Drezen.

A-raok stagañ gant ar pesh-c'hoard e vo mat titourif an aozer. Danvez a vo kavet en Istor al Lemnegeri, §§ 175 ha 266.

ARVEST KENTAN

(Ti-kêr ur gumer eus ar vro vigoudenn, en ur vourc'h, nepell eus ar nor : dib-ab a c'haller Kombrid, Lok-Tudi, Pomeleg, Triaged, Penmarc'h, pe Sant-Yann, ha Tregemez zoken. Sal ar guzulierien, heñvel ouzh holl salioù ties-kêr bourc'hioù bihan Breizh-Izel; gwennuzet, ha fichet unan eus ar spourmoù anezhi gant patrom Marianna hag hini Prezident ar Republik; un daol ha kadarioù evit an aotrou Maer, e eil-maer hag ar sekretour. En daou du, a-skouer, pep a daol hir, ha kadarioù evit ar guzulierien.)

(Bodadeg a zo fenez.)

"AR MAER (tonius, goude ober ur skarzbig d'e c'hourlañchemm) - Ha bremañ... Ur goulenn a bouez bras eneur o vont d'ober higiv ouzh Kuzul-kêr. Evit ur wech..."

GWENOLE (prin) - Me zo kontrol !

MAER - Ya ! ya ! Gortozit, mar plij, Gwenole !... Evit ur wech, sur en e vo an holl, hep ma vanko den, all ganin. Ha gant plijadur, ouzhpenn.

BARGEN (poumer-glev, e kuzulik, da Wenoale, e amezeg) - Petra 'c'h eus lavaret dezho, Gwenole ?

GWENOLE - Lavaret en eus : "Me zo kontrol !"

BARGEN - A ! kontrol enaout ? Mat-tre !

MAER - Ali e vo an holl ganin. Ha gwazh a se n'eo ket deut abred a-walc'h en aod an tri guzulier all a zo bet anvet, war un dro ganeoc'h-c'hwi, Gwenole, da zero'hel en ti-kêr lec'h tud Lost-ar-Dro ha martoloded an Arvor. Ur c'haer e vije bet ar seurt unniezh !

GWENOLE - Er mor e vije bet ivez panevet eo bet bilinet va hiz gant ur vrezhelemn. Mes, bras a-walc'h on da zifann, na va-unan, amañ, dirak ar beizanted, lodenn ar vartoloded...

BARGEN - Me zo kontrol !

GWENOLE - ... Ha na zisrijit ket n'emañ ket ar c'hiz gant ar re ruz da lakaat o daouarn e daouarn ar re wenn.

MAER - Evit ur wech, e lavaran dit, Gwenole, e vo ali ganin ar ruz hag ar gwenn. (Ouzh an eil-maer, Jakez Kerdrävat, ur millner goñs ha du) Jakez Kerdrävat, mar plij !... Bezit ar vadelezh da lenn d'ar guzulierien ar skridig a zo bet aezet war sujed an dra!

KERDRÄVAT (tonius ivez, hag o skarzhañ e c'hourlañchemn. Besteod eo, hag ur vouezh kilhog dezhañ) - Graet eo bet din ga... ga... gant an aotrou Maer, amañ prezant, an enor da zisplegañ dirazoc'h ar soñj tal... talvoudus a zo savet en e benn. (Un ehan) A ! Feiz, avat !... (Tre ma komz, e klask war an daol dirazañ; bremañ, e furch en e chakodoù) Pe... pelec'h an diaoul eo ast va "motig-bilhed" ? Ur soñj talvoudus hag... hag a... hag a vo un enor evit ar gumun, pa... pa... pa vo bet votet ar goulenm.... (Un ehan) Gurun ! Gant piv eo ast va zamm pa... paper ? Ko... kollet va zamm pa... paper ganin. N'on ket evit kenderc'hel...

BARGEN (taer) - Me zo kontrol !

KERDRÄVAT (droug emañ, nemet etre e zent) - Kontrol da betra, skouarn-gaoc'h ?

MAER - Eo !... Kendalc'hit, Kerdrävat !

KERDRÄVAT - Dont a ra brav al lenn ganin; evit ar prezeg, avat, n'on gour. Neuze, n'eo ket dav kla... klask pemp pav d'ar maout. Ali on, pe... pe... penn-da-benn, gant an aotrou Maer. N'eus nemet votif.

KARIOU (gant ur vouezh sioul) - Votif petra ?... Votif na vo troc'het hor gouzoug ouzomp ?

KERDRÄVAT (outañ e-unan) - Feiz, gast, avat ! Petra ar gurun am eus-na graet eus an torc'h tamm paper-se ?

DILOSKER (komz a ra dre e fri) - Ya !... Ret gouzout petra a c'houlenner diganeomp. Evit din bezañ euc tu an aotrou Maer, e lavarin, e-giz hor c'henseurt Bargaen, on kontrol, na c'houlenner diganeomp ober dispign adarre. Rak...

KERDRÄVAT (d'ar Maer) - Di... dibun ar gaoc, te... te da-unan, Korantin !

MAER (gant un tammig mousc'hoarzh) - Hor c'honper Kerdrävat, evit dezhañ bezañ mill-ner, a zo mailhoc'h an tamm anezhañ da sammañ kulasennoù bleud eget da ziluziañ e deod, war a welomp.

KERDRÄVAT (doaniet) - Ma ! Kollet eo !

MAER - N'eo ket marv mil den... En ur ger berr, gwazed, setu petra edo hon eil-maer Kerdrävat e soñj goulenm diganeoc'h, en anv ar gumun... (Tevel a ra).

MOUEZHIOU - Petra ?

MAER - Ur c'harr-kañv.

MOUEZHIOU (war donioù disheñvel) - Ur c'harr-kañv ?...

Goulennoù :

- 1) Displegañ ar gemoc'h-mañ : karr-kañv, tonius, pounner-glev, bilinet, "evit ar prezeg, avat, n'on gour", "mailhoc'h da", "n'eo ket marv mil den".
- 2) Fet lodenn a welit en arroudenn-se ?
- 3) Pensaos e ra an aotrou al lu gant an dud-se ?

+ + + + +

Kontel 3

PENNAD-SKRUD

"Test oc'h bet d'un tangwall pe d'ur gwallzarvoud war ar straed. Danevellit."

Da gentañ penn, merkañ elfennoù an digoradur. A bouez bras eo en dro-mañ reñf da c'houzout d'al lemm eus petra 'z eus kaoz. Da c'houde, klask memozioù evit ar skrid e-unan.

Bremañ eo gwelout war be du skell : dezrevell ar gwallzarvoud e-unan, pe em-zalc'h an dud tro-dro. Arabat merkañ an daou arvez. Pervezh e vo danevell ar gwallzarvoud. Tevel pled ouz an amzer : an endremened a dalv da verkañ oberoù a bad pe a zistro allie, e-keit na reer gant ar strizhremened evit oberoù peurechu ha dibar.

Deskit sevel ur c'hlozadur. Berr e vo, evel an digoradur. Amañ e vo gallet diskouez e berr gonzoù pegen sioul e vez an traoz pa'z a kuit an dud h.a.

+ + + + +

Kontel 4

DIBUNADUR

Deskit dindan effor an arroud-mañ a zeu da heul an hini hoc'h eus displeget :

DILOSKER - Forzh pennaos, mard eo evit dispign moneiz adarre, me...

MAER - Gant ar C'hariou emañ ar gomz, Dilosker. Deoc'h e vo da c'houde.

KARIOU - Setu pell zo ez a tud da amañ er gumun. ha kavet ez eus bet tu evit ar wech d'ober ganto interament dezant, ha d'o c'has d'an iliz ha d'ar vered, hep mont da klask kenent a reuz.

GWENOLE (prin) - Ha c'hwi a gav kser an dra-se, c'hwi, bezañ karavellet d'ar vered war ur c'hravazh, e-giz un dram bezh'n war an aod ?

MAER - Peoc'h !... Pep hini d'e dro.

KARIOU - Ni, diwar ar maer, a zo kustum e-viskoazh da zegas an arched gant hor char-abafioù tre betek ar vouc'h. Ne walan ket perak ne vefe ket mat hiziv ar pezh a oa mat deoc'h.

GWENOLE - Pennoc'h-kezeg hoc'h eus, ha k'rrr. Ni, avat, martoloded peour...

DILOSKER (etre e zent) - O !... peour !...

GWENOLE - ... Ni, paotred eus kostez ar mor, n'omp ket lodet eveldeoc'h, ha dougen a rankomp hor re varv d'ar vered war ur c'hravazh, war-bouez hon divrec'h, a-hed tri-c'hard lev, ha miloc'h... An dra-se n'eo gour.

MAER - Echu eo ganeoc'h, Kariou ?

Kariou - Me zo evit ar "statu quo".

Kentel 5

SKRIVADENN

Grit evel dalc'hmat, ha respontit d'ar goulennoù.

+ + + + +

Kentel 6

LEINADENN RENET : Karm-kañv an aotrou Maer.

Lenit dibenn an arvest kentañ en ho levr. Displegit war ho knier penaos e teu ar maer a-benn eus e daol.

+ + + + +

Kentel 7

LEINADENN D'ISELEGET : Karm-kañv an aotrou Maer, eil arvest.

(Ostalexi ha ti-debrifi Yann Rafalen, e Pont-'n-Abad, e-tal ar Marc'hallac'h. Ouzh un daol foloet gant un deal wenn, harp ouzh ar prenestr bras digor-frank war ar straed, emañ an aotrou Maer, e eil-maer Kerdranvat, - an daou-mañ fichet-kar en o dilhad bigoudenn, - ha Lorañs ar Vigourouz, ar c'harrfiser, o peurechuiñ o merenn. Azezet eo ganto Yann Rafalen.)

(En tu all d'ar straed, e disheol gwez tilh ar blasenn, ez eus ur c'harr-kañv nevez-flamm, du-pod, gant daroù arc'hant ha pennoù marv gwenn, ha frezilhonioù o c'hoard an dro da laez ar garrastell. Tomm ah heol, er-maez, ha tomm an heol gant ar festourden.)

AR MAER (o tennañ war e amal, chichant ha gwalc'het) - A !... Sell aze zo tennañ ar galon diouzh ar baourentoz !

KERDRANVAT - Ha diouzh an naon ha diouzh ar sec'hed.

MAER - Yann Rafalen, reiñ a ri va gourc'hemmennoù d'ar wreg ! Pregit deomp eus ur geginourez ! Setu pell zo n'em eus ket kaset war-iraññ un tamm rost ken tener ha ken chugonus, hag aezet dres evel na plij din, digrizet e-boan.

KERDRANVAT - Hag al legestr pebret gant pebr ruz !...

AR VIGOUROUZ - Ha neuze an istr hag al leizenned !... Gwir veuzioù beleien.

RAFALEN (o c'hoarzhin) - Kemont hag ober, aotrou Maer, e ri gourc'hemmennoù ivez d'an ostiz. Ur gwall doull en deus graet evidont e kav e win. Kerc'het em eus dit diouzh kav ar gwir ar pep gwellañ eus va bourdel hag eus va bourgoñ kozh... Hep kontañ ar muskadig, gant an istr hag al leizenned.

MAER (o lakaat e deod da stlakai) - Gwir !... Re wir !... Voulouz lipous !

KERDRANVAT - 'Giz un ael o staatañ din en gourlañchemm.

MAER - Sine-giz ar c'hler ha gwrezus e-giz an tan... Dres e-giz ur bouch plac'h yaouank, n'eo ket gwir ? (O'hoarzhin a ra) Dour dezhi, pacted, hag odivi d'ar soner !... Arabat klenn hiziv gant blaz ar bihan. N'eo ket gwir, Vigourouz ? Ne lavarez netra ez korn; ketet eo da deod e-barzh da c'hennoù.

VIGOUROUZ - Yec'hed mat dit, Korantin ! Me 'bardi em eus debret re. Biskoazh seurt friko...

KERDRANVAT (dilui e deod) - Ne gav ket dit e talv ar boan ? Ar wech kentañ, abaoe an amzer ansien, pa oa an diaoul pacted bihan, ma vo ur c'harr-kañv du-mañ. Dav oa ober badeziant dezhañ.

VIGOUROUZ - Gant lagout a-raok dour benniget.

MAER (o vesteodiñ un disterañ) - Te, Vigourouz, va c'henderv-me, va c'hanarad kozh, te zo rous ar gilvizien.

KERDRANVAT - Ur rous republikan, evel just !

MAER - Pa vin un dra bennak er gouarnamant, e lakain ac'hanout e pennekwerzh ar c'hird-tan. Den ebet, tro aze, ne oar lipat ur c'harr-kañv evel-dout-te, e livañ du e-giz an noz, hag e fichañ ken brav gant pennoù marv gwenn ha daeloù arc'hant. Hag hemañ zo enor da stal. Brud a zagaso dit, ha praktik.

VIGOUROUZ - N'eo ket e stal ar Vigourouz e vez moc'het ar vicher, morse !

MAER - A ! A ! A !... Sellit dre ar prenestr ! En em zastum a ra an dud en-dro dezhañ gant o genoù digor... (Un ehan) O ! sell 'ta !... Betek va "frai" Youenn ar Berr a zo ivez oc'h estlenniñ dirazañ !... (O c'hervel) O ! Youenn !... Deus amañ 'ta !

YOUENN (o tegouezhout e-tal ar prenestr) - A ! Salud, Korantin ! Salud, ar gompagnimezh !... Me 'laka zo friko ganeoc'h ! Ha tomm an heol memes !

MAER - Friko bihan, ya ! Emaomp o vadeziñ ur c'harr-kañv aze. Deus da lipat ul loadiad ganeomp, Youenn !

KERDRANVAT (ruz e benn) - Ha, da c'hortoz, ez an da welout ha debret eo bet mat e gerc'h gant Bijou.

MAER - Adarre ?

KERDRANVAT - Ha da skilhañ ur banne dour. N'eo ket 'walc'h evañ.

MAER (a c'hoarzh) - Dour, emezañ ! C'hoazh, n'en dije lavaret laezh-boc'h !... (Da Youenn ar Berr, a zo deut tro) E doullad a zo bet roet dezhañ proplik, sakre Kerdranvat !... Salud, Youenn ! Penaos emañ an ton ?... Aze aze, ha kemer ur banne ganeomp ! Gwin ruz ?... Gwin gwenn ?... Lagout ?... Bez'ez eus... (O c'hervel) Maria, degasit gwer da Youenn, amañ !

MARIA (un tu bennak er sal) - Diouztu !

YOUENN - Dit eo ar c'harr-kañv-se ? Lavar 'ta ! Re varv du-se ne se'chent ket o fri gant delioù kaol.

RAFALEN - War goll emomp ganeoc'h, amañ, e Pont-'n-Abad.

YOUENN - Ar wetur-se, n'eus ket krañoc'h e Kemper, na memes e Paris. Feiz, gast ! Ur seurt karr-kañv a rafe dit plijadur marvel, ken nemet evit bezañ kaset d'ar vered gantañ.

Goulennoù :

1) Displegiñ ar gerioù-mañ : frezilhonioù, chichant, chugonus, "sin e-giz ar c'hler", "blaz ar bihan", kilvizien, praktik, moc'het, frei, kran, dilui.

2) Pesourt den eo ar Maer, diouzh a welomp amañ ?

3) Penaos e vez lakot a-wel inor vat ha levezon an dud eno ?

+ + + + +

PEVARZEKVIET SI ZHUNVEZH  
=====

Kontel 1

YEZHADUR

Studiañ ar rannoù-goù en nac'hañ, §§ 232-235, ar goulenmata, § 236 hag an  
betiñ, § 237.

Poelladenn :

- 1) Pegoulz e vez graet gant NED ? Hag anaout a rit ar furmoù NEN ha NEND ?  
Pelec'h hoc'h eus kavet anezho ?
- 2) Pegoulz e vez implijet NA ? Roit teir skouer.
- 3) Savit teir frazenn er stumm-nac'h, na vo ket implijet KET enno.
- 4) Lakaat an anv-verb er stumm-nac'h :

N'hallan ket c'hoarzhin - N'hall ket un den kousket - Lavaret he deus dimp dont -  
Un den lezirek a blij dezhañ labourat - Ret e vo deoc'h komz e-pad ar gentel.

5) Savit teir frazenn all er goulenmata gant an hevelep gerioù hag en hounañ :  
"Daoust hag e teuy ?"

+ + + + +

Kontel 2

LENNADENN BENEZ : Karr-kañv an aotrou Maer, dibenn an eil arvest.

Lennit ar pemad-se en ho levr. Goude-se, klasait an troioù-lavar farsus, ha  
dreist-holl skeudemoù-lavar ar Maer. Displegit perak ez int implijet amañ. Petra a  
zeskomp ivez war ar c'hoard bolitikel er gumun, ha war vennadoù an aotrou Maer ?

+ + + + +

Kontel 3

PENNAZ-SKRID

Klasait an destenn en ho levrig poelladennoù, Eilskrivit anezhi. Grit evel  
dalc'hmata : klask ar mennoziou, o frammañ e-barzh ur steufiv gwenn. Savit an digorad-  
ur, ha soñjit endeo en danvez ho klozadur.

Bremañ e vo teurel pled ouz ar sevel frazennoù. Marteze hoc'h eus bet tro,  
gwech pe wech, da lenn ur pemad damhefvel ouz an hini hoc'h eus da aozañ hiziv.  
Klasait adkavout anezhañ. E-giz-se e c'hellot studiañ a-dest an doare n'eo savet an  
danevell-se.

Bezet pe vezet, dibabit unan eus ar skridoù hoc'h eus bet studiet, ha sellit  
pizh ouz stumm ha lusk pep frazenn. Ha neuze, klasait d'ho tro sevel un toullad  
frazennoù peurlipet.

+ + + + +

Kontel 4

LENNADENN DISPLEGET : Karr-kañv an aotrou Maer, trade arvest.

(Chomet eo an aotrou Maer ha Kerdravvat da chopinat, e Pont-l'Abad ha penn-da-  
benn hent ar vourc'h. Noz teñval eo anezhi, pa sav soñj dezho eo poent pennadif hent  
ar gêr.)

(Piltrot hep difras ar marc'h Rijou, ouz stam ar c'harr-kañv. Azezet eo an  
aotrou Maer, war ar bank, e-kichen ar blienier, Kerdravvat.)

AR MAER (tev e deod) - Ha bremañ, Jakez Kerdravvat, ler dezhi !

KERDRAVVAT (dibih e gomz) - Ya ! poent lakaat tizh, na fell deomp bezañ erru a-raok  
an deiz. (D'ar marc'h) Hu ! Rijou. Hu ! ta, tamm koad !

MAER - En ur mod, Jakez, eo gwelloc'h, kement ha bezañ diwezhat, bezañ diwezhat-tre.  
E-giz-se, ne vo Marjan Geben ebet ouz hor gortoz, e toull an nor, gant treujenn ar  
valaenn.

KERDRAVVAT - Klevet en eus lavarout eo Maivon ar Sidvidan ur gwall bikez pa vez en  
inor fall.

MAER - Prindk eo an hini gozh a-zu-mañ. Mes klevet en eus lavarout ne deus ket ar  
sukr, kennebeut, e genou gwreg ar vilin-vor. Mes, basting ! n'eo ket c'hoazh hiziv  
e teuy va bigoudenn da lezennif e ti Korantin an Nedeleg... (Un ehan) Pelec'h enaout,  
Jakez ? Ne welan ket aotrou Maer.

KERDRAVVAT - Amañ, siwazh ! sko emout, azezet war bank ar c'harr-kañv.

MAER - Riskoazh seurt norvezh ! Ne weler ket ur c'heuz.

KERDRAVVAT - Nag ur steredenn en nañv, nag ur preñv-gouloù er c'hloas. Bremañ e vo  
teñvaloc'h c'hoazh, gant ar gwez evlec'h hag ar gwez haleg, en daou du d'an hent don,  
e traonenn Pont Falore. Ha, da-se, e vez gwelet traoù marzhus.. Ebrusant, e wel  
Rijou, en noz, ken siklaer hag en deiz, gant e zaulagad kaouenn... Hu ! Rijou, va  
marc'h fidel ! Kas da vestr d'ar gêr, va nestr fidel, rak dall eo da vestr fenez !

MAER (besteed) - Ha ne... ha ne... eo dall va zeed ivez. Ne welan ket siklaer da gaoz-  
eal... Mes tanav eo chomet va skouarn... Ha sabatuet on ouz da selaou... Un divun-  
adenn, Jakez ar Miliner... Petra a laka ar boeson un den d'ober ?

KERDRAVVAT - Ur benn traoù, Tin, va c'homper ! Da staotañ, da ganañ, da chichantaat,  
da...

MAER - Da... da... da...

KERDRAVVAT - Hañ ?

MAER - Lakaat a ra ur Jakez Kerdravvat besteed da valañ e gomzoù flour e-giz bleud  
er vilin, gant un teod skañv ha distagellet.

KERDRAVVAT - Hag ar baotred, distagellet e-giz an aotrou Maer, da gaout teod tev, da  
zrellhañ ha da c'hagoullhat e-giz ur c'harr-kañv diwar zour.

MAER - Ar prezeg n'eo netra... Gant na chomo yen ar penn !... Ma ! peotr. Dougan a  
reomp pep a jiletennad. Ha, kement-se, abalamour d'ur c'harr-kañv. Pebezh badeziant  
a zo bet graet dezhañ ! Sell aze n'eo ket ober van eo !... Ha pebezh degener a vo  
gant deomp er gumun, pa vimp gwelet o tegouezhout !... Gwazi a se, enaomp e-kreiz  
an noz teñval-dall. Panevet-se, e vijemp degouezhet war blasenn an iliz, e-giz ur  
roue en e gêr gaptal, gant holl dud ar vourc'h o tic'henaouiñ gant an estlam, ha,  
marteze, an amezien eus ar parrezioù tro-dro. Tarzhañ a ray ar re-mañ diwar o gwaz-  
izl. Ni ivez hon eus hor c'harr-kañv. (O kanañ) :

Ha na rit ket kement a reuz,  
Bendenn grak-lakdzien !  
Ha na rit ket kement a reuz,  
Gant ar pezh hoc'h eus...

KERDRAÑVAT - Serr da veg, sotroh Maer, serr da veg ! E gwetur ar re varv enaomp.

MAER - Moarvat ! Mes dougen a ra daou zen bev, ha sonn war o zraid. Ha, keit ha ma n'he do ket ar wetur-mañ graet, ur wech, ar gefridi lakaet dezhi, keit ha ma ne vo ket bet douget ganti ur c'horf nary d'ar vered, petra 'vo namet ur wetur evel ar re all, ur fiaker o pourmen daou gaffard, joa enno da vezañ bev ? (O kanañ) :

Bendenn grak-lakdzien...

(C'hoarzhin a ra) Ha neuz, kanañ a ra ar veleien o-unan, o kas ar gristenien d'an douar.

KERDRAÑVAT - Gouzout a ren. Mes me 'gav isldis klevout kanañ en ur wetur-gañv.

MAER - Aon ac'h eus e tedenne va chafson un ene dianket, tro aze ?... Dihunaf ar yer ha spontañ ar chas en o loñch, setu petra a c'hellan ober, me, gant va chafson.

KERDRAÑVAT - Enaomp o kregiñ gant traonienn vras Pont Palore... Pelec'h enaf ar mek-anik-stardañ ?... A ! anaf enaf. Ne welan berad gant an hent don hag ar gwez... (Youc'hadenn ur gaouern, un tu bennak)... Mes klevout a reer ar youter. Pa lavaren dit e c'hoarvez traoù marzhus, e traonienn Pont Palore. C'hwez fall a glevan.

MAER - Hañ ? Ha te 'gred, te, e seurt kofichennoù borm ?

KERDRAÑVAT - O ! muioc'h a aon an eus, sur, rak al laeron eget rak paotred ar sabad... (D'e varc'h) Hu ! Bijou. Na chom ket da yardiñ a-hed an hent !

MAER - Me 'lavar dit, me, e paefen ker evit gwelout ur c'horrig ha klevout digantañ doareoù an anzer gozh. Nemet, gouzout a rez, bremañ omp re sivilizet... Hag evit pezh a sell ouzh al laeren...

KERDRAÑVAT - Al laeron ?

MAER - Int-i eo a grenfe en o bregoù ganeomp-ni.

KERDRAÑVAT - Krenañ en o bregoù a rafent ?

MAER (o kemer ur vouezh void) - Ya ! o veajiñ enaomp e Karr an Ankou, va c'hristen mat; gant Karr an Ankou hag e wlgour, ha dic'houlou. Ha piv omp-ni, nemet an Ankou hag e verzhol ? (O kanañ) :

Ora pro nobis !  
Marv eo Yann Volis....

Goulennoù :

- 1) Displegañ ar gerioù-mañ : "pennadif hent ar gêr", "lakaet tizh", "treujenn ar valaenn"; primik, lezennif, "sko emout", distagellet, gougilhat, krak-lakdzien, youter, "kofichennoù borm", wlgour.
- 2) Displegañ ster an araogennoù el lavarenoù : "noz teñval anezhi" ha "ler dezhi"
- 3) Pennas e ra an aozer font gant ar Maer ha Kerdrañvat ?

+ + + + +

Kentel 5

DIBUNADUR : Karr-kañv an actroh Maer, 3<sup>o</sup> arvest, adalek "Ar prezeg n'eo netra ..." betek "... Gant ar pezh hoc'h eus."

Mez eo an actroh Maer, pe tommedik d'e benn, da nebeutañ. Na ankouait ket ez eo techet da "zrailhañ" e gonzoù. Drevezit e vouezh, evel pa vijec'h oc'h ober c'hoariva. Estlenniñ a ra ouzh ar c'harr-kañv, ouzh an devezh c'hoariva tramet; faltaziñ a ra evez e genvr iz... N'ho pet ket aon da bouezañ re war an tu fentus : ur farnadenn eo ar pezh-c'hoari.

+ + + + +

Kentel 6

SKRIVADENN

Klaskit testenn ar sizhun, ha respontit d'ar goulennoù.

+ + + + +

Kentel 7

GERIADUR

Studiañ en ho levr yezhadur "Istor berr ar brezhoneg skrivet dre skouarioù", pp. 65-74.

Poelladenn :

- 1) Pet marevezh a gaver en istor ar brezhoneg ? Pe anvioù a roer dezho ?
- 2) Pennas e anavezet an hanvrezhoneg hiziv ? Hag ar c'hrennvrezhoneg ?
- 3) Pegoulz e voe urvanet ar skritur da vat ? Ha graet 'oa bet taolioù-arnod a-raok ?
- 4) Ha konzet e vez ar brezhoneg e pep lec'h e Breizh ? Perak ?
- 5) Pelec'h e vez konzet yezhoù danheñvel ouzh ar brezhoneg ?
- 6) Eus pelec'h e teu ar brezhoneg ?

+ + + + +

PENNEKVEZ SIZHUNVEZH

=====

Kentel 1

YEZHADUR

Studiñ an amzer-vremañ hag an amzer da zont, § 265, hag an amzer da zont en tremened, § 266.

Foelladenn :

1) Klokaat gant furm reizh BOUT pe ENDEVOUT :

Mar ... glav e chomimp er gêr.  
 Mar ... gwir en deus stourmet, eo kalonek.  
 Mar ... arc'hant a-walc'h, e preñin ur c'harr.  
 Mar ... gouloù en ti, emañ sur o labourat.  
 Mar ... tapet e vlot kastizet.  
 Mar ... er gêr, deomp da welout anezhañ !  
 Mar ... degeneret ez in da labourat d'an Naoned.  
 Mar ... lavaret "ya", e c'hallez fizhout emañ.  
 Mar ... klañv e spered, doktor, ez eus re all ken klañv hag eñ (R. Hemon)  
 Mar n'... mui Izol n'em eus mui netra (Langleiz).

2) Lekaat ar frazennoù-mañ en tremened :

Klevet em eus e vo emañ disadorn.  
 N'ouzon ket ha dont a ray.  
 Ne lavar ket peur e tistroy.  
 Sofjal a ran e labour startoc'h er gêr.

+ + + + +

Kentel 2

LENNADENN DISPLEGET : Karr-kañv an aotrou Maer, dibenn an trede arvest.

KERDRANVAT - Peoc'h 'ta, gant da rapronobis !

MAER - Petra zo ?

KERDRANVAT - N'ec'h eus ket klevet ur c'hwitelladenn ? Pa lavaran dit e veze gwelet traoù e Pont Palore !

MAER - A, oah ! (O kanaf)  
 Kement ki, kement kazh...

UR VOUEZH - Harpit !

MAER (navik) - Harpañ war betra ? Azezet omp klok.

KERDRANVAT (d'e vare'h) - Ho ! Bijou. Ho !... Mat ! (Da berc'henn ar vouezh) Petra 'fell deoc'h ?

AR VOUEZH - Piv oc'h ?

MAER (gant ur vouezh vout) - Hemañ Karr an Ankou ! Me eo an Ankou, ha ganin emañ va gwreg, Channig-he-gouzoug-hir.

AR VOUEZH - Diskennit !

MAER (dirukel a-walc'h) - Iche ! bitoused fall, marmouzien divalav, korriged lor, sell emañ gizoù ! Mar diskennan, e lakain deoc'h ho revr e traoñ ho koin, ha n'ho lakay em chakod da gas d'ar vugale da c'hoari.

KERDRANVAT - Hag e vo pradet deoc'h ho revr gant ar valaenn c'hlas.

AR VOUEZH - En anv al lezenn, diskennit ! Ni zo archerien !

MAER - O la 'vat !... Ret doujañ padred al lezenn !

(Diskenn a ra ar Maer ha Kerdranvat, ar sonañ ma c'hellont, pep hini eus e du eus ar c'harr. Mont a ra Kerdranvat da deurel ur barne dour ouzh ur wezenn, tre na'z a an aotrou Maer, brañsell-divrañsell, davet an archerien.)

ARCHER - Prosez ho po ! Da gentañ, evit kas choloni en noz. D'an eil, evit ober hent gant ur c'harr dic'houlou, hag ouzhi tu kleiz an hent, ouzhpenn.

KERDRANVAT (o tegouezhout) - Ne weler ket muioc'h eget e puñs an diaoul.

ARCHER - Ha me, me a wel re vat, me, n'oc'h ket diwar zour : abeg ur prosez all.

MAER (o c'hoarzhin) - A ! a ! a ! N'eus ken ?

ARCHER - Eo !... Evidoc'h-c'hwid e vo greset un astenn da roll an tamalloù. Ober goap ouzh mevelien ar gouarnamant. Ho paperioù, mar plij !

MAER - Me, oc'h ober goap ouzh mevelien ar gouarnamant, ouzh difennerien an urzh vat ?... Biken jamez, aotrounez ! Re a zoujañs em eus d'an urzh vat. Ha keit ha ma vin bev, ha selaouet, e vo respetet an urzh vat el lec'h ma vin-me. Hep urzh...

ARCHER (kreñn) - Ho paperioù !...

MAER (flour) - E pelec'h emomp emañ, mar plij ?

ARCHER - E-tal kêr Boull-Taouarc'h, e traonienn Pont Palore.

MAER - War zouar va c'humun, neuze. Mat-tre, ha trugarez deoc'h ! Bramañ, eo ur blijadur din stardañ deoc'h ho torn, ha reizh deoc'h va goure'hennnoù evit ar mat a rit ho tever archerien.

ARCHER (rust) - Ho paperioù !...

MAER - Setu ! setu !... Korantin an Nedeleg, ozhac'h ar Vilouri, ha maer er gumun-mañ !

AN DAOU ARCHER - An aotrou Maer ??? Digarezit, aotrou Maer !... Ken teñval evel n'eo !... Digarezit !...

MAER (goude stardañ o daouarn d'an archerien) - Kenavo, aotrounez ! (Ret eo d'an archerien reizh o skoazell d'an aotrou Maer da sevel war e vank).

KERDRANVAT - Kenavo !... (D'e vare'h) Hu ! Bijou... D'an trot d'ar gêr ! (Kuit ar c'harr).

AN ARCHER (sabatuet) - An aotrou Maer o pourmen, meyv-dall, da noz, en ur c'harr-kañv !...

ARCHER ALL - O nondidi !... Ma vijemp bet moredet un disternañ, ha dihmet gento, e oa peadra lakaat unan da semplañ diwar e spont. (Kuit ez eont)

MAER - N'eo ket en taol-mañ c'hoazh e welimp korriged. Roñfled, ne lavaran ket. Gwelet oc'h eus ar "gribenned" ?

KERDRANVAT - Bez' e oamp daou vrez bremaik, ha kilhet a-zoare. Kaset e vijemp bet gento d'an toull, penevet out maer.

MAER - Te 'wel ?... Gouzout diwall yen ar penn !... Diwar an taol, avat, on badaouet ha baduellet. Re a viridh eo an dra-se evit ar memes devezh hag ar memes den. (Dic'henaouñ a ra) Mont a ran da c'hourvez e-barzh ar wetur.

KERDRANVAT - E pe soñj emañ ? A-benn ur c'hardeur e vimp er vourc'h.

MAER (o tic'henaouiñ) - A-benn ur c'hardeur e vin diskreizhet.

KERDRANVAT (d'ar marc'h) - Ho ! Bijou. (Chon a ra ar c'harr a-sav. D'ar Maer, a zo aet da c'hourvez emañ. Ne weler dezhañ nemet seuliñ e votob-lor) Mat emañ ?

MAER - Dispar ! (Dic'henaouiñ a ra).

KERDRANVAT (Dic'henaouiñ a ra d'e dro) - Mont a ran gant ar c'houssed ne ivez. N'on ket mat mui da herzel ouzh an tamm boeson brein-se. (D'e varc'h) Hu ! Bijou. Hastomp! (Dezhañ e-unan) Ha c'hwi, aotrou Kerdranvat, miliner digourdi ar Villin-Vor, kanit, nar plij, evit chom dilun ! Ha kreñv !... (Kalonok) A ! N'eo ket brav, N'eo ket brav, paotred....

Goulennoù :

1) Displegañ ar gerioù-mañ : harpañ, bitouzed, lor, pradañ, "brañsell-divrañsell", "kas choloni", "kribenned", baquelllet, "dilhet a-zoare", navik, dirukel.

2) Displegañ an implij eus ar furmoù islinennet (o natur hag o c'hefridi) : "un astenn da roll...", "e-it ar mat a rit ho tever", "bez' e oamp daou vray".

3) Perak eo farsus ar gejadenn gant an arherien ?

+ + + + +

Kentel 3

PENNIAD-SKRID

Adkemerit ho proullhed. Savit ar pennad, ha divanidit anezhañ gant akod. Ma vo reizh ar frazennoù, ha plijus da lenn ivez.

Spletus e vo deoc'h lenn ar pennad a vouezh uhel : anatoc'h e tay ar mankoù hag ar fazioù a bep seurt (frazzennoù luziet, gerioù diheson...)

+ + + + +

Kentel 4

LENNADENN RENET : Karr-krav an aotrou Maer, pevare arvest.

Lennit an arvest berr-mañ en ho levr. Klaskit kement ger n'anavezit ket. De c'houde, displeg't e berr war ho kaiser temz-spered Maivon, gwreg ar maer.

Ha kavet hoc'h eus plijus ar pezh-c'hoari-se ? Displegit perak.

+ + + + +

Kentel 5

GERIADUR

Studiañ en ho levr "Ar gerioù deveret", §§ 821-828.

Poelladenn :

1) Savit tair frazenn enno un anv-verb implijet evel anv-kadarn.

2) Petra 'verk an dibenn -ENN er gerioù-mañ : karezenn - levrenn - geotenn - karregenn - kompezenn - seizenn - bazenn - brumenn.

3) Petra 'verk an dibenn -EY ? Roit pemp skouer (estreget re al levr).

4) Petra 'verk an dibenn -EZ er gerioù-mañ : patatez - rouanez - aalez - maernez - nezerez - aotrounez - blaizez.

+ + + + +

Kentel 6

SKRIVADENN

Grit evel kustun, ha respontit d'ar goulennoù.

+ + + + +

Kentel 7

LENNADENN DISPLEGET : Tonkadur Bugale Usnac'h.

Bugale Idr a vez renket e Kelo'h an Henvejennoù, o tennañ d'un anzer kozh-kozh. Evit d'hon danevell bezañ strollet gantañ dindan an anv Tri glac'har an danevelloù, e vez renket, er c'hontrol, e Kelo'h ar Skourr Ruz, hini Uladiz, bet o vevañ, hervez ar brud, er c'hentañ kantved goude H.S.

Tonkadur Bugale Usnac'h zo pelloc'h diouz spere al lennegezh-pobl eget Tonkadur Bugale Idr. Un istor a garantez ez eo, istor Deirdre, bet desavet gant ar roue Konor. Kouezhañ a ra e karantez gant Noise, hag e tec'hont da Alba. Setu emaint bremañ o tistreiñ da Iwerzhon.

MIRIEN USNAC'H EN EMAIN

Fa voe echu ar ganenn-se ez ejont dre an hent berrañ da Emain. "Gouzet a ran", eme Deirdre, "penaos e c'hellot anavezout trubarderezh ar roue?" "Penaos 'ta ?" eme Noise.

"Mard oc'h pedet da vont er sal na emañ Konor hag uhelidi ar vro, leal e vo ar roue en ho keñver. Mard oc'h kaset e sal ar Skourr Ruz, ha na chon Konor en e hini, trubard e vo."

Diraez a rejont dor Emain, ha darc'haouiñ outi gant ur morzhol prann, o c'houlenn digor. Piv oa eno a c'houlennas ar porzhier. Tri nab Usnac'h, a voe respontet, daou vab Fergus ha Deirdre. Lavaret e vo kement-se da Gonor, a c'halvas e vevelien, hag a c'houlennas outo ha pourvezet mat e oa Sal ar Skourr Ruz a voued hag a zied. Ma vije dastumet pemp strollet kadourien Ulad, anezo, a-walc'h e vije da vousta ha da zieta an holl, hag ouzhpenn.

"Neuze", eme Gonor, "kasit di bugale Usnac'h." Lavaret e vo kement-se dezho.

"Siwazh", eme Deirdre, "droug bras a c'hoarvezo gansomp, pa n'hooc'h eus ket selaouet va c'horzoù. Anzer zo c'hoazh, evelato, da deohout."

"Ha na rin ket," eme Illann nab Fergus. "Eiskoazh n'omp bet ac'nik ha digalon. Mont a rin da Sal ar Skourr Ruz."

"Hag a rainp," eme Noise. Mont a rejont. Ha kaset e voe daveto mevelien gant kig ha meuzioù c'hwek hag evadurioù mezvus, ken na voe meyv o holl ambrougerien hep dale. Int, avat, ne zebrevadurioù meyvus, ken na voe meyv o holl ambrougerien hep dale. Int, avat, ne zebrevadurioù meyvus, ken na voe meyv o holl ambrougerien hep dale. Jont ha ne evjont ket, skuzh ma cant gant an hent o doa graet.

Hag e lavaras Noise :

"Degaset deomp taolenn-vezboell Konor."

Degaset e voe dezho. Lakaset e voe gwerin ar gwezboell war an daolenn. Noise ha Deirdre en an roas da c'hoardi.

Konor, en e sal-eg, a lavaras :

"Piv a'hanoc'h a yelo da welout ha miret he deus Deirdre he c'hened hag he neuz gwechall ?"

"Mont a rin," eme Leborc'ham.

Leborc'ham, avat, a gare Noise dreist pep tra er bed. Msur a wech e oa aet da Alba da gas dezhañ doareoù ar vro ha da zegas keleier anezhañ. Hag hi d'al lec'h n'edo Noise ha Deirdre. Eiont aezet o c'hoardi, an daolenn-vezboell etrezo. Leborc'ham a bokas dezho en ur leivañ. Neuze e lavaras :

"Fall eo deoc'h kaout an daolenn-vezboell-mañ. N'eus netra a gement en deus Konor muioc'h a gouz dezhañ eget an daolenn-se, nemet Deirdre hec'h-unan. Da welout ha miret he deus Deirdre he c'hoardi hag he neuz on bet kaset anañ. Un torfed bras a vo graet henoc'h en Emain, a-enep ar fealded touet deoc'h, ha ne vo ket a noz gwashoc'h betek diwech an amzerioù."

Neuze, Leborc'ham a lavaras :

"Fremmt, mibien Fergus," emezi, "an doerioù hag ar prenester war Sal ar Skourr Ruz. Mard oc'h taget, stourmit keit ha na c'hellot, ha salv na chono en trec'h gaeoc'h !"

Hag ez eas kuit, ankoniast hag o skuilh daeroc'h tomm betek ar sal n'edo Konor. Hemañ a c'houlemmas outi pe geloh he doa degaset.

"Keloh mat ha keloh fall an eus evidout," emezi.

"Lavar din," eme ar roue.

"Setu anañ ar c'heloh mat an eus," eme Leborc'ham. "Tri mab Usnac'h zo deut davedout anañ, an tri c'hadour pennañ e nerzh hag e neuz, en herded hag en haelded, e kardedad hag e kurioc'h en Iwerzhon a-besk, en Alba hag er bed bras. Hag hiviziken e te'ho holl dud Iwerzhon evel emad diragout, o vezañ na vo mibien Usnac'h ganit. Setu anañ, avat, ar c'heloh fall an eus. Ar plac'h vrasañ a oa er bed pa'z eas kuit diouzh Iwerzhon he deus kollet he braventez."

O klevout se, e c'houlezas gwariñ ha gourvann Konor. Hag e kendalc'has da evañ, hag an holl a-gevret gantañ, lon na soñjas un eil tro e Deirdre. Goulem a reas :

"Piv a garfe mont da welout ha miret he deus Deirdre he c'hened hag he neuz ?"

Teir gwech e c'houlemmas hag kaout a respont. Neuze e lavaras da Treandorn :

"Ha gouzout a rez, Treandorn, piv en deus lazhet da dad ha da vreurdeur ?"

"Noise," eme Treandorn, "en deus o laghet."

"Ha," eme Konor, "kac da welout. Rak red eus ket war an douar a blac'h kaer-oc'h egeti."

Treandorn a yeas. Pa ziraetas Sal ar Skourr Ruz, serret e oa an doerioù warni hag ar prenester. Spont a grogas emañ, hag e lavaras :

"N'heller ket tostaat ouzh bugale Usnac'h. Debret int gant ar goumar."

Goude, avat, e kavas ur prenester a oa chomet digor, hag e sellas drezañ e-barzh. Hogen Deirdre, a oa lemm he sell, a verzas an den hag e ziskouezas da Noise. Noise, a oa unan eus ar wezh-vezboell en e zorn, e strinkas ken alañ na tizhas lagad Treandorn; hag hemañ, e lagad war e jod, a yeas da gaout Konor da zisplegañ dezhañ an darvoudoù.

"Ahont," emezi, "ez eus ur plac'h a c'heller c'hoantaat dreist holl vevred an douar, ha Noise a vo roue ar bed na chom gantañ."

AR STOURM E-TAL SAL AR SKOURR RUZ

Pa glevas Konor, e voe ken leun a goumar hag a erez na c'houre'hemennas d'eo stroll-adoù kadourien mont raktal da argañf Sal ar Skourr Ruz. Mont a rejont, o leuskal-teir youc'hadenn traouac'hias hag o s'lepel etivi ha skodob-tan e-barzh. Bugale Usnac'h a c'houlemmas piv oa er-maez.

"Konor hag Uladh," a lavarjod.

"Hag e fell deoc'h terrañ al le hoc'h eus touet da Fergus ?" eme Illann Kenedus.

"Touif a ran," eme Konor, "ho pezo keuz da vezañ dalc'het va gwreg."

"Sell," eme Deirdre, "Fergus en deus hor gwerzhet, Noise."

"M'en deus ho kwerzhet," eme Vuime, "tri n'ho kwerzhing ket."

Hag ez eas er-maez hag e lachas teir gwech hanter-kant gwaz, hag e vougas an etivi, hag e lakas an holl enebourien da gilañ.

"Piv a ziarbenn va holl gadourien ?" eme Konor.

"Me, Buime Rouz Mirdrez, nab Fergus."

"Ur prof a roin dit," eme Konor, "ha tilezez mibien Usnac'h."

"Pe brof," emezi.

"Ur c'hantrev."

"Ha petra ouzhpenn ?"

"Va fiziciñs hag ul lec'h er c'huzul."

"Asantif a ran," eme Vuime.

(Hogen en noz-se, dre vuzhud, e teuas ar c'hantrev-se da vezañ fraost ha difrouc'h, hag arvet e voe Laneg Ramidigezh Vuime diwar neuze.)

Deirdre, avat, he doa klevet kement a oa bet lavaret.

"E gwir," emezi, "Buime en deus hon dilezet evel e ada."

"Touif a ran," eme Illann Kenedus, "n'ho tilezint ket, keit ha na chomo va dorn krog er c'hleze-mañ."

Hag ez eas er-maez hag e reas teir gwech tro ar Sal hag e lachas teir gwech hanter-kant a Uladh, hag o hejañ un stev war enaou an e zorn, e stagas da skignañ strolladoù Konor ken na gradent ket tostaat ouzh Sal ar Skourr Ruz.

Hogen Konor a gasas Fiac'ha, e vab, da stourm ouzh Illann Kenedus. Hag hir amzer e padas an engann etre an daou gadour, ken na zeuas Konall war skoazell mab Konor. Hag e lachas Illann mab Fergus.

Neuze, Uladh a dostas ouzh ar Sal, o teurel etivi ha skodob-tan adarre. Ardab a yeas er-maez, a vougas an tan hag a lachas tri c'hant kadour e-doug trederenn gentañ an noz. Hag e-doug an eil trederenn, Andle a yeas er-maez da zivall ar sal, hag e lachas div wech tri c'hant breselour, ar re grefañ anezho holl. Konor a atizas neuze e gadourien, hag ez eas Noise er-maez e-pad an drederenn diwezhañ, ha keit ha ne gontor ket traezhennoù ar noz ha deliennoù ar c'hoard ha glizhennoù al laneg ha steredennoù an eabl, ne gontor ket kemebeut ar re a ziskaras. D'ar beure, ec'h en em gannas a-nevez Uladh ouzh Noise, o lakas e teir eurvezh dindan deoc'h.

Hag ez eas Deirdre davedout, o lavarout :

"Ur stourm kaer hoc'h eus graet. Hogen n'eo ket echu c'hoazh."

Neuze bugale Usnac'h en an lakas keñ-c'hoazh. Deirdre e-kreiz, o skoedob stag-ouzh-stag, Teir gwech e lamjont er-maez, e-giz emved, dreist nozerioù Emain, o lachañ tri c'hent gwaz bep gwech.

Goulennoù :

- 1) Displegañ ar gentioù-mañ : kadourien, dieta, taolenn-vezboell, gwerin ar vezboell, kuriob, kantrev.
- 2) Pe ziforc'h zo etre : "hoantiñ", "braventez", "kened" ?
- 3) Petra lavarout a-zivout : "traezhennoù", "deliennoù", "glizhennoù", "steredennoù" ?
- 4) Petore den eo Konor ? Petra soñjal eus kuriob Illann, Noise h.a. Peseurt ster a roit dezho ?

+ + + + +

C'HEZHEZKIVET SI-ZHUNVEZH  
=====

Kentel 1

YEZHADUR

Studiañ ar raganv-gour, §§ 423-429.

Poelladenn :

- 1) Pet stum zo d'ar raganv-gour en doare-gourc'hemenn ? Roit div skouer.
- 2) Grit ur roll eus ar raganvioù-gour, ha disklêriet o c'hefridi er frazenn :  
"Me eo", a hiboudas ur vouezh e pleg va skouarn.  
Gouzout a oulen e oa hi.  
Ne fivivis ket.  
"O vont da vervel enañ ?" a hiboudas c'hoazh, o lakaat he dorn all war va skoaz.

Treñ a ris va fenn diouti.  
"Respontit ya pe nam", ezezi, "ha biken ne viot mui trubuilhet ganin. N'en eus ket klasket e lazhañ. N'it ket da grediñ en eus klasket e lazhañ. Anaout a rit pep tra. Riv er bed an anavez gwalloc'h egedoc'h ?...  
Gwisket e oa e gwern. He dilhad, n'hen tou deoc'h, a lugesme evel gant ur sklêrijenn dezho o-uman... (R. Henna: Mari-Vorzan).

+ + + + +

Kentel 2

LENNADENN DISPLEGET : Ejivorennoù ur brezhonegour, gant F. Vallee, pp. 7-10.

Riv 'oa Frañsez Vallee ? Peseurt labour en deus graet ? Klaskit en Istor al Lennegrezh, §§ 31...

Penn-kef ar Valleez zo bet orfebourien deut eus an Normandi da ober o annez e Breizh-Izel, kent annez an Dispac'h. Dre zimeziou er vro e teujont abred da vezañ Bretoned a ouenn hag a yezh.

Va zad a gomze nat ar brezhoneg. An holl, a du va zad, a gomze brezhoneg evel-tañ. Va zad kozh en doa studiet oberoù an aotrou Gonideg. Va mamm-gozh, genidik eus Molenez, a gave diass klevout digant Tregeriz gerioù gallek a-seurt gant "mouchouer-godell", "boñjour" e-lec'h "dien-fri" ha "denat". Va moereb Fanni, mamm-gozh d'al livour Maïret hoc'h eus gwelet e Sant-Heloni, a gomze nat-mat ar brezhoneg. Daou vreur d'am zad, unan anvet Teodor hag un all anvet Emil, a ouie ivez ar brezhoneg. Ur vrezh-h da Emil, anvet Mari, a oa anezhi ur Vrezhonez vat. Prestet he deus din unan eus ar c'hentañ levrioù brezhonek en eus lennet : Bennad Breizhad gant an Uhel.

A du va mamm, penn-kef an Drevedig a oa gonideg er Genene...  
Va zad a zeuas eus Montroulez da Lohard, parrez Flounevez-Moedeg, e-kichen Benac'h, war-dro ar bloavezh 1858, o tegas gantañ nicherourien, paotred ha merc'hed, eus Montroulez, hag holl e oant Brezhoned vat. Gant-se ne glevet nemet brezhoneg, koulz lavaret, er vilin-baper. Klevet en eus zoken gant ar baperien kalz a c'herioù-nicher na gaver ket war ar geriadur : "ourch" pe "nourch", "gwenn-nevez", "skorf", "taliou", "sevel an taliou", h.a.

Va zad a gare kalz komz brezhoneg ha-klevout komz brezhoneg en-dro dezhañ.

Nemet, o vezañ na oa va mamm a Vreizh-Uhel, na voe oc'h ober war va zro nemet Gall- ezed degaset ganti eus ar vro-se : unan eus Luzel, eben eus Fieo. Pa varvas ar ket ar galleg, ha ganti eo en eus desket un nebeut brezhoneg. Seizh pe eizh vloaz edon neuza. Komz a ras ar brezhoneg glan-tre, pinvidik-neurbet, o tiserannañ er vat. D'ar c'houlz-se ee e kavis un darn eus ar Barzhaz-Breizh e ti va eontr, hag e tesken dre'n eñvor ar pennadoù an boa kavet : Silvestrig h.a.

Un dra en deus pouezet kalz d'am zveñ war-du ar brezhoneg eo klevout kanañ. Evit ober war-dro ar paper en doa va zad savet ul labouradeg merc'hed dindan renadur unan eus ar re a oa deuet gantañ eus Montroulez. Difennet e oa koezal el labouradeg-se, nemet kanañ brezhoneg a raed a-hed an deiz, ha va zad o-unan o alie d'hen ober. Unan eus ar c'hanaouennoù a blije ar muiañ dezhañ a oa ur c'hantik d'ar Wero'hez savet gant Kervarker gwechall. En iliz ivez d'ar c'houlz-se e kaned kalz e brezhoneg.

Pa oan deuet un tammig kreñvoc'h, va mamm en loze da vont er-maez muioc'h hag en em vesken gant bugaligoù a-ziwar dro da c'hoardi bazh-jotu, ar saez, ar vatalin, hag e kleven kalz a vrezhoneg ganto. Evit digeriñ ar c'hoardi, e kemere ar c'hoshañ ac'hanomp un tog, ha pep hini a lakas ur biz e-barzh. He neuze renar ar c'hoardi a droe e viz-yod e-kreiz, evel pa vije bet o veskañ un dra bennak, ha dirak pep hini e tistage ur ger eus ar rimadell da haul :

Rogn, rogn, rogn,  
Kazimus, kazol  
Jozef, Simon,  
Bourbi, Bourbon,  
Kaskale.

An hini a gouezhe warnañ ar ger "kaskale" a veze kaset da vont, hag an hini a chome an diwezhañ gant e viz en tog a veze lakaet dindan.

Ne zeus va zad d'ar ger nemet da vare ar predoù. Da gentañ, ouzh taol, e komze galleg, mes diwezhatoc'h e kemere ar boaz da gomz bepred brezhoneg ouzh ar vugale, hag, evel-se e teskas va breudeur (ha dreist-holl va breur diwezhañ, Olier) ar yezh kalz buanoc'h egedon.

Goulennoù :

- 1) Displegit ar gerioù-mañ : penn-kef, orfebourien, "ober o annez", gonideg, milin-baper, disrannañ.
- 2) Pe ster en deus ar ger "Gallezed" enañ ? Klaskit ster ar gerioù-nicher meneget en destenn.
- 3) Anv zo bet graet eus an Uhel hag eus ar Gonideg. Riv 'eant ?
- 4) Petra a zeskomp digant Vallee war ar gevredigezh na veve enni ?

+ + + + +

Kentel 3

FENNAD-SKRID

"Ar straed pe ar vourc'h a vevit enno da vare an Nedsleg."

Kentañ tra hoc'h eus d'ober eo bevemañ an destenn, en amez (koulz Nedsleg) hag en egor (straed pe vourc'h). Riv lodenn a vo : arvest ar staliou, an dud, - ar staliou : klaskit mennoziou, hag urzhiit anezho. Taolit pled ouzh ar stummoù, ar goulouioù, al livioù, ar sonioù, ar frendoù zoken. Na glaskit ket taol- enniñ an holl staliou. Da betra ? A-walc'h e vo reñf da anaout aergeloù-h ar straed,

ha dibab un toullad stalioù heverk.  
- an dud : piv a vo eno (bugale dreist-holl) ? Petra a reont ? Notit e harpont  
alies e-tal ar stalioù da arvestal outo, pe e skaront kuit, ken yen eo an amzer...  
Marteze a-walc'h e kavot ur steuñv gwelloc'h eget hennezh. Met ma na zeuit ket  
a-benn hoo'h-unan, kemerit ar steuñvenn-se. Goude dastumet ar mennoziou, savit un  
digoradur evel eo dleet. Na rit ket gant frazennoù gwall voutin evel : "Setu deut  
an Nedeleg; emañ o vale..." ! Kavit traoù personelloc'h. Klaskit adal bremañ petra  
a lakaot en ho klozadur.

+ + + + +

Kentel 4

DIBUNADUR : Tonkadur Bugale Usnac'h, dibenn ar pennad, adal "Neuze, Uladiz..."

Dalc'hit soñj etaac'h o vont da zibunat un arroud eus un henzanevell a Iwer-  
zhon. Ne vo ket kentet an darvoudoù e-giz en ur sikrid a-vremañ. Komzit war ho pouez-  
ig, distagit ervat kement ger er frazenn, lakit neurdez ha ton en ho mouezh. Marteze  
e kav deoc'h eo re c'hwezhet holl, danevell ar gad. N'eo ket gevier eo, avat : un  
dalvoudegezh-skouer pe arouezel en deus ar gad e-touez an hengelted-se. En engann en  
em zispak kalon an den. Dalc'hit soñj eus kement-se.

+ + + + +

Kentel 5

LENNADENN RENET : Ur wech e oa... Ur c'hrennard, un diskard, ur soudard,  
gant Taldir, pp. 5-7.

Piv 'oa Taldir ? Pe vare en deus bevot ? Petra en deus skrivet ? Pe obererezh  
en deus bet en emsav brezhon ? Klaskit en Istor al Lennegedh, pp. 32 ha 271.

Mar dichañs d'ar follemoù-mañ bezañ moulet ur wech, mar bez kavet arc'h-nt  
a-walc'h d'hen ober, ar pezh a gontin eus ma roudenn a c'hallfe bezañ ur skouer d'an  
dud yaouank a Vreizh da zont, pa lemmint troioù hag avanturioù ar barzh Taldir-se,  
graet kement a drouz war e anv dija, redet gantañ dija holl vroioù ar Gelted, ha  
deut da beñseañ hiziv en un tamm bourk bihan a Gernev-Uhel...

Setu me 'ta fin d'am studioù e Roazhon. Deut on da chom davet na zud e parrez  
Karnost, en un ti brav, livet gwenn, war blasenn ar bourk, keñver gant an iliz, un  
ti kempenn, dalc'het gant ma mamm, emañ kombodoù bihan evel emañ ar mod gant bour-  
c'hizien Vreizh-Izel : ur gegin, ur sal, ur burev, dispartlet gant un trepas; teir  
c'hambri a bigner dezho gant ur "vifis-tro"; ha d'an nec'h tre, ar solier, div gambrig  
all, a zizoloer dre o frenestrou an holl vourk, hag er poldir, dremmel fromus ha  
gwagenmus tosennoù Kerne.

Direk an ti bourc'hiz, ez eus ur vleufvegenn, gant ur gael houarn dirazi;  
a-drek an ti, ur porzh kloz, kalc'hiet gant karrdioù da lakaat ar c'hoed hag ar yer,  
ar c'hav, ar poull-kannañ a vez graet gant dour glav o tiverañ diouzh ar stivelloù;  
dre un nor groun toullat e noger ar c'harvri ec'h erruer en ur jardin bihan - an  
holl draoù zo bihan emañ - gant e-leizh a vleunioù, diduennant na mamm, un nebeut  
karrezadoù legumaj ordinal, un hanter douenn gwez per, hag er fofis, ur bratellig  
toet gant iliz, lec'h 'eus daou vank evit lemm hag inivreal.

Kalz a vourc'hizien a Vreizh-Izel a anavezo o zi o-unan e poltred hini na zud-ma.  
Er baradozig-se, d'an ampoent na oar-me distro d'ar gêr, e oamp pevar o chon :  
an ozhac'h, ma zud, cadet a 65 vloaz, noter eno abaoe tost da dregont vloaz; an  
itron, ma mamm, na zielezas gwech ebet he dilhad glaz Treger, gant he c'hoef gwenn

a veze graet "kallegenn" anezhañ, he chal pe mouchouer di, he zavañjer dantelezh;  
ur vatezh yaouank anvet Maïanna Touboullig; ha me, ar nab pennher, a oa ma zad o  
figiout warnon da generout e garg noter, pa'n bije graet tri bloaz deskoni gantañ.  
Me a oa ganet eno d'ar 15 a viz Meurzh 1879. Ma faeron Fransou Keromen a fell-  
as dezhañ e vijen anvet Fransou eveltañ. Ma mamm a fellas dezhi e vija lakaat Jozeb  
lev eus e anv badeziat peogwir ma zrivet anv bihan zo Kloda, ha dreist an tri,  
hini ar Wero'hez Vard, 'vel ma oa ar c'hiz neuze, Jan-Mari, Fransou-Mari, Louis-  
Mari, Per-Mari.

Evel na oa kozh-mat na mamm p'he doa bet ac'hanon e oan fiziet da vezhur en  
ur gemenerezh gwreg d'un houarnner kozeg Leou Skourvil e anv, se zo kaer ne vije graet  
nemet Jann Leou anezhi. Ma breur-mager a veze graet Jozeb anezhañ; bet omp savet  
asamblez, ha dalc'het d'ar c'hoed eil gant egile; Jozeb zo bremañ keginer en un  
ostaleri e Paris.

Ma zad ha ma mamm a oa Bretoned diwar ar maez o-daou, bourc'hizet a nevez oa.  
Eñ a oa ganet e Kefero'h, parrez Skirignag; hi nepell ac'hano, en Hellegoet, parrez  
Bolazeg. Pep a damm leve o devoa, rak a-viskoazh o zud-kozh eus an eil tu hag egile  
a oa bet perc'hennet, da lavarout eo ne oant ket merourien.

Kent digerñ an noc war na buhez ma-unan, un taol lagad war hini na zud-kozh  
a c'hallfe talvezout da zisklêriañ ar perag hag an abalamour eus na blieniadur hag  
eus ma zro-spered...

Goulennoù :

- 1) Displegañ ar gerioù-mañ : dichañs, roudenn, kombodoù, tosennoù, pratellig, deskoni, nezhur, "ar perag hag an abalamour eus".
- 2) Ha reizh-reizh eo al lavarenn : "peogwir ma zrivet anv bihan zo..." ?
- 3) Ha heñvel eo an eñvorennoù-mañ ouz ar Vallée ? Keñverdit an ton.
- 4) Pe dalvoudegezh reiñ da seurt eñvorennoù, d'ho menno ? Ha dud a gavit enno ? Perak ?

+ + + + +

Kentel 6

SKRIVAENN

Grit evel dalc'hmatt, ha respontit d'ar goulennoù.

+ + + + +

Kentel 7

LENNADENN DISPLEGET : Ar c'han a gane Maggi, gant Taldir.

War ur menez, pell eus na bro,  
Hep kar war-dro, nag ur mignon,  
Ec'h azezis evit soñjal  
En traoù gwechall, don en c'halon.  
Ha pa baoueze an avel  
Gant he c'hwitell da hirvoudiñ  
Ma 'gleve c'hoazh en eñvor gwan  
Trouz ar c'han a gane Maggi.

Ur wech ec'h is da Vro-Geumri  
'Lec'h oa Maggi o telennañ !  
Azaset dirak he zellenn,  
He hizied c'h'nek o kronañ,  
Ouzh un doueez oa heñv l  
Pe ouzh un ael dous o pedañ;  
Ne glevs biskoazh un ken kran  
Hag ar c'han a gane Maggi.

O deus eta, aezhemig sklaer  
A red en aer 'us d'ar barrez,  
Da zegas c'hoazh d'am skouarn paour  
Mouezh kleier-our ar generezh !  
Degas a ri din soñj neuze  
Eus an eur-se e Bro-Geumri  
Pa even an noternoù glan  
Eus ar c'han a gane Maggi.

Mour a blac'h yaouank 'n eus klevet  
Dre an hollved o telennañ  
Mas hini ane'e n'oa ken drant  
Ha Maggi goant, hi ar wellañ.  
O selaou he mouezh dous ha pur  
'M boa plijadur, joa ha dud.  
Heklev ur baradoz distan  
Oa c'han a gane Maggi.

Fa vez glac'haret ma c'halon  
Me 'soñj e ton mero'h Ilenover  
Pa c'hoardie gant he zellenn  
War he barlenn gwerziñ Gomer.  
Hag en eus esper e teulo  
Deiz na marv ar gwennili  
Da dourontal 'us d'an fenn gwan  
Boud ar c'han a gane Maggi.

#### Goulennoù :

- 1) Displegañ ar gerioù-mañ : telennañ, hollved, drant, "ur baradoz distan", esper.
- 2) Pennas e komprenit "un ken kran Hag ar c'han..." ? Petra eo Bro-Geumri ?
- 3) Studiañ gwerzaouerezh ar varzhoneg-se (mouezhiadennoù, klotennoù...)
- 4) Petra 'lak kalon ar barzh da drivliañ ? Peseurt trivliadoù o deus awenet ar pezh-barzhoniezh-se ?

+ + + + +

SEITEKVET SIZHUNVEZH  
=====

Kontal 1

#### YEZHANUR

Studiañ ar perc'hennañ, §§ 430-436.

#### Poelladenn :

- 1) Roit stummoù ar perc'hennañ en eil gour unan e pep a frazenn.
- 2) Petra a reer pa vanner pouezañ war ar berc'henniezh ? Skouerioù.
- 3) Pennas merkañ ar berc'henniezh hep ober gant adanv-perc'hennañ ebet ? Pegoalz e reer evel-se ? Skouerioù.
- 4) Petra eo ar raganvioù-perc'hennañ e brezhoneg ?

+ + + + +

Kontal 2

LENNADENN PENET : C'hoar Soudard Kiberen, 4<sup>e</sup> arvest, 6<sup>t</sup> diviz, gant Y. ar Go.

(Amzer an Dispac'h gall bepred, tost d'an Alre, en ur c'hamp na fuzuilher ar brizonidi tapet e Kiberen.)

KORNELI - Evit an eil gwech e tleas deoc'h anaoudegezh-vat, kabiten. Kouezet eo ar gwalleur war va gouenn hag e santan ervat e truzet warni en ho kalon. Hiziv he devo kollet va mamm he daou vugel, va c'hoar Aliz ha me.

Diskiant on bet o vont d'ar gêr da gmiadif diouzh va mamm, ur gozhiadez santel anezhi, diouzh va c'hoar garet Aliz ha diouzh va danvez pried Enora, an hini a rae levenez va c'halon. Perak 'ta eo bet falvezet ganin o gwelout a-barzh nerval ? A ! ma karjen bezañ korzhet da dachenn al lazhadeg war-eeun e-lec'h bezañ aet d'o c'havout, ne vijen ket bet enkrezet diwar-benn va c'hoar a vije chomet da wareziñ va mamm hag Enora gaezh ha d'o c'hemmerzhañ.

AR C'HABITEN - Ha penaos he deus gouezet ho c'hoar e oac'h bet prizoniet war-lerc'h emgann Kiberen hag edoc'h war var da vezañ fuzuilhet ?

KORNELI - P'an em gavis ar gêr, gleb-tail va dilhad soudard da heul ar barradoù glav a oa bet a-hed an hent, va c'hoar o gouennas diganin da lakaat da seo'hiñ a-korn an oaled er gegin. Er godelloù e kavas va faperioù, an boa ankouast enno, en o zouez an tremen-hent ho poa roet din.

Ur plac'h a benn eo Aliz ha, daoust d'ar glac'har kriz a reas dezhi he c'havadenn, ne reas nep van dirak re an ti. Goude koad, pa voe kaset va mamm d'he gwela, e kinnigas d. Enora ha din bep a varne tizan a sozas deomp hec'h-unan er gegin.

D'an mano e lakaas louzob-kousket en evaj ha setu ar pezh an zaolas en ur mored fon ha pouner, raktal goude bezañ aet da ziskuilhañ d'am c'hambr. Pa zeuas va mevel d'am diunif, e oa aet kuit va c'hoar gant va gwiskennet soudard hag al loen kezeg an boa pignet en dorc'hent, evit ober an hent. Graet he doa ar memoz d'am savetefañ ha da vervel evidon, evit va mirout d'hor mamm ha d'an danvez pried.

O welout hec'h enrolistet hag ar garentez a vege en c'hañver, e voe darbet din sempleañ hag ur more'hed divent a veuzas va ene. Gant ar brasañ mall e teredis d'ho kemp, spi ennon da gavout va c'hoar gaezh yac'h ha salv, a-barzh na vije kaset da vervel em lec'h.

Siwazh, nag anaoudek e vefen ouzh Doue m'en deus miret he buhez dezhi ha na lacuen e vefen o vont da gouzhañ dindan an temoù, m'he gwelfen e-rack mervel.

AR C'HABITEN - Serjant Gwehenno, didrugar e vefen ma chomfen hep kemerout perzh en ho rann-galon. E gwirionez, ur c'houronez eo ho c'hoar ha dellezek a bep neuleudi. Allas ! daoust ha na karfen ho frealziñ, ne gredan lakaat nep filziñs da ziwanañ emnoc'h diwar he fenn.

KORNELI - War o zu fall e welan an traoù, ne ivez, gant ar vrasañ levenez e varvin va-unan na plijfe gant Doue he gwareziñ en degouezh spontus-mañ.

(Digeriñ a ra an nor hag ez a ar serjant, distroet eus e gefridi, war-du ar c'habiten.)

Goulennoù :

- 1) Krennañ an istor e 5 linenn.
- 2) Displegañ ar gerioù-mañ : anaoudegezh-vat, danvez pried, falvezet, lazhadeg, kennerzhañ, mored, emrollsted, didrugar, gouronez.
- 3) Perak e fell d'ar c'hoar mervel-e-lec'h Korneli ? Peseurt plac'h eo-hi ?
- 4) Petra a soñj Korneli eus enaberzh e c'hoar ?

+ + + + +

Kentel 3

FENNAD-SKRID

Elskrivit testenn ho poelladenn. Dielfennit anezhi, evel dalc'hmatt. Neuze, krogit da glask penn eus ar mennoziou a savot ar pennad diwarno. Klankit anezho ez aketus. Kerkent ha ma ho po dibabet un nebeut mennoziou, tresit pemlinennoù an digoredur, ha klaskit an doare da glouañ an tenn skrid-se. En deiziou a zeu ho po goar da astenn roll ar mennoziou ha da boursevel ar steuñv. Anat eo ne zeu ket an holl vennoziou en un taol.

+ + + + +

Kentel 4

LENNADENN DISPLEGET : Ar Person Touar, devezh kentañ, 7<sup>t</sup> diviz, pp. 42-43, gant Yeun ar Go.

Eneur en amzer an Dispac'h gall, e parrez Goezeg. Tec'het eo ar c'hure dre na n'houle ket touiñ lealded d'an "nasion". Emañ ar person o paouez diskuliañ d'ar c'habiten pelloc'h edo kuzhet.

(Ar soudard, e fuzuilh gantañ war e skoaz, a ya hag a zeu dre ar sal.

Ar person, abafet ha doaniet-bras, zo set da azezañ war e gador-vrec'hak, e benn etre e zaouarn.)

AR PERSON (goude bezañ bet pell dilavar hag evel o tihuniñ eus ur c'houk poumer.)

En c'hlopenn foll ha diaezet  
E krosk an enkreiz kenaf-ken,  
Ha ma c'horf dister ha faezhet  
A gren dindan ur c'hwemenn yen.

Emañ e-kreiz ar sabatur,  
Ur moustrerig ouzh na gwaskañ.  
Ha poarhoù karz ha dinatur  
'Vo ret bepred din diwaskañ ?

(Beuzet en e soñjoù, e tav adarre da gonz.)

Buzhusat tonkad da vevañ !  
Un heskin ifenn eo zoken !  
Met eus ar vestl em boa d'evañ  
Ne chom, 'richañs, nep berad ken.

Allas ! ar fallañ lomm c'hwery  
An bo pizh-rac'h, da skarzhañ c'hoazh,  
'Vo ken gwirdias ha dour berv  
Hag a lesko ma gouli noazh.

Bremaik, pa zeu ar C'hallaoued  
En-dro d'ar ze 'm eus gwerzhet  
D'eo stlejañ ganto d'ar gaoued,  
En abeg d'ar pezh 'zo berzet,  
Ha da c'houzañv marv kalet,  
'Tre daouarn ruz al lazher tud,  
Kalz spontusoc'h 'vin-ne chalset  
O peurlonkañ an evaj jut.

Ur c'hontamm diaoulek da nannañ  
Da viken brud ur person plouz  
Ha gant ar vallozh da semañ  
An efvor eus e ene lous.

Teod wiber ma c'harabasenn,  
War-zu un islonk leun a euzh,  
En deus ma sparlet er gasenn  
An spouren mantrus hag an beuz.

Konz ouzhoc'h, Gaid, eo din-me ret.

(Sevel a ra da vont d'an nor, met, kerkent, e teu ar soudard da vevout outañ d'he digeriñ, en ur c'hourdrouz skeiñ gant e vaiontezh.)

AR SOUDARD

Hargit, mar plij ! Pelloc'h ned eoc'h  
Pe ar broch dir-mañ war ho led  
Ho taolo prin; gwazh a se deoc'h.

AR PERSON (o tivoxillañ)

Ma Doue ! Riv eo an amjestr  
A zo 'n em gavet d'ober nestr  
E-barzh ma zi, enep pep gwir,  
Dre nerzh didrec'h e laonenn zir ?

Ya ! soñj am eus, urzh an deus bet  
D'am diwall anañ gant evezh.  
Ouzh na matezh, 'velkent, eo ret  
Din konz diouzhtu. Pebezh devez' !

Goulennoù :

- 1) Displegañ ar gerioù-mañ : abafet, faezhet, sabatur, moustrerig, bestl, pizh-rac'h, kasenn, spouren, amjestr.

- 2) Displegit tro-spered ar person : peseurt den eo ? E piv hag e petra e soñj dreist-holl ? Ha keuz en deus da vezañ gwerzhet e genseurt ?
- 3) Petra lavarout diwar-benn ar yezh Implijet gant ar person ?

+ + + + +

Kentel 5

DIBUNADUR : Ar Person Touer, pevar foz kentañ.

Na ankouait ket emañ ar person o komz outañ e-unan. Gwerzhet en deus e gure. Mezh en deus, ha ne oar ket ken petra ober. Pouezet war bep ger, evel eo dleet : evel foll eo ar person, ha pep poz hen distkouez ("enkreiz", "faezhet" h.a.). Evel klav eo ivez ("c'hwesenn yen", "pennloù kliz"). Klenn a ra. Leicit kement-se a-wel en ho tibunadur.

Santout a rit amichañs ez eo pounner, un disterig, displegerez ar person. Garvder ar yezh ha pounnerded ar skoudernoù a ziskouez splann emañ ar person en ur gwall gudem. Merkit ivez helavarded ha "ton" ar gwerznoù-se.

+ + + + +

Kentel 6

SKRIVADENN

Grit gant testenn ar sizhun, ha respontit d'ar goulennoù.

+ + + + +

Kentel 7

GERIAJUR

Studiañ ar gerioù deveret, §§ 829-834.

Poelladenn :

- 1) Pennas implijout "noz", "nozvezh", "nozvezhiad" ? Roit ur skouer eus pep implij en ur frazenn.
- 2) Petra 'verk an dibenn -AD er gerioù-mañ : loziad, kilometr, Kernevad, doueal, skouarnad, friad, kalonad, reuziad ?
- 3) Petra 'verk an dibenn -AN ? Teir skouer.
- 4) Peseurt diforc'h zo etre "lenn" ha "lennour", pe "brezhoneger" ha "brezhonagour" ? Roit skouerioù all. Ha graet 'vez dalc'hmata an diforc'h-se ? Skouerioù.
- 5) Petra 'dalv an dibenn -ELL ? Roit pemp skouer. Pe reizh zo gant ar gerioù-se ?

+ + + + +

EITEKIVET SILZHUNVEZH  
=====

Kentel 1

YEZHADUR

- 1) Petra eo ur benrlavarenn ? Hag un islavarenn ? Roit div skouer eus pep hini. Petra eo ger diazev ul lavarenn ? Hag-oc'h e vo dalc'hmata evel-se ?
- 2) Klaskit teir skouer a lavarenoù diglok.
- 3) Dielfennit al lavarenoù en arrouden-mañ eus C'hoar Soudard Kiberan, p. 85: "P'en en gavis er ger..." betek "... en tremen-hent ho peo ruet din."

+ + + + +

Kentel 2

LENNADENN DISELEGET : Ar Gêr Willizet, gant Youn ar Go.

E-harz tor ar menez, e gwasked an derv, edo al logell sioul, en he c'hreiz un daolig dopes gant ur nell levr digor warni. War al levr-zid douar e-tal an daolig, e oa daoulinet al lean, astennet e zivrec'h gantañ, ovel re ar C'hrist ouz ar gwez. Yeouank e oa ha neudlet-kraer, e zramm flamm ha klav o parañ warni dianteged ur galon eun ha glan ha laouenedigezh un ene divrall ha leun a beoc'h. E wiskamant dister, oc'h aroueziañ e fae war bompadoù ar bed, a zouge gant kement a aezamant hag un aotroù pinvidik e zilhad kran, o lakat anat e oa a ouenn uhel. Hag e benn a seblante grommet gant skleure c'helc'hig gwelvus, dispis ar vevn anezhañ.

Ma ne save nep pedenn e lavar boas nab-den eus e zivrec'h difliv ha mut, e kane, en e greiz, hiboud flour yezh e galon. Troet d'an nec'h ha bras digor, oc'h arveste e zaoulagad sklaer, gant estlann ha dudi, ouz ur weledigezh dreist-natur a gilhe e ene hag e gorf gant he c'hevren sebetus. Goursavet e spered d'an neñv, e tañvas lev-enez divent hag ohristed hep ho far ar rouantelezh vuzhodus grataet gant Doue d'ar re eun a galon ha paour a-zarvez, ha ne vele na ne gleve, ar-dre dezhañ, nep tra na trouz eus an douar.

Pa zeuas tre el logell kaginer ar roue, ne fivas na ne flachas al lean, beuz- et bepred e skiant gant ar weledigezh ken trellus ha dic'houzvez krenn e oa un den dirazañ. Meur a wech e tleas heññ komz a-barzh ober dezhañ divorfilañ ha distreiñ emañ e-unan, kerseet neurbet d'ar marnz a vema e ene mezevellet hag e barr an etru-usted.

Kentañ komzoù a lavaras a voe da c'helver bennozh Doue war an diavaeziad ha da c'houlenn outañ petra edo o klask a genent e vije gouset ur manac'h peour da reiñ. "Kalg anaoudegezh a dlefen deoc'h," eme an den, "ma rofec'h din un nebeut ludu-broud da enaouñ an tan da boazhat o fred d'ar roue Gralon, ma nestr ha d'e goskor en em gavet emañ goude bezañ bet oc'h henolo'hiañ. Kollet en eus, da heul na jav, spontet ha tec'het kuit, kement an boe degaset evit aozañ ur pred a-zoare hag e lakat da boazhat. Loened gouez o deus lazhet, ha gant o c'hig e c'hellfen terriñ o naon, hogen dibourvez ez on a dan da zarevñ ar maiz ha setu n'ho pedan da sevenañ va goulen, ma'z eo en ho kalloud hen ober."

- War a welan, na den mat," a respontas ar manac'h, "ez oc'h gwall ziaezet gant ar c'holl a gav d'ho nestr ez oc'h kablus anezhañ ha war-gren eus ar c'hastiz a c'hed-it digantañ. Alies e vez kalet ha didruet ar vistri, rouaned pe sujidi, ouz o ser- vijerien tanallet ganto, hep abeg, da vezañ gnet goep outo. Gousout 'ouzon, avat, ned oc'h ket kiriek e tec'has ho jav gant e sum hr, rak-se, her c'havoc'h bremaik, dre c'hras Doue, tost d'an logell e-lec'h na teuv, a-rak en noz, da glask gwarez

diouzh ar bleizi... A-hend-all, kemerit an etev bev an eus kafunet el ludu war an oal-  
ed hag enaouit gantañ tan da fardañ o c'hoan d'ho mestr ha d'e dud.

"Diouzh ma zu, ez an da betiñ donedigezh vat d'ar roue ha d'en an lakaat, gant  
doujañs, en e c'houre'hemenn. Eñ eo, er rouantelezh, dileuridi Doue d'hor gouarn er-  
vat, d'hon difenn diouzh an enebourien ha da lakaat an urzh vat hag ar pecc'h da ren  
stre e sujidi."

Hag ez eas er-maez, etrenek ar roue a oa o paouez degouezhout dirak al logell,  
gant e goskor hag e servijerien. Ur stouadenn a eure dirazañ gant elevez hag e savas  
e zom d'e venngañ; en ur lavarout : "Plijet gant Doue, priñs galloudus, skuilhañ  
warnoc'h, ho tierned hag hoc'h uhelidi all, E vennozh hag E gasañ grasoù, evit bras-  
añ mad ar feiz hag hini ar rouantelezh a zo fiziet ennoc'h ! Setu ar pezh a c'houlenn  
outañ, a-greiz kalon, al lean paour Kaourintin, ho servijer."

Goulennoù :

- 1) Displegañ ar gerioù-mañ : dopes, parañ, diantegedh, "pompadoù ar bed",  
gwalevus, mezevellet, "darevili ar meuz", "war-gren eus", dileuridi, elevez.
- 2) Petra eo ster al lavarenn : "kerseet meurbet d'ar marzh a voeme e one" ?  
Roit teir gerioenn heñvelster gant "etrennek".
- 3) Pevare e tremen an istor ? Ha pelec'h ? Pevare her gouzer ?
- 4) O tibab un nebeut skouerioù resis, diskouezit penaos e klot ar yezh (lusk,  
pinvidigezh ar geriaoueg h.a.) gant meurdez an danevell.

+ + + + +

Kentel 3

PENNAD-SKRID

Adkemerit notemoù ar sizhun dremenet. Mar deu memmozhioù all d'ho spered, notit  
anezho, ha klenkit an holl e-raok kregiñ gant ar sevel skrid. Pa vo bet savet, divan-  
kit anezhañ, adsevit fragemoù pe rambennadoù a-bezh mar bez ret. N'eus nemet en  
doare-se e rest araokademoù war ar yezh hag ar sevel skridoù.

Diouzh ho poellademoù reizhet, klastit gwelout ho nankoù hag o sioù, ha taolit  
pled outo eta !

Aaskrivit ar pennad-skrid. Lakit evezh war ar reizhskrivadur.

+ + + + +

Kentel 4

PENNADENN DISPLEGET : Chomet e oa ar vazh e toull an nor, gant Yeun ar Go.

Pa zimezas Mari Toulleg da Joz David, an eil eus o faotred, e oa fouge e Chann  
Gwifvarc'h hag e Youenn, he gwaz. Ur fortun vat a rae Joz, rak war a lavared, ouzh-  
penn n'he devoa Mari un tammig mat a argourou, e oa ul labourerez hag ur plac'h gouest  
koulz er-maez ha war-dro an ti. Ur wreg a-zoare a raje hep nar, mat da ren pep tra ha  
da gas an traoù en-dro, war-seun ar pezh a zerec ouzh Joz, ur paotr a boagn ha kalon-  
ek, ma oa unan, hogen poummerik a spered ha divarrek, noarvat, d'ober ur mestr mat e  
penn un atent.

Doast ma ne oant ket c'hoazh re gozh holl, pa n'edo ken ar wreg gant he zri-  
ugent vloaz hag an ozhac'h o kasout nemet daou pe dri bloaz maoc'h egeti, o devoa  
Chann ha Youenn o memnoz da zispagañ diouzh o danvez. Perc'henn e oant d'un atent vat  
a zao-ugent devezh-aret, e Kêrgroaz, hag o stal-diegezh, loened ha benviji, a dal-

veze ivez un tamm brav a arc'hant. O soñj a oa reiñ an douar, stal-diegezh hag all,  
d'eo mab Joz a savje o danvez en arc'hant d'e dri breur. Deziñ, a gredent, e oa dleet  
d'an oad a drizek vloaz. Evit gwir, e amzer-soudard, e-pad trizec'h miz, a rankas  
ober er Marok, "e kas-da-blantañ, gant ar re zu", evel na lavare Youenn, hag e-keit-  
e oa ast da zeskidi ur vicher, ha n'eo ket añ a zeuje da zerc'hel an douar. Yann, ar  
c'hoshañ, a oa fortuniet abred hag ast d'ur barrez all, e-lec'h ma kavas un atent  
diouzh e zoare. Hemañ, kennebeut, ne vije ket goubet kement-se da zont da Kêrgroaz.  
A-hend-all, n'eo ket Tin, ar pevere, trizec'h vloaz dezhañ hepken, a c'hellje soñjal  
e vije lakaet Kêrgroaz war e anv, rak ne lakaer ket un den ken yaouank e penn un  
tiegezh. Gant an danvez a savje Joz dezhañ ez aje da glask e c'hafis da lec'h all.

A-viskoazh he devoa graet Chann Gwifvarc'h he Mari-Bragoù e Kêrgroaz. Hi eo a  
oa mestr ha Youenn, oc'h anavez e oa ampartoc'h egetañ, he laoske da c'houre'hemenn ha  
da ren pep tra, hervez he soñj, hag a sente outi war gement tachenn. Gouezet he devoa  
tennañ o mad eus an douar, paeañ an dle ha degas neur a wellaenn war an atent.

Diouzh he zu e ouie Chann e teuje buan he mab Joz, gant skoazell ur wreg evel  
Mari Toulleg, d'en em sevel e Kêrgroaz. Dam eus danvez ar vugale all a vije paeet  
gant arc'hant houmañ hag ar peurrest savet da c'houde, a-nebeutoù, dre ma vije aas  
d'an daou bried yaouank.

Er penn kentañ eus hec'h amzer, e oa bet ret da Chann bezañ kempenn war he nour-  
eiz ha mont pizh gant he hent. Evid arboell komanant ur vatezh, e rae hec'h-unan holl  
labour an ti, ar pezh na vire ket outi da vont alies d'ar park da reiñ dom d'he gwaz  
ha d'ur nevel. Pa oa bihan ar vugale, o vevañ n'he devoa den da evezhiañ outo er gêr,  
o c'hase d'he heul, bep sul d'an ofereñn-bred, e-barzh ar charbañ. War bep a gador  
e lakae ar re goshañ da azezañ en-dro dezhi, endra ma talc'he an hini bihanañ war he  
barlenn hag e roe bronñ dezhañ hep mezh, e-kreiz an iliz, pa c'hoarveze gantañ gouel-  
añ. Ne gave morse anzer da gemerout un tammig didu ha, goude bezañ trevellet e-doug  
an deiz da c'horio ar buoc'hed, da voueta al loened, da azezañ ar predoù, e ranke  
c'hoazh, diouzh an noz, peñselañ ha takonañ dilhad he gwaz hag he vugale.

A dra sur, e-skoaz hi hec'h-unan, ar vourledenn gouzorn ha fremet mat, e tenne  
Mari Toulleg, ar plac'h giz Kastallin, d'ur verc'hodenn goant ha d'un dimezell mistr  
he dangreiz. Met kement-se ne vems ket re p'he devoa peadra ha pa oa anavezet evit  
bezañ ul labourerez dispar hag ur vaouez e pep kañver. "Gant houmezh," a lavare  
Chann outi hec'h-unan, "ne chomo ket luget Joz da gas e stal en-dro !"

Goulennoù :

- 1) Displegañ ar gerioù-mañ : "ur fortun vat", argourou, stal-diegezh, "he  
Mari-Bragoù", goubet, gwellaenn: "arboell komanant ur vatezh", "trevellet", kouzorn,  
luget.
- 2) Pe ster en deus ar ger "tiegezh" enañ ? Pevare e vez implijet ar verb "sevel"  
en destenn ? Perak al liester "benviji" ?
- 3) Petra a zisker diwar-benn Chann Gwifvarc'h hag he gwaz ? (o zenz-spered, o  
doare da vevañ)

+ + + + +

Kentel 5

GERIADUR

Studiañ ar gerioù deveret, §§ 836-841 ha 854.

Foelladenn :

- 1) Displegañ sturmidigezh ar gerioù-mañ : kistinid, beuzid, lec'hid.
- 2) Peseurt diforc'h zo etre an dibennoù -ED ha -ER ? Roit peder skouer eus pep hini, en ur frazenn bep tro. Pe reizh zo gant an anvioù-se ?
- 3) Displegañ ster an dibenn er gerioù-mañ : defotachoù, garzajoù, glizhaj, restachoù, avelaj.
- 4) Petra 'daly an dibenn -MA ? Roit pemp skouer eus e implij. Gant peseurt dibennoù damheñvel e reer c'hoazh ? Skouerioù.

+ + + + +

Kentel 6SKRIVADENN

Grit evel kustum, ha respontit d'ar goulennoù.

+ + + + +

Kentel 7LENNADENN RENET : Tonkadur Buzale Usnac'h.

## MARV BUGALE USNAC'H

O welout se, ez eas Konor da gaout Katba an drouiz.

"Katba," emezañ, "taol war bugale Usnac'h ur breou drouizel bennak. Rak emaint o vont da ziskar ha da zistrujañ bro Ulad. Va ger a roan dit na rin droug ebet dezho, gant ma vennint en em glevout ganin."

Katba a gredas ar pezh a lavare. Strobinnellet e voe gantañ mibien Usnac'h. Ur mor gludek a c'halvas en-dro dezho, na edont evel tud o neuial er prad, ha Noise o tougen Deirdre war e skoaz gant aon na vije beuzet. War-hed daou droadad en a-dreñv edo Uladiz ouzh o hegañ, hep kredañ mont re dost, betek na kouezhas o armoù diouzh daouarn mibien Usnac'h. Kroget e voe emmo neuze. Konor a c'houc'hemennas d'e gadourien o lachañ. Hini, avat, ne sentas. Pep unan a oa bet gwechall e gwazoniezh ha goyr Noise.

Ur gwaz a oa eno, Maine Dom Ruz, mab rous Loc'hlaime. Ha lazhet oa bet e dad hag e zaou vreur gant Noise. Leouen e vije, emezañ, da droc'hañ pennoù mibien Usnac'h, evit en em zic'haouañ.

"Ra varvin ar c'hentañ," eme Ardant, "me ar yaouankañ, na ne welin ket marv va breudeur."

"Nann," eme Andle, "din da verzvel ar c'hentañ."

"Naren," eme Noise. "Ur c'hleze zo ganin, an eus bet digant Mananenn mab Idir, ha neb a zo tizhet gantañ a varv diouzh ar c'hentañ taol. Ra vo stlapet ouzimp a-gevret, ha ne wellimp ket ar re all o verzvel."

"Mat eo," eme an holl. "Astennit ho pennoù a-gevret."

Hag ez astennas an tri brezelour mat-se o femoù a-gevret war an hevelep pill-tos. Maine o zroc'has en un taol gant kleze hud Mananenn. Ha teir leñvadenn a gafiv a zeus gant gwazed Ulad.

Deirdre a voe degaset d'ar rous, erret he daouarn a-dreñv d'he c'heñ.

## MARV DEIRDRE

Ur bloavezh e chomas e-tal Konor. Hag e-pad an holl amzer-se, ne voe ket gwal-

et a vouse'hoarzh war he diweuz; ne zebras ha ne gouskas ket he gwalc'h, ha ne savas ket he fenn a-ziwar he berlenn. Pa zeus farouelled d'he diduellañ, e lavare :

- Daoust pegen brav d'ho taoulagad  
Ar vrezelourien en Enain,  
Bravoc'h c'hoazh oa gwelout gwechall  
Mibien Usnac'h dirak o zi.

- Noise, gant neuz kraoñkelvez flour  
A walc'hen e-kichen an tan,  
Ardant, gant hoc'h pe karv saourek,  
Andle gant keunseù war e gain.

"Daoust pegen c'hwec'haoc'h an dourvel  
A ev mab Ness ar randaolour,  
C'hwec'haoc'h e oa ar magadur  
A roe din Noise war ar ribl.

"Daoust pegen flour da skouarn ar rous  
Ar fleitoh hag ar c'horroù-boud,  
Flouroc'h kent gwech en Alba gaer  
E oa din mouezh mibien Usnac'h.

"Son un houllenn, mouezh vout Noise,  
Ur vouezh da selaou da viken,  
Ha mat e oa mouezh krenn Ardant,  
Ha mat e oa mouezh skiltir Andle.

"A spered karet, start ha reizh,  
Brezelour bras, karet, dilorc'h.  
Koad Fal, goude treuzet gansomp,  
Enziviz laouen, beure mat.

"Lagad karet gant ar nero'had,  
Lagad garv d'en enebourien,  
Goude tro ar c'hoad, bodad hael,  
Mouezh karet dre an noz teñval.

"Ne gouskan mui, na noz na deiz,  
Hep moue e van va ivinoh,  
Va spered a lamm er pellder,  
Ne zebran mui, ne c'hoarzhant mui.

"N'en eus na peoc'h na levenez  
En uhelvodad tud Enain,  
N'en eus na dud na diskuizh,  
Na ti brav, na kinklerezh kaer.

"Daoust pegen brav..."

Pa glaeke Konor he habaskaat, e lavare :

"A Konor, petra 'glaskeze c'hoazh ?  
Enkreze ha doan ac'h eus graet din,  
Endra vevin n'en bezo ket  
Nemeur a garantez ouzhit."

"An den bravañ dindan an oabl,  
Hennezh a garen ar miziañ,  
E lamet ac'h eus diganin,  
Ken na varvin, n'e welin mui.

"Divjed limestra, diweuz ruz,  
Malvennoù du evel ar c'hmil,  
Dent e-giz perlez, liv an arc'h,  
Kribenn du war ur c'horf gwenn-kann.

"Anavezet mat oa garin,  
E-kreiz Albaniz, e zilhad,  
E vantell vouk er vodadeg,  
Hag e gwirionn vroudet aour ruz.

"E doneg satin, teñzor bras,  
Kant dorn aet emni, niver c'hwek,  
Evit he broudañ, anat eo,  
Hanter-kant onsad kouevr melen.

"Ur c'hleze gant un dormell aour,  
Daou spig efreizhus o begoù,  
Ur skoed e vevonn aour melen,  
Hag ur bos arc'hent en e greiz.

"Na dorr ket hisiv va c'halon,  
Hep dale pell e vin em bez,  
Krefhoc'h an doan eget an doan,  
A Gonor, hen anaout a rez ?

"A Gonor...

"Piv a gasaez-te ar muiañ eus ar re a welez ?" eme Gonor.

"Te, hep arvar," emezi, "ha Maine Dorn Ruz."

"Ur bloavezh e chomi eta e ti Maine," eme Gonor.

Ret e voe da Vaine. Antronoz ez ejont d'ar bodad e Tamair. Edo-hi er c'harr  
a-dreñv Maine. Ha gouestilet he doa chom hep kacut daou ozhac'h war un dro endra  
vevje.

"Ma, Dairdre," eme Gonor, "heñval out ouzh un dañvadeg etre daou dourz, me ha  
Maine."

Dirazi e oa ur roc'hell vras. En em strinkañ a reas ouzh ar roc'hell, ma tar-  
zhas he fenn ha ma varvas.

Tonkadur bugale Usnac'h betek amañ.

Goulennoù :

1) Displegañ ar gerioù-mañ : strobinnellet, gwazoniezh, en em zic'haouiñ, pil-  
tos, mez, rendaselour, uhelvodad, toneg, spig, efreizhus.

2) Petore skeudenoù a ziskouez karantez Dairdre ouzhi Noize ?

3) Petore spered he deus Dairdre ?

+ + + + + + + + +

NAONTEKVEZET SIZHUNVEZH  
=====

Kentel 1

YEZHADUR

Studiañ en ho Levri ar rener hag an doareenn, §§ 708-717.

Poelladenn :

1) Lakaat ar rener el lec'h a zere :

Er bloaz tremenet en doa labourer kalz (va zad).

Neuze o devoe stlapet mein outañ (an dud).

Ne c'hounez ket kalz arc'hant peurliesañ (ur micherour).

P'en devo kousket e-pad un devezh a-bezh (ar c'hlañvour)...

Dec'h he doa lavaret se din (va c'hoar).

Ne oar nemet ur yezh hepken (an darn vuiañ eus an dud).

Ne lavar ket atav ar pezh a soñj (un den).

2) Savit eizh lavarenn a vo enno da zoarenoù : un adarz, pe un anv, pe ur  
verbanv, pe ur verb.

3) Displegañ lec'h an doareenn er skouerioù-mañ :

Sot ne oa ket ! - Spontus e oa yen ! - Brav eo deut ganit ! - N'eo ket bras a-walc'h  
an daol - Eñrus e oa an holl, met ar vugale a oa skañv - Aet eo da soudard.

4) Pet seurt doareenn a zo ? Roit ur skouer eus pep hini.

+ + + + + + + + +

Kentel 2

IENNADENN DISPLEGET : Iemenik, gant Erwan Berthou (Kaledvoulc'h), p. 30.

Piv 'oa Erwan Berthou ? Klaskit titour en Istor al Lemnezh, § 28.

STOURMOU HA PAURENNEZ BEPRED

Setu tro an dienez hag ar baourentez ruz. Koulskoude e spered hag e galon a  
gavas raktal peoc'h ha levenez.

Meur a wech abaoe ez eus deut da soñj dezhañ e oa bet kinniget dezhañ, e Bro-  
C'hall, stadoù eus ar re wallañ, hag en devoa nac'het o degemer dre c'hoant da chom  
e Breizh. Erru e oa an eur da baeañ e garantez-vro.

Gwall skañv e oa e yalc'h. E dud a oa bremañ ken paour ken n'halle gouenn  
skoazell ebet digante, ha pa'n dije bet c'hoant d'hen ober.

Anavezout a rae e Paris daou zen a stad izel, hogen re uhel e oa e spered evit  
mont da zisklêriañ dezho e boan. Bezañ en devoa ur c'hefiad dilhad : ac'hanta, gwa-  
zhañ a raje kef ha dilhad mar ne gavje netra well da ober.

Seblentout a reas dezhañ ec'h anavezze ar Gêr-Veur a-viskoazh, tud ha tier; ha  
setu eñ da redek evit 'n em ginnig eus an eil skol d'eben.

"N'hellan ket kemer ac'hanoc'h," a veze respontet dezhañ a bep tu.  
War-benn un nebeut deizioù, setu e yalc'h deut da vezañ ken kleuz, ken ne gredo  
kon prennañ bara. Azalek neuze, e vagadurezh a voe dour feunteun. Pa n'hallas kon pas-  
añ e gandr, e rankas tremen an nozvezhioù war vale dre Paris. Mat 'oa kaout di'har  
krefiv. Tremen a reas eil hanter niz Mae o vale hep ehan; an darn vuiañ eus e bredoù

a voe skudelladigoù dour. Met, pezh a oa souezhus, e spered a oa e peoc'h hag e galon a oa en he flomm ! A zo kaeroc'h, pa soñje en e stad tremenet e Breizh-Izel, e kave gwelloc'h e stad nevez. Ne soñje tamm en e dud, nag e den all; degemer mat a rae d'he baourentez hep goulenm digantañ e-unan penaos harz outi na penaos e teuje d'hen kuitaat. Laouen ne oa ket, met e peoc'h e oa da vihanañ.

Penaos med eo ket marvet gant an naon hag ar skuizhder ? Den n'her goar. Ret mat e voe dezhañ, e gwirionez, bezañ bet hamezet, rak un teir sizhun bennak e chomas war vare, bevet gant dour nemet pa zegouezhe gantañ kavout ur c'hanvroad a Wen-gamp war e hent hag a ranne gantañ lodenn eus e bred.

Brevet gant ar skuizhder, drailhet e votoù, lous e zilhad, ne seblante ket bezañ gouest da gaout ur stad. Ne chome gantañ nemet un esper : bezañ skoazellet gant ar galloud kuzhet en devoa roet sikour dezhañ war e wela a varv.

Hogen d'an oad-se, Lemenik a oa pell dioutañ soñjal e diougenoù Marzin pe e diougenoù all. An anv a Lemenik, dibabet gantañ kalz diwezhatoc'h, ne oa ket zoken en e spered. Ne oueze metra diwar-benn ar galloudoù a zo 'us dimp hag a gase anezhañ en-dro hep gouzout dezhañ.

Ur beure bennak koulskoude e c'hoantaas mont d'ober un dro da di ur c'hlasker plasoù. Menal a reas batet : bezañ e oa ur plas evitañ en un ti-skol 'lec'h ma kelennered bugale hanter ziot. An eurvad-mañ a zegouezhas gantañ e deizioù kentañ Mezheven. Setu eñ da redek ! Rakital na voe dirak mestr bras ar skol e voe degemeret, daoust d'e stum a baourentez ruz. Ne chomas ket pell eno, e-mesk ar vugale baour-mañ hag o mistri, kaer en devoa bezañ kroget mat gant e labour adarre, mestr war e runkun ha gouest d'ober gant an holl hervez ar gwellañ; met ne oa ket ezhomm dioutañ pelloc'h.

Ha setu ret, goude ur niz hepken, mont adarre da gaout ar faunteunioù ha da gregiñ gant ar baleadennioù, rak nebeut a arc'hant a oa bet da reiñ dezhañ pa guitaas ar skol ha kavout ur stad all, e niz Gouere, a oa e-maez a gont.

Teir sizhun bennak e chomas adarre da fritañ mizer gant paourentez. Er mard-mañ 'oa miret dezhañ anavezout pezh a oa bet pellaet dioutañ bete-vremañ.

#### Goulennoù :

- 1) Displegañ ar gerioù-mañ : dienez, kefiad, magadurezh, hamezet, diougenoù, batet, "mestr war e runkun", "fritañ mizer gant paourentez".
- 2) Pe ster en deus "ruz" e "paourentez ruz" ? Gant peseurt gerioù e vez implijet c'hoazh ?
- 3) Displegañ stumidigezh "karantez-vro" ha "kanvroad".
- 4) Ha reizh eo "netra well" ? Displegit.
- 5) Petore den eo Lemenik ? Hag enkrezet eo gant e baourentez ? Perak ?

+ + + + +

#### Kentel 3

#### PENNAD-SKRID

"Bodet eo an tiegezh en-dro d'ar skinnwel pe d'ar skingomz. Unan a garfe selaou sonerezh, unan all sellout ouzh un abadenn sportoù. Tabut a sav... Kontit."

N'eo ket mi taolenniñ an hini zo d'ober, met danevellif. Buhezek e tleo bezañ ho pennad; anez e vo enoet al lemm. Kontit an traoù bep ma c'hoarvezont, evel just. En deroh eo sioul pep tra en ti (davez an digoradur), ha pa vo edm an abadenn e vo kan sioul all (klozadur). Eretant, un arvest farsus. Displegit c'hoantou pep hini hag ar randaolù a sav diwar se, ha, d'ar fin, penaos e vez kompezet an traoù. Deoc'h da ijinañ ar pennoz-se !

Evit na vo buhezskoc'h ho danevell, diakouezit an dud o komz hag o jestraouif. Evezhiit ho familh e-pad un nebeut deizioù, hep gouzout dezho. Merzout a roet e teu buhez a roy e-leizh d'ho danevell. Ret e vo lakaat an dud da gomz war-eeun, kuit a addisplegoù. Deskit penaos sevel un diviz. Lakit pep benn-lavar da glotañ gant tro-spered an hini a gomz.

Fentus, farsus e c'hell bezañ ho danevell. Na ziskouezit ket ho tud, 'velket, o'n em zrailhañ evel ohas !

Savit an digoradur hag un tamm eus ar pennad, evel ma plijo deoc'h.

+ + + + +

#### Kentel 4

DIBUNADUR : Lemenik, adal "Mar-benn un nebeut deizioù..." betek "...met e peoc'h e oa da vihanañ".

Berr eo an tamm skrid-se. Aes eo ar gerioù. Pouezañ war ar gerioù a verk dienez ha paourentez Lemenik. Niveruzik int. Eeun ha didro eo an danevell; rak-se, bezit eeun ha didro, na rit ket gerioù, evel na reer a-wechoù pa zibuner testennoù "uhel" pe "tonius" un tammig.

+ + + + +

#### Kentel 5

LENNADENN RENET : Klenmwan war ar varteloded, gant Erwan Berthou.

O'hoarvezet eo ar mizioù du:  
Gante 'r gwall-amzer zo arvu,  
An amzer garv, didruz,  
'Vit ar re 'zo er-maez bendez.

En fulor an deiz hag an noz,  
Hep un dale, war ma zi kloz,  
An ti kozh a glem hag a gren,  
E klevan 'n avel o tremen.

A-wechoù ec'h arvu sioul  
Hag e c'hwistell sart ouzh pep toull,  
Mas e nerzh a zastum raktal  
Da lamat 'vel un aneval.

Ar gwez bras ar muiañ nerzhus  
Zo gweat gant al loen spontus;  
Hag an tier, war ar c'hrac'hioù,  
Eo difranmet o zoennoù.

Nijal 'ra 'n delioù hag ar plouz  
A-dreuz d'an oabl gleb, deun a drouz,  
A drouz hag a deñvallienn  
En troigell ar gorventenn.

O gwashañ amzer zo arvu !  
Glay hag avel, hag a bep tu,  
Bendez, en draonenn ha war greec'h  
Hag hiziv gwashoc'h evit dec'h.

o o o

Enep d'an amzer en koumar,  
Ar peour kaezh labourer dour,  
'Dalc ar beure zo bepred  
O plommañ ar parkoù d'an ed.

Mes re all, 'dleur klemm ivez,  
En riskl a c'honez o buhez  
En ur vagig brañskedilhet  
War ar nor don dishualet.

Ar re-se zo dalc'hmat dirak  
Ar marv euzhus en o bag:  
Ar vag a stroñs hag a wigour  
War lein hag en kleuz an erv dour.

Ne oar den petore buhez  
O deus an dud a vor du-se,  
Er pellder, en kreiz ar stoumou,  
Labourerien ar gwagemou.

O c'hwi 'n ho kwele tomn en noz,  
Gott 'ouzoc'h pegoulz ha penaos  
Ha pelec'h er nor e varvo  
Martoloded kaezh eus hor bro ?

An avel griz a yud er gwez,  
Mes c'hwi a goust en ho kwele;  
Klozet nat eo prenestr ha dor:  
Na glevit ket fulor ar mor.

Teir gwech an eus graet tro ar bed,  
- Rak war ar nor, pell ec'h on bet -  
Ha teir gwech gwelot ar marv,  
Etre an dour hag an neñvoù.

Dre-se pa deu ar gwall-amzer,  
Ma spered a vale brasder,  
Brasder ar morioù koumalet  
War-lerc'h an holl vartoloded.

C'hoazh mar deufe ar c'horf marv  
D'e vammig-bro war al larv,  
Neuze, war an douar santel,  
'Pefie ar wreg hag ar bugel !

An deiz all, dirak toull ma forzh,  
Ur wreg yaouank a gule forzh  
O vont da gere'hat he fried  
En porzh-mor Sant-Malo beuzet.

Mes pegement ne deufont ket  
D'o farroz kozh da beurgouket !  
Taolet du-hont, taolet du-se,  
Na deulo ket dicoute deare.

Pa yudo 'n avel en ho tor,  
Pedit evit an dud a vor  
An Itron Varia 'Wiz Silkour  
D'o saveteñ eus an dour.

#### Goulennoù :

- 1) Displegañ ar gerioù-mañ : "mizioù du", c'hwistallat, troigell, korventenn, "plommañ ar parkoù", "a stroñs hag a wigour", "erv dour", kridal forzh, peurgouket.
- 2) Liv yezh Treger zo war ar pezh barzhoniezh-se. Roit un nebeut skouerioù.
- 3) Peseurt skeudenoù a ziskouez narzh ar gorventenn ?
- 4) Perak e soñj ar barzh er vartoloded ? Petra 'soñj diwar o fenn ?
- 5) Pegoulz e vos savet ar barzhoneg-se, d'ho menno ? Ha klotañ a ra c'hoazh gant buhez ar vartoloded a-vremañ ?

+ + + + + + + + +

#### Kentel 6

#### SKRIVADENN

Klaskit testenn ar sizhun en dastumad poelladenoù, ha respontit d'ar goulennoù.

+ + + + + + + + +

#### Kentel 7

LENNADENN DISPLEGET : Du an deiz, du an noz, ha du ivez va memoz, gant Fañch al Iae (Ebril 1904).

Diganen ec'h eus goulennet  
Ma kenin ur ganaouenn:  
En c'halon eo en em suilhet,  
'Vel ar bleunienn er wenn.  
Du eo an deiz ha du an noz  
Ha du ivez eo va memoz.  
Ha penaos e kanfen dit-te ?  
An dristidigezh a astenn  
Ha gouel poumer war va ene,  
War va spered he c'housouenn;  
Ret 'vefe din, evit kanañ,  
Sklaerder an neñv hag heol an hafv.  
Na pegoulz 'ta, heol benniget,  
E teui splann, karantezus,  
Da sklêrijennañ tal ar bed  
Plegot dindan an noz kablus,  
Da zasore'hiñ ar bleuniennou  
Skornet dindan ar goañvoù ?...

Rak du an noz ha du an de,  
Hag a-dreuz an oabl koumoulet,  
Avel, arnev, da bep mare,  
A ruidh o c'hommoù dirollet;  
Ha nig C'hwervrer, war an douar,  
En em ziskouez gwall zishegar.

Ar barzh, te 'oar, zo un evnig  
A dav e vouezh 'pad ar goañv,  
Eveltañ, paour kaezh reuzeudig,  
Me 'bleg va gal en ur cuelañ.  
Rak en-dro dir du eo an noz,  
Hag en empenñ du va vennoz.

Pa deulo an hañv tevennek  
Da zilianmañ va memozioù,  
Neuze, alc'houeder levenek,  
Me a savo barzhonegoù  
'Vit diduellañ, dizankeniet,  
Ha da galon ha da spered.

Bremañ du an deiz, du an noz  
Ha du ivez eo va vennoz:  
War e gorzenn marv ar boked,  
Marv an heol en obl diskeudet,  
'Barzh en ene marv ar gened.

Goulennoù :

- 1) Displegañ ar gerioù-mañ : "en em suilhet", "an noz kablus", dishegar, tevennek, levenek, diduellañ, dizankeniet, diskeudet.
- 2) Petra lavarout a-zivout "Barzh en ene..." ? Perak ar furm "bleuniennoù" ?
- 3) Perak n'hall ket ar barzh sevel ur ganaouenn ? Petra a lak a-wel dudad e vennoz ?
- 4) "Kanañ" a ra ar barzh evelkent, pegen du bennak e vennoz. Penaos displegañ an dra-se ?

+ + + + + + + + +

UGENTVET SIZHUNVEZH  
=====

Kentel 1

YEZHADUR

Studiañ renadennoù ar verb, §§ 718-727.

Poelladern :

- 1) Grit ur roll eus ar renadennoù-verb en destenn-mañ, ha dielfennit anezho :

"Ur vorem c'hilas a leunie ar stankenn, ha ne waled netra ken tev e oa.  
- Da droc'hañ gant ar gontell, a lavare ar Rest.  
Er sav-heol e sklerraas an obl. Ar vorem a danava hag ar sklêrijenn a drouze anezhi.  
An devezhourien, o zrefichoù hag o bouc'hili war e skoaz, a bigne d'al labour, en ur  
c'hwitellat etre o dent pe en ur vuskanañ, efrus.  
Ar vorem a deuse, sec'hat gant an heol.  
Gwez jin a dazhas eus ar vorem :  
- Ar c'hoad !" (Jakez Riou)

- 2) Disklêriañ natur ha kefridi kement ger islinnennet :

" - Sellit ! ne welit ket aze ur maner en tu all, e-kichen kroazhent Kerrous ? Ma !  
me zo o tont alese, bet o kerc'hat kant mil skoad d'an mestr. Pa'z on deut anañ,  
sec'hed din, ez on en em lakaet da dennañ ur sailhad doue. Ha n'ouzon dare penaos,  
ret eo lavarout en befe stoked enni gant va doue pe gant penn va ilin, ar voest, a  
oa va dek mil skoad enni, zo rralhet e strad ar puñs !" (Ivon Krog)

+ + + + + + + + +

Kentel 2

LENNADENN BENNET : Xinriad ur soudard yaouank, gant Prosper Proux (1866).

Ur barzh-pobl e oa Prosper Proux (1811-1873). Brudet e voe en e gom-bro gant  
e ganaouennoù farsus ha goapeus. Skrivet e cant e sell da ziduiñ ar selaouer, netra  
ken. Rihan niver ar barzhonegoù froums en deus skrivet. Xinriad ur soudard yaouank eo  
unan anezho.

Ma c'halon a zo frañhet dre nerzh ma enkrezoù,  
Ma daoullagad antanet n'o deus mui a zaeloù;  
Deut eo, siwazh ! an devezh na renkan dilezel  
Lec'h kaer ma bugaleaj, na bro gaer Breizh-Izel !

Keno dit, ma zi balen, kizhet 'barzh an draonienn,  
Tachenn c'hilas war behini, bugel, e c'hoarienn,  
Gwez ivin ker bodennak, e dishedl a bere,  
E-pad tomder an hañvoù, e kouskan da greiste.

Keno ! Keno ! mamm ha ted, bremañ n'esperit mui  
E chomfe ho mab karet da harpañ ho kozhni,  
Evit goumit deoc'h bara, 'vel n'hoc'h eus graet dezhañ:  
Al lezenn zo didruer, ho kuitaat a renkan.

Nag a wech, na mamm dener, e renk'fet-hu leñvrañ,  
Pa geuy na c'hi ankeniet en-dro deoc'h da ruzañ,  
Pa welf'ot, war an caled, na sikabellig c'houllo  
Hag ar c'hevrid o steufañ war ma fem-bazh derv.

Keno ! bered ar barrez, douaroh benniget,  
Pere a guzh ma c'herant gant ar Salver galvet;  
Da cuel an Anaon klemmus, n'in mui war ho peziou  
Da skuilhañ dour benniget nesket gant na daolou.

Keno ! ma muiañ karet, ma dousig koant Mari,  
Ur blanedenn digar a zeu d'hon glac'hariñ;  
Estrusted ha levenez skedus zo tremenet  
'Vel en cahl ar goumouenn gant an avel kaset.

Ne welin mui da lagad ker lemm ha ker laouen  
O virvriñ gant plijadur, en ti pa erruan,  
Da zornig gwenn ken nibin o treiñ ar c'harr en-dro,  
Da vouezh flour mui na glevin o kanañ na gwerzo.

Pa camp er c'hatekizoh, hon-daou c'hoazh bugale,  
Hor c'halonoh diskiant, e kuzh en em gleve;  
Dirak Gwerc'hez ar c'hroazhent nag a wech e touzajomp  
Na erruje birviken dispartit etrezomp.

Yaouank ha dibreder, siwazh ! ne ouiepm ket  
Nag a bet c'hwerventes er vuhez zo hadet;  
Evidomp ne oa, neuze, lezennoh na Rous,  
N'anavezomp met ul lezenn, himi ar garantez.

Keno ! na nes-amezeg, Yannig, na gwir vignon,  
Kamarad na c'hoariou, na breur dre ar galon,  
Piv a gemero bremañ lod e-barzh ma foanio ?  
Piv a gomzo ganin-me eus ar gér hag ar vro ?

Hepzon, te 'yelo bremañ d'ar parvezioh tostañ,  
Da bigosat al leurioh 'barzh al lazoh-dormañ;  
Hepzon, te 'yel' da c'hounit maout er c'hourenadeg,  
Da sachañ war rubanoù e-barzh ar varradeg.

Keno ! na c'hazeg velen, skañv evel un heizez,  
Mistr evel ul logodenn, chentil 'vel un oamez;  
N'ez santin ken, dindanon, gant an hast o tripal;  
Ma daouarn mui ne stagint ar seizenn war da dal.

Keno ! na c'hi kaezh, Mindu, na leal kamarad,  
N'efomp ken, dre ar c'hlizhenn, da glask roudoh ar c'had;  
Ne glevin ken, er menez, da chilpadenn skiltrus;  
War ma dorn mui ne santin da deod karantezus.

A-benn un nebeut amzer, kalz a vignoned yen,  
'Barzh ar soudard divroet, hep mar, ne soñjfont ken,  
Mes da galon-te, Mindu, n'eo ket ken ankouezhus:  
Pell e ri c'hoazh na c'hañvoh, gant da yezhoù klemmus.

Keno 'ta, plijadurioh, leurioh-nevez, prejoh,  
Nezadegoh, nozvezhoù, foarioh ha pardonioh,  
Ebatoh ker birvikiñ, binioh sart ha sklintin,  
Ne drido mui na c'halon gant da sonioù lirzhin.

Keno kement a garan, keno da virviken !  
Pell diouzh Breizh ne 'varvo, mantret gant an anken,  
'Vel ur blantenn gizidik, evit ar vro krouet,  
A renk gweñvriñ ha n'ervel, kerkent n'eo divroet.

#### Goulennoù :

- 1) Displegañ ar gerioù-mañ : bodennek, "ur blanedenn digar", nibin, karr (aman), c'hwerventes, nes-amezeg, lazoh-dormañ, gourenadeg, varradeg, tripal, ankouezhus, "e ri na c'hañvoh".
- 2) Miret hon eus o stumm rannyezhel d'un nebeut gerioù (distagadur Kerne-Uhel), met aes int da anaout. Grit ur roll anezho.
- 3) Perak eo doaniet ar soudard yaouank ? Rak petra en deus aon ?
- 4) E 1838 e voe embannet ar varzhoneg-se. Petra a zesket dimp war ar vuhez e Breizh an amzer-se ?

+ + + + +

#### Kentel 3

#### PENNAD-SKRID

Klaskit memozioù evit ar pennad kinniget deoc'h war al levrig poelladennoù.  
Roet ez eus bet deoc'h kalz alioù dija; graet hoc'h eus meur a daol-arnod. Setu e  
vefe mat kaout an holl draoù-se dinden ho torn. Bez' e c'hallit, da skouer, adskriv-  
añ anezho war fichennoù.

Klaskit ar memozioù eta, klenkit anezho, urzhit anezho. Klokaat a reat anezho  
evit an deizioù.

+ + + + +

#### Kentel 4

#### LENNADENN DISPLEGET : Spontallh Kerfeg, gant Loeiza ar Meliner.

Piv eo Loeiza ar Meliner ? Petra he deus skrivet ? Sellout en Istor al Lennad-  
ezh, p. 55.

Ur gaer a dachenn e oa Kerfeg : pradeier frank ar ribl an dour ha douarier  
frouget mat. Bourriñ bras a raen eno. Ur "c'hoñje" a dri ble en boa graet. Ne oa  
namet un dra hag a displeije din : monet da rastellet del d'ar goulav en ur pezh  
koed bras, un tammig dichen deoc'h kêr. Koed al Lorc'h a veze graet anezhoñ. E amzer  
an Dispac'h bras ec'h oa bet lazhet eno e-leizh a dud a feson, beleion ha re 'rall;  
rak na en em dolpent ennoñ evit klevet an ofereñ. Korfoh an dud lazhet a veze taolet  
en dour goude; rak na veze ket kemeret ar jab d'o lakaat en dour benniget.

A pa vezen ma-unan o rastellet del edan ar gwez kistin tev a oa eno, e teus  
soñj din ag ar pezh en boa klevet gant ma mamm (Doue d'he fardono !). D'an noz, meur  
a wezh, e veze gwalet e Koed al Lorc'h, a lare-hi, ar vuntreñon o charreat korfoh  
ar re o doa lazhet hag oc'h esae o dougen d'ar Blaouezh, gant karrikelloù dizeñ.  
A pa arrent gant ar wazh, e veze goulle o c'harrkelloù hag ec'h oa ret dezhe  
donet en-dro da glask an havelep korfoh, en ur larout an eil d'egile : "An dour,  
nam breur, n'o c'hemer ket !"

Ar c'harrkelloù-hont a chourike trist a klemmus an noz ha klevet e veze, dre  
bep div wezh, geltadennoù diskonfortus ar vuntreñon a pa zeus dezhe gwelout ne oa  
ket a zisoc'h dezhe gant o labour spontus.

Me an hani a fall-vourre er c'hoed-se, a pa dostae d'an teñval. Hañval e veze ganin e kemere en del liv ar gwad, ha n'hellen ket parraat a zistroñf da sellout a pa gleven en dra bennak o fichal ardreñv ma c'heñ.

Ur wezh, neozh, ec'h oa bet ret din toure'hellat er c'hoed-se, ur penn mat ag an noz.

- Perak enta, Oliv, petra a oa degouezhet ?

- Met geo : o temñf avalob-douar ec'h camp er park noen, èl ma raemp anezhoñ. Lekaet e oa al leuiouaj en ur peurlac'h, just etaldomp. A p'en doa luehet ar vestrez àmon monet da c'horc ar buoc'hed, ec'h oan aet da glask al leuiou, e'it o c'has ganin d'ar gêr. Un annoar vrizh a vanke. Ne ouian ket e pe tachad ec'h oa fardet. Amzer n'an boa ket kalz da redek àr he lerc'h, ha me d'ar gêr gant ar re 'rall.

A pa oa graet ma labour din ha roet an dorn da gargñ an avalob-douar er c'harr, e tostae d'an noz ha leu-brizh ne dostae ket atav d'ar c'hraou.

"Gwell e vo monet da welet emen emañ dre-ze, eme ar vestrez demp, a pa camp prest. Atav nend ec ket darev mat ma avalob-douar."

Ha ni monet. Àr nevel bras hag ar bugul d'un tu; ar mestr ha me d'an tu 'rall. Treuzet ha didreuzet hor boa ar perkoñ hag al lannoù ha seblant a annoar erbet ne welomp.

"Ret e vo monet er c'hoed, a lare ar mestr. Aze pechañs emañ aet al loen. 'Met hag e vehe kouezhet er Elaouezh !

- Dous ra vizo ! eme-me. Neozh e vehe kerkoulz ganin monet d'he zennif ag an dour èl monet da dourc'hellat e Koed al Lorc'h."

Ha setu ni, ar mestr ha me o feteat dre vesk ar gwez bras. Teñval e oa èl en ur forn ! Meur a wezh e stokemp an sil doc'h egile, evit monet kentizh da daliñ doc'h un dervenn pe ur sapinenn rust bennak. Meur a wezh arall e kavemp ur ourien stennet direk hon tredid hag ec'h aemp, fonnaploc'h evit n'hor beze c'hoant, àr an devalenn trema ar Elaouezh.

Annoar erbet e nep tu. Dav oa distroñf trema ar gêr. En ur zonet er-maez ag ar c'hoed hor boa graet an arrest, rak c'hwefñf a raamp. E kostez ur c'hargh ec'h oamp, tost d'un avalemmeg, o bec'h a frouzsh ar gwez. Baou ! Baou ! a rae an avalob o kouezh' àr an douar. Àr poñsined kousket a zihune o klevout trouz al del o pellaat a-raok hon tredid, ha lod anezhe a cheñche gwezenn en ur skoñf o divaskell. En desped din e hirisen. Pellikoc'h e klevemp ur puñs o chourikal, èl karrig an Ankou : re Forzh-maen a oa o tounat sistr. Met an trouz-mañ a gasas na spered a-benn àr chourikerezh ar c'harrikelloù-hont. Neuz, avat, e teu ar grenerezh din, daousto din bout divec'h neozh.

Ha setu, en un taol, ur c'hwitelladem o treuzif ar c'hoed hag o plantif em divskouarn, èl un term.

"Nend omp ket mat emañ, eme Gwilhoù din; deomp d'ar gêr plac'h."

Ne grade ket mui ar mestr larout ec'h oa e zibuner dezhoñ !

Kemer a reomp enta ur vinotenn a anaven mat, met kement a herr a oa àmomp da bellaat doc'h ar c'hoed-hont, ma teuas d'an zroed monet en un drezenn a oa deut da grabañf àr ar vinotenn. Ha me da bliñf, a-hed ma c'horc, en ur fozell. Pardou, man Doue ! Àr un dra bennak panek ha toenn ec'h oan kouezhet. Daou daol kri ar mestr ha me, kajet gant ur "baeg" spontus, a zassonas er flagenn, etre ma oan-me hejet ha torimellet er fozell.

"Sant Rok benniget, a bede Gwilhoù, sikourit ni !"

Din-me e oa deut èlkent ma alicant-vat. Komprenet em boa a-benn petra a oa degouezhet.

"An annoar vrizh ! ar mestr," eme-me da Wilhoù.

Ec'h oan àmezñf ha stardet mat he zroed en dorn.

Met klevet e oa hor geltadennoù er c'hàrioù tro ha tro ha kaset en doa int an dasson bete flagenn ar Elaouezh.

Emberr ec'h oa an daou vevel etaldomp met hep ki erbet gante, rak "Turk" na oa ket kalz hardishoc'h eget e vestr ha fardet en doa trema ar gêr en ur hudal, e lost gantoñ en e fouch, a p'en doa klevet ar vlezerezh.

Goulennoù :

- 1) Displegañ ar gerioù-mañ : diamen, en em dolpañ, jab, dizoun, geltadennoù, "an hani a fall-vourre", toure'hellat, leuiouaj, peurlac'h, fardiñ, pechañs, taliñ, devalenn, poñsined, hirisiñ, minotenn, pladiñ, panek, torimellet.
- 2) Grit ur roll eus ar gerioù gwanedek rik (estregat ar re a-zioc'h).
- 3) Krennit an istor e 6 linenn.
- 4) Pelec'h e tremen an istor ? Petore tud a welomp ?

+ + + + +

Kentel 5

DIBUNADUR : Di an deiz, da an noz...., gant F. al Lae, 3 foz kentañ.

Tristik eo ar varzhoneg-se, flour ha link avat. Klaskit lakaat anat ar sonerezh tanav a zo enni, al lusk ingal a santer er gwerzennoù. Rak kaer ez eus d'ar bed bezañ du ha yen ha teñval, e santer spi e kalon ar barzh : hiraezh d'an hecl... Kalz kizidigezh a gaver er varzhoneg-se, n'hen disofjit ket.

+ + + + +

Kentel 6

SKRIVADENI

Grit evel dalc'hmat, ha respontit d'ar goulennoù.

+ + + + +

Kentel 7

GERIADUR

Studiañ an dibennoù kevrennek, §§ 842-853.

Poelladem :

- 1) Petra eo un dibenn kevrennek ? Roit un nebeut skouerioù.
- 2) Petore dibennoù a c'hall bezañ staget ouzh -AD ? Roit ur skouer eus pep hini.
- 3) Displegit ster an dibennoù a gaver e : "hañvezhiadennoù", douarouriezh", "frealzidigezh".
- 4) Peseurt diforc'h zo etre an dibennoù -EGEZH hag -BLEZH (sk. "denegezh" ha "denelezh") ? Roit skouerioù.
- 5) Petra 'verk an dibenn -ONIEZH ? Peseurt diforc'h zo gant -OURIEZH ?
- 6) Petore dibenn a vez staget ouzh -US hag -ADUS ? Roit peder skouer eus pep hini.

+ + + + +

KENTAN SI'ZHUNVEZH WARI-UGENT  
=====

Kentel 1

YEZHADUR

Studiañ renadennoù an anv, ar raganv; al lezgerioù ha talvoudegezh al lavarenn,  
§§ 728-737.

Poelladenn :

1) Ober ar roll eus ar renadennoù-anv, raganv ha verb en arroudoù-mañ :

"Ur memoz trumm a dazhas en he spered. Na diskiant e oa bet ! Keloù eus al listri  
a vez embannet bennez war ar c'helaouennoù. Hag hi diouzhtu da vont da di un anezegez,  
da c'houlenn digenti kelaouennoù ar sizhun." (R. Hemon)

"Tre e traoñ al leur-gêr e oa foenneg, glas atav, an Douzig-kozh. Dispartiet-krenn e  
oa ar foenneg ouz al leur-gêr gant ur foz, a gavemp don, hag ur fetis ha ledan a  
c'harzhad drez ha sperm, kaletoc'h ha lemmoc'h o drein eget silfoù ur c'hi yud."  
(Y. Drezen)

"Ha bep pevar miz e veze gwelet an himi kozh o vont diouzh ti unan eus e vero'hed da  
di un all; mont a rae drant ha laouen, e zilhad sul gantañ dindan e gazel en ur sac'h-  
ig glas, e yalc'h-vitun hag e gorn e godell gleiz e chipenn..." (M. Abgrall)

2) Savit 5 lavarenn estlammañ o kregiñ e doareoù disheñvel.

+ + + + +

Kentel 2

LENNADENN DISPLEGHT : D'am buhez, gant ar Joubiouz.

Glaskit gouzout piv 'oa ar Joubiouz, Istor al Lennegezh, § 13.

Napl, 16 Ebrel 1841.

Ne ouian ket ha bout a zo er bed  
Ul lec'h kaeroc'h e'it al lec'h a welan !  
Evidon-me, biskoazh n'en eus gwelet  
Douar ker souezhus, nor ker glas, heol ker splann.  
Hañval ganin e evan ar yec'hed !  
An nerzh, me 'gred, a gresk emon bennez !  
Napl, evidous neozh ne vennan ket  
Lezel man bro, Breizh-Izel, man buhez !

Doc'h ar sav-heol, emañ menez Sorrent,  
Castellamar, Salern hag Amalfi;  
Doc'h ar c'huzh-heol, Pouzzol, kêr vras a-gent,  
Doc'h ar c'hreiznoz, ar Vezuv, Portici.  
Enezeg Ischia, Procida,  
Cape meinek, a zo doc'h ar c'hreistez.  
D'am daoulagad neozh ne blij netra  
El Breizh-Izel, man broig, man buhez !

Fa valean war ar Villa-real,  
E Toledo, e-tal maner ar Roue,  
A pa bedan en iliz-katedral,  
Bras eo neurbet na filjadur, gwir è.  
Mes pa dostain d'am c'hozh kêrig Gwened,  
Brasoc'h e-leizh 'vo c'hozh ma levenez !  
E'it Bretoned, nand eus a eñristed  
El bout e Breizh, hor broig, hor buhez !

Gouiet em eus er broioù diaman  
- Betek branañ reizh mat n'her gouien ket -  
Ne oa netra er bed hag a garen  
El ar vroig en deus ma desavet.

Kalz 'vehe gwoll ganin gwelet bleun lann  
E'it ar frouezh kaer a zo e Napl er gwez !  
Me 'drofe kein d'ar nor glas, d'an heol splann,  
E'it monet buan d'am broig, man buhez !

Bennez kazl me 'ya, ar-dro serr-nnoz,  
E'it na fe'ar blank, da vale war ar mour;  
Bennez kazl me ra d'am zreizhour kozh  
Kanañ ar werz a gan kement treizhour.

Lies an dar a zeu d'am daoulagad !!  
- Perak enta, perak e ouelan-me ?  
- Soñj a zeu din ec'h aen gant bag ma zad  
Ar ar morig a man bro, man buhez !

Pegoulz enta e welin-me Roltas,  
Arzh, Izenac'h, Sarchav, ar vro pinvik ?  
Pegoulz ec'h in da iliz Lokeltaz,  
Hag e evin a win gwenn ilurig ?  
Kaer eo gwelout ar bagoù a Visen;  
Mes kaeroc'h c'hozh gwelout bagoù Sine !  
Ne garen ket bout beziet amen !  
Gwell 'vo ma c'horf en broig, man buhez !

Goulennoù :

- 1) Displegañ ar gerioù-mañ : "hañval ganin", neozh, enezegi, iliz-katedral (reiñ ur ger all hañvelster), "reizh mat", treizhour.
- 2) Petra lavarout a-zivout implij "neurbet" er pevare poz ?
- 3) Notit ar gerioù implijet en o furn gwenedek.
- 4) Petra a ziskouez hiraezh ar barzh d'e vro c'hanidik ?
- 5) Petra 'lavar ar barzh a-zivout e gornig-bro ?

+ + + + +

Kentel 3

PENNAD-SKRID

Adkemerit notennoù ar sizhun dremenet. O heuliañ an alich a zo bet roet deoc'h,  
savit ur brouilhet, ha neuze ur peurskriz eus ho pennad.

+ + + + +

Kentel 4

LENNADENN DISPLEGET : Hol lennegezh kollet, gant Arzel Even.

Piv eo Arzel Even ? Sellout en Istor al lennegezh, §§ 240 ha 276.

A-drugarez da labourioù an ac. Fleuriot, na c'hellomp ket meuliñ re, hon eus bremañ ur vrasskeudenn eus henstad hor yezh, ha gouzout a reomp e oa (kenkouls hag ar c'hembraeg hag an iwerzhoneg) ur yezh skiantel, implijet evit skridoù a yezhadur- ozh, a lezennouriezh, a vezekniezh hag a steredoniezh, d'ur mare na ne oa ket ar gall- eg ur yezh lennegezh zoken. Met diwar al lennegezh vrezhoneg kempred n'hon eus ket zoken bruzhumoù.

Skortoc'h c'hoazh eo hon anaoudegezh eus ar c'hrennvrezhoneg koshañ - eus an XIII d'ar XIV kantved. N'hon eus ket evit ar mare-se ar glosoù puilh hag a zo hon an- en pennañ evit an henvrezhoneg, ha ret eo dimp tremen gant un niver anvioù divoutin tennet eus an dielloù. Kollet eo ivez lennegezh ar mare-se; hogen da vihanañ, n'omp ket peurzi'houzvez anezhi. Ur skeud anezhi a zamverzomp a-dreuz al lennegezhioù gall- ek ha saoznek - romantoù Chrestien, barzhonegoù Mari, kontadennoù Chaucer.

Ur randael hir zo bet e-touez ar ouizieien a-zivout enlidigezh "danvez Breizh" - penaos eo deut mojennoù keltiek-rik, gwirizennet en hengounioù koshañ Breizh-Veur hag Iwerzhon, d'en em silañ el lennegezh c'hallek hag ac'hann da aloubiñ Europa a-bezh. Joseph Bédier a roe ar perzh pouezusañ d'an delemourien ha danevellourien a Vreizh- Vihan, a oa brudet dre-holl en XI-XIII kantved; divyezhek na cant, e cant barrek da adaozañ e galleg mojennoù ha kanaouennoù kaerañ o bro. Kalz a Vreizhiz a oa aet da heul Gwilherm an Alouber, ha kenkouls hag an Normaned o doa resevet digantañ domarioù e Bro-Saoz (ha zoken e Kembre; Jafrez a Venoe a oa ur Breizhad, war a greder bremañ, ha n'eo ket ur C'hembraeg); hep mar ebet o doa degaset o barzhed ganto, hag ar re-se o doa adkavet e Kernev-Veur hag e Kembre hengounioù o bro, en ur yezh a gomprenet c'hoazh mat a-walc'h, ha treuzkaset ar "mojennoù arzhuriek" d'an Normaned /.../

Diwar genent-se e ranker dastum, a gredan, o deus ar C'hallaoued degemeret "danvez Breizh" digant ar Vrezhoneg : Breizhiz e Breizh-Vihan, Breizhiz annezet e Breizh-Veur, Kerneveuriz, Kembreiz ha "tud an Hanternoz", hep na c'hellfed lavarout e voe pouezusoc'h lodem ar re-mañ, ar re-se pe ar re-hont. E gwirionez, unvanoc'h e oa ar bed breizhek en XIII kantved eget na greder; ha Breizh-Vihan, kevredet gant ar rouantelezh saoz-ha-norman, a droe kein d'an Douar-Bras hag he deveze darempredoù stank gant Kernev-Veur ha Kembre.

Goulennoù :

- 1) Displegañ ar gerioù-mañ : skort, puilh, dielloù, telennourien, divyezhek, domarioù, mezekniezh.
- 2) Displegañ stumidigezh ar gerioù-mañ : brasskeudenn, henstad, lezennouriezh, steredoniezh, peurzi'houzvez, damverzout, enlidigezh.
- 3) Petra 'ouzoc'h a-zivout "danvez Breizh" ?
- 4) Peseurt yezh e oa an henvrezhoneg ?

+ + + + +

Kentel 5

GERIAOUR

Studiañ an adanvioù deveret, §§ 855-863.

Poelladenn :

- 1) Petra 'verk an dibenn -US er gerioù-mañ : souezhus, kasaus, euzhus, fonnus, sec'hedus, sellus.
- 2) Peseurt diforc'h zo gant -ADUS ? Roit pemp skouer.
- 3) Peseurt diforc'h zo etre an dibennoù -EL hag -EK ? Roit tair skouer eus pep hini (diwar an hevelep gwirizenn bep tro).
- 4) Petra 'verk an dibenn -IDIK er gerioù-mañ : klañvidik, gwridik, gendik, kollidik, blizidik ?
- 5) Roit pemp adanv outo an dibenn -KAR.

+ + + + +

Kentel 6

SKRIVADENN

Testenn ar sizhun, ha goulennoù.

+ + + + +

Kentel 7

LENNADENN REWET : Tristan hag Izold, gant Langleiz.

Setu anañ ur skouer eus hol lennegezh kollet : adkenpennet eo bet ar vojenn gell- tiek kozh-se gant ar skrivagner Langleiz hervez an nozañurioù alamanek, gallek... "Chomet on feal, emezañ, d'ar romant er stad m'edo emichañs, ar Grennamzer, pa voe brudet gant barzhed Breizh-Izal, er c'hastelloù saoz ha normandat. Daskor da Vreizh unan eus teñzorioù he lennegezh kollet, setu ar c'hoant an eus bet. Sevenet an eus va menoc."

Seizh vloaz goude, pa voe deut ar mare d'e lemel a-dre zaouarn ar maouezed, e voe fiziet Tristan en ur floc'h, Gorvenal e anv, ur mestr dibar, a zekas dezhañ, en un nebeut bloavezhioù, an holl arzoù a zle anavezout ur baron.

Ne oa ket krog c'hoazh en e zekvet bloavezh na ouie sailhat en ul lamm a-us d'ar c'hleuzioù donañ, neuñ ha splujañ, tennañ ur bir ha stlepel ur red-vaen yelloc'h ha resisoc'h eget den, ha c'hoari gant ar goaf hag ar c'hleze en un doare ken anpart ma vije bet gouest da dennañ gwad diouz an avel hec'h-unan.

Ur chasour hag ur marc'hegour dispar e oa ouzhpenn, barrek da zofvaat ha da vestroniñ ar c'hezeg feulsañ, ha bepred en un doare an ses na seblante ar marc'h sentiañ a-youl-vat ouzh e vestr, evel pa vefe bet ul lodem eus e gorf. Hogen ne oa ket bet ankoumac'haet, kennebeut, gant Roald digeriñ e spered hag, e-pad abardaezioù hir ar goafiv, e veze desket dezhañ sonemol a garantez ken tener, ha kanch a vrezel ken taer, na frome ha na entane, tro ha tro, ar bugal netra nemet ouzh o senñ gant an delenn.

Ha bepred e poanle Gorvenal d'e lakaat da ziwall diouz ar gaou, da gasant an trubarderezh ha da zifenn ar re walletrus; ha, dreist pep tra, koustet a gouste, da zerc'hel d'e c'her.

Hag ouzh e welout ken hardis ha ken koant, lodem e ziskodiz, moan e zivgroezell, kreñv, leal ha dispont atav, e vele an holl ar paotrig ha Roald war un dro gantañ evit en devout ganet ur seurt mat. Met, pep gwech na selle Roald ouzh Tristan, ne c'helle

ket en em virout a vezañ trefust o soñjal e Riwalen hag en Olwenn, ma advleunie o yaouankiz e neuñsion plijus ar bugel; hag evitañ da garout **Tristan** evel pa vefe bet e vab, en e zouje, e kuzh, evel o aotrou.

Un deiz, evelato, e voe laeret dezhañ e holl levnezh : deut da Ganoel war zig-arez gwerzhañ bragerizioù ha liñserioù seiz prizius, marc'hadourion a Vro-Norvegia a zedennas Tristan war vourzh o lestr ha, kerkent ha kouezet al Leonad bihan en o dalc'h, e lakjont da ouel evit e gas ganto betek o bro, gant ar soñj d'e werzhañ eno ur priz uhel.

E-giz ur bleiz yaouank, bet tapet en un toull-skrap, en em zifennas ar paotrig. Ur wirionez asur eo, avat, hag anavezet gant an holl vartoloded : ne blij ket d'ar mor skoazellañ al listri kablus. Sevel a reas fuloret, o pakañ ar vag en deñvalijenn, evel en ur sac'h; hag e-pad seizh devezh ha seizh nozvezh, en he stlapas war-raok, en argoll. Ha pa deuzas ar vrucenn, d'an eizhvet deiz, e voe un aod strewet a gerreg ha riblet gant tevennoù sonn, en em ziskouezas a-greiz-holl dirak ar vorerion spouronet, o kinnig o frailhañ hag o dispenn war un dro gant o lestr.

Keuz ganto eus o zorfed hag o kompren, en diwezh, e oa ar bugel-se o doa skrapet dre vil, evit e walleur hag o hini, a oa kirmek eus o zrubuilhoù, e toujent-Doue en e lezfant da vont. Ur vagig a voe diskennet eus ar bourzh evit e gas d'an aod nepell. Kerkent ha lezet ar paotrig d'en em denañ, e sioulas ar mor, e tavas an avel hag e pamas adarre en heol, a-dreuz d'ar c'hogus. Hag endra ma pellaas ar skraperion e tostae ar vagig d'an traezh, douget gant ar gwagennoù doñvaet.

Gant kalz a boan e tizhas Tristan kern an tevennoù. Degouezhet eno, e taolas ur sellad war ar vro m'en doa douaret enni : ul laneg vras en em lede dirazañ hag, en tu all d'al laneg-se, ur c'hoad-meur teñval ne c'helle e lagad merzout dilost ebet dezhañ. Ha, glac'haret holl, o soñjal e Roald e dad, e Gorwenal hag en douar a Vro-Leon na welfe mui biken emichañs, edo war-nes koll pep fiziziañs pa voe seditaet e galon gant son ur c'horn-boud o sevel er pelloù.

Prestik goude, e tifoupe ur c'harv eus riblenn ar c'hoad ha, war e roudoù, un trespellad niverus a chas, iset gant nevelion. Ne seblante ket al loen gellout mont pelloc'h : deut e oa war e dremenvan. Chem a reas a-sav el laneg, da zero'hel penn ouzh an harzhadennoù.

Ar chas, avat, a istribilhe bremañ a bep tu d'e c'houzoug. Sachet-disachet ganto, e vransele war-nes kouezhañ. Pare e oa. Ur chaseour a dostaas outañ hag e lazhas gant e gontell. Hag endra ma korne ar chaseourion all da vrudañ marv al loen, e krogas ar mastr gwenaer e penn ar c'harv e sell d'e droc'hañ.

"Petra a rit, aotrou ? a souezhas Tristan, n'en doa ket fifivet betek-hen. Daoust hag ar c'hiz a wefe, er vro-mañ, disrannañ ul loen a ouenn gant hennañ evel pa vefe ur penn-moc'h ?

- Breurig ker - a eilgerias ar chaseour - ne welan netra feukus en ur seurt giz. Ya 'vat ! Da gontañ e vistagin penn ar c'harv ha, d'an eil, e rannin e gorf e peder lodenn a vo staget ouzh hon dibroù d'o c'has d'ar rous Marc'h hon aotrou. Eval-se a reomp a-viskoazh hag a reas, en hor raok, a rumad da rumad, tud Kernev-Veur.

"Mar anavezet, evelato, ur c'hiz bennak bravoc'h eget houmañ, he deskiñ a raomp digant gant plijadur. Kemer ar gontell-mañ, a zo bet lemmet nevez zo, ha dispenn al loen."

War e saoulin en em lakaas, neuze, Tristan evit digroc'henañ ar c'harv. E zispenn a reas goude-se, o lezel a gostez, evel just, al lodennoù dister : ar moj, an teod ha gwazhenn ar galon.

Ar chaseourion hag ar vevelion, stouet a-us dezhañ, a selle ouzh e labour, gounezet tre ha tre.

"Paotrig, eme ar gwenaer, brav dispar eo ar gizioù-se. Piv en deus desket dit doareoù ken plijus ? Lavar deomp da anv hag hini da vro.

- Aotrou ker, a respontas ar bugel, ganet en e Bro-Leon ha Tristan a vez graet eo'hanon.

- Tristan, eme ar gwenaer, Doue da c'hozhañ an tad en deus da zedevet en un doare ken fur ha ken uhel. Ur baron galloudek ha pimidik a zle bezañ." Mar goude ar paotrig lavarout kaer, e ouie tevel kenkouls all. Lavarout a reas eta, dre ijin :

"Nann, aotrou; biskoazh ne voe baron va zad, marc'hadour ne lavaran ket. Tec'h-et kuit en eus, e kuzh, diouzh ar gêr, war vourzh unan eus e listri, gant ar soñj da welout penaos e vev an dud a chom war an douaroù estren. Hogen mar gellit va deg-emer en ho mesk, mont a rin ganec'h, laouen tre, hag e teskin deoc'h neur a gustum all.

- Tristanig, a lavaras adarre ar gwenaer, un estlenn eo din da gonzoù ! Piv en dije kredet anañ e c'helle bout desket da varc'hadourion yaouank ur vro estren bennak gizioù uhel n'int ket anavezet, zoken gant baroned hor bro-ni... Ne vern, avat, deus ganecomp ! Da gas a raomp gant plijadur betek ar rous Marc'h, hon aotrou."

#### Goulennoù :

- 1) Displegañ ar gerioù-mañ : floc'h, goaf, marc'hegour, mastroniañ, feuls, bragerizioù, listri kablus, "strewet a gerreg", "o kinnig o frailhañ", "kern an tevennoù", "er pelloù", isañ, istribilhañ, "pare e oa", gwenaer.
- 2) Displegañ implij "evit en devout ganet ur seurt nab" hag ar furn "an e zouje".
- 3) Petore desavadur en deus bet ar bugel ?
- 4) Perak ne lavar ket ar wirionez d'ar gwenaer ha d'ar chaseourion ?

+ + + + +

=====

Kentel 1

YEZHADUR

Studiañ al lavarenn gadarnaat, §§ 738-753.

Foelladenn :

1) Lakaat a-wel urzh ar gerioù e pep lavarenn, ha displegañ ar perag :

"Eignat a rejont. Eignat a rejont goustadik a-hed ar gorzenn. Ne oa ket ken diaes-se. An tudioù a oa digompez, gant bosoù e-leizh a bep tu da harpañ an troad. Naet e oa ivez. Dre eurvad e oa bet nevez skarzhet ar siminal. Virjini ha deveze dalc'hmat aon rak an tangwall hag a lakas skarzhañ holl siminalioù an ti bep bloaz o miz Mae. Ewel-se, hep kousiñ re o daouarn hag o dilhad, e tirsajont ar bodenn. Harlikin an hini eo a lakas e benn er-maez da gentañ." (R. Hemon)

2) Pegoulz e laker ar rener e penn al lavarenn ? Roit tair skouer.

3) Displegañ urzhiadur ar frazennoù-mañ (lec'h ar verb, perak ar ger-mañ-ger e penn ?...):

"Elegañ he c'horf a reas da sellout outo."

"E dad a gregas aon emañ."

"Dont a ra ar babig-mañ da vezañ diaesoc'h bemdez."

"Hag e tiskoueze hent ar baradoz d'an holl."

"Tintin Urbana, ar gaoenn, a oa eno oc'h ober reuz."

"Ar paotr-se a zo lemm e spered."

4) Sevel peup frazenn disheñvel gant ar gerioù-mañ, ha disklêriañ bep tro o ster resis :

bemdez - mont - va zad - Lanuon.

+ + + + +

LENNADENN DISPLEGET : Ewarn Kerzidu, gant Ian Inizan, pp. 207-210.

Petra 'ouzoc'h diwar-benn ar romant-se ? Sellout en Istor al Lennavezh, § 21.

TREFALEGENN E LANOUARNE

Va gwad a verve dre ma konte an aotrou Krenn fallagriez ha krizder soudarded ar Republik; va izili a grene, va spered a yas tanav; ar gwad a savas d'am penn, aet 'oan er-maez ac'hanon va-unan; ankounac'haat a ris en un taol an troc'h a oa en mardhed; sevel a ris en sav.

- It atav, dispac'herien fallakr ha digalon, emeve din va-unan, n'hen talvezo deoc'h !

Hag evit gwdr, ne c'houleminen ket gwell eget ober dezho ar muiañ droug a c'helljen. Marteze ne raen ket mat, rak ar veñjañs zo da Zoue hepken, mes n'oan ket evit mirout; hag ouzhpenn e brezel edomp, hag, er brezel, pep hini a ra d'e enbour ar muiañ na c'hell a zroug. Ret 'oa, mont a ranken da veñjiñ va c'homper Herve Sout, Katell Eukad hag o bugale; ya, ret 'oa.

Kontañ a ris ar boledoù en doa roet din an aotrou Kerbalaneg : teir ha tregont a oa anezho, un all a oa en fuzuilh; mat oa.

- Kenavezo, aotrou Krenn, emeve en ur gregiñ em fuzuilh.

--Mont a rez kuit, Yann Pennhorz ?

- Ya, aotrou Krenn.

- Ha da belec'h ?

- An dra-se ne sell nemet ouzhin. Ne lavarin ket deoc'h-c'hwid zoken ar pezh en Kervinod, gant aon da vezañ paket ur wech all, eo mont da gadoù Kermengil da gaut an evel ar gaoenn, hag e klevfot e belec'h e vezint. Grit dezho va gouro'hemenn. A-raok ma vezo trenaet an deiz a zo erru, o devezo klevet anv eus Yann Pennhorz, pe Doue en devezo lamet e vuhez digantañ.

- Kenvezo, Yann Pennhorz, pe fell dit mont kuit. Ra zeulo Doue da baeañ ac'hanout d'an bezañ tannet eus ar puñs a zo du-hont.

- Bennozh Doue, aotrou Krenn, ha kenavezo.

Treññ a ris kein kentañ ma c'helljen, rak gwelout a raen an daolou o tiverañ eus daoulagad an aotrou Krenn. An dra-se a rao poan din, ha n'en boa ket a c'hoant da zigal-ouekaat. Ne voen ket pell evit lamet eus al leur el liorz, hag ac'hanon er park bras. Mont a ris war-eeun a-dreuz ar parkier betek an hent-bras a ya eus Kastell, dre Verven, da Lezveven, rak, diouzh ar gent a ras Brutus an Norman, e-pad n'edon er puñs, e tlee ar soudarded mont war-zu eno.

Ne ouzon ket pe ar banneoù o doa pouneraat o zread, pe bet 'oant bet en ul lec'h all bemak oc'h ober ar pezh o doa graet e Manser al Iorzhoù, da vitanañ aet 'oant, e feson, goustadik, rak en o raok edon en hent a zeu eus Keryann-Vihan d'an hent bras. Trouz ha chaok a oa ganto, kement ma vezent klevet, e-kreiz sioulder an noz, un hantereur vale diouzh an hent bras. Ne 'gred edont oc'h en en fougeal da c'houzout pehini anezho en doa graet ar muiañ droug.

En tu all d'an hent bras e oa ur parkad balan da Yann Verthou, eus Trefalegenn. Er park-se em boa c'hoant da vont. (Chom a ris da c'headal. Ar soudarded a yeas e-biou, ha, kerkent ha n'oa tro o c'heini, ma a drougas an hent bras hag a larzas er park balan. Ur c'harzh lann daou vloaz a oa war ar c'hleuz hag a guzhe ac'hanon pe vezen o sellout war an hent bras. Sidlaer oa an noz, mes n'en boa nemet soublañ e-touez ar balan, ha den ne c'helle va gwelout.

Dre ma'z ae ar soudarded, ne yas d'o heul, a-hed ar c'hleuz, evel pa vijen bet unan anezho. Ne ouzoc'h ket petra an boa c'hoant da ober en ur chom ken tost-se d'ar sitoanet ? O c'hontañ an boa c'hoant da ober evit gouzout pet oant. Bezañ oa anezho c'hwec'h warn-ugent, hag ouzhpenn un tannig ofiser bihan, divarv, displeg, un aer a drivec'h pe naentek vloaz, hag a oa e-kreiz ar re all.

Gouzout a raen brenañ ar pezh en boa c'hoant da c'houzout; edon e-touez ar balan; sevel a ris va fuzuilh dreist ar bleñchoù, bizañ a ris e-pad n'edo Brutus an Norman a komz en ur sakrel hag en ur bec'hiañ ouz unan eus e gamaraded; an tem a strakas, ha pec'het Brutus a voe troc'het dre an hanter. An Norman a gouezhas, torret e benn, stre treid e gamaraded...

- Hemezh ne zeulo ken da lakat an tan e ti va c'homper Herve Sout. Bebez dispac'h na pebez frouz a reas va zenn e-touez ar soudarded ! Lod anezho a chomas souezhet ha mantret; lod all a bec'he hag a gonze a-dreuz hag a-hed; holl oant distroet war-zu al lec'h n'edon-me emañ o klask gwelout an hini en doa tannet. Ne ziw-ezhat edont; ne a oa en en daolet a-c'houvez e-touez ar balan hag a garge adarre va fuzuilh.

Goulennoù :

1) Displegañ ar gerioù-mañ : fallagriez, "va spered a yas tanav", "er-maez ac'hanon va-unan", "e feson", chaok, ur c'harzh lann, bleñchoù, displeg, "pebez dispac'h na pebez frouz".

2) Peseurt diforc'h zo etre "park balan" ha "parkad balan" ? Displegit implij ar furn EDO e : "e brezel edomp", "re sivezhat edont".

- 3) Pegoulz e tremen an istor-se ? Pelec'h ? Petra 'soñj Yann Pennhorz eus soudarded ar Republik ? Perak ?
- 4) Petore tenz-spered zo da Yann Pennhorz, diouzh na weler amañ ?

+ + + + +

Kentel 3

PENNAD-SKRID

"Ur wech hoc'h eus gortozet un dra da c'hoarvezout : danevellit ar gortoz-se."

Gant an danevell-mañ e voutc'homp un ervenn nevez : ensellout ar pezh a dremen ennoc'h hoc'h-uman, en ho kreizon. Ne vo ket aes da gentañ. Dibabit ur mare eus ho puhez, klaskit mennoziñ a dem d'an darvoud ennoc'h o vont da zezzevell. Neuze, klask ankavout ho tro-spered a-neuze, an trivliadon, ar santadon a oa ennoc'h. Ret e vo o dispakañ, fraezh hag anat, d'al lenner da welout sklaer.

Tresit daou vann war ho kaer : war-gleiz, lakit roll ar santadon-se, ha war-zehou, penaos e teuent war-wel. N'eo ket a-walc'h reiñ un aridennad trivliadon (difetis e vefe); ar pezh a gont eo anataat ar pezh a santec'h-c'hwil neuze. Er penn kentañ ho po poan oc'h eñvoriñ kement-se. Goude, avat, e tey arlivioù e-leizh d'ho spered : goanag, enkreiz, anken, c'hoant, faltazi...

Bremañ eo dav sevel ur steuñv hag un tamm eus ar pennad, an hini a blijo deoc'h. Met diwallit ! kleiz e vefe rannañ an destenn e div lodenn : darvoudon ha santadon. Klaskit urzhiañ ho mennoziñ en un deare all.

+ + + + +

Kentel 4

DIENNADUR : Bernann Kerzidu, adalek "En tu all d'an hent..." betek "...hag a oa e-kreiz ar re all".

Un danevell eo an arroud-se, anat eo. Emañ ar penn-den o kentañ penaos en deus roet lamm d'e enebourien, ur bagad soudarded c'hall. Komzit war-bouez. Panner eo ar yezh, a-wechoùigoù, eviti da vezañ yac'h kenañ : dre-se e lakot evezh da droc'hañ ar frazennoù evel eo dleet. Evezhiañ ivez ton drant a-walc'h an danevell.

+ + + + +

Kentel 5

DIENNADENN KENNET : Bernann Kerzidu, pp. 242-247.

PAOLIG AR SANN

Evel chas chase pa santont tres ar c'had, ar soudarded a redas buan ar warrenn, a c'haloupas d'ar red d'ar penn all, a lammas a-lenn-plomm war ar c'hleuz... Sellout a rejont a-gleiz hag a-zehou, a-bell hag a-dost; furchañ a rejont ar girzhier lann a-dro-war-dro, nes ne gavjont netra.

- Dont a rejont war o c'hiz da gaout o c'habiten a oa ouzh o gortoz.
- N'hoc'h eus kavet eta netra ?
- Nann, kabiten. Koulskoude hon eus klasket nat.
- Marteze ivez n'eus set den dre age.

- Eo, bezañ sur 'eus set unan bennak, dre ar c'hozh-hont, er-maez eus al lanneg-mañ.  
- Mard eo gwir, eo aes a-walc'h deomp her gouzout, rak amañ 'eus ur paotrig digant hennezh, ar c'hrouadur-se, piv eo an hini a zo set bremaik, d'ar red, dre al lanneg-mañ.

- Allas ! kabiten, aon am eus n'her c'hlevfomp ket gentañ.
- Na perak ? Ur c'hrouadur ker yaouank ne c'hall ket diskredañ warnomp, ha ne lavaro ket a c'hevier.
- Ma ne lavar ket a c'hevier, ne lavaro ket kennebeut ar wirionez; ne hen anavez, eñ hag e dud. Hennezh a zo nab da Laorfañs ar Sann, eus Lopreden; hag an tiad tud-se zo stag kentañ ouzh fals-kredennon ar veleien. Kentoc'h e lezint ac'hanoc'h da lakaat an tangwall warno, en o zi, eget diskredañ ur beleg hepken.
- Ye, ar re gozh, marteze; mes hemañ n'en deus ket a skiant a-walc'h evit anaout ar pezh hon eus c'hoant da c'houzout.
- A gav deoc'h, kabiten; bremaik e welfot. Me a ya da c'houlenn digantañ.

Ar c'hera a dostas ouzh ar c'hrouadur, a oa dinezc'h o vrasakellat war an draf, ur foet blansonet-kroaz gentañ en-dro a'e c'houzoug, hag eñ touchennet hir, evel na tere ouzh pep paotr saout a ra mat e vicher.

- Paolig, lavar din-me piv zo set bremaik, d'ar red, amañ dre al lanneg, hag a zo lammet er-maez dreist ar c'hleuz er penn all abont.
- Ne oufen ket her lavarout deoc'h. N'am eus ket a anzer da sellout en-dro dib. Poan a-walc'h an eus gant va saout, rak aze, sellit, amañ ar vloc'h vrizh hag a zo laer evel an dour. Ouzhpenn-se, kas a ra d'he heul va ommer Mindu, hag e tesk anezhi da vezañ ker gwazh hag hi. Sellit, ha n'he gwelit ket, diouzh na vez tro va fenn, o sevel war gleuz koad tud an ti all ?... Dont a ri en-dro da-mañ, Mindu !
- Ha Paolig a stleke e foet da ober aon d'e ommer.

Ac'hanta, kabiten, n'am boa ket lavaret deoc'h ? Me 'louie ervat n'ho dije klevet netra gant hemañ. Ar re-se, tud ar Sann, a veze atav gwechall er memes tu gant ar veleien; touellet oant ganto. Hag hemañ, ar mec'hiag bihan-mañ, en deus graet e hark kentañ, dre gush, bremañ 'eus un teir sizhun bennak, hag a zo fourret hep arvar, forzh ditachon dezhañ en o benn.

- Koulskoude n'en deus ket an aer da gaout ouzhpenn unnek vloaz.
- A-vec'h n'en deus an oad-se.
- Ha ne fell ket dezhañ lavarout netra ?
- Nann, her gwelout a rit.
- Gortoz, kere; bremaik e wali, rak n'am eus ket anzer da goll.
- Hag ar c'habiten da gaout Paolig.
- Penaos, marmouz, emezañ, en ur douler e graban war e benn hag en ur gregiñ en e vlev, ne lavari ket din-me piv zo set dre amañ, p'edomp-ni o tont dreist ar c'hleuz ?
- Lavaret en eus da gere Pont-Eon en boa a-walc'h da ober oc'h eveshaat va saout.
- C'hoant ac'h eus, tamm kozh tra, da ober goap ac'hanomp-ni, a walam; mes an dra-se ne bado ket pell. Lavarout a ri, ya pe nann, piv zo set dre amañ ?
- Va zad en deus degaset ac'hanon amañ da ziwall va saout, ha nekot da sellout ouzh an dud eo.
- Ur wech c'hoazh, lavarout a ri, tamm ar foeltr, eme ar c'habiten, en ur sachañ war blev ar c'hrouadur ken na vezent gwelot e nijal gant an avel, lavarout a ri ?

- Ne lavarin ket, grollis.
- Ha ne lavari ket ?
- Nann, nann ! biken.
- Mat, dit ar gwashañ. - Soudarded, buan war evezh. Kargit ho fuzuilhoù; daou ac'hanoc'h, stagañ hemañ aze ouzh an draf, ha, daou all, daou denn fuzuilh dezhañ en e benn, evit diskouez ne roer ket a c'hoap er c'hiz-se eus soudarded ar Republik.
- Ker buan lavaret, ker buan graet. Krapet a voe er paour knezh Paol, staget e voe ouzh an draf; daou soudard a zeus dek paz war o c'hiz, edont o vizañ ar biz war bluenn ar fuzuilh...

Paolig a gollas un tamm e liv; dont a reas da vezañ drouk-livet... Evelato, den ne lavarje en devije aon... Ober a ra sin ar groaz en ur sevel e zaoulagad war-zu an neñv, hag e chom sonn en e sav, sonn evel ur poul, dinec'h evel ur sant : Doue, me 'gred, a roe merzh dezhañ... Ur vuntenn c'hoazh hag 'oa graet gantañ, pa lavaras ar c'habiten :

- Chomit a-sav, soudarded. Me 'gav din e reomp fall o temañ war ar marmouz-mañ, rak an tennoh a vezo klevet, hag ar valsien a gemero an tec'h. N'eo ket gwir, kere ?  
-Gwir eo, eme ar c'here. Koulskoude homañ, an tamm nec'hieg-mañ, a ra goap ac'hanomp.

Daoust hag youl an diaoul a oa e kalon ar c'here.  
- Kemar da amzer, ne gollo netra. Ouzhpenn an dra-se c'hoazh, ne dal ket ar bean deomp devij poultr ar Republik war gozh tamm traoù evel hemañ. Distaget eñ, soudarded, ha degasit anezhañ amañ. Me a ya da ober berroc'h tro, ha kalz didrouoc'h; me a ya d'her c'hrugañ, hag, e-pad ma vezo a-ispilh, en devo amzer da c'houzout ne reer ket en amez goap eus ur c'habiten republikan.

Ker buan e voe distaget ar paour kaezh Paolig ha stilet da gichen ur wezenn fav gozh a oa war an hent, er-maez eus al lannege. Ne voe ket poul oc'h ober ur c'houln lagadenn er gordenn, hag ouzh he lakaat en-dro da c'houzoug ar c'hrouadur.

- Ur wech c'hoazh, lacouenn-dar, eme ar c'habiten, lavarout a ri deomp piv ac'h eus gwelet bremañ o kement an tec'h ?  
- Nann, nann, eme Paol.

- Buan, buan, ur soudard er wezenn da stagañ ar gordenn ma vezo krouget an hoc'h bihan-mañ. Alese e c'hell bremskellat gwelloc'h eget ne reas bremañ war e zraf.

Ar wezenn n'he doa ket a skourrou izel. Kaer o doa ar soudarded en an skoaziañ, en an lakaat daou, tri, bezn-war-vein, n'ont ket c'hoazh uhel a-walc'h evit tizhout ar skour izelañ da stagañ ar gordenn da grougañ Paolig ar Sann. Ar c'habiten a skoe, dre goumar, gant seul e votez war an douar, a en an chala hag a bec'he... Paol avat, ar gordenn en-dro d'e c'houzoug, a oa didrouz ha sloul evel un oan o vont gant ar c'higer. En e galon e pede Doue.

- Hastit afo, eme ar c'here, koll a reomp hon amzer; trouz a reomp ivez ha n'emaomp ket tri c'hanv pezh ken diouzh Penn an Nec'h. Mar bezomp klevet e kaving ti goull.

Ar c'here en doa mall da welout krougañ Paolig ar Sann.  
- Gwir a lavar ar c'here, eme ar c'habiten, en ur bec'hiñ gwashoc'h-gwazh hag en ur skoñ muioc'h-mui taolich betek war an douar.

N'en doa ket a c'hoant da dennañ, ar c'habiten digalon, gant aon rak an trouz; n'oa ket evit krougañ, rak ne gavo ket a spig d'e gordenn, hag, evelato, n'oa ket evit chom hop lakaat d'ar navy ur c'hrouadur unnek vloaz, rak e soudarded o devije graet goap anezhañ. Petra eta da ober ?... Sellout a ra en-dro dezhañ evit klask ur wezenn all a-vec'h sevel outi... Ne wel hini... En un taol e kwezh e zaoulagad war ur poull-dour graet, gant tud ar Veneg, a Iopreden, evit dastum an dour glav a zored eus an nec'h, hag a lakaat da zourañ ar foemeier o deus graet ouzh an dergenn. Gouzout a rit edoc, er mar-se, e-kreiz n'iz Meurzh; ar goañv a oa rust, yen oa an amzer, ar poull a oa skornet.

- Kavet eo garin ar pezh a glaskan, eme adarre ar c'habiten; deuit amañ, soudarded, ha lezit ar wezenn.

Hag en ur astenn e gleze a oa en e zorn war-zu ar poull-dour :  
- Buan, unan ac'hanoc'h, da derrañ ar skorn aont, e-kreiz ar poull, na taolimp an hoc'h bihan-mañ e-barzh. Eno e kavo, kement ha na karo, gwelien yen da evañ evit distañ e benn.

Ar soudard ne voe ket pell evit ober e gefridi.  
Graet an toull...  
Daou soudard a grogas er paour kaezh Paolig. Enebiñ a reas oute, fringal a rae...  
Ar vuhaz eo c'hwec'h d'an holl !... Mes petra eo ur bugel etre daouarn daou soudard, daou zen en ead ? Douget e voe...

Aet oant, c-zri, Paolig hag an daou soudard, tri pe bevar pezh war ar skornenn; edont e-kichen an toull... Mes ar skornenn, kalet a-walc'h evit dougen ur soudard hep tri eme a yeas dirak Doue, daou vuntrez hag ur nerzher... Un aal... Doue ra gresko e levnezh er baradoz !

Ar c'habiten hag e soudarded a chomas sebetet a chomas sebetet da sellout, hep lavarout ger, an eil ouzh egile. Daoust hag en an lakaat a rejont da dennañ o daou gavrour er-maez eus nenn a c'helle ternañ ganto kerkoulz ha n'oa torret gant an daou all, ha tud difeiz, er c'hiz-se, n'en an lakaat ket war var da goll o buhez evit saveteiñ o nesañ. Chom soudard, da c'houzout ha dont a raje unan bezañ anezho war goue an dour. Mes aet oant a-zindan ar skornenn, e feson, rak hini anezho ne zeuas er-maez.  
C'hwid a gav deoc'h e oa bet nec'het ar c'habiten o welout an daou soudard-se ?  
Tamm ebet. Ternañ a reas ouzh e soudarded all, en ur lavarout dezho :

- Daou zen muioc'h da lakaat war gont tud ar vro-mañ, rak na karje henezh, an hoc'h bihan-penn-kalet-se, bezañ lavaret deomp ar pezh a c'houlennet digantañ, ne vije ket c'houvezet kement-mañ. - Bremañ, deomp d'hol labour, ar Republik hor galv; buan en hent. Amañ, en ti-mañ, ez eus tri beleg hag a c'helle kenzout an tec'h na taleomp ken. Ar re-se a baeo evit hor breudeur a lezomp er poull-dour-mañ.  
Hag i en o hent.

Goulennoù :

- 1) Displegañ ar gerioù-mañ : gwarem, falc-kredenn, "disklêriañ ur beleg", draf, dinec'h, nec'hieg, drouk-livet, gwelien, skornenn, "e-tailh da goll".
- 2) Pennaez e vez livet ar soudarded ? Hag o c'habiten ?
- 3) Pe emzalc'h en deus ar c'here ouzh Paolig ? Berak ?

+ + + + +

Kontal 6

SKRIVADENN

Testenn ar sizhun, ha goulennoù.

+ + + + +

Kontal 7

LENNADENN DISPLEGET : Skatla Sogobard, gant Heven Nordiam, pp. 38-41.

BUGALEEREZH MANOS HA BENA

Diwar-benn bugaleerezh Manos ha Bena, - pe Eouras ha Derva, evel n'eo anvour ivez diouzh an div wezenn a waskedas o ganedigezh, - ne liviriz nemet nesaer a dra, daoust ma'z eo kement-se, a gredfen, en ur stum, ar pep heolusañ eus hon hengounioù. Buhez daou vugel o kliskid e pep dishualded e voe o hini, ouzh o flouzañ bender ar c'hlan ar gouelec'h, e-kreiz ar c'hoadou bras, an goueier dirac'h hag ar nec'hell, hep ken darempredadur nemet o mamm, al loened pavar-zroadek, an emved hag an emprenad. Adaez merzh ouziek ar gwezegou, he doa o c'helenet war gont a oute hec'h-unan. N'oa gwezenn, bodenn, getenn, klivlemp ebet o ternañ war gont dorsoeliek an douar.

kailhenn ebet o ruilhañ war e c'horre pe o c'hourvez en e gondoniou, na ouvezje Manos ha Bena an anv hag ar perzhioù anezho. Evin ebet o nijal en oabl, pesk o neuñvial en dour, loen o kerzhout pe o torc'hweniañ war donenn c'hlas Andelitana, na anavezjent o anv, o doareoù, o buhezgezh ! Diouz an avel, neuz ha red ar c'houmoul, stuz an neñv noz ha beure, liv an heol ha doare al loar, e ouient diogeniañ an amzer. Anvioù ar stered a anavezjent, ar re zigeneil pe ar re enstrolladet a luc'h a-hed an noz en oabl, kerkoulz hag anvioù ha buhezioù an douced a ra enno o annez. Dindan eñvor ha dre ar mumudoù e ouient nesanded ha kurioù ar ramed, an anvioù anezho hag al lec'hioù m'o c'haver, pe war c'horre pe e kondoniou an douar, pe war harzoù ar bed. Diskuilhet he doa Adagi dezho gwir zoare ar bed, kevrennadur an douarù hag ar morioù war e c'horre, neuziadur an douarù-bras hag an enezennoù; desket he doa dezho dezrevelladur ganedigezh ar bed hag an darvoudoù tonket dezhañ.

Eus an holl ouiziegezh-se ne denne Manos ha Bena lorc'h ebet, dre na welent war o zro den e gement a vije bet da dezhañ o c'hammeviliñ hag o c'has da fall. Ha, diouz he zu, Adagi, ar rameder fur, o mamm, he doa diwallet da enoc'h dre gonzoù dievezh an emc'hloar en o c'haronoù.

Fa gantreant o-daou dre heoliennoù ar c'hoad pe dindan skourroù ar gwez bras, o vont eus ar binenn d'an dervenn, eus an ivinenn d'an dilhenn, eus ar vorvenn d'an eflenn, petra e oa o diverzoù-amzer ? Ervat o anavezomp : tantadoù a enaouent gant aval-ob-pin; gwizioù ha louzaouannoù yac'haus a glasket; bleunioù a gutuilhent d'o flezh-enniñ e kurumennoù ha garientezennoù; ar bravañ amprevaned askellek a bakent; krug-elloù-merien a zispennet da gerc'hat vidoù merien d'ar c'hilhog-gouez bras ha d'an evned all. Heuliañ a raent tad-kozh blevek ar c'hoad (da lavarout eo an arz), war e dro da vela hag e rannent gantañ e breizhadenn; gedal a raent ar gwidverig goll o fringal, selaou ouzh kan an evned, ha, d'an noz, da sikleur al loar, en em silañ war ribl an dour, da spiañ miled ar c'hoad, kezeg, moc'h, kirvi, tirvi gouez, o tont, a-vagadoù, da zouañ. Kement-se holl ha kant ha kant a draoù all c'hoazh, evel o degouezhioù, o c'hoardoù, o zrioù gant al loened a veve war o zro, ha dreist-holl o divizadennoù gant an dourgi hag avank kozh an aven, a zo don e koun pep unan. Bez' ez eus anezho kanaouennoù-gou diniver ha danevelloù-gou a zo bet dezrevellet a vepred gant mammoù Keltia d'o reoigou hag a vo dezrevellet ganto da viken. N'eus ket nemeur da arvariañ e c'hellfe an holl draoù-se kouezhañ, un deiz, en ankounac'h, ha n'en em lezan d'o damvenegiañ enañ, ez eo dre n'eus hini en hon touez na zegasfent dezhañ da goun eñvorioù ker e cad tener. O c'hlevout a c'halv er-dro davedomp taolennadoù a boll-pell, hag a laka da advevañ trivliadoù-kalon a wechall. Fa gantree Kassignatos, gant a genvrezelidi, du-hont e bro ar C'hreizteiz ha war zouar-meur ar Sav-heol, pe manet e vijent a-sav e-kreiz al floc'hoù o c'hourizañ kêrioù poblet-ec'hon an darn-se eus ar bed, pe e vijent war ar maezloù na kresk ar gwez fiez hag al lore, war hentoù poultr-ennek Azia pe war wrimenn goueleo'hioù dizour ha dic'hilazvez bro Sour, na voule'he hini pe hini ac'hanomp, paotr pe blaç'h, un danevelladenn pe na kroge gant ur ganadenn diwar-henn amzerioù kentañ Manos ha Bena, e lavarjeoc'h, va den nat, ez oa kerkent evol p'he dije c'hwezhet un nezhenn distanus, o tont alenañ, war hor c'haronoù, hag int kor bras hag hon dilhadou, hor c'hilavioù-brezel, ha stornadoù hor c'hezeg. Ar bed estren er-dro deomp ne welomp mui-ken; an heol estren a-zloc'h hor penn ne sulihe ken deomp-ni hor c'hroc'henn. Heol kuziv ha seder an Hanternoz a bare war hon eneoù ! Dirak hor selloù e tremene peurvanoù glas Keltia, ha koabrennoù gwern hec'h oabl. Blejadeg he saout a glemp hag gannadeg he gareded. Froid he c'hoadoù a c'hvesamp ha tourni lirzhin he gwazheddennoù, a-dreuz kant ha kant a levloù, a zegouezhe betek emnomp.

Goulennoù :

- 1) Displegañ ar gerioù-mañ : gwaskediñ, hoalus, dishualded, gwezegoù, torc'hweniañ, tonenn, buhezgezh, nesanded, kammveuliñ, emc'hloar, heoliennoù, miled, aven, arvariañ, gwrimenn, dic'hilazvez, kevrezelidi, klavioù-brezel, gwazheddennoù.
- 2) Klasket ar mumudoù a ziskouez yec'hed korfel ha speredel Manos ha Bena.
- 3) Pennas ec'h anad an natur en arrouden-se ?

TRIDE SIZHUNVEZH WARN-UGENT  
=====

Kentel I

YEZHADUR

Studiañ al lavarenoù nac'h, goulenmata h.a., §§ 754-769.

Poelladenn :

- 1) Pegoulz lakaat ar rener e penn ul lavarenn nac'h ? Reit pemp skouer.
- 2) Pennas ober gant EVIT e penn ul lavarenn nac'h ? Reit teir skouer.
- 3) Pegoulz e c'haller lakaat HA e penn ul lavarenn c'houlennata ? Pennas e reer gant ar ger DAoust ?
- 4) Savit peder frazenn er stum goulenmata dieun :  
N'ouzon ket (gwir eo an dra-se ?)  
Goulen a reas (daoust hag-eñ 'oa deut Yann e kouz ?)  
En em c'houlenn a ra (komprenet nat hoc'h eus ?)  
Den ne oar (dont a ray ?)
- 5) Savit teir lavarenn gouzispiegañ, en ur zisklêriañ bep tro ar ster anezho.

+ + + + +

LENNADENN RENET : Ar re c'hlas (Barezh Breizh Kerarker)

Ar chas a glevan oc'h harzhal ! setu ar soudarded c'hall !  
Tec'homp kuit 'trezek ar c'hoadoù ! kasomp a-raok hor chatal !  
Daoust hag-eñ, paotred Kerne, e c'houzañvimp da viken,  
E c'houzañvimp ar vac'herien a wask al labourerien ?

Gwallet gante hor merc'ned koant; lazhet mamm ha nab ha den;  
Lazhet zoken an dud klaviv paour, 'balanour d'o daouarn gwern.

Tanet gante ti ar beorien; diskaret ar nanerioù;  
Devet an ed, devet ar foenn, er parkoù hag er pradoù.

Troc'het ar gwez el lorc'hoù, ha laket da ober tan;  
Ken na vo avaloù na sistr, da nav pe zak vloaz ac'hann.

Laeret hor saout, hon oumered hag hon ejened, siwazh !  
Ha kaset mesk gant o ferc'henn, a'ar c'higer d'ar c'hêrioù bras.

Laeret zoken traoù an iliz; pilet zoken hon tourioù;  
Straojet zoken ar c'harnelioù, ha skignet ar relegoù.

Gwastet traoù-kar Breizh-Izel, ken drus ha ker glas gwechall;  
Ken na glevar mui tro-war-dro nouezh den kennebeut chatal.

C'hoazh na ve roet skuilhañ, hor gwalc'h, daeloù druz d'hon daoulagad,  
Nemet pa wel skuilhañ daeloù, an den kêr a skuilh ar gwad.

C'hoazh na ve roet kaout ur groaz, e pelec'h e taoulinfemp,  
Evit goulen digant Doue an norzh p'ini a vank deup !

Met ho kroaz santel, na Doue, zo bet pilet e pep lec'h;  
Ha kroaz ar wintellerer a zo savet an he lec'h.

Bemdez 'weler ho pelsien eveldec'h war ar c'hilavar,  
Eveldec'h o stouñ o fenn o pardonñ d'an douar.

Re o deus gallet tec'hout kuit, aet da guzhat er c'hoajou;  
Eno oferiont diouzh an noz; e bag, war vor, a-wechoù.

Dann o deus treuset ar mor bras, divroet ha disouten,  
Gwell gante sentañ ouz Doue, evit sentañ ouz an den;  
Gwell gante debrif dianken, er broioù pell, bara kerc'h,  
Evit debrif bara gwirizh, bara an diaoul, gant an nec'h.

En o suez, an douerien a zebr danves an dud paour,  
Goude bezañ gwerzhet Doue, evel Judas, evit aour.

Riv bemal na fell ket dezhañ mont da glevout an touer,  
Zo war var da goll e vuhez; bet denjentil pe gouer.

Tudjentil, ha tud a iliz, tud diwar ar maez, sonn o fenn,  
An holl Vretoned a wanaer 'balemour ma int kristen !

Bremañ 'hallez, boued an ifern, reiñ da galon-te d'ar joa,  
Pa 'teus lakaet hon aelez-ni e-barzh an neñv da ouelañ !

Pa 'teus lakaet lezenn an diaoul e-lec'h gwir lezenn Doue,  
Pa 'teus lazhet ar velelen, an dudjentil, ar roue !

Pa 'teus lazhet ar rouanez, pa 'teus stlapet d'an douar  
He fenn gant penn flour Elesbed, an itron santel, he c'hoar;

Pa 'teus taolet er c'hav hudur mab ar roue, eñ bugel,  
Hag hen dalc'hez e-barzh ar fanek da vrainañ ha da vervel.

Kuzh da benn, heol benniget, en ur welout torfedoù  
Pere na alefe bezañ graet nemet gant drouksperedoù !

Kenavo, Jezuz ha Mari, dispennet ho taolennoù,  
Ha lakaet d'ober pavezioù, gant ar re c'hilas, er c'hêrioù.

Kenavo, foñs ar vade'iant, e-lec'h e kavjomp gwechall  
Nerzh evit gouzañv ar marv kent evit yev an dud fall.

Kenavo, kleier benniget, a gane war hor pemmoù,  
N'ho klevimp mui en hor gervel, sul na gouel, d'an ilizoù.

N'ho klevimp mui o kmañ gae; siwazh ! divadez ho penn !  
Teuzet, siwazh ! gant ar gêriz evit ober gwenneien !

Kenavo, Bretoned yaouank, a c'halver d'an armeoù,  
E-lec'h na koller an un taol ar feiz hag ar buhezioù.

- Kenavo, ma mab, kenavo da draonienn Jozafat !  
Pa vi er-maez eus Breizh-Izel piv a zifenno da dud !

Pa larmo re kêr gant ma zi, me 'vo klevet o laret :  
"Ma vize ma mab er gêr, en defe ma diwallet !"

- Deus etre divvrec'h da vamm-gozh 'deus da zouget, ma bugel,  
Deus war'galon 'deus da vaget, ma mabig paour, kent mervel !

Pa zistroi en-dro d'ar gêr, 'vin aet kuit eus ar bed-mañ;  
Deus amañ, deus ma'z priatain, evit ar wech diwezhañ.

- Tavit, ma mamm, tavit, ma zad, ne in ket d'ho tilegel;  
Chom a rin evit ho tifenn, evit difenn Breizh-Izel.

Reuzeudik bras eo bout gwanet; bout gwanet n'eo ket maez;  
Nemet plegañ d'ar skraberien, evel tud lent ha kablus !

Mari eo ret monet d'an engann, engann a rin evit ar vro;  
Mari eo ret mervel, e varvin; kuit ha laouen war un dro.

'M eus ket aon rak ar boledoù; ne lazhint ket ma ens;  
Pa gouezho ma c'horf d'an douar, ma ens 'savo d'an neñv.

A-raok ! paotred vat Breizh-Izel ! entañ 'ra va c'halon;  
Kreskiñ a ra nerzh va divvrec'h; bevet ar relijion !

Bebet an neb a gar e vro ! bevet mabig ar roue !  
Ha ra yelo ar baotred c'hilas da c'hoft hag-eñ zo Doue.

Buhez evit buhez ! tud vat; lazhañ pe bezañ lazhet !  
Ret e oa da Zoue mervel evit gounit ar bed.

Deus er penn gameomp, Tintanieg, gwir Vreton a-holl-viskoazh,  
Te hag a-raok beg ar c'hanol, morse da benn ne droas.

Deut er penn gameomp, tudjentil, gwad real demeus ar vro;  
Ha Doue a vezo neulet gant kement kristen na zo.

Hag en diwez e tey en-dro e Breizh al lezenn wilion,  
Koulz ha Doue war e aoter, hag ar roue war e drou;

Hag a-neuze, traoñioù Kerne a gende glas adarre,  
Hag ar galon a zigoro gant bleuñv an ed hag ar gwe.

Neuze, kroaz Jezuz, hor Salver, a savo splann war ar bed;  
E-harz he zraid lilioù kaer druz gant gwad ar Vretoned.

#### Goulennoù :

- 1) Displegañ ar gerioù-mañ : mac'herien, karnelioù, traoñioù, gwintellerezh,  
"debrif dianken", "kav hudur", briata, "bout gwanet".
- 2) Ar werz-se a oa da gentañ lernagezh dre gomz; ac'hano laoskentez ar yezhadur  
a-wechoù. Notit an troloù-lavar amreizh a gavot er varzhoneg.
- 3) Pe vare e vo savet ar werz-se ? Petra hen ro da c'houzout ?
- 4) Petra 'soñj ar barzh yaouank diwar-benn ar c'hêrioù hag o annezidi ? Perak ?

+ + + + + + + + +

#### Kantel 3

#### PENNAD-SKRIB

N'eus ket mui ezhomm da reiñ alioù deoc'h bremañ. Taolit pled ouz ar brouilhad,  
avat. Arabat kregiñ ur pennad e traoñ ur bajenn. N'ho pet ket aon da forañ paper :  
al linemoù a lezet e traoñ ur bajenn a dalvo deoc'h d'ober jedadennoù, da skour !  
Na ankoait ket ivez ez eo ret divankañ ar gousserid, pe ar brouilhad. Na skrivit ket  
re vunut; legit ur bann gwenn ledan a-walc'h war-gleiz. Skrivit en un doare kompenn  
ha lemmus.

+ + + + + + + + +

Kontel 4

LENNADENN DISPLEGET : Frederiadennoù diwar-benn ar Yezhoù hag ar Brezhoneg, gant Meven Mordiern, Levrenn VI, pennaed XXXII.

AN DIV REIZH HOUARN

Ne vevn petra a reer, div reizh a zo na dloer terrif birvidken, war zigarez ebet, dre ma'z eo stag outo buhez ha nerzh ar vreizhadelezh. An div reizh-se a c'heller berrzastun an div youc'hadenn-mañ : Brezhon da gentañ ! Brezhoneg hepken !

Brezhon da gentañ ! Klac'hadon an tremen-marv eo ar youc'hadenn-mañ-kenstourmañ all a bep seurt a glevor e Breizh evit an amzer. Houmañ, ha houmañ hepken, na vez lak-aset ar spered, ar galon hag an oberoù a-unan gant an diweuz, a vo un harz ouzh an holl nerzhioù dispenn ha dichafrentañ e Breizh a zo gwashoc'h-gwazh oc'h ober freuz ha reuz amañ.

Kevezerezh zo ret koulskoude etre ar broadoù. Hogen, war dachenn an oberoù a beoc'h, war dachenn ar sevenadurezh hepken. Hep kevezerezh leal, hep kendanousez yac'h war dachenn al labourioù a sevenadurezh, e teu ar broadoù da lezirekaat, da vorifañ ha da glivfañ er broviñsiadegezh. Broadelourion, hag a zo gouest da ober o seizh gwellañ evit lakaat ar yezhig a garont da zont da yezh a zeskadurezh hag a sevenadurezh a vez anezho peurliesañ tud a vije chomet digas ha dilabour na vije bet ret dezho bezañ beuzet en ur yezh vras komzet ha skrivet gant tud a gent-milionadoù. Dre o strivad-ennoù e krouont, - pe e klaskont krouiñ, - kreizzennoù-aozañ-deskadurezh, kreizzennoù-aozañ-sevenadurezh, ha seul liesoc'h na vezo eus ar c'hreizzennoù-se dre ar bed, seul welloc'h e vo.

N'eus netra hag a ve mousoc'h, lazhusoc'h d'al labour sevenadurel eget an unvanded pouner ledet war darnioù bras eus ar bed gant ar pobloù-mac'hon o klask kas da get kement yezh ha kement sevenadur n'eo ket o hini. E deroù an oadvezh kristen, ar Romaned, gant astenn mantell-vougañ unliv hag unstum o yezh hag o sevenadur eus nozer Adriaen d'an Ad-Atlas ha d'ar Mor Du, o deus plaenast hag evel digoret an hent d'ar Varbarek dre vorzañ ar pobloù sujet, o lazhañ ameo ar spered-krouer, ar spered-embrog-er, ouzh o c'has e pep tra da heulterien, da zvezerien eus an izelañ seurt...

Labourat d'en em wellaat dre an hent brezhonek, ha drezañ henken, reiñ sikour d'ar re all d'en em wellaat dre an havelepe hent, mar sellomp, setu petra zo dindan Brezhon da gentañ.

Brezhoneg hepken ! Er-maez eus ar Brezhoneg n'eus ket a Vreizh. N'eus ket a Vrezhon hep Brezhoneg. N'eo ket a-walc'h gouzout ar yezh. Ret eo ober ganti. Setu petra a vennañ lavarout dre ar c'homzoù a zo amañ uheloc'h : "mont dre an hent brezh-ones". Nard oc'h rediet gant aleadoù ho kang da gomz ha da skrivañ galleg en em zig-ollit war an tachennoù all; ha, dreist-holl, war dachenn ar vuhez prevez a zo deoc'h penn-da-benn. En ho tiegezh ha gant brezhonegerien all eveldoc'h, brezhoneg hepken ! N'eus nerzh-enep ebet eus an diavaez evit harz ouzoc'h da gomz bepred brezhoneg etre kerent, keniled ha kennoez.

Brezhoneg hepken ! Dre zero'hel da gomz ur yezh, en holl zarvoudoù bras ha bihan ar vuhez, eo e talc'her bev ar yezh-se; dre ober dalc'hamat ganti, ha dre he c'homz kerkouiz ha dre he skrivañ, eo e leder an anaoudegezh hag an implij anezhi. Pennas deskiñ ar brezhoneg, penaos en em glokaat war ar voez pemdeziek anezhañ, na ne gaver, e-tonez ar vrezhonegerien desket, tiegezh ebet e-lec'h na vefe graet nemet gant ar brezhoneg. Etre brezhonegerien, ha dirak galleggerien tuet da zont da vrezhonegerien, brezhoneg, ha brezhoneg hepken.

Bez' ez eus tud e-leizh, anezho peurliesañ berrweleion pe skañbennelion evit scuezhiñ rak an dalvoudgezh a stagomp ouzh ar yezh. Gant gwir abeg eo e lakaomp ar yezh dreist da bep mad all a zo e-kerzh mab-den. Rak ar yezh eo moul ar mennoziou, moul mennoziou ar Spered, ha kement a denn da zistresañ, da vilaat, da baouraat, da defval-aaat, da drefodekaat ar Yezh zo ur pec'hed a-enep d'ar Spered. Diboell pe dall an nob

n'her gwel ket.

Goulennoù :

- 1) Displegañ ar gerioù-mañ : breizhadelezh, berrzastun, tremen-marv, dichafren-tañ, kendanousez, "klivfañ er broviñsiadegezh", "pobloù-mac'hon", morzañ, berrweleion, skañbennelion, trefodekaat.
- 2) Petore rebech a ra Meven Mordiern d'ar yezhoù bras ?
- 3) Petra eo alead pep Breizhad, gouez da Meven Mordiern ? Petra 'soñjit eus kement-se ?


+ + + + +

Kontel 5

DIBUNADUR : Ar re c'hlas, 12 gwerzenn gentañ.

A-hervez e vefe bet savet ar werz-mañ gant ur c'hloareg yaouank eus ar Menezioù Du, ensavet a-enep ar Republik gall nevez. Ho pet koun e tremen an istor da vare an Dispac'h gall hag ar Chouanterezh. E-lec'h emezelañ en arme ar C'halleoued e kev gwel ar paotr yaouank tec'hout ha ren ur stourm kuzh ouzh ar "re c'hlas", soudarded ar Republik gall. Displegañ a ra amañ doareoù vil ar soudarded c'hall e Breizh, o muntroù, o skraperezh h.a. Pelloc'h e kirdio diouzh e dud. Glac'haret eo e vamm hag an deus rak ar soudarded c'hall, gant gwallvrudet ez int. Kounomp ivez pegen kreñv e oa an tiegezh er gevredigezh vreizhat. Un dismantr, ur rivin hag ur rannalon ez eo gwel-out ar mab o kuitaat an ti.

Evel an holl ganaouennoù-pobl dastumet en 19t hag en 20t kantved e tile ar werz-mañ bezañ kanet. Setu amañ an ton :



Ar chas a glevan oc'h harzhal! Setu ar soudar -ded c'hall Ar chas a glevan



oc'h harzhal setu ar soudar -ded c'hall Tec'homp kuit trezek ar c'hoadoù Kas-



omp a-raok hor chatal Tec'homp kuit tr. ar c'hoadoù Kasomp a-raok hor chatal.

+ + + + +

Kontel 6

SKRIVADENN

Testenn ar sizhun, ha goulennoù.





Goulennoù :

- 1) Displegañ ar gerioù-mañ : kelennadurezh, bod-spenn, hengounioù, aloubidigezh, en em zivevañ, magadur-spered, lorc'hentez-vro, damantiañ.
- 2) Petra 'ouzoc'h diwar-benn an aozer ? Diouzh ret, klasidit e-barzh Istor al Lennegezh, §§ 173 ha 267.
- 3) E niz Eost 1923 e voe enbannet ar pennad-se war Breiz Atao. Perak e oa, hag ez eus, kalz muioc'h da ziskar eget da sevel e Breizh ?
- 4) Perak e lavar ar skrivagnor "ober un enklask dre ar Bed" ? Petra 'soñjit eus ar mennoñ-se, ha peaos e welit al labour-se ?

+ + + + +

Kentel 5

GERIADUR

Studiañ ar gerioù kevrennek, §§ 869-873.

Poelladenn :

- 1) Dielfennañ ar gerioù-mañ : an troc'hafi bezhin, ar c'henedus, ar gwdr, ober ur c'hempenn d'e zilhag, un den raktal, ar c'huah-heol, an divroañ, un ober, un div-errañ.
- 2) Disklêriañ pe rummoù gerioù a gaver er gerioù kevrennek-mañ : noazh-ran, nezh-nik-dall, bouzar-kloc'h, kozh-Noe, teñval-sac'h, tomm-skaot, brain-put, diboar-kaer, tachenñ-c'hoari, skulzh-faezh, karr-nij, ti-evañ, poblet-stank, neuziet-kaer.
- 3) Displegañ stumidigezh ar gerioù-mañ : douarhentou, morlu, brogarour, pretti, hanvrezhoneg, tangarr, skinobererezh, cablhentou, greanti, tirberc'henned.

+ + + + +

Kentel 6

SKRIVADENN

Grit evel kustun, ha respontit d'ar goulennoù.

+ + + + +

Kentel 7

LENNADENN RENET : Izold gwonn he mine'hoarzh, gant Langleiz, pp. 149-151.

Ne c'helle mui an daou garedig na bevañ na mervel an eil hep egile rak, pa oant dispartiet, ne oa ket mui ur vuhez a stlejant : ar marv hag ar vuhez, war un dro, ne oa ken. Dre ar morioù hag an inizi, dre ar broioù pell, e strivas Tristan da dec'hout rak e donkadur ha da ankounac'haat tristidigezh e stad.

Awelout a reas al Leon, e rouantelezh, e-loc'h na voe degemeret gant Ronald Feal-d'e-c'her, evel ur nab karet.

N'edo mui, koulskoude, evit padout en diskulzh. Kantreal a reas eta, e-unan-penn atav gant Gorwenal, eus al Leon d'ar Friz hag eus ar Friz da Vro Gavoa, en ur dremen dre Alamagn ha Bro-Spagn. E gles e ginnigas, e gopr, da veur a roue hag e kasis da benn neur a daol-kaer leun a riskl.

Siwazh ! E-pad an daou vloavezh-se, n'en doa degemeret kalou ebet eus Bro-Gorne, na kannad na licher.

Krodiñ a reas, neuze, e oa bet ankounac'haet gant Izold, hag he doa en em zistag-et a-grenn dioutañ.

Distrañ a reas, tremas ar c'hornog hag, un deiz, dre hir varc'hakaat, e tizhas douar Breizh-Vihan. Parkeler losket, kêriadennoù didud, ha nogerioù dismantret, setu o roñsead. Kun na c'hellas ket ar marc'hag yaouank en em virout a soñjal, leun a walkoni : "Skulzh-divi on. Da betra e servij din an holl riskloù-se a glaskan abaoe koid-eus kimladet diouti ha n'he deus ket kavet an tu, zoken, da gas din ur c'hannad bennak; bevañ a ra el levanez endra na vevan-me er glac'har, hep toenn na telt a-us d'an fann nemet re a verzh... Va ankounac'haet he deus a-grenn. Petra 'vean dezhi an den rouezdik a ergerzh dre ar vro ouez-mañ ? Daoust ha ne c'hellin biken ankounac'haet, ne ivez, an hini am dilez ? Daoust ha ne gavin ket, en diwezh, unan a ouezo frealziñ va c'hannad ?"

E-pad daou zevezh, e treuzas Tristan ha Gorwenal meur a vourc'h ha meur a gêriadenn hep gwelout hag un den nag ur c'hi, nag ur c'hilhog zoken. D'an trivout deiz, koulskoude, da vare en navet eur, e tegouezhont gant ur run koadek, n'edo kluchet war e lein ur chapel gozh hag, e-lichen ar chapel-se, ul legallig, chisket en ur c'hroc'ha-gavr a ziwalle e gorf diouzh ar fall-anzer, ur manac'h a oa stalit.

Daoulinet war an douar, edo dres o pedif Mari Madalona da reiñ dezhañ muioc'h a gouz c'hoazh eus e bec'hedol. Seludif a reas Tristan hag e floc'h hag endra na stago Gorwenal ar c'hezag ouzh noger ar c'hraou, e sikouras ar marc'hag yaouank da lanel o dokam hag e roched stann-orjal, hag oc'h azoas ar pred.

Ne voe ket gwall fonnus hemañ : douar ar stivell tostañ ha bara heiz, pobet dindan al ludu, ha setu holl !

Echu ar goan ec'h azezjont e-tal an tan. Diskenn a rae an noz. Tristan a c'houlennas ouzh ar manac'h anv ar vro rivinet-se na veve emi.

"Aotrou ker, eme ar manac'h, douar Breizh-Izel an hini eo. E dalc'h an duk Howel emañ. Ur rouantelezh pinvidik a oa anezhi gwechall, gant par ou glas aret kaer, na kreske war o bevennoù gwez-avalou e-leizh. A-c'houdevezh, siwazh ! ez eo bet drastet ha freuzhet penn-da-benn ar vro-mañ dre an tan hag ar skraperezh, gant soudarded an aotrou Riol, kapt an Nacned, ken ne chome mui emi ur voundernig douar na vefe ket gwasat. Evel-se emañ kont gant ar brezel..."

- Breur, eme Driktan, daoust hag e c'uiet'h perak en deus graet ar c'hont kenentse a noaz d'an duk Howel hoc'h aotrou ?

- Bez' e c'hellan, aes tre, aotrou kaer, displegañ deoc'h sigur ar brezel. Riol a oa dindan beli an duk Howel. Ur vourc'h en doa hemañ, koant e-touez ar re goantañ.

Riol en dije karet he c'hemer da bried, hogen e ouie mat n'en dije ket felllet d'an duk Howel reiñ e vourc'h a galon vat da unan eus e zalc'hidi... Setu perak en deus klasket he skrapañ dre hag ha gwidre."

Tristan a c'houlennas, ouzhpenn : "Ha ne c'hell mui an duk Howel dere'hal penn d'e enebourion ?"

- Nemet gant kalz a boan. Ha, koulskoude, kreñv eo nogerioù Kamez, ar c'hastell n'eus nemetañ a chom c'hoazh e dalc'h an duk, ha ken kreñv all kalon e varc'hed, ar marc'hag dispart. Emañ e enebourion o pouezañ muioc'h-mui warnañ, evelato ! Daoust hag e vo gouest da stourm outo hir anez ?..."

Tristan a c'houlennas, neuze, ha pell edo c'hoazh diouzh Kamez. "War-hed ul lov bennak, hepken", a respontas ar manac'h.

An tronoz vintin, e kimade Tristan diouzh e ostiz, e pigne war e varc'h hag e antronoz vintin, e kimade Tristan diouzh e ostiz, e pigne war e varc'h hag e skoe, a-herr, tremas Kamez, heuliet bepred gant Gorwenal. A-benn un hanter-our bennak, e tegouezhe e-tal nogerioù ar c'hastell. Soudarded a oa en o sav war an hent-ged. Goulenn a reas komz ouzh an duk. Edo dres Howel e-touezh e wazed, ha Kaerdin war un dro gantañ.

Kentel 1

YEZHADUR

Studiañ an islavarennoù-doareañ, §§ 784-793.

Poelladenn :

1) Petra 'verk an islavarennoù-mañ :

- "Kontañ istorioù a rae, bep tro na ranke chon azezet."
- "Ha daoust ma teue en oad, ne furas tamm evit koshaat."
- "Faousz a ris gant aon na vije unan bemak er-maez o selabu."
- "Ha pa spontfe ar re all, me ne spontin ket."
- "Hennezh, ar c'heginer, pegwir en deus fiziañs emnon, a lavaro din."
- "Ar wrac'h a savas, a grogas er gleuzer, he dibradas, en doare ma kouezhas bannoù skilbrijenn war benn an den klañv."

2) Notit an islavarennoù hag ar stagelloù a grogont ganto :

"Kerkent ha ma oa aet an tad kuit, al loen a lavaras da Vari :  
- Bremañ ez oc'h ar rouanez amañ; setu aze dilhad, levrioù ha binvioù a bep seurt d'en em wiskañ, da lenn ha da ganañ, hervez ma ho pezo c'hoant. Pa viot skilzh, n'ho pezo nemet lavarout d'al lore kanañ d'oc'z, hag e raint; pep tra zo amañ dindan ho kalloud, ha me zoken ivez evel ar re all; evelato e karrfen ho pe ar vadelezh da lezel ac'hanon da zont amañ d'ho kaout, e-pad na viot o leinañ bennez, rak nemet er mare-se eus an deiz n'on vak. Kredit ac'hanon, ma em aus mistri ivez da ober diouto, evel na rankit ober diouzhin-me." (Troud ha Milin)

+ + + + +

Kentel 2

LENNADENN DISPLEGET : Enez ar Rod, gant Langleiz, pp. 59-62.

Piv eo Langleiz ? Sellit en Istor al Lennegezh, §§ 227 ha 273.

N'edont ket degouezhet c'hoazh en hanter hent pa spurtantjont un dra zistum a zeuz eus an nec'h en arbenn dezho.

Diskenn a rae war he fouezig kaer... o luskellat evel na vefe bet a-spilh hi ivez !

Ha pa voe tost a-walc'h, e verzas ar plac'h gant souezh e oa un den ranzel e oa... nemet ken tev e gorf na n'he doa gwelet nemetañ diouzh an dansell kentañ.

Hag hi, souezhet, ha gouennata E Veurded da c'houzout petra e oa ar spontailh bev-se, heñvel ouz ur berenn ?

- Ar Micherour kenpouezher eo, ha netra ken ! eme E Veurded, hep mont pelloc'h gant e zisplegadenn.

Daes e oa dezhi, avat, distagañ he selloù dioutañ. E verzout a rae, a-dreuz d'al leurenn, o vont war vihamaat atav a-gentizh na save ar voull.

Ne splete ket bremañ bout kalz brasoc'h eget ur c'hreunann vil, ha koulskoude e tiskenne c'hoazh !...

- Diwallit ! eme E Veurded, a-greiz-holl. N'emaomp ket mui pell bremañ ! Arabat deoc'h chon d'ober sc'fjoù pa vano ar voull strink a-sav... rak en traoñ e vo unan na c'hortoz ket hoc'h aotre kent disteurel e zour.

...

Kentañ tra a welas, avat, o tifoupañ er-maez, a voe a-us dezhi, un doare bolz luc'hus a gelañ an Enez en he fezh hag a stank groñs an dremwel.  
Hag ankounac'haet ganti an aod, ar mor, hag ar seizh avel :  
- Eneñ emañ en heol ? emezi, spournet.

- An heol ?... a souezhas E Veurded an Niverenn Seizh. Daoust hag e fell deoc'h komz eus ar steredennig dister-se, a dro en-dro d'ar bed, o lezel bennez en deñvalded an hanter eus ar broioù, n'eo deus nemeti d'oc'z skilbrijennañ ?

"Nann ! n'oc'h ket evit gwelout an heol, amañ."  
"Savet ez eus bet a-us d'an Enez, gant hon Ijinourion Ijinañ (ra vint jedet) ur volz strink treluc'hus, na lez da dremen a-dreuz dezhi na bannoù an heol, nag andennoù al loar, na skingù ar stered."

"Setu perak n'eus mui amañ na noz, na deiz !"  
- Na noz, na deiz, nag heol ?...  
- Na glav.

- Nag heol, na glav, nag hañv, na goañv ?  
- Na grizilh, nag arnev, nag evel kemebeut... panevet an aezhennig skiantol-se, a c'hwezho tichantik, evel na ra bennez, da gemeskañ un tarrig an aer kozh, a vez techet bapred, gouzout a rit ! da dreñf da aer-sac'h.

- Na noz na deiz, na glav nag avel ! Ma !... re wan on c'hoazh, eme Lilianna; me 'garfe...  
- Taolit ur sell, ac'hoel, ouz al laez war c'horre !  
"Setu, rag-eun dirazonp, ar voull-war-skourr a gas da gem an Tour-Spi-Kreiz. Ac'hanon, e c'hellot teurel un dansellig a-ziabell war an Enez.

- Hag ar mor a spurtant, en diwez ?  
- Evel reizh ! a eilgerias E Veurded, o tremen dirazi... ur mor a acour hag a aro'hañt !...."

Goulennoù :

1) Displeget ar gerioù-mañ : spurtant, "en arbenn dezho", "war he fouezig", dansell, "E Veurded", spontailh, "Micherour kenpouezher", a-gentizh, difoupañ, "bolz luc'hus", groñs, emeñ, treluc'hus, andennoù, ac'hoel.

2) E peseurt bed eo degouezhet Lilianna ? Diskouezit ar munudoù a lak anat d'al lennar ouz ar bed-se.

3) Pe enzaloc'h he deus Lilianna ouz ar pezh a zo en-dro dezhi ?

+ + + + +

Kentel 3

PENNAD-SIKRID

"Ur barr-arnev, an arvest hag ar pezh hoc'h eus santet."

Evel ar wech all e vo div lodenn en ho pennad : un daolenn hag un dielfennadur eus ar pezh hoc'h eus santet.

- an daolenn : da gentañ, savit ur steuñv resis. Bez' ez eus neur a brantad en ur barr-arnev. Spis e vo ho livadur : studiit a-dost al livioù, ar gouloù, an trouzioù. Krogit da livañ penn pennañ an dremwel, ha goude deuit betek dirazoc'h.

Notit ivez enzaloc'h pe ersav an dud hag al leoned tro-dro.

- ar santadoù : klaskit koumañ ar pezh hoc'h eus bet santet er blegann-se. Pe aon ruz (ha petore aon ?), pe laouenidigezh ? Levrit ivez penaos e teus a-wel ar santadoù-se.

Ha bremañ, savit ur steuñv resis, gweñv ha munudoù. Goude e savot ur rann-bennad war ur brouilhad. Savit ivez steuñv an digoradur hag ar c'hlozadur.

## Kantel 4

DIBUNADUR : Enez ar Rod, adalek "Enez ennañ an heol..." betek "... nag hañv, na goañv."

Pouezañ war sousez ar plac'h yaouank : ennañ o tizeleñ ur vro skiantel rik, n'eus enni mann eus ar pezh a ras he levezeg-vevañ en he bed kozh. Skodeget eo, ha spouronet ivez. Enebiñ ouzh kement-se prozez yen ha plaen E Veuried, an hini hec'h anbroug a-dreuz ar bed spontus-se.

Beun kenañ eo ar yezh en arroude-se, ha diouzh an ceunoded-se e tem kalz eus he braventez. Gerioù boutin, gwall voutin : an heol, an noz... Na pünvidik evelkent ar mennoziou, an trivliadoù a santer dindan ar gerioù-se.

+ + + + +

## Kantel 5

LENNADENN REVENI : Dispac'h al loened, gant Langleiz.

'Vel n'edo an henc'h'her kriz  
En ur gouelec'h teñval ha nozh.  
Eved an neñv en em delpas,  
Skulzhet gant e froudeñ vadus,  
O kelc'hiata a-us d'e benn,  
En ur c'harniñ, en ur goagal,  
En ur grial, en ur vic'hal.  
Ken na zeuas o klevout se,  
En ur bipjal, en ur c'hrakat,  
En ur viaoual, 'n ur c'hwitellat,  
'N ur razzilhat, 'n ur c'houirinat,  
En ur harzhal, en ur hudal,  
En ur yudal, en ur youc'hal,  
Ar re a gerzh, ar re a sil,  
Ar re a lamm, ar re a red,  
An holl viled.

Hag an tir, hag an oabl zoken,  
Ken buan hag an amev 'darzh,  
A voe gromet.

Hag en, souezhet dreist ha spontet,  
'Heskas e viron d'o lazhañ  
Ha 'dornas e wareg warno.

Hag i dizaon da dostaat,  
Ha da vodañ war-dro dezhañ,  
Ken na welas ken an neñv gwenn,  
Nag, ouzh e dreid an traerzh melen,  
Met ur bagad fiñvus, heugus,  
O c'houmijal hag o redek,  
Ken niverus ha ken gwaskus,  
Ma voe ret dezhañ chon difiñv,  
Seizet, mouget, leun a spouron,  
Nut ha peuzvarv.

Hag e zaulagad digoret  
O treiñ en o zoul lagad,

En a welas kreskiñ, gweñvifi,  
En-dro d'e dreid, en-dro d'e zrenn,  
Evel ur reverzhi euzhus,  
Niver an holl loened harlonk,  
Breudeur ar re an deus muntret,  
Deust d'e varn.

Pobl c'halloudek, petra 'fell deoc'h ?  
O Pobl viled, he pet truez !  
Ha n'oc'h ket va breudeur digonz ?  
Na rit droug din !  
O vezañ na'z on va-unan,  
Skulz-divi, diarnet ha dimoazh.  
'Kreiz hoc'h engroez.

- Naven ! Naven ! Gour didruet !  
Gour milliget ! Malon gasus !  
N'ac'h eus ket bet truez ouzimp !  
N'hor bo truez !

.....

- Truez ! Truez !  
- Tav ha selaou !  
Ne lazhet, nemet evit debrif.  
E lazhet te evit c'hoard !  
Evit dudi da zaulagad  
A gar hor gwelout o komezhañ,  
Dudi da zraouan ruz a vad,  
A gar tagañ.

Dudi da ziskouarn digermeh,  
Da galon a gar hor ronkeñ,  
A gar ar marv yen ha difrouezh,  
Hag argarzh pep tra difiñv ha bev.  
Nann, n'hor bo truez, gwaz kasus,  
Ouzh da spouron, ouzh da c'houzaviv,  
Da dremenvar !

Ra vlot, Miled, milliget !  
- Ra vi freuzhet !

Hag an holl oved eus an neñv,  
Re ar nor ha re ar c'hoardol,  
O koagal, kriad he gic'hal,  
A gouezhas 'vel main war e zrenn,  
Hag he rogas.

Hag an holl viled eus ar bed  
Ar re a sil, ar re a red,  
O hudal, yudal ha youc'hal,  
'Vel ur vifis-taol adserret,  
Holl en un taol e argadas,  
Hag e voustras.

Ha na chomas e-lec'h e gort  
'Met un nebeut a draezh glebiet,  
Den n'ouezas penaos e oa marv.  
'M eus hen desket gant ar mardien  
O deus debret en e vruched,  
E galon rev.

Goulennoù :

- 1) Displegañ ar gerioù-mañ : en em dolpañ, froudenn, kelc'hiata, "ar re a sil", miled, "heskas e viroù", gourmijal, reverzhi, marlonk, digemezh, ronkell, argarzhif, biñs-taol.
- 2) Pennaos e komprenit : "ouzh da c'houzañv" ? Displegañ implij "gouzañv" amañ.
- 3) Grit roll ar verboù a verk safar al loened, ha lakit anv a loen a vez ar c'hri-se gantañ.
- 4) Petore bed a spurmantomp a-dreuz ar varzhoneg-se ? Klaskit an troioù-lavar a ziskouez ar grizded hag an dic'hoanag.

+ + + + +

Kentel 6

SKRIVADENN

Grit evel kustum, ha respontit d'ar goulennoù.

+ + + + +

Kentel 7

LENNADENN DISPLEGET : Evit ket ha netra, gant Roperzh ar Mason.

Lanneier Kerabuz ! Setu bloazioù n'em eus ket ho kwelet en-dro, ha n'ankounazhan netra ag ho tremm ! Anaf eo e c'hanas karantez kentaf ma buhez, an hini ma entanas e-pad ma yaouankiz a-bezh.

Pa zibouker a Lannveur war-du Plafwour, e kaver, a-gleiz, un nivarc'h a bign war ur run lec'h ma troe gwezharall ur villin-avel. Ne chom anezhi nemet murgioù diskaret. Ac'hanemañ e tizoloer un dremmel ledan. Setu er c'hreiznoz roziou Pouskorv, er biz koadoù ar Monteg ha Frefavenn, er retor kêr an Orient hag he moged, tour kozh ar gavadenñ ha pikol gavr-houarn ar porzh-trezel savet a-nevez. Er gevred e spurmanter gwerni-radio Penn-Mane ha Kloc'hdi Porzh-Loeiz. Er c'hreisteiz, dreist tour tev an Arvor, setu ar mor bras ha, siklat er pellder, evel ur vaot hir o neual warnezhañ, enezenn C'hroe. Er mervent ar mor hepken. Er gornog, bourc'h Plafwour en he c'houmpenn hag er gwalarn koadoù uhel Sant-Matelin.

Tro-war-dro d'ar villin emañ tolpet lanneier meneziek, toulllet gant kant mangleuz dilezet, islonkoù graunvaen a-blom. Etreze e red gwennodennoù o troidellat a-gleiz, a-zehoù, gwezh tenn, gwezh war ziskam, e-mesk lann ha banal alaouret. Ne gaver den er gouelec'h-se. Ne glever nemet richan ar golveni kuzhet er bodoù, gann an alc'houed-ered o klask en aer tommder an heol ha klemm an avel a-vez an douar.

Met ar pezh a vez souezhus e Kerabuz, war ar roziou didud-mañ ken noazh ha gouez, a zo pinvidigezh an neñv, buhez dichan ar c'houmoul. P'en em led an ebr war ur c'horn-nad neudiet flour ha kinklet, n'evessaer ket outañ, dreist-holl pa chom gain ha siklaer. E Kerabuz war ar c'hribennoù digroc'henet, e wisk neñv kemmus Breizh holl e vraventez, gant c'hoari ar splander hag ar skeud, redadenn ar c'hogus uhel, lostoù-kizhier ha koumoul-red fulemek o bevvennoù, heuliadeg ar c'houabrennoù izel : lizennoù skañv ha brizh, duadennoù poumer evel menezioù erc'h.

Gwezh emañ dallet ar vro a-bezh gant gouel liv al laezh ar vrudenn pe uzenn al latar, o nijal war vol al lamneg evel ur vogedenn. Ar reier a sav hag a guzh aze pe ahont evel spontailhoù noz, hag e vez an drein karget a berlez gwenn.

Mouried ha didrouz ! Anaf eo en eus desket hoc'h anaout. Gant ho pam e tilezis soñjennoù strizh ar c'hrouadur evit huñvreal, huñvreal betek harzoù al lijer divent...

Ar baotred a zegouezhe eno gant armoù poumer, bishier penndosek ha talnoù, evel brezelourion an enzer gant. Gante en em ganment evel gouspined an Ter e dirbin su al lamneg, tu ar flagenn c'hlas a ziskenn betek ribl ar mor. E-pad an enzer-se e chomen war-dreñv na-uman, o klask bokeoù hag o huneal dibreder. Goude an engann e tistroent d'ar c'hamp ha ni da c'hoari an Indianed.

- "Ma breur rus a vrezelas evel ur gouron, a lare Jili d'Herri gant lid. Poumer eo e c'houriz gant blev sikrapet diouzh an enebourion. Niataroa, ar serser bras en deus konzet!"

- "Brezelourion, a lavaren neuze, kompennet en eus boued evit nabad kadarn ar Shawnees. Debrit hag evit ho kwalc'h. Loargann, merc'h an noz, he deus konzet !" Hag e tigoremp ar sac'h lec'h ma'm boa kaset adreenn an holl : bara, per ha sistr hag e chouke ar baotred en-dro din, e aior ur bod lann, en ur zebriñ didrouz.

Goulennoù :

- 1) Displegañ ar gerioù-mañ : diboukaf, nivarc'h, "pikol gavr-houarn", siklat, "islonkoù graunvaen", ebr, "kribennoù digroc'henet", fulemek, lizennoù, "vol al lamneg", lijer, uzenn, penndosek, gouspined, flagenn, huneal, gouron, lid.
- 2) Renablit anvioù ar c'houmoul en arroudenñ ha disklfriet ster reas pep hini.
- 3) Pennaos en em zalc'h ar vugale en o c'hoarioù ?
- 4) Diskouez penaos e car an enzer hon lakaat da drivliañ ouzh kaerder ar c'hornad-bro.

+ + + + +

C'HEBEC'HVET SI'ZHUNVEZH WARN-UGENT  
=====

Kentel 1

YEZHADUR

Studiañ ar peb-all eus an islavarennoù-doureañ, §§ 794-805.

Poclladenn :

1) Savit teir frazenn enno un islavarem asantifi, pep hini o kregiñ gant ur stagell disheñvel.

2) Savit teir frazenn all oc'h ober gant SEUL... SEUL...

3) Ledit bep tro furm reizh BOUT :

Mar ... erc'h arc'hoazh e rankimp chon anañ.

Mar ... gwir eo marv ne ray mui droug da zen.

Mar ... kavet al laer e vo barnet garv.

Mar ... trouz e tle bezañ ar vugale o c'hoari.

Mar ... e Gwened e c'hallez dont d'am gwelout.

4) Islinennañ ar stagelloù, ha displegañ o c'hefrifi :

"Hag eñ da gerzhout a-raok. A-benn ur pennadig ur c'hroz evel kruz ar gurun o penn pellañ an neñv a zeuas betek enno, ha koulskoude e oa digoumoul an eabl pa oan diskennet e-barzh an toull; ken souezhet, avat, e oan bet betek-henn gant kement a draoù na oan ket ouzh o gortoz, ma kerzhen da heul va blenier evel en un huñvre, dare da gredif ha da welout n'eus forzh petra. Ar gurun a dostae; krojal ha stlakañ a rae bep eil. Bale a rasamp bremañ war un hent douar kalet etre div voger uhel. An hevelep sklêr-ijenn hag er c'hambroù treuzet bremaik a gouezhe war an douar, nemet ez oa rouesoc'h marteze un netraig. Dre ma'z aemp, safar an arnev a greske. Me a selzous da welout a belec'h e c'halle dont, pa glevis mouezhioù gwazed, cholori ganto, o sevel en tu all d'ar voger." (J. Kerrien, Ar Roc'h Toull)

+ + + + +

Kentel 2

LENNADENN RENET : Kanadeg evit Nedeleg (I- War hent an iliz), gant M. Glanndour.

Ar Vugale

N'eo ket alies e kouezhe an erc'h da vare Nedeleg.  
Bravo'h a se pa c'hellomp, evit ar bloaz, hen frikañ dindan hon treid.  
Erc'h gwennoc'h eget gloan an deñved e sklaerdor ar c'hraou,  
Hag evelato, e oant bet, sur mat, gwelo'het gant ar vesaerion, a-raok bezañ degaset d'ar Mabig Jezuz.

Ar Mero'hed

Erc'h ken divlaz d'ar c'halonoù kabac'h gant ar pec'hed hag an amgredoni,  
Met drantiz leun evit ar vugale a gorf hag a spered !  
Hiziv kannder an neñv zo diskennet war an douar.  
Brasat levenez d'an eneoù purast !

Ar Wazed

Hiziv ar bed zo yaouanket !

Ar Vugale

Dindan da bokoù yen e c'hoarzh hor c'horfoù gren,  
Erc'h divent ha displann !  
Evel pa vije kresket d'hor c'halonoù, divaskoll elero'h.  
Gant c'hoant da zibradañ ha da vont d'an ec'hon.  
Hag ur wech savet uhel, uhel, taurel en aer skeltr, ur youc'hadenn vras...  
Pe marteze n'ouzomp ket perak.

Ar Mero'hed

Nann ! N'ouzoc'h ket perak, bugaligoù !  
Rak ar c'han-se a glevit gant c'hoant nijal  
Eo hini hoc'h Aeled gwenn o konz ouzoc'h en ho kalonoù,  
Kenenn koriou an Neñv, en noz-mañ evel gwechall,  
Oc'h embann keloù mat hor frankiz.

Ar Wazed

O kemenn dimp ar yaouankiz.

Ar Mero'hed

Rak setu dija nav miz echu, m'eo diskennet Gabriel, ul lilienn 'n e vizied,  
Ha m'en deus lavaret a-barzh an Tad, gant salud bras hag azazuez,  
E c'houlenne bremañ ar Verb diskenn er bed, evit lidañ Mister ar Gonz.  
Ha Mari en he c'halon he deus degaset ar c'heloù mat gant asant izelek ha grad :  
Frond-ar vleurienn a zo chomet en ti, frond ar vleurienn a leugn anezhi.

Ar Wazed

Kanenn ar Verb a leugn Mari.

Ar Vugale

Hag echu gantañ lavarout e gentel,  
Petra en deus graet an Ael ?  
P'eo distroet da lein an neñv,  
En deus fichet e lilienn  
E-touez ar steredennoù,  
Evit ma lugern da bell...  
Hag ar Vajed ouzh he gwelout  
O deus drouzhta samet o c'hañvaled.

Ar Mero'hed

Gwelit en noz, pobleù an Inizi, selacuit, broioù pell.  
Kannaded a beoc'h dre ar pevar avel, a embann deoc'h ivez ar c'heloù mat,  
War lein an tuchemnoù, e kreiz ar c'hrozghentoù e kuz servijerion ar Furnezh.  
D'ho kouviañ ivez da dañva e Bezehen bara ar Vuhez.  
Doredomp holl, bras ha bihan, etrezek Mari, gant mall ha doujañs,  
Rak pep iliz 'vel ar Werc'hez, a soug anni ar Verb santel, ar vouldaer c'hlan ha  
dic'.

Ar Wazed

Ha frond an ezañs a leugn an ti.

Goulennoù :

1) Displegañ ar gerioù-mañ : kanadeg, kabac'h, krinet, amgredoni, drantiz,  
"kannder an neñv", grèn, "an ec'hon", azazuez, "asant izelek ha grad", kañvaled,  
tuchemnoù.

- 2) Petra zo aroueziet gant an oro'h e penn kentañ ar varzhoneg ?  
 3) O lenn ar varzhoneg ez eur soubet en ur bed espar. Pehini ?

+ + + + + + + + +

Kentel 3

PENNAD-SKRID

Bremañ ec'h ouzoc'h ervat sevel ur steuñv, klask mennoziñ ha reiñ stum ha neuz d'ur pennad-skrid. Setu o vo pledet hiziv gant ar ger hag e dalvoudegezh e-barzh ar frazenn. Meur a z'oare zo da lavarout ar memes tra, se zo anat. Ewekent n'eus nemet un doare o tereout rik-ha-rik en ur gendestem.

E brezhoneg, evel en holl yezhoù, ez eus ur maread gerioù heñvel pe damheñvel o ster. Arsterioù, arlivioù zo war bep hini, evel just. Mat e vo teurel fed ouzh an dra-se eta ha diwall diouzh an azlavaroù. Koulskoude eo arabat ober a-dreuz hag a-hed gant heñvelsterioù : ret eo gwiriañ ster pep ger er geriadur.

Ret-holl ivez teurel evezh ouzh neuziadur ar ger : amañ e terec ur ger berr (en un daolenn, pe ur jestr, prim-ha-prim), ahont e kloto gwelloc'h ur c'herienn hir, amploc'h, lidusoc'h. Soñjit ivez e kenson ar gerioù. A bouez bras eo en hor yezh, evel 'ouzoc'h.

Diwallit dalc'hmat da stambouc'hañ ho skridoù. Emac'h amañ, n'eo ket evit drev-ezañ hor barzhed, met evit deskiñ skrivañ ha displegañ mennoziñ en ur brezhoneg reizh ha kompenn. Ar peurrest a zeuy da c'houde.

+ + + + + + + + +

Kentel 4

LENNADENN DISPLEGET : Ar Sikarned, gant Roperzh ar Mason.

Mae llawer mam a mun  
 Yn dweud eu gweddi hano,  
 Ond byddar yw y nŵr  
 Ac nid yw 'r gwynt yn gwrando.

EIFION WYN

A-ger e verdeant ar an teirgweri bras,  
 Pe'ar niz 'barzh an donvor bete San Francisco !  
 Hen displeg a ra c'hoazh, un huñvre ar o fas,  
 Ar re gozh hag a zo o tiskuiñ a-wersc.

Kaletet ur vecher e-kreiz ar golo'houidenn,  
 Flastret gant ar reklom ha sikaset gant ar skorn !  
 Goude, e'it ankouazhat avel pommer Beg Horn,  
 'Barzh ar perzhier estren na diroll an derzhien !

Di-hont er c'houriniz e c'hortoz ar maouezed,  
 Hep lizher, hep argant hag, evit o dihu,  
 Ar filajoù hepken e-tal korn an oaled,  
 Judem ar Birvidoù gant o mantelloù ruz !

Bremañ ar an donvor nend eus mui gouel erbet.  
 Marv eo an evned bras, serret o divaskell.  
 Ne chom e Kiberen 'met droug ar broioù pell.  
 O Doue, ho pet truez doc'h gouenn ar Sikarned ! (1)

(1) Morav tud Kiberen-

Goulennoù :

- 1) Displegañ ar gerioù-mañ : mendeif, teirgweri, donvor, kolo'houidenn, reklom, "evit o dihu", filajoù, "Judem ar Birvidoù", "droug ar broioù pell".
- 2) Petra lavarout a-zivout an daou verbarv "displeg" ha "diskuiñ" ? Petra eo ar fimm "kaletet ur vecher" ?
- 3) Displegañ ar skudenner-mañ : "Marv eo an evned bras, serret o divaskell".
- 4) Petra sante ar barzh p'en deus savet ar varzhoneg-se ?

+ + + + + + + + +

Kentel 5

DIBUNADUR : Ar Sikarned.

Merzet hoc'h eus emichañs e oa liv ar gwenedeg war ar gwerzennoù-mañ. E gwirionez e vo savet ar varzhoneg-mañ e gwenedeg, a-rack an eil brezel-bed. Mard oc'h gwenedour, pe mar anavezit kaer pouez-bouezh ar rannyezh-se, e c'hallot he dibunañ en doare orin. Flouroc'h eo /z/ ar gwenedeg eget /s/ ar brezhoneg unvan, da skouer, ha dirustoc'h ivez /h/ eget /z/ evit ZH. Hogen na n'eo ket boazet d'an distagadur-se, na glasket ket e zrevezañ, e doare ebet. Mastarañ a rafec'h ar varzhoneg, ha lu e vefe. Neuze e vo paot gwell d'he distagadur ordinal.

Perzh anatañ ar varzhoneg eo an aergelo'h a hiraazh, a zisouezh a lak da sevel ennomp. Echu ar merleadennoù, avanturioù martoloded Kiberen, echu ar vuhez dizalc'h, diroll a-wechoù. N'en em zispak ket mui gouelioù al listri kaer. En em damolodet eo ar verdeidi gozh en o c'horn. O eñvor o deus dalc'het, o huñvre. War un dro gant koue d'un tremened kaer, e tiskouez ar barzh e-leizh a druez ouzh ar gozhidi-se, tizhet ganto pe dost dibem o buhez. Skouenn ur vro war ziskar, war gozhañ; met ivez youc'h ur galon entanet ha marnardiet. Di n'eo ket an avenadur, e gwirionez, p'hen tostaer ouzh hini Langleiz, da skouer.

+ + + + + + + + +

Kentel 6

SKRIVADENN

Grit evel kustura, ha respontit d'ar goulennoù.

+ + + + + + + + +

Kentel 7

GERIADUR

Studiañ ar rakgerioù, §§ 874-877.

Poelladenn :

- 1) Pe ster zo d'ar rakgerioù AD- hag A7- ? Roit pemp skouer eus pep hini.
- 2) Pe ster zo da AM- ar gerioù-mañ : amreizh, angridiañ, amb'houloù, ampelliañ ? Peseurt diforc'h a rit etre "amreizh" ha "direizh" ?
- 3) Petra 'dalv ar rakger AR- er gerioù-mañ : arruz, ardruc'h, arvor, arsav ?
- 4) Pennas ober gant BRIZH ? Roit peder skouer. Roit daou verb enno ar rakger BRAS, ha tri all enno ar rakger BERR. Displegit o ster hag o stumidigezh.

SEIZHET SIZHUNVEZH WARM-UGENT  
=====

Kentel 1

YEZHADUR

Studiñ an islavarenoù-stag, §§ 806-813.

Poelladenn :

1) Lekañ A, E, HAG A pe MA, hervez na tere :

- "Izeloc'h en diaz, e klouare ul lemm-kouronkañ, .. c'helled ebatiñ."
- "Un amezeg an boa, Wels e anv, .. oa perc'henn d'un atant."
- "Ar barrad-amzer .. kolljomp tri eus hon tud."
- "... baz an dour gindan va redellad pourvezioù ha maro'hadourezh .. stagis, testañ .. c'hellis, ouzh ar ribl."
- "Ur mani gwelva a oa eno, .. tizhed gwelout unan eus talbennoù louet ar gouent."
- "Dic'houzvez-kreñn diwar-benn an aod .. camp strinket outañ."
- "Raññ skor din er stad divalav .. edon emmi."

- 2) Pegoulz e c'haller ober gant A e-lec'h MA ? Reit teir skouer.
- 3) Pegoulz e c'haller ober gant E e-lec'h MA ? Reit teir skouer.
- 4) Savit pemp frazenn diwar skouer homañ : "Per a oa du e benn".
- 5) Renabliñ an islavarenoù-stag ha dielfennañ anezho :

"D'an nav a viz east..., war-dro teir eur goude kreistelz, tomn an heol ken a boazhe, ur maro'heg, gantañ war e benn un tok houarn, ha, war gem e dok houarn, ur bouchad tev a rubanoù ruz, ker ruz hag ar glauc, a ziskenne d'an daoularn diwar-zu Floueskad d'al lec'h m'emañ bremañ Pont-Krist. E varc'h a oa digor e fronsilioù evel dor ur forn, evel pe vije bet an tan emmo; e zaulagad a oa liv ar gwad warnocho hag e gostezioù a oa gwenn-kann gant an eonn; poultrenn an hent bras a oa leun a bikoù graet gant ar c'hwezenn a zivere dioutañ, ker glob e oa.

O klevout ur maro'h o c'halloutat ker buan, Pen-Fañch ar C'hrafer, - a oa azezet en disheol a-dreñv ur roc'h a zo e beg gwaram ar C'hrog, e-tal Pont-Krist, a-zehoù pa'z eer a Bloueskad da Izmoven, - a deuas d'ar red d'an traoñ da gaout an hent hag a savas en un teol war ar c'hleuz da c'houzout piv 'oa an hini a yas ker buan-se."

+ + + + +

Kentel 2

LENNADENN DISPLEGET : Mornn ha Lany, gant Maodez Glanndour.

Hiziv eo trec'h an dour. Lusenn a zo, dour fuilhet en aer, ur mor a vorenn hilliget gant houlennoù-gou diniver. Hiziv eo trec'h an dour, pa'z eo deuet ar vrur-enn da c'hlec'hiañ an traoñ ha va filjadur en en soubañ emmi.

Bremañ e klevan ruih al lany o'n en sankañ don en douroù, o tegas c'hwez gouez ar bezhin, hag o youc'h'al d'an holl zourioù disall ar galv davet buhez kevrenus ar morioù bras. Hag an holl zourioù a ziskenn en roufenoù gorre an douar, en e washied dindan guzh. Met aro'hoazh, gant al lusenn hag ar glav e vo adkaset an dour-se d'ar faunteunioù. Monedone, kan-diskan.

Chal-dichal eo an dour, chal-dichal eo ar mor, luskellerezh. Evel ur vamm a sell ouzh he bugel hag ar bugel en e gavall da serrañ e zaulagad en e ziskuzh, evel-se eo luskellerezh an Mouter. Ur gavall eo ar bed-mañ da Vab-den betek na teulo beure

splann e oad nevez. Perak e vefen taget gant an aon rak an drougoù a yud en noz ? Doue a lak an douar hag an holl stered da vont. Gervel a rin hag e vin selaouet. Evur-ziweuz glan. Galv ha respont, ker garantez, peoc'h al luskellerezh. N'eus trouz ebet war ar maezioù. Tavet eo pep tra. Sioul-neurdeuz eo ar vrur-ti va marn-gozh gwechall, ur grogen borselan a oa, ha n'hellen ket mont di hep he zapout ouzh va skouarn ha boemif ouzh he c'hleout.

Goulennoù :

- 1) Displegañ ar gerioù-mañ : "dour fuilhet en aer", hilliget, glec'hiañ, "ruih al lany", "c'hwez gouez", "en e washied dindan guzh", monedone, "an drougoù a yud en noz", marn-gozh, mardrouz, boemif.
- 2) En destem e lenner "mornn" ha "lusenn"; displegit ster resis pep hini, koulz hag an hefelsterioù a anavezit.
- 3) Displegañ furn an gerienoù : "chal-dichal" ha "kan-diskan".
- 4) Evit d'ar varzhoneg-mañ bezañ skrivet e komz-plaen, e c'hwez emmi awan ar varzhoniezh. Hen diskouez a reot dre studiñ kengan ar sonioù er frazenn : "Bremañ e klevan..." betek "... ar morioù bras."

+ + + + +

Kentel 3

PENNAD-SKRID

Diwar an notennoù hoc'h eus kemeret er sizhun dremañ e klaskot sevel ur sterd fraezh. Taolit pled bepred ouzh talvoudegezh ar gerioù, evel hon eus lavaret ar wech all, met ivez ouzh lusk ar frazenn. Skridoù Maodez Glanndour zo ur skouer dispar eus an implij a c'haller ober eus barregezh hor yezh. Diskoultrit ho frazennoù kement ha na vo gallet, ha n'ankouait mornn n'eo ket lusenn eo a c'hortozet diganeoc'h. Seul eunoc'h ho pennad, seul walloc'h.

+ + + + +

Kentel 4

LENNADENN DISPLEGET : Menez, gant Maodez Glanndour.

- Menez glizh
- Linenn denar
- En brumenn gaer
- An abardaer,
- Menez glizh.
- 'Us d'ar blaenn
- E sav tolzenn
- Menez Mikael,
- Evel ur vrom
- 'Us d'ar blaenn.

'Troad an dosemn  
E kousk ar geun  
Ha frond ar bleuñv  
A fu en aer,  
'Troad an dosemn.  
'Mesk ar broenn  
Ha korz al lenn  
'Kri ar gregell,  
Flik-flok he nij  
'Mesk ar broenn.

Menez soñjus  
Hag huñvreñs  
Pa zeu an noz  
Gant gouel an hun,  
Menez soñjus.

Goulennoù :

- 1) Displegañ ar gerioù-mañ : gliziv, plaennenn, tolzenn, bronn, geun, fuañ, broenn, kragell, hun.
- 2) Petra eo un "dosemn" ? Reñf ar gerioù heñvel pe danheñvel o ster, ha displegañ an arsterioù etrezo.
- 3) Studiañ ar gwerzaouñ er varzhoneg (ment ar gwerzennoù, klotennoù...), ha studiañ dreist-holl penaos e ra ar barzh gant ar sonioù, rak diout eo e sav sonerezh flour ha tanav ar gwerzennoù-se.
- 4) Klaskit adkañvout tro-spered ar barzh pa savas ar varzhoneg-se.

+ + + + + + + + +

Kentel 5

GERIADUR

Studiañ ar rakgerioù, §§ 878-880.

Poelladenn :

- 1) Roit tri verb enno ar rakger KAMM. Disklêriañ ar ster anezho. Hag anaout a rit ur rakger all kenster gant hemañ ? Skouerioù.
- 2) Pesart diforc'h zo etre KEM, KEV ha KED ? Roit teir skouer eus pep hini.
- 3) Grit roll ar gerioù anavezet ganeoc'h, hag enno ar rakger KRAK.
- 4) Roit 5 skouer eus gerioù enno DAM- (estreget reoù ho levr).
- 5) Petra eo ster DAS- er gerioù-mañ : daskrenañ, dasprezeg, dasseniñ, daskem-añ, dasparzhañ, dasplozhañ ?
- 6) Grit roll ar verboù savet diwar skouer "tremen-distremen".

+ + + + + + + + +

Kentel 6

SKRIVADENN

Testenn ar sizhun, ha respont d'ar goulennoù.

+ + + + + + + + +

Kentel 7

LEONADENN RENET : Tristan hag Izold, Tristan foll, gant Langleiz (pp. 183-185)

A-vec'h trouzet gantañ toull-dor ar porzh, e voe hegaset Tristan gant nevelion ha floc'hed ar c'hastell, a grogas kerkent d'e argadñ evel pa vefe bet ur bleiz.  
"Sellit ! ta ouz ar foll ! Hou, Hou, Hou !"  
Lod anezho a stlape main outañ, ha re all a save o bichier. Hep ober van a netra, e talc'he penn d'e enebourion vihan ha, pa veze argadet war an tu kleiz, e troe a-horr trema an tu dehoù en ur skeñf en avel ur pezh taol rust a-walc'h evit lazhañ ur maro'h.

E-kreiz ar c'hoarzhadennoù hag ar youc'hadennoù, ha bepred o stlejal war e lerc'h un engroez a du, e tizhas ar sal, kinklet brav, na chome ar roue er penn all anezhi. Edo Izold e-kichen Maro'h.

E benn-bazh staget adarre ouz e c'houzoug, setu Tristan war an trouzoh. Marzet eo bet gant ar roue.

"Sed aze ur c'haer a aotrou; lezit eñ da dostant ouzhin. Degener mat dit, kenail kor !" a lavar Maro'h dezhañ.

Tristan a respont neuze, gant e vouezh iskis :

"Aotrou Roue, ken madelezhus ha ken uhel, gouzout mat a raen he dije touzet va c'halon gant an denereidigezh netra nemet ouz ho kwelout. Doue d'ho tiwall, aotrou ker !

- Kenseil, petra out deut da glask anañ ?

- Izold, hag an eus karet gwechall kement ha kement. Ur c'hoar an eus, Askliz ar Goantern hec'h anv, he c'hinnig a ran deoc'h. Deut oc'h da vezañ skulzh gant ar rouanez, gult un arnodenn gant hounañ... Va c'hoar a zegasin deoc'h, roit din Izold en eskenn; he c'haer a rin ez laouen, hag en ho servijin, goude-se, gant karantez ha lealded."

Maro'h a ziroll da c'hoarzhin hag a lavar d'ar foll :

"Sovenet ganin da c'houleñn, petra 'rafes eus ar rouanez, da belec'h ez afeoc'h a-gevret ?

- Di-hont, d'an nec'h, e kasfen va muiad-karet, etre ar c'hogus hag ar stered, er c'hastell gwer an eus savet el lijer hag a zo ken sonn e vegerioù ma ne c'hellfe korventenn ebet o diskar. Ya, d'an c'hastell e kasin ar rouanez, en ur ganbr trouz-welus, leun a roz, ha sklêrijennet benidiz gant skinoù kentañ ar ruzell-veure."

- Setu ar foll speredek hag ampart, a lavare ar varoned. Azezet bremañ war ur palleñn, e-tal troid ar roue hag ar rouanez, e selle ar paour-knezh ouz Izold gant muioc'h-mui a from hag a virvilh.

"Kenail ! ene adarre ar roue Maro'h, penaos krediñ e vefe diskiant a-walc'h ar rouanez evit teurel he sellou war ur foll ken euzus ha te ?

- Ha koulskoude, ne vefe nemet reizh, aotrou kaer. A-walc'h a beonioù an eus gouzañvet eviti a-raok pennfollañ gant re a garantez.

- Piv out-te neuze ?

- Tri, tan on. An hinl a garas ar rouanez muioc'h eget den war an douar, hag he c'haro betek ar marv.

- Kae kuit ! Piv en deus da lezet da gont tre anañ ? a lavaras ar rouanez ouz ar foll, gant kounnar. Kae kuit, foll milliget !

- Rouanez Izold, daoust ha n'ho pefe mui soñj eus an deiz ma voen gloaziet gant kleze ar Maro'holt; astennet en ur vag hep roañv na gouel, va zelenn hepken en c'hichen, e voen knset gant an avel trema sodou Iwerzhon. Daoust hag ho pefe ankounac'haet hoc'h eus va fareet ?"

Izold a respontas dezhañ memes tra :  
 "Kae kuit ac'hann, foll divergont. Ne blij ket din da sorc'hennoù dibocll !"  
 Hogen ar foll, treset bremañ war-du ar varoned, o bount holl, gwitibunan, tremna  
 an nor, en ur youc'hal :  
 "Er-maez, er-maez, folled ma'z oc'h, c'hwid hoc'h-unan ! Lezit ma gant va muiad-  
 karet !"  
 C'hoarzhin a ra Marc'h a galon vat; ne c'hoarzh ket Izold, koulskoude, strafuilh  
 et ma chon he c'halon gant ar vevh.  
 "Aotroù ! Stlepit ar foll-mañ er-maez !  
 - Rouanez Izold, a gendalc'h an den gant e vouezh iekis, rouanez Izold, dacust  
 ha n'hoc'h eus ket mui soñj eus an aerouant a lazhis war ho touar ? - Na pegen brav  
 e oan neuze ! Ya, ur marc'heg dispar e oan, e gwirionez ! - E deod an boa kuzhet em  
 gweltr; kontammet avat gant e wrez, e kouezhis e-kreiz ar palud, ha n'en boa mui  
 frealz ebet da c'hortoz er bed-ñ, keneve digant an Ankou, pa dremenas ur plac'h  
 yaouank nepell alese. Gouzout a rit gwelloc'h egedon piv e oa !  
 - Tav ! Dismegañsif a rez ar varc'heion. N'out nemet ur foll ganet foll. Ra vo  
 milliget ar voraerion o deus da zegaset amañ e-lec'h da stlepel er nor !"  
 Dirollañ a ra ar foll da c'hoarzhin, muic'h-mui.  
 "Rouanez Izold, dacust ha n'hoc'h eus ket mui soñj kennebeut eus an taol kleze  
 ho piñe karet darc'haouif war va fenn p'edon en nozh ha digifenn dirazoc'h e dour  
 ar gibell ? Hag ankomac'haet ho pefe ivez "kontadenn ar vlevarz acour" a zisplegis  
 deoc'h, neuze, evit ho tistanañ, hag, an tnoz, goulen-oured ar melestrour laost  
 ha va respont-me ?  
 - Tavit, kozh randoner ! Perak dont amañ da zibunañ ho sorc'hennoù toull ? Meuz  
 e oac'h dec'h da noz, emichañs, hag ar gwln an hini eo o deus laknet seurt huñvroù  
 da sevel en ho penn.  
 - Gwir eo ez on meuz, ha trevellet, zoken, gant un evaj ken kreñv na ne c'hellin  
 biken distreñ emon va-unan. Rouanez Izold, dacust ha n'hoc'h eus ket mui soñj, kenne-  
 beut, eus ar sec'hed hon eus bet war ar mor, un deiz na omp chomet hon-unan-penna  
 war vourzh al lestr ? Na tomme oa an heol... biskoazh tomoc'h, e gwirionez ! Iacoust  
 ha n'hoc'h eus ket mui soñj, kennebeut, eus an darvoud-se ? En hevelep hanaf hon eus  
 evet a-gevret, koulskoude."  
 Pa glev Izold seurt komzoù, ha n'eus nemet a c'hell meizañ o ster gwirion, e  
 kuzh he drom en he mantell, o ruziañ gant ar vevh, hag e sav evit mont kuit. Ar roue,  
 avat, ne fell ket dezhañ he lezel da bellaat.

Goulennoù :

- 1) Displeg ar gerioù-mañ : floc'hed, tenezidigezh, kogus, lijor, treuzweld, rugell-veure, birvilh, divergont, gwitibunan, gweltr, aerouant, palud, mormerion, melestrour, trevellet, hanaf.
- 2) Gant peseurt follentez eo taget Tristan ?
- 3) Displegit enzaloc'h Izold en e geñver. Hag hini ar roue Marc'h.

+ + + + +

Kartel 1

YEZHADUR

Studiañ an araogen, §§ 581-591.

Poglladenn :

- 1) Displegit en ur frazenn an araogen E-GIZ hag ESTREGET.
- 2) Displegit en ur frazenn an araogen DIWAR-LERO'H hag E-KERG.
- 3) Displegñ en un doare all an araogen-mañ :

Emsavet e oant en hon enep - Kerzhout a rae en zrefiv - Deut e oa betegon - Erruout a reas en he rack - Azezet e oamp etalto.

- 4) Displegñ an araogen WAR-DU hag EN ARBENN e daou zoare disheñvel.

+ + + + +

LENNADENN DISPLEGET : Skol-louarn Veig Trebern, gant Youenn Drezen.

Titourid an aoger en Istor al Lemnezeh, §§ 175 ha 266.

Un taolig-brasell, ul livarienn, ha setu banniel ha stur al lestr tal-ouzh-tal, da stokañ outo, gant nailh-mor Forzh-Moro hag he rod-balek, hanter vouzet en dour, chaoser ar veilh gant e skluz du, hag al lenn, war an a-dreñv. Edont e korn-tro ar Menez-Bihan.

Diwar neuze, ken a Baotr-Teo. Aet Baotr-Teo diwar-wel, war un dro gant ar c'hal Fereg, bagou ar porzh ha tour iliz Kamez. Ha gwasket adarre kalon Veig. Perak ivez n'oa ket deut ar "gol"-se gantañ da bourman war ar mor ? Na brav ! na vijent bet o-daou.

A-daol-trum e teus dezhañ, neuze, soñj e vamm, ha Gaidou, e ziv c'hoar vihan, ha Gwenole bihan mignon, chomet, du-hont, er gêr, war ar Warenn-Mén.

N'an devoe ket amez da deneraat. Ur sach war lerann e sach-skol. Treñf a rae e benn. Edo ar c'habiten bras o tenañ e sach digantañ. E zibouzañ a rae gant an ezvan da grediñ e oa gwailh bonner ar sarr-se da skoaz ar skoliañ, ha didalvez hiviziken. Ober a rae an ezvan da deurel anezhañ dreist bord, en ur c'hoarzhin. N'oa ket da nac'h, den fentus e oa ar c'habiten bras-se, pa droe en e benn.

Deredet e oa ur nous d'e c'halv, - ur nous gwirion, hennezh, hini an Inga, trizek bloaz bennak, ha melegan, ken e oa ur vevh, - hag en kuit gant sach ar baotr Herve dre ar skeul, dindan an tilher. Hag ar baotr Herve war e lerc'h.

- Here ! Here !... a genenne an ofiser, hep ehanañ da c'hoarzhin. Komprenet en doa Veig. Ne felle ket dezhañ ez aje da gantren dre ur vatiment ken bras, gant an en em gollfe.

Edont erru e korn-tro ar c'hal bihan, en ur hedañ gwaremou karvaget, war an tu kleiz, ha war an tu dehoù, fustou hir dimiver gwez pin koad Travenag, rannet diouzh ar stêr gant chaoser ar c'halaj. Ha, goude-se, koadoù-pin, en daou du, war an torgennou, ha lannou bihan, er gwasket, a-dreñv o chaoser. Oufig Rozkerno, e-kreiz o tenañ e vamm kazeg. An Ti-Gwenn war diriañ e veg-douar digenvez.

Trum, hep gouzout dare da Veig, e tibouke al lestr, en ur akidri-jenn drellus, war ul lenn bras, bras, a lintro he gorre, dindan an heol, e-giz kant mil melestrour, Kelc'hiet kloz e oa al lenn gant douarou izel, stank wame ivez ar c'hoadoù pin,

heñvel ouzh ur veger voulouz glas.

E-lec'h mont war-seun, a-dreuz an dachenn dour, a oa n'ouie ket pet gwech ledan...
E-lec'h mont war-seun, a-dreuz an dachenn dour, a oa n'ouie ket pet gwech ledan...

Forzh penaos, a-benn nemeur, da izel-vor, an dourier-se, fiñv-difiñv, ha ken
brav d'al lestr kantren war o gorre, a reno al lec'hidieg en o lec'h, ul lag louet ha
spegus, na c'hell na bag, na pesk, na troad nab-den darempredif he domani. Neb na
sent ket ouzh ar stur, ouzh ar garreg e ray, sur, sur !... Ne ouie ket Veig ar vicher,
Al loman, efi, a ouie, hag anavezout a rae ar c'hrennlavar, hag an hent a ranker heul-
iañ.

Hedik-hedañ a rae, bremañ, ar ganol, hag an teirgwer, evel just, un aod grou-
anek strizh-strizh a oa hini enez Sant-Mark, - an Enezenn, - dianav da Veig, evit
c'hoazh. Gwelout a rae ar saout o paourif, ar verjeoù gant o gwez avaloù, ar c'hêrioh
diwar ar maez e-touez ar gwez evlec'h. Mes ne welas ket kañval ar maner. Ne ouie ket,
a-hend-all, e c'hell bevañ eno un anevael ken dic'hiz. Ar c'hafalea da vev er Sahara,
ha n'eo ket en ur c'hoad pin...

Saflikat a rae an tarzhioùgob, un dudi, ouzh staoñ al lestr hag e voñselloù
gwenn, trouzal a rae an avel er gouelioù, gregachet a rae al laboused-mor en-dro hag
a-us d'ar gwernioù, ha linc'hañ a rae al lann divent-se, ken e trelle, dindan un oabl
digolo ha ken trelhus all. Gouel-lid evit Veig !...

Ha setu na souezhe adarre. Ar gourizad koadoù pin, a grede dezhañ e oa hep ur
frazilh, a oa toull e-giz ur sil; enezamoh a oa ouz an douaroh-se, a rae tro al lann :
Sant-Mark, Keffen, Ar Razed, Haro. Tizh a rae ar mor dre an digoroh-so, on e red
kompez ha dilharas, war-du mulgul Lok-Tuji hag an Enez, a skede du-hont, pell, pell,
megerioù gwenn o ziez hag o zennioù mein-glas.

- Oi ! Ma vije bet Paotr-Teo ganin !... Mont a rin da vartolod, ha Paotr-Teo
a vo ivez vartolod ganin.

Goulennoù :

- 1) Displegañ ar gerioù-mañ : livardenn, rod-balek, meilh, "goi", ezvan, oufiq,
tizienn, lec'hidieg, "merdead a zrouc'hañ", saflikat, gregachet, linc'hañ, mulgul.
2) Petra lavarout diwar-benn "fiñv-difiñv" ha "hedik-hedañ" ? (stummidigezh)
3) Peseurt skeudenn eus ar vro vigoudenn a ro dimp an arroud-se ?
4) Pelec'h emañ Veig ? Petra zo en e galon ?

+ + + + + + + + +

Kentel 3

PENNAD-SKRID

"Un den o labourat war e vicher".

Poltredif eo a zo d'ober anañ. Ur stum skrivañ nevez evidoc'h. Arabat chon
gant ur poltred difiñv, evel pa vijec'h o poltredif un delwenn. Mat e vo evelkent
kravigañ gant neu-korf an den, gant na trenanet bun-ha-bun. Pouezusoc'h eo, kalz,
diskouez e demp-spered, dreist-holl e-keñver e labour.
Goude-se, diskouezit an den war labourat. Dre ar jestroù a ra, prim pe difom,
akuit pe anarfañ, dre e oberoù ec'h anavezor e bersonelezh. Un tannig evel pa vij-
ec'h o spiañ a-drek e gain.

Klaskit kompenn ur steuñv hag urzhiañ ho mennozioù. Na zisoc'h ket komz eus
e wiskmant. Savit ur rannbennad war ur brouilhed.

Kentel 4

BLEUNADUR : Menez, gant Moadez Glanndour.

Gouez da Vaodez Glanndour, ar varzhoniezh zo sonerezh da gentañ. Flaustret en
deus an hent-se gant aked ha karantez; n'eo ket souezh eta e teu ur seurt bravig
diwar e bluenn. Eoun eo ar yezh, eoun ar gwerzaouif ivez, evit ur gwel. Koulskoude
e tenn ar varzhoniezh hec'h anken diouzh lusk hag anso espar ar gerioù dibabet gant
ar barzh, netra mai.

Skoul e vo ho ton o tibunañ ar varzhoneg, seder, flour ho nou ezh. Merkañ
ivez e teraou ar varzhoneg gant sonioù skintin ha skañv, hag ec'h echu gant sonioù
pommeroc'h (/y/ da skouer). Hiraat ar muiañ gwellañ sonioù ar wazenn diwezhañ.

+ + + + + + + + +

Kentel 5

LENNADENN HERET : Skol-Iouann Veig Trebern, gant Youenn Drezen.

-Mard eo permetet kaout kenend-all a zieg d'an dour !...

Ouzh ur skouarn vouzar-pe-gar he doa konzet Chann Grall. N'oa ket Paotr-Teo
kemerad d'an dour yen. Dobret gantañ e zijañ, samet en doa e sac'h-skol, prest en
em laerezh er-maez, hep ur sell ouzh ar sailh dour hag an torch. Fuc'hañ a rae e
vamm.

-... Gast 'vat ! Kement-se a vall 'z eus mont d'ar skol ? Mont a rafe d'ar
skol gant e groc'han kraz. Biskoañ war an douar ! Da eizh bloaz !... Ar re-mañ a
ranko e maez gwalc'hif anezho ha sec'hañ dezho o fri betek o ugent bloaz ! Ma n'eo
ket un drouez !

Paotr-Teo a oa e zorn war ar c'hliked, pa oa savet mouezh e vamm. Digor oa an
nor, pa gleva, korkont all :

- Spala ! va aotroù. Da balc'h e fuster ken bun-se ? A-bean eo seizh eur han-
ter.

- D'ar skol, mamm.

- Gouzout a ran. Mes... 't eus ket disoc'jet netra ?

Kas a rae Ifig e zorn d'eo sac'h-skol, ispilhet war e gain.

- Bez' emañ va sac'h ganin, mamm.

- Ha da vizej ? Ha da zaoarn ?

- Ganin 'maint ivez, a responte Ifig, souezhet un tannig, mes dic'hoarzh.
Ne voe ket Chann Grall evit dirout da zrollañ. Pebezh nab farsus a oa he
faotrig !

- A, feiz ! va Doue, anezi. Marteze 'maint ganit, e-giz a larec. Mes, he, n'eo
gwelan ket gant ar gwiskad kranenn a zo wamo. Paotr-an-tail n'en defe ket ezhorn
ouzhout e-barzh e garr, ken lor out. Devalc'hañ, na roin dit un taol torch gleb,
gant ar vevh. Hemañ a rafe mezh d'ar nac'h.

- Ur vevh eo bezañ lor, mamm ? a c'houllome Paotr-Teo, didroidell. Hag e save
davet e vamm bourbell e zaoulagad, gant selloù an ean dinann.

- Ur vevh, sur; hag ur pec'hed, va c'hrouadur peour, a responte Chann Grall
tra na frote kalonek beg ar paotr, gant korn ar serviadenn, edo bet o soubañ ar
sailhad dour. Ha, sur, e vijes bet dalc'het e pinienn gant da vestr-skol, na vijes
set d'ar c'hlas gant...

- O ! ems Paotr-Teo. Me zo pell diouzh e vevh. Me zo e tmoañ ar c'hlas.

- E c'hellez fogasiñ... Ia ! Un taol-krib bremañ d'ar roue-se.

Paotr-Teo a oa war e benn blev sonn, reut, a liv hag a stum gant an delioù  
 rñ sec'h, ha troc'het berr. Pas berr a-walc'h c'hoazh, rak :  
 - O va Salver benniget Jezuz !... a estlerme Chamn Grall. Ur glujar !...  
 Teurel he doa graet ur youc'hadenn ken skiltir ha na vije bet kavet ganti ul  
 logodenn en he mañch. Kejet he doa he sell gant ur pezh laouenn, o poumon he c'hal-  
 ite war ur vlevenn eus penn he -ch. Flastrañ a rae an hudurenn, etre ivinoù he meud-  
 ou, ken herr na chintraz ar gwad en daou du, gant strak un temm.  
 N'eo temm ebet Chamn Grall eus ar maouezet a-gred dezho e sun al laou kleñved-  
 ou ar vugale. N'eo al laou, eviti, nemet amprevaned lous, lastez, un dismegeñs o gwel-  
 out war ur penn kristen.

- E pelec'h an diaoul eo bet hemañ o taspugn al lorgnez-se ?  
 Ur gouleñn e oa, ha ne c'hortoz respont ebet. Paotr-Teo, avat, dansistag o  
 vuzelloù, krizet e dennig tal, a glasko ha, kavet gantañ, war e veno, a daole :  
 - O ! mamm, an devezh all, 'n eus gwelet ur paour kaezh o tarlaskat.  
 - Che, ivez ! va mab bihan. Ha laou ar paour kaezh kozh-se o doa divaskell e-giz  
 pichoned, hag int deut da gludañ war da benn, en ur nijal; ne gred ket dit ?  
 - Eo, mamm.  
 - Ma ! va loen rouz. En ti-mañ, ne vo ket maget pichoned.  
 Ha tra na skrabe gant he biz e-touez reuñ he c'hañfard, e termone mamm Paotr-  
 Teo outi hec'h-mañ :

- 'Benn ur sizhunvezh ac'ham, a vijent bet o virviri. N'eo ken nez tout e vlev.  
 Furchal a rae, en ur chakod eus he zavañjer, hag e tenne ur pezh daou wennez  
 eus an doug-moneiz ler.  
 - Del ! daou wennez, makez penn-laou ! Ker o koustez din. Troc'h roud diouzhtu  
 da di Chel ar grampeuzherez. Gouzout a rez e pelec'h emañ ti Chel ar grampeuzherez,  
 e ru Poull-Pank. War hent da skol emañ. Amzer he do Chel da droc'hañ dit da vlev,  
 a-raok eizh eur. Lar dezhi touzañ dit da benn betek da groc'hen. Klevout a rez ? Betek  
 ar c'hrac'hen.  
 - 'Giz ur voulienn, mamm ?  
 - 'Giz ur voulienn, ya ! Evit ma ne vo mui na klud na kaoc'h d'ar seurt pichon-  
 ed war da glopenñ, gant ar vezh !  
 - N'am boa ket debren, mamm, ha n'am boa ket c'hoant en em gravañ.  
 - Krav kuit ! memes tra. 'Chomez ket da c'hoari penn-da-benn an hent, ha diwall  
 da vankout da glas !

#### Goulennoù :

1) Displegañ ar gerioù-mañ : diegl, "ur skouarn vouzar-pe-gar", "en em laerezh  
 er-maez", fuc'hañ, klided, fustañ, loz, didroidell, fogasifi, hudurenn, chintrañ, las-  
 tez, lorgnez, pichoned, termone, "troc'h roud", boulienn, debren.

2) Skrivet eo ar pennad-se er yezh prezegot, yezh Pont-'n-Abad. Blaz ar vuhez  
 zo warni, a dra sur; koulskoude, un nebeut troioù-lavar a vije amreizh er yezh lam-  
 ogel. Klaskit pere.

3) Petore paotr eo Ifig ?

4) A belec'h e tarez buhez ha birvidigezh an arroudenn-se ? Roit skouerioù.

+ + + + + + + + +

#### Kentel 6

#### SKRUVADENN

Testenn ar sizhun, ha goulennoù.

#### Kentel 7

LENNADENN DISPLEGET : Mintin war an erin, gant Youenn Drezen.

Kaniri 'z eus gant an tarezid war e vili.  
 Iirzhin eo ar mintin ha skintin an erin.

- Mani garat, ken gwenn ha flour da izili,  
 Klev tirili an alc'houder en eabl livrin.

Sin eo chourid an aer, e-giz dour er c'hili,  
 War hum difiv an Atlantel hag e govrin,  
 Ha yaouankiz an heol a lufre askilli  
 War hum ar mor, etre kornog hag an aod krin.

A joa ee'hon ar mor hag an heol, ban hor bro !  
 C'hoarzh an avel, ken sart, o vrudañ tro-war-dro,  
 Nevez atav, lid diuzezh o dimezi !-

Ni, 'vat, ne vrago ket hor yaouankiz atav !  
 En en garomp tinat, bevomp hon eurioù brav,  
 Hep mui gortoz listri nevel an Inizi !

#### Goulennoù :

- 1) Displegañ ar gerioù-mañ : kaniri, bili, iirzhin, skintin, erin, tirili,  
 livrin, sin, chourid, kili, "ban hor bro", bragal, tinat.
- 2) Perak al liester "askilli" ? Roit skouerioù all.
- 3) Petra eo keal pennañ ar poz kentañ ? Petore dimezi a lid an avel en trede  
 poz ? Peseurt memnoz a gaver er poz diuzezh ?
- 4) Studiañ stum ar varzhoneg : ment ar gwerzennoù, klotennoù, ha droist-holl  
 kendon ar sonioù.

+ + + + + + + + +

NAVET SIZHUNVEZH WARN-UGENT  
=====

Kentel 1

YEZHADUR

Studiñ implij an araogennoù A hag EUS, §§ 592-606.

Reolladenn :

- 1) Klokañ ar frazennoù-mañ gant A pe EUS (hag ober ar c'homadur diouzh ret) ;

Pap .. skabell da azezañ.  
 Un torfedour .. an dibab.  
 Debret en doa re .. kig "gagn".  
 Arabat reiñ dezhañ kement-se .. gwin.  
 Merc'hed .. skiant hag .. penn.  
 Taolet er-maez .. an ti.  
 Fumezh ar geizh .. bro-Vreizh.  
 An aotrou C'hwezfall .. maner an Avaloùduar.  
 Sistr .. ar gwellañ.  
 Ul lakepotig .. seizh vloaz, skañh .. korf.

- 2) Peseurt ster zo gant an araogennoù A er frazennoù-mañ :

N'eo ket bras anezhañ - Yen eo anezhi - Miz Eost e oa anezhi - Houmañ zo ur plac'h anezhi - Arru eo an noz anezhi.

- 3) Sevel teir frazenn diwar skouer : "un troc'had mat a zen".
- 4) Sevel teir frazenn diwar skouer : "unan aas a gefridi".
- 5) Sevel teir frazenn diwar skouer : "un hir a labour".

+ + + + +

Kentel 2

LENNADERN RENET : Ian, embarner al ludu, gant Jakez Riou, pp. 90-93.

Piv 'oa Jakez Riou ? Sellout en Istor al Lennegezh, § 176.

Penndaoulinañ 'reas Yann Arc'hant, en ur c'hrozolad; c'hwezhañ 'reas an herrañ ma c'hellas war ar glauc' bev degaset gantañ en ur votez kozh. Flamouigoù a savas, hag ar mengleuzier a vountas ar votez en un toullig, e-touez ur fore'had brug see'h, lakeat dindan ar benn; ha dizale e save ar flammou en noz, ken uhel, ma rostent skourrou ur wezenn evloc'h.

Laboused a nije, spontet, diwar o c'hluad, hag an eskell-kroc'hen a gammigele, dallet.

Ar mengleuzier kozh a gilas, laouen an tamm anezhañ; kroaziet e zivroc'h war o beultrin, sachañ 'reaz war e vokedenn, o welout an tan o traskal en drammoù sporn-du hag el lann kras, hag o welout ar flamm o pignat d'al laez, gant elfennoù aour.

Hogen, dilavar e chome an dud en o sav en-dro d'an tantad. Den ne grede komz, gwasket na oa kalon pep hini gant estrenvan nevez-c'hanet. Goude un abadenn, evelato, e klevet maouezed, o sellou chomet paret war an tan, o rannañ etrezo, goustad, war o fovez, komzigoù berr ha sioulk, evel ma vije bet pec'hed komz a vouezh uhel, en noz-se, e-tal an tantad. Mont a reas ar gaoz en-dro, keit ha na traskas ar sporn en tan, ha na savas ar flammou uhel d'al laez, a gaozadon, evel gant an avel o c'hwezhañ

dindano. Pa vitanas ar flammou, hag ar wrac'hell o tisao'hañ en ur benn glauc' bev, Soza a benndaoulinaas evit lenn buhez ar sent ha lavarout ar grasoù : "En en lakaomp Yann Arc'hant a skarzhas ludu diouzh e gomz, en ur stediñ anezhañ ouzh palm e zom. Edo o plegañ ur gliin evit ar bedenn, pa welas e oa penndaoulinañ Len Ofret en e gichen. Sevel a reas hep lavarout ger hag e reas ur c'hanet pelloc'h, evit mont da benndaoulinañ. Ne oa den e-gichen Len Ofret, e-pad ma lavared ar grasoù.

Goude ar grasoù, e savas an dud, ha, goude teir dro d'an tantad, evel ar c'hiz, Yann Arc'hant a gemeras peg er fore'h houarn, n'en doa douget ganti, daoust d'eo ead, daou vell duilhad blefchou, hag a grogas da venniñ ar glauc' bev ledet e-kreiz al leur, evel ur blaenn ruz.

An tan a drouzas adarre, hag elfennoù, evel balafenned aour, a nijas en ur gormigellat, betek skourrou uhelañ ar gwez.

E Kerunkun emañ ar c'hiz ober ul lamm dreist an tan, e-raok na vo narvet ar flammou. Gwazed ha krennarded a glask lammat uhel ha pell, hag an hini kentañ a lamm dreist pe a-dreuz ar flammou a vez mulet gant ar marc'hed nerzh e zivesker, hag ivez e nerzh kalon. Ar marc'hed a vez sotret da chom da sellout; ne c'hellent ket lammat, avat, rak, en o lamm kentañ e lakas an diaoul an tan en o brozh, ha neuze, n'eo ket bet graet o c'horf erit se. Ar re gozh kennebet, ha ne c'hellent mui lammat evel ar baotred yaouank, a chome da sellout ivez, hag e lavarent dalc'hat e lammat reitoc'h en amez o yaouankiz.

Yann Arc'hant, hep selaou na rannañ komz, a droe en-dro d'an tantad, en ur venniñ gant e fore'h ar glauc' bev, dre ma peuzzeve ar c'houneud diwezhañ. Ne reas ket un dro leun, rak chom a reas a-sav en tu enep da Len Ofret; hag e selle ar mengleuzier ouzh ar nab pennhêr, deut d'an tantad hep un drama, hep un dornad koad, e zaouarn e-dreñf e gein, hag en ur c'hwitellat, evel ur foeter-hent.

- Pa ne lamm mui den dreist an tan, a lavaras Yann Arc'hant, piv a bigno er wezenn da embann al ludu ?

- N'an eus ket lammet o'hoazh, a lavaras Len Ofret gant fae. Gortozit na rin ul lamm dañvad evel ar re all.

Hag en doa kilet ha kemeret tigh, hag e oa o vont da lammat dreist an tan, pa welas en tu all bisied fore'h Yann Arc'hant, troet ouzh e du ha prest d'eo doullgofañ. Ne c'hellas ket gant e digh chom krenn a-sav, hag e lammas eta e-kreiz an tan en ur beotiañ evel mil diaoul. Devet mat e oa bet e dreid, daoust na oa lammet er-maez kar buan ha na oa kouezet e-barzh. Ha na n'en dije ket gwasket war e inor, en dije graet ul lamm all war Yann Arc'hant hag e vije marteze c'hoarvezet ur gwall-daol. Alan Ofret, avat, a lavaras en ur hejañ e zlekoaz ne sante droug ebet... Kavet e vije Yann Arc'hant diwezhatoc'h...

Daoust hag a-ratozh-kaer en doa lakeat Yann Arc'hant e fore'h houarn dirak Len Ofret, p'edo o vont da lammat dreist an tantad ? Kredañ eo; rak pa bec'he en e gichen Len Ofret, en ur demañ ar glauc' bev diouzh e votou, ne oa ket evit mirout da lavarout etre e zent : "Gwell a se..." Hag, hervez neur a hini a selle outañ, e oa bet darbet dezhañ dirollañ da c'hoarzhin.

Goulennoù :

- 1) Displegañ ar gerioù-mañ : penndaoulinañ, kammigellañ, draskal, drum, "elfennoù aour", estrenvan, abadenn (amañ), "a gaozadon", wrac'hell, duilhad blefchou, kormigellat, peuzzeviañ, pennhêr, "embarner al ludu", toullgofañ.
- 2) Peseurt diforc'h zo etre "botez", "botou", "boteder" ? Reit skouerioù all.
- 3) Piv eo Yann Arc'hant ? Petra 'ra emañ ? Forak en deus kaz ouzh Len Ofret ?
- 4) Petra a zesker diwar-benn an doare na vev an dud, o lamm ar pennad-se ?

+ + + + +

## Kontel 3

PENNAD-SKRID

Kregiñ da glask ar mennoziou ha d'eo steuividiñ.

Fa vez klaniget deoc'h displegiñ ar pezh a santit, ez eus da ziwall ouz daou dech fall : chom gant mennoziou difetis ha kounoulek (net arabat ivez ober un danevell eun-ha-geun). Klasket e vo, er c'hontrol, komeskañ an daou arvez-se. Kregiñ gant un taolennadur, pe un dezrevell, un dra fetis hag aes da gompren, ha neuze, ober un dezrann spisoc'h eus ho santadurioù. Ne dleer ket ober anv anezho hejmuiken, se zo siklaer; ret eo o diskouez a-dreuz an enzaic'h-mañ-enzalc'h. Klaskit hepken gouzout petra 'dremañ ennoc'h hoc'h-unan, en hoc'h askre, ha displegit d'al lenner. Teurel pled ouz ar yezh : spisoc'h ha gwennoc'h eget biskoazh e tleo bezañ !

+ + + + +

## Kontel 4

LENNADENN DISPLEGER : Serr-nor, gant Jakez Riou.

Anezet e oa war lez an aven,  
O c'hortoz an hini a gare.  
Uhel e oa pa begouezhas er glen.  
... Er-dro dezhañ e noze.

En halegou e bleuñv ar vilzig a oa tavet;  
War gorre ar c'hegid gwenn an nador-aer a vorede,  
hag eñ a c'hortoze  
ar plac'h na zeus ket.

E bevenn ar c'homog e taskrene ruzoni,  
Skeud ar c'hegid gwenn a varve e-barzh an dour,  
Lenv blot ar vorain a bigne lizidour.  
Hag eñ a wellas e oa o noziñ.

Sevel a reas goustad,  
Kamerout a reas er-dro gwenodenn an dorgenn,  
Hag an heol o varvel a skuilhas en aven  
Ur veradenn wad.

Goulennoù :

- 1) Displeger ar gerioù-mañ : "lez an aven", glen, halegou, ar vilzig, kegid, ruzoni, lizidour, dorgenn.
- 2) Peseurt aergeloc'h a santar oc'h intzañ ar varzhoneg-se ?
- 3) Klaskit pennaeskennoù ar varzhoneg, ha displegit anezho.

+ + + + +

## Kontel 5

DIRUNADUR : Mintin war an evin (gant Youenn Drezen).

Brav kaer eo ar varzhoneg-se. Ar pezh a gont anañ n'eo ket kement-se ar mennoziou, net ar gerioù, o son, o blaz. Stank kenañ eo an /i/, da skouer, ha pelloc'h,

niveruzik ar sonioù /o/ ivez. Ar sonioù-se eo a ro e liv hag e ster d'ar pezh barzhoniezh-mañ e gwirionez. Ar poz kenañ, paot enañ an /i/ a gan laouenedigezh ar barzh o selaou hag oc'h arvestiñ. Antrede, en eskemm, pulhoc'h an /o/ hag an /a/ enañ, a ziskouez un dremañvel ledanoc'h.

Da ziwall ez eus, avat : framet strizh n'eo ar varzhoneg-mañ, anezhi ur sonedenn rik, e vije arabat pouezañ re war ar sonioù meneged uheloc'h. Koll a rafe ar varzhoneg he skañvder hag he donder gwirion. Setu e vo mat eta lenn hag azlenn anezhi meur a wech, tañva anezhi, a-raok he c'hinnig dre gomz. Mod all, ne zeu ganoc'h namet relegou ar varzhoniezh-se.

+ + + + +

## Kontel 6

SKRIVADENN

Testenn ar sizhun, ha respont d'ar goulennoù.

+ + + + +

## Kontel 7

GERIADUR

Studiañ ar rakgerioù, §§ 882-883.

Poelladenn :

- 1) Reiñ kontrol ar gerioù-mañ : laouen, berzh (daou c'her bep tro, ha displegiñ an diforc'h etrezo).
- 2) Diwar pe verboù eo bet savet ar gerioù-mañ : emsav, enzaloc'h, ensiouer, emgoj, emziviz ?
- 3) Petra 'verk ER- e-barzh : ergerzh, erbediñ, ersav, erounit ?
- 4) Reiñ pevar ger enno ar rakger FALS-.
- 5) Peseurt diforc'h zo etre GOU- ha GOUR- ? Reiñ teir skouer eus pep hini.
- 6) Spisañ ster GWALL er skouerioù-mañ :

N'eo ket ur gwall zen.  
Ur gwall nozvezh an eus bet.  
Gwall revañ a rae.  
Paotred Lokemo zo gwall vartoloded.  
An derzhenn evel-se ro ur gwall dra.  
Honnezh n'eo ket gwall dev !  
Gwall hastañ a rez !  
Eno e oa ur gwall gerc'hat dour.  
Gwall zispak eo an heol hiriv.  
Ur gwall deod he deus. (J. Gros)

TREGONTVET SILZUNVEZH  
=====

Kentel 1

YEZHADUR

Studiañ an araogennoù DA hag EVIT, §§ 607-618.

Rolladenn :

1) Klokaat ar frazennoù-mañ gant DA pe EVIT :

Erruout a rejont e kentel .. sevel en tren abardaez.  
Daou viz prizon .. Skrapet.  
Ur mailh e oa .. skoulmañ.  
Ne ziwezhat, .. doure, out savet eus da wale.  
Hag en eus ranket gortoz ar mintin-mañ .. renkañ ar pakadoù.  
N'en doa ket ezhomm eus douar ar Fichou .. bezañ start war e dreid.  
Un disamm eo bet .. (hi).  
Ne lakaomp ket c'hwec'h miz tre .. peurechuiñ ha .. stermañ hor bag.  
Eop daou vumad e tistroe e benn .. sellout ouzh e dad.  
Ne vijen ket .. distreiñ d'am enez.

2) Pe ster zo gant DA er frazennoù-mañ :

N'eo ket set c'hoazh, net da vont emañ.  
Ma c'hased da gannañ.  
Pet eur eo deoc'h ?  
Petra 've da lein ?  
Da c'houzout e oa din.  
N'ouzon ket da biv eo merc'h.  
Mat eo dit ?  
Me a veze mezv dezho ordinal.  
Tamall ar re-mañ da laer !  
Petra eo dit-te ober selloù fall er c'hiz-se ? (J. Gros)

3) Pe ster zo gant EVIT er frazennoù-mañ :

Evit ar beure e oa yen.  
Kenavo evit an deizioù.  
N'eo ket evit he zeed.  
Eñ a oa bet evit dimeziñ d'un all.  
Ne cant ket evit en em ober.  
Evidon-me e raeo glav a-raok an noz.  
Na rit ket a van evit klevout heimezh.  
Evit an deizioù ez eo garv an anzer.  
Me a zo evidout-te.  
Evitafi da vezañ kozh...

+ + + + +

Kentel 2

LENNADENN DISPLEGET : An dour en-dro d'an Inizi, gant Youenn Drezen, pp. 40-44.

Hag e welis an tomaoedh sonn : ar Raz, ar C'havr, Kemeled ha Korsemn, an tou-  
ioù-tan, an aodoù digenvez ma tarzh warno an tonnoù gwer, ar porzhoù bev-buhezek, hag  
ivez tolpadoù kenkizioù an arvor, a Vorgad da Vriagnogan. Hag e sanclis e gwezegoù sin

ar C'hrennoù hag an Uhalgoad ha Landevenneg, heñval ouzh an Eden. Hag e heñval stêrioù  
an Avon, an Elorn, na fonn enno an diluzhed hag an eged. Hag e savis war gribennoù ar  
Menez Du hag an Arre, na spumantomp danskleur diamen nor Brest hag havr Montroulez,  
hag e heulhis pardon Santez-Anna-Palud - gouel an heol war wiskanantou kran Breizh-  
Izel, en-dro d'ar chapel vihan, war an erinoh, e laez ar Bae - hag e rejomp tro Kem-  
per, ha Penn-Marc'h, ha Lokorn, Kastellin, Fleiben, Sant-Tegonag, ar Folgoad ha Brest,  
ha pont bras Flougastell, stivelloù an awen o tifoupañ dre-holl, Iribe. Hag e treñs  
pe o luc'haskeudenns ilizoù ha chapelioù touret-uhel, ha toull-didoull o c'hloc'hdi  
evel dantelezh, debret ar mein anezho gant an anzer, hag alcouret, pa n'eant ket glas-  
gour, gant o gwiskadoù kinvi.

Ur gontadenn arañ, un diskliariadur ahont, va blienerez - hag an dud yaouank a  
zeue ganimp da gantren - a genlode garin o gouiziegezh, a oa bras ha poellek a-zivout  
traoù o bro... ha pebezh nagadur evidon !

Ur prof kaer an boa bet digant Anna Bodri. Dre he grad e raen anaoudegezh gant  
ur Vreizh diannv, ar Vreizh eus an dibab an boa bet hirazh dezhi a-hed ar wech, hep  
douetiñ edo ken tost din.

Me a rede ur gwad rusoc'h en gwazilad, na tibraden, dibomeraet, gant un anal  
yac'h ha bagol. Eñon evel Anteus ar C'hresianed. Va drempred gant douar va hendadoù  
a rae ouzhin un den nevez, ha pa farse va c'helennerez : "Na ra ket biloù, Maheo, ober  
a ramp un dra bemak ganit !", ne farde e mod ebet. Kavet an boa an awen geltiek.  
Hag ez even an died vertuziet-draist a strinke diouti, da lavarout eo evit an arzour  
ma oan, e tastumen a-hed an hentoù, kant ha mil abeg da skeudenniñ ha da gizellañ.

Ar c'hozh traoùigoù didalvez an boa c'hoarist ganto betek neuze a rae din un  
tammig truez ha nezh; mennadiñ a raen bremañ labourioù ec'hon, galloudek ha dreist-  
niver, diouz nerzh ar sev a verve en askre, abaoe ur pennad, o kroal gant al lore'h.

Rak ur prof all an boa bet digant Anna Bodri, ur prof dibreiz : ouzh va degas  
tal-ouzh-tal gant awen Keltia santel, an hini nemeti a sujen d'he levezon, anat din,  
he doa va lakaet da ober ivez anaoudegezh gant va ijin, garin va-unan. Meizet he doa,  
hep mar, ha ne dic'houzvez-kaer, ar berzh an bije graet va zriad e bro vuhezek ar  
c'hornag pellañ, ha setu perak he doa graet din ar seurt hej d'an sachañ diouzh al  
loñch n'edon o vorediñ e Gwened.

Un teñzor, ar plac'h yaouank-se ! Anez lavarout dit e kaven dezhi hiviñken ur  
skiant-poell, an bije nac'het ouzh meur a zen a bouez. Pa soñjen e oa bet darbet d'ar  
beg bras ac'hamon ober anezhi ur bolzeg didalvez, he c'hener zoken evit ur skañbenn  
dalc'het hepaiken gant nibiliezhoù, ha da ziafidiout outi, e kinnigen ruziañ, dis-  
kouarn hag all.

Ac'hanta ! p'he doa meizet va zalvoudgezh, ha gouezet breudañ va sidiantoù, me  
oa da din - na barrek en em gaven ! - stagañ gant ar pennobrannoù a rafe enor d'an  
ijin, o tellezout ouzhpenn ar fiziañs he doa lakaet ennon.

Del ! Iribe, ha n'eo ket gau a lavaran dit, d'an ampoent, evit ur veuloudi  
a-berzh Anna Bodri, en bije, evel na lavarer, goullonderet ar nor ha divuzet ar  
Gêr-Iz !

Goulennoù :

- 1) Displegañ ar gerioù-mañ : "tolpadoù kenkizioù", "gwezegoù sin", fonnañ,  
"danskleur diamen", "stivelloù an awen", kenloedañ, "dre he grad", "na tibraden", bagol,  
mennadiñ, "ar sev a verve en askre", morediñ, skiant-poell, nibiliezhoù, kinnig ruziañ.
- 2) Petore prof en deus bet Maheo digant Anna Bodri ?
- 3) Displegañ sentadoù Maheo en he c'heñver.
- 4) Peseurt Breizh a zeu war-wal er pennad-se ?

+ + + + +

Kentel 3

PENNAD-SKRID

Adkemerit notennoù ar sizhun all, bet klokaet ha reizhet ganeoc'h abaoe, ha savit ar peurskrid. Kement-se ne dalv ket, evel just, ez eus ezhonn Bevel pennadoù nevez pe frazennoù nevez... Nann ! Klaskit dalc'hmat ceunnaat ha resisaat ar pezh hoc'h eus skrivet. Argasit pep glabous ha pep birbilh aner. Na glaskit ket sevel ur pennad hir koustet a gousto. N'en deus an hirder nann a'ober aze. Gwell eo ivez skrivañ evel ma konzit, o reizhañ gwech ha gwech all faziennoù munut ar yezh konzet. Met na rit ket goizoù, na glaskit karned skrivañ en ur yezh "uhel" pe "lennegel" zoken. Ar pezh a gont eo e ve sklaer ha personel ho labour. Ho tever a vo mat na n'eus nemedoc'h a gement a c'hallje skrivañ anezhañ er stum-se.

+ + + + +

Kentel 4

LENNADENN DISPLEGET : Ar Balafenned Gwenn, gant Jakez Riou.

Pa zigor en hentoù ar bleunioù a garan, e c'han, er beure hañv, ar balafenned gwenn.

En hentoù gwaskedet, brizh-heoliet o leton, - gwennan o safroniñ, eostiged o kanañ - e frond tanav ar gwezroud, e nij ar balafenned, ar balafenned hañv.

E kamigellont dibroder, en hentoù a garan.

E c'hoariont en heol, a vleun da vleun, a-heñ ar c'hleuzioù, e frond ar nel gouez nijet eus an targosioù kleuz.

E eumet ar bleunioù, ar frondoù a garan.

Pa vorliv ar bleunioù ha na tav an eostiged, ha na vored an hentoù, en abardaez mouk, e serr o eskell kizidik ar balafenned hañv.

E humont er bleunioù, an hun a garan.

Huniñ a reont e kalon ar bleunioù noredet, hag an delioù leizh, klozet da serr-noz, en o c'hreiz a zalc'ho ken na darzho an deiz ar balafenned hañv.

An aezhenn a luskell o huñvreoù, en huñvreoù a garan.

Hogen, pa darzho adarre an deiz, - ha bleunioù o tigeriañ hag eostiged o kanañ - en hentoù o tivorediñ ne gannigello ken ar balafenned hañv.

E kalon ar bleunioù eo narvet ar balafenned a garan.

Goulennoù :

- 1) Displegañ ar gerioù-mañ : "hentoù gwaskedet", brizh-heoliet, leton, safroniñ, "frond tanav", targosioù, morlivañ, "abardaez mouk", leizh.
- 2) Penaos e teu ar barzh a-benn eus sonerezh flour ha tanav ar varzhoneg ?
- 3) Peseurt emzalc'h en deus ar barzh e-tal an natur ?
- 4) Petra lavarout diwar-benn an div linenn diwezhañ ?

+ + + + +

Kentel 5

GERIADUR

Studiañ ar rakgerioù, §§ 684-686.

Poelladenn :

- 1) Petra a dalv ar rakger HE- ? Roit pemp skouer.
- 2) Roit pemp ger stummet gant HEN-, ha disklêriet o ster.
- 3) Petra 'verk ar rakger HOLL- er gerioù-mañ : hollbad, hollved, hollveliek, hollgaer, hollzouad ? Roit ur ger heñvelster bep tro, pe displegit ar ster anezho.
- 4) Petra 'verk ar rakgerioù II- hag OL- ? Roit skouerioù.
- 5) Roit pemp ger stummet gant MA-, ha displegit ar ster anezho.
- 6) Peseurt diforc'h zo etre FEUR- ha FEUZ- ? Roit pemp skouer eus pep hini.

+ + + + +

Kentel 6

SKRIVADENN

Grit evel dalc'hmat, ha respontit d'ar goulennoù.

+ + + + +

Kentel 7

LENNADENN RENET : Orfeo hag Herodias

Ar varzhoneg-se, lakaet e brezhoneg gant Roparz Hemon, ez eus anezhi 580 gwerzenn, savet e rannyezh kreisteiz Bro-Saoz war-dro ar 14<sup>th</sup> kantved. Enni ez eus karnaset ket ur vojenn c'hresian hag ur vojenn geltiek, met pouezusoc'h eo an hini geltiek. Hervez an aozer e-man ez eo bet displeget an istor gant telennerien a Vreizh-Vihan, Hervez e gwirionez eo'h adkever roud eus ar vojenn-se en hor c'hontadennoù-pobl (Ar C'hastell Gwer, embannet gant an Uhel, da skouer). Troidigezh Roparz Hemon, graet diwar ar saozneg-krenn, a ro dinp un alberz eus lennegezh kozh Breizh, bet kollet siwazh, pep roud anezhi en hor yezh.

5. Poent merenn a oa tremenet  
Abaoe pell, pa voe gwolet  
An itron o fivaval un tamm,  
Souden o sevel en ul lam,  
O redek feuls en ur regl  
He skerb, he sae, ouzh o strowl  
A-dammou, hec'h ivinoh lemm  
O toullañ he bruched, he dremm,  
He c'horf heneuz, a-dreuz, a-hed.  
An div blac'h spontet, brac'haouet,  
A skampas raktal d'ar palez,  
O leñvad : - "Allas, hor rounez,  
A oa ganimp drent o c'hoari,  
Zo kollet he skiant ganti !"
- 6.. Dizale, flec'h ha marc'helen,  
Kloer, nevelien, ha kement den  
En doa klevet, ivez marc'hed,  
A zeredas holl a-gevret,  
Slwazh, da gavout an itron  
Astennet mik war al leton,  
Blin, asik, disliv ha divi.  
Gant pres e tougjont anezhi  
D'he c'hamb. Eno, da rambreal  
E krogas diouzhtu, da yudal  
Ajarre, ha da glask sevel.  
Ma rankas teir marc'h he dero'hel.  
Etreant, re all a rede
7. Da gas ar c'heloh d'ar rous.  
Dilavar, dirak an arvest,  
Don en eston, e galon prest  
Da rannañ, difin e vanas.  
Erfin, avat, e taoulinas  
En he c'hichen : - "O va ene,"  
Enezñ, "petra welan-me ?  
Te, va gwreg, a oa ken hegar,  
Ken karantegus, ken klouar,  
Ouzh an holl a oa ken habask,  
O klemm, o krial hag o klask  
Pellaat an holl diwer da dro !  
Allas, na marc'h paour, petra zo ?  
Da zilhad kaer a zo roget,  
Ha da gorfig kaezh labezet,  
Leun-wad, euzhik, da zrennig komt,  
Herodis, staenet ha dismant,  
Ha da zaoulegad ken lirzhin,  
Ken dous gwechall, a sell ouzhin  
E-giz pa ven un enebour !  
Va marc'hig dinamm, va anour,  
Va c'hoant, va didu, va buhez,  
Lavar din, n'az ped, dre drouz,  
Din, an den az kar ken toner,  
Petra zo, petra zo d'ober ?"
8. Ar rounez, evel estlamm  
Ouzh son ar vouezh anavezet,  
A chomas didrouz, ha goustad

Daeroh bras, a gouezhas soudan  
Stank-ha-stank. - "O pebezh anken  
A ran dit," enezñ, "nignon !  
Me oar, ha me c'houlenn pardon  
Diganit. Allas, brasoc'h kañv  
Brennik a ranki gouzavi :  
Pell diouzhtu ez an da gantren,  
Ha n'en gweli mud hirviken !"

9. - "Mont pell !" enezñ. "Da belec'h ?  
Va nignoniz din, bez dinec'h,  
Diganin morse ned i kuit,  
Pe neuze, mont a ran ganit !"  
- "Nann," enezñ, "ne c'helli ket  
Dont ganin, te na den ebet !  
Pa oan koussket war al leton,  
A-daol e teuas dirazon  
Daou varc'hag kaer, harnezet-kloz,  
A arc'has din, hep mi gortoz  
Dont ganto davet o rous.  
Ouzh ur goulienn ken amzere  
Ne respontis ger, ha kerkent  
O gwelis o vont en o hent.  
Hogen, hep dale pell, setu  
Marc'helen o tent a bep tu,  
Kezeg kaer gwenn-laezh dindano,  
Ha dilhad gwenn-arc'h war o zro,  
Marc'hed, gwisket ivez e gwonn,  
Hag o varc'hegezh en o fenn,  
O rous, uhel war e dal  
Ur gurunenn, ned eus metal,  
Acour nag arc'hant, war an douar  
Ken splann; evel an heol pa bar.  
E-kreiz an heñv e lugerme.  
Va saludiñ a reas, ha me,  
Badet, va youl ast kram diouzhin,  
A savas. Ober a reas din  
Pignat war gein ur palafrez.  
Ha me da vont ouzh e gostez  
Dre ur vro iskiñ, dianav,  
Leun a frouezh hag a vlemioù brav,  
A stêrioù hag a venezioù,  
A gestell hag a balezioù.  
Neuze ganin e tistroas  
D'hor bro-ni, hag e lavaras :  
- "Anañ, itron, warc'heazh beuze,  
E vo ret deoc'h dont adarre,  
Ha me a zeulo d'ho kerc'hant  
Da chon ganin-ni evit nat.  
Deut hep rank, na glaskit herzel,  
Sentit nish; anez, pep ezel  
Bus ho korf a vo diframmet.  
Gouezit ervat : n'eus den ebet  
Gouest da zerc'hel ouzh hor galloud.  
Kement a vennomp a rank bout !"

KENTAN SI'GOUNVEZH HA TREGONT  
=====

Kentel 1

YEZHADUR

Studiañ an araogenn E, §§ 619-623.

Poelladenn :

1) Klokaat gant E pe DA :

Aet e camp .. labourat .. Roazhon.  
Da zek eur ec'h erruas .. Gwengamp.  
Mont a rin da zebriñ .. ti va contr.  
Dlouzhtu goude e oa ast .. til.  
Enac'h o vont .. kêr ?  
Da greistaiz e vi degouezhet .. (ar) gêr.

2) Pegoulz e c'haller ober gant E-BARZH e-lec'h E ? Skouerioù.

3) Petra verk E el lavaroh-mañ :

Gwiasket e ruz - Mont e gouez - En oad enaint - Anacoudegezh o devoa ennon - Tapet e vez an dud e ger - N'eo ket erru en e liv - E korf e roched - E koulz vat - En e benn noazh - En e gropoù - En e zaoulegou - Pell zo e oad en ezhorn eus an amzer vraz - Me a vez en aon e vefe laeret - E petore stumm emañ aze ? - Kanañ en ur vouezh. (J. Gros)

4) Pe verboù a vez degaset o renadennoù gant E ? Savit pemp frazenn evel-se.

+ + + + + + + + +

Kentel 2

LENNADENN DISPLEGET : Skrapet, gant Aboezen.

Ur beurevezh a viz Mae, an alc'houeder o tridal en cabl glas, Skrapet, eus e du, en en sante laouen-holl paneve ne chome en e di-gward nag un tamm bara kras nag ur begad amann. Ket zoken peadra d'ober soubenn an tid zraig. Hag en e c'hodell an memorant eus e zarvez a save d'ur pezh daou wenneg.

Trouz a rae e vouzeilhoù dre ma kerc'he gortek war lez an hent, e fri en avel kenkas e kasfe keloh dezhañ eus e lein, rak war-dro dek eur hanter e oa.

Jakou Olier, an torrer mein, a oa war bennoù e zroulin gant e labour kant metr bennak diouzh e di-soul, pa zeuas Skrapet en e buch e-kichen ar born kailhos.

- Tapet lein, Jakou ?  
- Ket c'hoazh, Skrapet. C'hoant an eus da echuiñ terrif ar bernig-mañ a-raok mont da larout daou c'her pe c'hwec'h d'ar pladed kig-ha-fars lezet gant Soaz e-kichen an tan evion.

- Soaz n'emañ ket er gêr 'ta ? eme Skrapet.  
- Nann, aet eo da Blouneour ha ne vo ket en-dro a-raok koun.  
- Ah ! eme Skrapet, staget da lonkañ soñjoù.  
- Me 'barife, Jakou, emezañ, a-benn ur pennadig, n'out ket barrek d'ober an dro-mañ.

Hag e lakas e bezh daou wenneg war ur maen plat hag, e zaoarn kroaziet a-dreñv e gain, e tapas peg er pezhig gant e zent.

- Va Doue 'ta sur, eme Jakou, c'hoazh n'az piñe goulnnet diganen redek ker buan ha te, en biñe laeret nann, rak re lijer out. Met an dro-mañ 'rin, avat.

- Mat, an daou wenneg a vo dit, nemet n'en eus nemet hanter fizizis ennout, a-raok na ri un taol-ssa.

- Stag kement ha ma kiri, Skrapet.  
Ne voe ket pell Skrapet oc'h ober ur skouln martolod a-zoare d'ur gontennig en-dro da zaoarn arzorn an torrer mein. Met hemañ ne voe ket seizhdalec'h evit-se da bakout gant e zent ar pezh daou wenneg.

- Mat, dit eo Jakou. Gounezet 'peus, eme Skrapet en ur stanpañ etrezek ti ar c'hantonier.

- Da belec'h ez ez, Skrapet ? eme Jakou, diass e benn. Distag din va daouarn 'ta.

- Bremaik, Jakou, bremaik. Pa'm bo laeret daou c'her pe c'hwec'h da gig-ha-fars Soaz.

Franzet 'oa an nor war di Jakou, nemet digor e oa ar prenestr, avat, hag en ul lamn kargh e nijas Skrapet e-barzh an ti. Hag ar pladed kig-ha-fars lakaet war an daol da zivogedif ha Skrapet azezet dirazañ o tebrif, digor e galon.

Jakou Olier, e zaoarn a-dreñv e gain evel na vije bet lakset e pinijenn, a zeuas betek ar prenestr da sellout ouzh Skrapet a-zavd gant ar c'hig-bevin.

- Dispar eo, te 'oar. Poazhet mat ar c'hig ha bruzhumus ar fars. Ya, 'vat, ur pred a-zoare 'oa bet aezet dit gant da hini gozh !

- Ur penoc'h n'out ken, Skrapet ! eme Jakou, e-tal ar prenestr o c'hlaourif gant an naon hag an inor, dirak al laer ouzh e daol.

- O, Jakou, da lodig e lezin ganez. Bremañ ne zo barrek. Doue d'ho paeo ho-taou, Soaz ha te ! Kenavo, Jakou Olier.

Hag e larnas er-maez dre an hevelep hent n'oa deut e-barzh, en ur reiñ ur vount-adenn d'an torrer mein a gouezhas war e benn a-dreñv.

- Distag din va daouarn 'ta, Skrapet. Petra 'soñjez ?  
- 'M eus ket amzer, Jakou, 'n eus ket amzer.

Meur a wech troioù-kann Skrapet o doa kaset al lakopod dirak al lez-vern hag eus al lez-vern d'ar Bougenn. Pa c'hoarveze an dra e-pad ar goañv ne rae ket Skrapet kalz a viloh. Goudoroc'h 'oa ar Bougenn eget e di-gward war an tavenn ha soubenn ar prizon, daoust dezhi bezañ treit ha goular, a zalc'ha tom d'e zibarzh.

Un dro en doa ur niz d'ober e Brest hag e oa deut an archerien un tarrig diwezhat d'e gerohat da vont gantañ da bakout an tren da Leneven.

- Sed aze un afer, avat, eme Skrapet. C'hoant eo ho kerc'he-houarn gameoc'h. Me a oar redek matik a-walc'h ha n'on ket klavf gant ar berr-galan. Kit an a-raok. Me ne vin ket pell war ho lerc'h oc'h erruout e Leneven.

- Deomp ! eme an archer koshañ d'egile. Pa lavar deomp e tauc, e talc'ho d'e c'her hag e-giz-se e c'houezimp un devezh war hon tro e Brest.

Hag e voe gwelet un dra eston. An daou archer war o c'hezege-houarn a blante tro en troadikelloù ha, war o lerc'h, pellik pe destoc'h, e teus Skrapet d'ar piltrovig ingal hep gorteket morse. D'ar savioù e c'houezas war an archerien, a'an diskenn, avat, e kolle tachenn. Met erruout a rajont e Leneven e kentel da sevel an tren abardaez.

Met un dro all ned eas ket heñvel an traoù. Miz Eost e oa emezhi, kaer an amzer, un drugar. Pa zeuas peotred Mari Robin da gemenn dezhañ dent d'ho heul, e scijias Skrapet o dije gallet gortez niz Gwengolo da deboutañ evit e lakant er gaoued. Ne enebas ket, avat, hag e zaoarn gurut gwasket e glas a zeus ken disoural ha tra ur c'hammed pe zaoarn war e lerc'h. En un hent-karr, kleusioù eus an daou du gant lann founnus warno, Skrapet a chomas a-sav. Pa voe an daou archer stok emañ, e stapas ledan e zivesker en ur dapout krog e kilpenn an daou archer gant e zaoarn ken n'arab-

us ha bizied kranken hag o stlepad a reas o-daou war o genoh d'an douar. Hag eñ un toull en aer ha kuit dreist ar c'hleuz.

Ne voe adtapet nemet teir sizhun goude. Diwar neuze, avat, n'eo doa mui an archerien fizizis ebet ken emañ.

Ne voe adtapet nemet teir sizhun goude. Diwar neuze, avat, n'eo doa mui an archerien fizizis ebet ken emañ.

Goulennoù :

- 1) Displegañ ar gerioù-mañ : tridal, "soubenn an tri zraig", nenorant, kailh-os, "lonkaf soñjoù", seizhdaletoc'h, stapañ, lakepod, "kalz a viloù", goular, troad-ikelloù, "paotred Mari Robin", kilpenn.
- 2) Pelec'h e tremen an istor-se ? Pegoulz ? Reit ar peragoù.
- 3) Retore den eo Skrapar ? Displegit engalc'h ar skrivagner en e geñver.

+ + + + +

Kentel 3

PENNAD-SKRID

"Skrivañ a rit d'ur nignon pe d'ur vignonez evit kontañ ar pezh hoc'h eus graet e-pad an ehan-skol."

Setu anaf eta un doare nevez c'hoazh : skrivañ ul lizher. Dev eo dero'hel soñj n'eus kinnigadur ebet d'ober. Na skrivit ket, da skouer : "an deiz-se, divalav an amzer anezhi, e teuas din ar soñj skrivañ ul lizher..." Nann, ne vez ket graet evel-se, pa skrivañ ul lizher. Ton al lizher ivez a vo diouzh personelezh ho kenskriver. Disheñvel e vo hervez na vo yaouank pe goshoc'h h.a.

Brenañ, un toullad kuzulioù resisoc'h e sell da aozañ ar pennad. Grit evel dalc'hmat : mennoziol, stouñv. Teurel pled, avat : arabat daveñ d'ho nignon ur seurt deizlevr, anaf un diverrañ eus ar pezh hoc'h eus graet ben-dez-c'houlou. Bez' ez eus daou zoare ober : reiñ da anaout aergalc'h ho vakañsoù, pe dibab un devezh resis (pe un nebeut devezhiennoù) da reiñ un tañva, ur skouerenn eus ar vakañsoù-se. Mod pe vod, na vezit ket re hir holl : arbadus e vefe ho lizher.

Ar pep diaesañ pa skrivañ ul lizher eo an deroù hag an dibenn. Pennas "komz" ouzh ho nignon ? Na skrivit ket "Kensil ker" dre ret... Un anv-badez en deus ! Evit ar goue'hennoù d'ar fin, grit diouzh ho kenskriver adarre. Anaf e c'hellot bepred echuiñ gant "a-greiz kalon", pe un dra bennak evel-se.

Skrivit ar rannbennad diwezhañ hag an dibenn.

+ + + + +

Kentel 4

DIBUNADUR : Serr-noz, gant Jakez Riou.

Setu adarre ur varzhoneg eus an dibab, unan eus ar re gaerañ bet skrivet bis-koazh en hor yezh marteze. Tenn eo lavarout a-belec'h e tarzñ ur seurt kened hag ur seurt barzhoniezh. Eeun ar memoz, gwall eun ! Ha ken eeun all ar gerioù ! Merkaf n'eus ficherezh ebet, kinkladur ebet a re. Heñvel eo evit pezh a sell ar mentadur : sklaer hag eeun eo dibab ar frazennoù.

Lekt evezh evelkent ouzh un toullad skeudennoù kner ("e taskrene ruzoni", "lany blot ar vorann", "ur veradenn vad"), ha klaskit santout aergalc'h espar ar varzhoneg. Soñjit e tro-spered ar barzh pa skrivas ar pezh-se. Diwar-bouez lemm ar varzhoniezh meur ha meur a wech, a vouezh uhel hag a vouezh izel, e taout enic'hañs da verzañ kenent-se. Neuze eta e vo ur c'hoari he dibunañ !

+ + + + +

Kentel 5

PENNADENN RENET : Grit diouzh na laran, gant Aboezen.

Un tammig tener ha lent e oa Cheun marteze. Anez da se ne vije ket bet dizinez d'e seizh ha tregont hag o treiñ d'ur paotr yaouank kozh.

Ha setu na oa koezhet e kuzuntez Mari Wilhoù, a oa nevez deut da vatezh er Pontigoù na oa eñ nevel bras abaoe seizh vloaz. Ur plac'h koant ha seven e oa Mari. Da holl zarvez, he yaouankiz hag he nerzh ouzh al labour. Trivec'h vloaz e oa bet da foar Vazhe diwezhañ. N'eo ket ur si bezañ yaouank, a gav deoc'h ? Eo, pa gred ur paotr yaouank kozh, o tostaat ouzh e zaou-ugent, e renk mont da c'houlenn an aotre da fortuniañ.

Pennsoutiñ a reas Jan Apere pa zisklêrias Cheun dezhi e c'hoant da zineziñ gant Mari Wilhoù.

- N'out ket furoc'h eget pa oas paotr-sacut, Cheun gaezh, ene e varn en ur vesteedif kement a inor a oa emmi. Lakaat da soñj en ur plac'hig n'eus dezhi nemet an hiviz a zo war he c'hein !

- Alato, mamm, ul labourerez vat eo. Gwelout a ran nat e-walc'h penaos e kas al labour en-dro er Pontigoù.

- Ta ! Ta ! Ta ! ene Jan, savet ar ruz d'he fenn ken feuket e oa... Ur plac'hig yaouank e-walc'h dit da verzañ tad dezhi, ha nann da vont da gouket ganti !

Sentus e voe Cheun. Ne gasas ket pelloc'h an afer. Marteze, avat, e vije bet fur dezhañ mont ivez da c'houlenn ali e niz Paol Vizien, daoust na n'oa heñaf nemet maontek vloaz.

Dre na koshae Jan Apere e trenke tann-ha-tann he spered hag e taus da verzañ divemor evit traoù zo. Troet eo bet ar re gozh e pep anzer da gavout dezho ez ne kalz gwelloc'h an traoù gwechall, ez oa furoc'h ar vugale ha poellekoc'h an dud. Abaoe n'eo bet krouet gant Doue, an holl her goar, ez a ar bed-mañ bepred war fallaat.

Un dra dreist-holl a lakae Jan da vont en egar : gwelout ar re yaouank o kaout mall da zineziñ. Pa laran deoc'h e oa deut da verzañ divemor. Ur sulvezh abarhaez edo azezet war ar bank e-kichen he ziig gwenn. Hag e selle ouzh an dud e tont en-dro eus perden Lambaol. Evel just, e-touesk an dud-se, e oa kubladoù, plac'h ha paotr kazel-ha-kazel, al levnezh en o daoulagad. Ha Jan Apere a c'hrozozle :

- Sed anaf daou sod all, sell ! anezhi da Paol Vizien, he mab-bihnn deut d'he gwelout. Ar re-se zo "Feilhañset", evel na laront.

Paol a selle a-gom ouzh e varn-gozh en ur lakaat tan war e gom-butan. Pa voe krog nat, e c'houlennas gant ur vouezh sicut murlbet, nemet e oa ul luc'hedenn c'hoapas en e lagad :

- Da he oad oc'h-c'hwil bet fortuniet, mamm-gozh, 'n eus ket soñj ken ?

- Ta ! Ta ! Ta ! Ta ! diodig ! ene Jan Apere. Gwell eo dit chen peoc'h gant da c'houlennou diskant pe mont d'ar gêr da welout ha dare eo da gom !

Ha Paol a c'hoarzh... a c'hoarzh. Neket hep abeg na blije ket d'e varn-gozh ar goulem. A-vec'h na oa krog en he seitek vloaz pa fortunias da Job Kermaol. Evalato n'oa ket Doue posubl e vije bet biskoazh ken skañvbenn hag ar yaouankizoù a-vremañ kenent a vall warno d'en em "Feilhañset".

- Diodeien ! mar goufent ar vizar a zo ouzh o gortoz da c'houde !

Paol a sache moged eus e gom ha ne ranne grik. Soñjal a reas en e gendirvi, enaf e-unan ha ne gave ket e oa troet ken fall-se an traoù ganto holl, ha mamm-gozh eus he zu, daoust na oa narvet tad-kozh gwall abred n'oa ket da glem tann ebet war he c'hozhni.

Cheun, avat, ne reas ket goulemn dizoujañs e niz. Ne zeuas ket da soñj dezhañ penaos he doa graet e varn. A-walc'h e voe dezhañ gouzout penaos e krede dezhi e oa nat dezhañ ober. Ur nab sentus nard oa !

Tri bloaz diwezhatoc'h, krog en e zaou-ugent e fortunias diouzh c'hoant e varn.

Gant un intañvez, koshaoc'h egetañ. Met kement-se a oa nebeut a dra. Ur bañsion he doa diwar-lerc'h he fried kentañ. Hag ouzhpenn an tenn ti gant douar, daou bark, stag outañ. Ur fortun vat, ne lar desoc'h, d'ur nevel bras o vont war an oad !

Bet on bet warlene ouz o gwelout. Ya, ur fortun vat ! Lous oa an ti. Ar wreg oa ur vaouez goustadik, taget he daouarn gant ar ream. Ar paotrig blev ruz ganet dezho a oa pout e spered. Na levanez, na yec'hed. Traoù an ti a dalveze da glud d'ar yer. Ur fortun vat e gwirionez !

Hag e teuas din da soñj eus Cheun, dek vloaz a-raok, pa zistroe eus an oferenn-bred, seder o zramm hag asur e gerghed en e zilhad-sul. Neuze n'oa nemet ur nevel bras !

Goulennoù :

- 1) Displegañ ar gerioù-mañ : pemmsoutiñ, divener, "mont en egar", kazel-ha-kazel, "goulenñ dizoujañs", pout.
- 2) Peseurt diforc'h a lakit stre "koshaat" ha "koshañ" ? Petra lavarout a-zivout "war fallaat" ? Roit sikuerioù all evel-se.
- 3) Peseurt tro-spered zo da Cheun ?
- 4) Petore ton en deus an aozer ? Pe aergelo'h a gaver er gontadenn ?

+ + + + +

Kentel 6

SKRIVADENN

Testenn ar sizhun, ha goulennoù.

+ + + + +

Kentel 7

LENNADENN DISPLEGET : Porzh, gant Roparz Hemon.

A-hed ar straed a garen, biken mui  
An tiez-hont danguzhet gant an delioù  
N'o gwelan, nag ar voger hir o tere'hel  
Birvilh al lireu glas en Ebrel yaouank.

Ne glevan mui o sevel eus ar porzh  
Yudù al listri bras en avel c'hleeb,  
A ramme mik va c'halon gant o hiraezh,  
En noziol-hont, pa veze skañv an anken.

Ho tasnant, tiez, porzh, ha straed, ha bleuñv,  
A zougan kloc en eñvor dre ma'z an.  
Hogen ho samm zo poumer, hag a bouez  
Poumeroc'h war va choug, a c'hoañv da c'hoañv.

Goulennoù :

- 1) Displegañ ar gerioù-mañ : danguzhet, "Ebrel yaouank", "birvilh al lireu", "yudù al listri", "a zougan kloc".
- 2) Studiañ gwerzaouerezh, ha penndanvez ar varzhoneg.
- 3) Gant peseurt trivliadoù eo amenet ar varzhoneg-se ?

ETL SIZHUNVEZH HA TREGONT  
=====

Kentel 1

YEZHADUR

Studiañ an araogennoù WAR ha DIWAR, §§ 634-637.

Poelladenn :

- 1) Klokaat ar frazennoù-mañ gant WAR pe DIWAR :

An traoù-se an eus bet .. zle.  
Troet eo an anzer .. ar glay.  
Hemañ n'eo ket .. an dour (mezv eo).  
.. an eus klevet e vefe distro.  
Deut eo dall .. lemm.  
.. c'her ar skolaer ne vefe ket gwir.  
Ne veez ket skouizh .. da stou evel-se bennez ?  
Dimezet eo pe .. zimeziñ emañ.  
Kemeret em boa ha c'hreñv .. ar re-se.  
.. al labour oc'h ?  
.. labourat e oa deat a-benn.

- 2) Spisañ ster WAR er frazennoù-mañ :

Pet rumm tud zo war ar bed ?  
Chomet e oa war ar bale betek hanternoz.  
Mar bez warnañ n'evl e varvo.  
N'emañ ket war e du nat.  
N'on ket bet war eno.  
N'emañ ket war deir eur.  
Ma vez warni ober glav, e raio.  
Eno e veze start warni mesa.  
Ur c'hleñved zo war ar rugale.  
Petore liv zo war an oabl bremañ ?  
Petore blaz zo war ar c'hafe-se ?  
Daoust war belec'h eo ast hennezh ?

- 3) Disklêriañ ster an araogennoù kevrennek-mañ, ha sevel ur frazenn gant pep hini :

War-lerc'h - war-benn - war-gaout - war-dro - war-lein - war-hed.

+ + + + +

Kentel 2

LENNADENN RENET : Ar Pezh Acour, gant Roparz Hemon.

An anzer a dremene. Dont a rann da grediñ o doa dilezet ar veg hag e cant krapet gant an tornaod, pezh a oa diaes, hep bezañ dreist diraez paotred warni ha mibin evelto. Va skoaz kleiz, bet tilhet gant an taol, a oa evel morzet. War va c'hain edon astenn-  
et. Flachañ a ris va brec'h dehoù; neuze plegañ va divasker; neuze, gant evezh bras, goustadik, e fivris va brec'h kleiz. Ne oa ket torret, a gave din. Neuze e komeziñ.  
O tremen bizled va dorn dehoù en blev, e verzis e cant glab. Hag e verzis a oa glab ivez va dilhad. Glav a re, ha n'em boa ket taolet pled. Ne oa ket glav bras, ul litenn a ziskenne sioulk dre an aer. N'em boa ket riv koulskoude. Va anken a yae

pouner. Leal va c'hoif a ris adarre, troet un tannig war an tu dehoù, harpet va fenn war va brec'h. Hag e kouezhis norvitellet.

Pa ahiunis, avat, e krenen gent ar yenijenn. Ur c'hornig eus an eabl a drawelis, warnañ un arliy louet-foñval a ziougan ar beure. Ha ne o sevel, e teuas ur boan en skoaz kleig, ken lein na voe darev din senplañ. Dre nerzh-youl e chomis en sav, hag e krogis e-dastenn da bignat, kammed-ha-kammed. Poent e oa. Edo ar nor oc'h aloubiñ al lec'h na oa bet gourvezet. Ouzh sklaerig gwan tarzhig-an-deiz e welen spour ar gwag-ennoù e punañ en-aro d'ar billi, hag e kleven rolladennoù bras o c'hourdrouz. Pignat a raen, gurrek, war ar vein lampr hag ar bezhin treitour, ken na dizhis ar vag, a oa bet he c'houc'h a-distribilh a-us d'an penn.

Goullo e oa, dres evel na oa bet en abaridaz kent. Kenderc'hel a ris gent va hent, pe gentoc'h, gent va c'hrapadenn.

Splann-oc'h-splann e teue an tevenn, decust d'ar c'houmoul izel a c'holoe an eabl, hag e teue annt din an ardenez. Da vont betek al lein e ranked kammigellañ war ar vri, a valage a luc'h da lec'h a-gioc'h an douz. Risklus e oa, hogen n'en boa aon ebet.

Dimezet en boa un dachenn ledan a-walc'h, dangompez, strewet a vrug hag a lann, a anavezenn nat. Eden o vont da dreuziñ buan. Hogen menel a-sav a rankis gent ar saouzan. Va gwad, evel a lavarer, ne reas nemet un dro dre va c'hoif, ha va blev, - ya, gwir eo, gwir-paer, - a savas a-bik war va zal. Un den a oa astennet war al leton, a-c'hwenn e gain, dres war ar vevenn tost d'ar nor. Kouezhet e oa a-stroñs, hag e benn, aet a-stok ouz ur man lein, a sivilhe, evel pa vije torret-naet e vell-goucoug. Un orbid, ur nousc'hoarzh euzhus kerc'hoc'h, a oa war e vuzelloù gwest, holl a-dreuz. Juluan e oa.

Un tannig uheloc'h, atav a-rez ar vevenn, edo astennet, a-c'hwenn e gain ivez, un den all. Decust na welis da gentañ nemet e zivhar, e verdis diouhtu e oa Beltran. Tostast a ris da sellout ouz e gorf, a-bled war ur roc'h war zirabañs etrezek an is-lonk dindan. E-troñs e vachad e oa plantet ur gentell.

Ur c'hoant dirreizh da dec'hout prin diouz an arrest spourous-se a savas emenn, hag ur c'hoant ha dirreizh all war un dro da welout spisoc'h, an eil c'hoant o stourm ouz eglise. Ha varis evel paget va zred ouz an douar, va sell o vont gwech davet Juluan, ha gwech davet Beltran.

An traou eo noarvat a vuzus ouzhin da verzout raktal un dra, bras ha sklaer koulskoude. D'raon, a-vec'h un troatad diouzhin, e oa ur sae'h lien. Stouñ a ris, e balvata gent va doan dehoù, krogiñ emañ, klask e zibradañ. Pouner e oa evel plon. Daoulinañ a ris neuze, hag o tennañ va c'hanivad diouz va godell, e troc'his al liamm skoulmet war ar genod. B'caruzgeriñ a ris hepken. Fezhioù monreiz a oa e-barzh, pezhioù eour.

En un taol e komprenis : ar sae'h-se a oa an dra bouner an boa gwilet an daou baotr o cachañ war ar vag. Abalanour d'an teuzor-se e oa bet klasket va lazhañ. Abalanour dehañ e omst en an gamet, hag e oant merr o-daou.

Merr ? Ya, va filhor, n'en ket erit krediñ e vane enno c'hoazh un elfennig a vuhez, ha padal a-walc'h, pa'n eus soñjet, ha soñjet an eus alies en darvoud-se a-hed bloavezhioù hec, ez eus bet amzvin en spered. Nani oant bev c'hoazh en eus graet un torfed ken gwadi hag o hint.

Rak seds pezh a ris :  
Truan, ur barr bouner a darghas emenn, reishoc'h lavarout marteze, ur barr follentez. Halval e voe din e oan o vont da vougañ gent an heug, hag e ranken, d'en en zisannañ, distrujañ an ebeg, pelleat diouzhin ar weledigezh doñjerus, skarzhañ an tevenn, glamaat ar bed diouz seurt vilder.

Un taol troad a zistagis gent korf Beltran. Rieañ a reas kerkent d'an traoñi ha steuziañ dreist ar vevenn. Neuze e zistagis un taol all gent korf Juluan. Ne filvas ket avat, ha net e voe din e boulañ gent va brec'h. Erfin e vountis ar sae'h ar nor war o leze'h. Dre deir gwech an boa klevet trouz ar spluj.

Abafet e chomis, pennodet, o trelañ, sebezet oc'h en en gavout va-unan. Azezañ a ris war ar goot, e tere'hel va fenn stardet etre va daouarn.

Neuze eo e welis o skediñ e-tal va zroad ur pezh eour, kouezhet diouz ar sae'h. Hep gouzout nat petra a raen han dastunis hag han lakais e godell dehoù va forpent. War se e savis hag e kerzhis etrezek ti va c'herent-kech.

Goulennoù :

- 1) Displegañ ar gerioù-mañ : ribin, nerzet, flachañ, litenn, trowelout, dioug-anafi, punañ, rolladennoù, ardenez, bri, balagiñ, dangompez, "a-c'hwenn e gain", diy-ilhañ, a-stroñs, orbid, amzvin, poulzañ, trelañ.
- 2) Fennaos e oar an aozer hon lakaat war-c'hed eus an darvoudoù ?
- 4) Peseurt gerioù ha peseurt skudennoù a ro un aergelc'h a spont ?

+ + + + +

Kentel 3

PENNAD-SKRID

An holl vindioù da glask narnezioù zo en ho kerz bremañ. Kounañ c'hoazh kenent-se : intent an destenn, respont da gement a zo en destenn, ha netra mui, ha sevel ur pennad kompouez ha kompenn. Boazet oc'h bremañ, net dra bleustrif ar sevel pennadoù e teuet barrekkoc'h c'hoazh.

Degouezhet ez eus ganecoc'h ivez kalzik pennadoù reizhet. Grit ho mad anezho. Kalz efedusoc'h e vo dere'hel kont eus an evezhiadennoù resis-se eget eus alioù holl-ekoc'h.

+ + + + +

Kentel 4

LENNADENN DISPLEGET : Al lestr, gent Roparz Henon.

1. Dour, dour e-leizh o trenen a-varradoù:  
Troennoù eon hep ehan e punellet;  
Safar an tarzhioù ledan ouz ar c'herreg,  
A-hed inizi serzh an hanternoz;  
Gouelvan un orlav kollet o tannijal  
War bradoù gwer ar gwalaz; hag an avel  
O tougen blaz an holen war va gweuz.  
  
Froudennoù gouez an noz... Ha truan, o regin  
Falleun an hurlink gent ur sarac'h sioul,  
Klevet en eus e'hwitell dre va hun.  
  
O lestr gortozet pell, enacout o tont  
E gouloù gwenn ar beure, hag ar porzh  
A sav e dal davedout, az anavez,  
Hag a ro dit e c'houder.  
  
O lovenez
2. Un devezh klok a ziskuilh, padred. 'Widoc'h  
Brennik e trid ar stradaoù, ar marc'hallac'h,  
Ar stalioù, ar stivelloù, hag ar plac'hed.  
.....

O devezh berr !

3. Ha bremañ galv ar c'hloc'h.

Lesit, va c'hamaladed, war an daol,
Ar werenn c'hleb dezlipet-trumm, ha lesit
C'hoarezh drant ar merc'hed, hoth anheulio, - put,
Ha c'hvek padal, - a-hed ar c'haeoù gell.

Ha kerzhit war ho pouez, 'vel tud o poumen,
Davet ho lestr.

Enañ ar c'hloc'h o c'hervel
A-dreuz ar morc'hilav 'vel ur beurbadolezh,
Divall, diarvar, splann ha spis, ur poentig
A sioulded leun e-kreiz ur bed o fiñval.

Gwernioù a-vern o krenañ war an oabl
Gwenn-holl ha yen.

Digale ne vo mui
Nemet ar mor evidoc'h hag an tamm-se
A geuz.

A-walc'h evit ho preder daonet.
A-walc'h evit ho huñvre.

Faotred, c'hwid
Hepken, - betek e den ar c'hostoù poumer,
O poaniañ, du ho penn, ho korfoù treut
Brizhellet gant ar c'hwez, an uloc'h lemm
En ho taoulagad sklaer, - a vir d'an den
Un tammig eus al lore'h, an haelded kent,
Bet kollet gant ho predeur war an tir.

4. Ha te, va Lestr !

Bepred aketus, sentus,
O kas ar gwid, an eoul, an temzoh fronzus,
Ar frouezh, ar c'hig, ar riz, ar gwiniñ flour
Da walc'hañ korfoù leun, da gargañ yilo'hier
Mistri ar bed, n'o deus tamm douj evidout.

O douger glan nec'hañsoù kuzh, netra
Ne c'hallio saotreañ biken da diernelezh.
An tonnoù war da vourzh, didruez, a zispenn
Ar farkaj, hag ar fru a sun hep astal
Da gouc'h dislivet, laourek, knignet gant
An huzil hag ar mergl, - ha me az kav
Kaeroc'h, yaouankoc'h ouzh an heol a bok
D'az jed, e splannet hir an derot-noz.

Ha n'ouzon tamm pe hud a beg va lagad
Ouzhit, betek an drammel, ha pe euzh
A ra din menel mantret war an aod,
Ha dont en-dro, 'vel unan emzivadet
Drouzh alberz trumm ur gened kar diziraez.

Goulennoù :

1) Displegañ ar gerioù-mañ : troennoù, punellat, gouelvan, oriav, gwalaz,
hurlink, sarac'h, anheuliañ, morc'hilav, brizhellet, douj, nec'hañsoù, tiernelezh,
farkaj, fru, huzil.

2) Ramañ ar varzhoneg e lodennoù, ha klask keal pennañ pep lodenn.

3) Perak en deus ar barzh truez ouzh ar vorarion ?

4) Petra eo al lestr, gouez d'ar barzh ? Perak en deus ken bras doujafiañ evitañ?

+ + + + +

Kentel 5

DEBUNADUR : Ar Balaforned Gwenn, gant Jakez Riou.

Kizidik dreist eo ar varzhoneg-se, evel komant hini bet savet gant Jakez Riou.
Nebeut a fich : un torkad skudennoù o tistreiñ ingal, luskellus; gwel an natur, an
drouz, ar frond, al livioù, komant a c'hallomp merzout diwar-bouez hon skiantoù;
nebeut a vennozioù ivez : ar marv, berzbad ar vuhez, braskid ar gened hag al levezon.
Na fromus, avat, an tamm barzhoneg-se ! En heiz hiziv dreist-holl, pa soñjer o tonk-
adur ar barzh e-unan, marvet o barr e oad.

Setu e vo ret mont adarre d'ar varzhoneg-se gant ho kalon, ha n'eo ket gant
ar reiz. Rak, e gwirionez, n'eus aze nann ebet da gompren. Klaskit santout ar pezh
en deus santet ar barzh.

+ + + + +

Kentel 6

SKRIVADENN

Grit evel kustum, ha respontit d'ar goulennoù.

+ + + + +

Kentel 7

GERIADUR

Studiañ ar rakgerioù, § 886.

Pogladenn :

- 1) Displegañ ez resis talvoudegezh RAK- er gerioù-mañ : rakder, rakredañ,
rakpenn, rakporzh, rakpreañ, rakkouer, rakvarn, rakvel, ragaozañ, ragistor.
2) Pegoulz ober gant RAK- , ha pegoulz gant RA- ?
3) Displegañ stummdigezh ar gerioù-mañ : rannbennad, rannbarzh, ranndir,
rannger, rannved.
4) Petra 'verk ar rakger RE- ? Roit pemp skouer.
5) Displegañ ster ha stummdigezh ar gerioù-mañ : treluc'h, trebarzhidi, trel-
lonk, tregennañ, trenor, trechal.

+ + + + +

TREDE SIZHUNVEZH HA TREGONT  
=====

Kentel 1

YEZHADUR

Studiañ an araogennoù OUZH ha DIOUZH, §§ 626-633.

Poellademoù :

1) Klokaat gant OUZH pe DIOUZH :

Dispeget en eus an timbr .. ar golo.  
Da deir eur e camp savet .. taol.  
Hag e vezent hanter anzer .. ar gêr.  
Anzavet en deus e dorfed .. ar barnet.  
Lakañ ar skeudenn .. ar voget.  
N'anavez ket un touseg .. ur bleisenn.  
Hennezh a rae vil .. an holl.  
Ar vezelon a oar .. ar c'hleñvedoù.  
Ar vugale a zle sentiñ .. o zud.

2) Spisañ ster OUZH er skouerioù-mañ :

Serr an nor outañ !  
Me a varv ma bigied ouzhin.  
Kemeret em boa kaz ouzh honnezh.  
Klenket en doa e arc'hant ouzh al laeron.  
Hemañ zo seder ouzhin.

3) Spisañ ster DIOUZH er frazennoù-mañ :

Hemañ zo un devezh kaer diouzh a oa dec'h.  
N'eo ket dioutañ evañ.  
Hennezh a oar diouchoc'h.  
Femaos e vezont gwerzhet : diouzh ar vent pe diouzh ar bouez ?  
Setu botoù diouzh da dreid.

+ + + + +

Kentel 2

LENNADENN DISPLEGET : Paotr e vlev ruz, gant Roparz Hemon, pp. 118-120.

En anzer va bugaleaj, war un tamm beg-douar etre Lagad-Yar hag ar Bernioù-Pliz, e-kichen Kameled, e oa un ti kozh dirapar, savet neur a gantved oa, e-kreiz ur park, gant ur vogerig mein lakaet hep pri na raz an eil war egile tro-war-dro; ur park, pe gentoc'h un darn eus al lanneg, rak eno, ouzhpenn un nebeut renkadoù avalob-douar, ne greske nemet lastez, banal hag askol, ha bleunioùgouh melen ha glus n'em eus marse anavezet o anv.

En ti-se, hep tamm gwerenn kan war e brenester, aet an hanter eus o doenn gant an avel, e veze tri den : an tad-kozh, ar vamm-gozh hag ur paotrig seizh pe eizh gwelet atav unan eus an daou gozh, azezet dirak an ti pe war voget ar park, ur c'hornig-butun du en e veg pe en he feg, o tiwall ur c'havr dreut staget war-bouez ur gordenn. Evit ar paotrig, gwelet e veze ivez o reded el lanneg pe e-mesk reder an tavenn; ha gwelet e veze bepred a-bell, e bemad-blev ruz-tan o lugerniñ evel ur

ur flamm e-kreiz ar brug hag ar banal.  
Gouez e oa an dud-se. Ne gonzent ouzh nikun. Ur wech na tostais ouzh ar wrac'h, he c'hlevis o chasket mallozhioù etre he misunoù dizant. Krediñ a rae narteze e felle dostaat. Ur vumitenn goude avat e krouezhe mouded ha bili tro-war-dro din, hag e klev-en ur c'hoarzh skiltr hag e verzen ar penna-blev ruz o c'hourrijal a-us d'ur bod pe d'ur garneg.

Maer Kameled a gasas un deiz ar gward-maeziou da c'houlenn ouzh an tad-kozh perak ne gase ket e vab-bihan d'ar skol. Ne ouzon ket petra a respontas. Ar gward-maeziou, hag eñ ur paotr pemek ha kreñv, a grogas er c'hanfard hag e bouzas, gwas-ket etre e zivrac'h, betek an ti-skol. Eno e stlapas anezhañ e-kreiz ar vugale all. Paotr e vlev ruz a varkasaf ur penna. Neuze en em ledas e-giz ul leue e-harz taol-skridañ ar nestr : poan gallet klask ober dezhañ chom en e sav. Da gouz en ehan-o'hoari e tec'has dre ur pnestre, ha den ned eas d'e gerc'hat.

Me va-unan a welas un deiz all un emgann etre ar paotr hag e vamm-gozh. A-zevra en em gannet; n'eo ket ober van a raent. Ar bugel a oa en e zorn ur gontell, hag ar wrac'h, d'en em zifenn, he doa kemeret ur penr-bazh. An taolioù a gouezhe stank war bonn ruz ha war ziskoaz an hailhevodig, a stleje e vamm-gozh dre he zavañjer a-dreuz d'ar park, en ur hejañ e gontell, hag ouzh he lakaat da dreiñ evel ur gornigall. Bep tro ma veze graet laeroñsioù bihan, nac'hagnet ul loen pe freuzhet ur c'hleuz, e veze tamallet an dra da baotrig e vlev ruz. Nikun koulskoude ne glenne d'an archedrien. An dud-se, an daou gozh hag o vab-bihan, ne cent ket kristenien norvat. An droug a c'hellent ober a ranked kamar evel an droug graet gant an anzer fall.

Goulennoù :

- 1) Displegañ ar gerioù-mañ : dirapar, askol, penna-blev, lugerniñ, munusob, mouded, gward-maeziou, hailhevod, kornigall.
- 2) Petore tud a welomp aze ? Petra 'soñjit diwar-benn tenn-spered ar paotr e vlev ruz ?
- 3) Displegañ emzalc'h an dud all en o c'heñver.
- 4) Keñveriañ ton ar gontadenn-se gant hini ar narvailhoù a wechall.

+ + + + +

Kentel 3

PENNAD-SKRID

Urzhit ha kenpennt ar memoziou ho poa dastumet abaoe ar sizhun dremañ. Lakt da dalvoud an alioù bet dec'h hea-ha-hed ar bloavezh.

+ + + + +

Kentel 4

LENNADENN DISPLEGET : Ar Boudedso, 1. Oabloù, gant D.K. Kongar.

Ur gouloù en noz teñval e penn all ar menez,  
N'eo sklaer nag an hent, nag an douar er penn all.  
A ! meizet en doa an noziou boull steredek  
Ha komprenet,  
Ha c'hoantaet un novezh du, ha mat, ha purrenet...

C'hoantaet en doa

En em veuziñ, en em zistruj ha mont da netra.

- Piv a lavare dit mont, piv an den ?

- Ne oa den ha gour all nemedon.

Mont a rin d'ar gouloù ha d'ar pal ha  
Larkoc'h d'ar gêr gann a skin dreist ar menez en noz,  
D'en em veuziñ er gouloù,  
Hag en noz.

- Gra, ha kerzh, ha klemm, ha kar, gra da c'hoant,  
Piv 'n deus laret dit mont, o Boudedeo ?

- Me 'gare va zi bihan en bro,  
Me 'gare koadoù va bro, ar c'hlasvez hag an traoù,  
Hag e karan ar vuhez an eus kavet eno,  
Va ankenioù ha va nec'h e dud ar yaouankiz.

A ! keuz d'ar c'hoadoù teñval,  
Ar c'hebell-touseg gleberek hag an adren en noz.  
Magañ va buhez en draonienn ledan, er palud brizh,  
Ha skintinat en heklev eus ur menez d'un all.  
A ! traonienn wenn ledan va c'hentañ hun.  
Ha dour o vorediñ, bagoù o tont d'an tre,  
Ha gwrez al lec'hid glas,  
Hag eno,

hor buhez

- Piv 'n deus laret dit mont, o Boudedeo ?

- War a **larer** ez eus en tu all d'ar nor brizh  
Inizi a zo kaer bevañ enno,  
War a larer ez eus traoniennoù kaer na ruih an dour  
Ha frouezh flour a deuz dindan ar staon,  
War a larer ez eus un tu bennak er bed bras  
Koadier teñval ha gwerc'h 'vel un illiz,  
Ur gompenn vras, traezhegou aour,  
Hag an oabl bepred glas, hag ar goet bepred flour.

Hag eno e klevet kan an evned a-hed an noz  
Hag e klevet c'hwez-vat ar bleuniou 'hed an noz.  
Eno eo seven ar merc'hed ha laouen o degemer.  
Eno 'mañ pep tra, eno emeur mat, di e ranker mont  
Ha dilezel pep tra 'n e hiraezh da hinon an hoal-vat  
Ha betek traonienn e gêr re seder ha re enk.  
- 'M eus ket laret dit mont, o Boudedeo !

Goulennoù :

- 1) Displegañ ar gerioù-mañ : boudedeo, boull, larkoc'h, "ar gêr gann", "palud brizh", skintinat, "dour o vorediñ", gwerc'h, traezhegou, "hinon an hoal-vat".
- 2) Spisañ implij "anañ", "aze", "ahont", "eno" ha "di" (en ur reiñ skouerioù).
- 3) Petra a rae levenez ar boudedeo ? Ao'hano, klaskit divout pesour den eo.
- 4) Penaos e komprenit-c'hwil ar gaoz-se ?

+ + + + +

Kental 5

GERIADUR

Studiañ ar "gerioù kevrennek all", §§ 889-890.

Poelladenn :

- 1) Renablit ar verboù a anavezit, savet diwar skouer "tremen-distremen", ha disklêriet o ster.
- 2) Savit pep a frazenn gant an adanvioù kevrennek-mañ : kann-digenn, len-laka, klañv-diglañv.
- 3) Pe verboù a anavezit diwar skouer "bevañ-bevañ" ?
- 4) Klaskit dek adanv savet diwar skouer "hirvoan", ha displegit ar ster anezho.

+ + + + +

Kental 6

SKRIVADENN

Testenn ar sizhun, ha goulennoù.

+ + + + +

LENNADENN RENET : Orfeo hag Herodias.

15. A-bell e velas un devezh,  
E-tal ur stêr o varc'hagezh,  
Tri-ugent a itronezed,  
Holl yaouank-flamm ha kaer-neurbet.  
D'o ambroug ne oa ket ur gour.  
Pep hini, war he dornig flour,  
A zalc'he ur falc'hun. E-leizh  
A evned, poc'han ha kerc'hreiz,  
Mailhard, houad hag herlegon,  
Yar-jour ha gicc'h ha c'hwibon,  
A dec'he spontet, hag a-dizh,  
Faket eskuit er skilfoù kriz,  
A gouezha dinerezh. Orfeo  
Ur pennad a sellas outo.  
- "Graz mat !" a lavaras. "Setu  
Merc'hed divortil ha dilu !  
En amez ez on bet ivez  
Ur mailh war ar falc'hunerezh !"  
Hag eñ tostaat ouzh un itron,  
Ha chom badet gant an eston,  
Oc'h anavezout drom guret  
Herodias, an hini gollet.  
Ne rannjont ger, nag eñ nag hi.  
Anavezet oa bet ganti.  
Deroù puilh en he faoulegad  
A darchas gant ar galoned,

O welout an den a gare  
Ken paour ha ken treut e zoaro.  
Hogen prim, he c'heneilezed  
A zeredas holl a-gevret,  
A-raok, a-dreñv, ha tro-wan-dro,  
Oc'h ober dezhi mont ganto.

16. - "Allas," omezñ, "se zo gwazh  
Eget kement a welis c'hoazh !  
Ankou, echu va flanedenn !  
Ar bec'h a zougis betek-hen,  
Start ha diglema, ne c'hellan mui  
Gouzañv, pa'm eus kollet ar spi !  
Ouzhin n'he deus ket lavaret  
Ur ger, ha prim ez eo tec'het !  
Ha chon a ran... Ferk ete  
Komz evel-se ? Pa n'em eus tra  
Mui da goll ez on digabestr !  
Netra mui n'em dalc'h. Me zo mestr  
An tonkadur. Ne zoujan mamm.  
Koustet a gousto, mont a ran  
Da gerc'hat va gwreg, ha ne vezn  
Da belec'h, zoken d'an Ifem !"  
Raktal, e delem war e goin,  
A-dreuz ar vein, a-dreuz an drein,  
Digamant ouzh ar boan, d'ar red,  
War-lerc'h ar marc'hegourzed  
Ez eas. Ha setu n'eo gwelas  
Dre ur skalf en ur roc'hell vras  
O steuziañ kremañ. En, dispouron  
O heulias en ur stankenn don,  
Teñval hag enk, serzh, leun a strouezh,  
Hag hir-sebezus. En diwez  
E tizhas ar penn, ha neuze  
Nag ur ban !... Bez' e welevo,  
Beuzet en ur sklêrijenn-hañv,  
Ur blaenn ec'hon dirazañ,  
Levn ha glas, hep run na skoasoll,  
Sioul ha dudius. Ur c'hastell,  
Pinvidik hag uhel ur marzh,  
A save evel e goularz  
E vuriñ, hag evel e gwer  
E dourioù, nil a brenester  
Skeudennet er fozell, he dour  
Kompaz evel ur melezour.  
Rizemmoù, skoroù kizellet  
A bep doare plant ha loened,  
Skañv ha nistr evel gantelezh,  
Ur wir vezevellidigezh  
A zidi hag a volzioù taer  
Ha lemm, evel skourret en aer,  
Ha pileroù aour hag arc'hant,  
Ha pondalezioù olifant,  
Ken bresk da welout n'eo hañval  
Geneoc'h e cant prest da nijal.  
Eno, don e-kreiz an douar,  
Daoust na bare nag heol na loar,

Ar vein prizius grut o sked,  
Stankoc'h kalz eget ar stered,  
A lenne splannder dous ha kreñv,  
Nad eus e bar nemet en Neñv.

17. Orfeo a welas a-bell  
An itronzed er c'hastell  
O vont holl kevret. Hep termal  
Ez eas d'eo heul. War an nor-dal  
E skoas dichek. - "Piv oc'h-c'hwid ?  
A be vro ? War be gefridi ?  
E teuit-hu ?" eme ar porzhier.  
- "Ned on nemet un telenneg,  
Hag a car seniñ tonioù koant  
Da blijout d'en dud, n'eo deus c'hoant."  
Ar paotr a zibrennas an nor  
Hag a roas dezhañ digor.  
Orfeo kerkent a skrijas.  
Ar c'hastell oa yen evel sklas,  
Hag ed leun a dud, darn ledet,  
Darn en o sav, darn aezet.  
Renket holl a-steudad e oant,  
Diflach, disliv ha diseblant.  
Darn oa kousket. Re all, avat,  
Oa digor-bras o daoulagad,  
Hag o sellout eum dirazo,  
Sonn, evel skornet en alfo.  
Darn oa mouget, darn nac'hagnet,  
Darn dibennet ha darn staget  
Gant kerñn. Darn en un tangwall  
A oa bet loaket, ha re all  
Beuzet, o dilhad leun a fank.  
Bez' e weled ur vamm yaouank,  
Ho bugelig en he c'hichen,  
Ha pelloc'h e weled un den,  
C'hoazh war e varc'h, ur brezelour,  
Lazhet trum gant an enbrou.  
Holl, gant pobl ar gormanded  
D'ar c'hastell cant bet degaset.  
Orfeo a gerzhas a-dreuz  
Saliñ diniver, hag an euzh  
A greske dalc'hmat en e greiz.  
Ha setu, dres evel en deiz  
Ma oa bet en avalenneg  
O hunañ dibredet, e wreg,  
E vuiañ-karet, Herodias,  
Skrapat e bleuñv he yaouankiz.

Goulennoù :

- 1) Displegañ ar gerioù-mañ : poc'han, mailhard, herlegon, c'hwid, eskuit,  
"divorfil ha dilu", milh, badet, digabestr, skalf, dispouron, gweleñv, leun,  
rizemmoù, "ur wir vezevellidigezh", fennañ, alfo.
- 2) Spisañ, dre un nebeut skouerioù arzeloc'h an arrouden-se.
- 3) Renablit an elfennoù marzhus en arrouden.

PEVARE SIZHUNVEZH HA TREGONT  
=====

Kentel 1

YEZHADUR

Studiañ an araogennoù GANT ha DIGANT, §§ 640-646.

Boelladenn :

1) Klokaat ar frazennoù-mañ gant A, EUS pe GANT :

E yalc'h a oa leun .. aour.  
Spontus eo karget ar c'harr .. an ed-se.  
Hag e ve leizh an daol .. aour.  
An cabl a oa goloet .. kounoul.  
Graet eo an daol-mañ .. koad derv.

2) Klokaat gant OUIH, WAR, GANT pe DIGANT :

Kerzh da c'houlema e skeul .. (eñ).  
N'a ket da skeiñ da benn .. an treust.  
Ar gwid gwenn a sko .. ar penn.  
Darc'hav ur skouarnad .. (hi) 'ta !  
Broc'het eo; ne gomz mui .. (me).

3) Spisañ ster GANT er frazennoù-mañ :

Gant honnezh e oan aet da vatezh vugale.  
Gant Pask, emezi, e teujent.  
Prest eo lein ganit ?  
En noz-mañ em eus ranket sevel gant ar c'hazh.  
Petra zo ganit ez torn ?  
Glav zo ganit.  
Ar re-se zo gant o labour.  
Me a oa bet tri niz gant ur bizad.  
A-nerzh e gorf e skoe gant ar gazeg.  
C'hoant an eus d'ober ur skolaer gant na nab.  
Ne wel ket anezhañ gant ar bihan eo.  
Ne oan ket gouest da fivañ gant ar c'hwaziñ a raen. (J. Gros)

+ + + + +

Kentel 2

LENNADERN DISPLEGET : Bhez ar Vertuz, gant Youenn Olier (4<sup>e</sup> kevrenn, pennad II, pp. 65-66.)

Piv eo Youenn Olier ? Petra en deus skrivet ? Klaskit en Istor al Lennegezh.

Trowardroioù Loran-ar-Menez a oa bourrus ha dudiñs neurbet. Rannet e oa ar maezioù e parkeier hag e pradeier bihan, bevannet gant kaeoù ha nogerioù izel. Mar-ellet e oa ar gweledva gant stankoù e-leizh a lufo, glas gwer, e don ar flagennoù, kinklet gant ur maredad milinoù aval pintet e lein an torgennoù. Klouar e oa an anzer, koun mat a zalc'han, digoc'henn an cabl, strawet ennañ evelato un nebeut koabrennoùigoù gwenn lezirek a yas da gantren den ne ouie da belec'h.  
A-greiz-holl, eus kern ur menez, em boa dizoloet ar gêrbenn en un taol. E-kreiz

ar c'hlasvez, e strad ur saonenn eo'hon ha war ar pentennoù tro-dro en em waske toennoù a-vil-vern, livet holl e gwer, na oa dines o diforc'hañ diouzh al liorzhoù stank o groms. Dre ma testais avat e tiverris ur c'halz a savadurioù bras ha n'em degouezhet al Ledenez.

Ne oufen reiñ lavarout deoc'h pet a dud a oa o vevañ er gêrbenn a'an anpoent, ar-Menez; pezh a zo kiriek d'an dra-se eo ne saver el Ledenez peurvuiañ, er gêrbenn int avat, tomet alies gant un doare tomerez-kreiz, kalc'hiet ivez gant liorzhoù diwar vein-bencorezh tolzennet tennet diouzh mengleuzioù tro-jro da gêr; gouezet em kaez ma c'honzer enno bleuñv ha glazien war un dro. An tiez o-man zo start, aezet gant kloc eo klonket ar main-mañ, Morgan, na ne weler junt ebet etrezo. Ledan eo ar purrester, graet a werannoù-liv stag kenetrezo gant ploun, a gav din. Ned int kuzhet gant midoc'h na stign ebet.

Ar strada a oa eun, ledan ha naet war un dro, goloet gant un doare simant graet a draezh ha krozoù ruz. War ar riblennoù, daou vetrad bennak diouzh kael al liorzhoù, ez eus bet plantet brougwez a bep seurt, lom, liroù ha kastrilhez a siforc'h mat an dud war droad diouzh ar c'hirri. Rak kirri o-leizh a veze o vomezonoñ e kêr, kirri bihan skaff, stlejet gant chas evel ar purrest eus al Ledenez. Skarañ a raent dre ar stradaoù, tizh warno, o tennañ fulennoù diouzh an hent, storloù ha strap ganto, hep furnez ebet a-wechoù ken e c'hoarvez gwall-zarvoudoù dister a-walc'h ha peurvuiañ, hogen gravus ivez bep an amzer; neuze a veze klevet e-pad pell harzhadegoù al loened kounnaret ha klemmanoh ar vlienderon c'hloazet. Ur pennad mat a ranket gortoz kent diluziañ ar rañjennoù rouestlet ha distrobañ an hent. Neuze e errue ur c'harr pouner pederrdek sachet gant ejened, a samme an dud vac'hagnet hag o c'hase da ospitalioù kêr.

Goulennoù :

- 1) Displegañ ar gerioù-mañ : marellat, gweledva, pintet, digoc'henn, divers-out, daourezek, klet, tolzennek, gouwelout, krozoù, lom, "storlop ha strap", skarañ, rañjennoù, distrobañ, pederrdek.
- 2) Konveriañ ster ar gerioù-mañ : traonienn, flagenn, saonenn - torgenn, run, pantenn. Roit heñvelsterioù all.
- 3) Emour e Breizh er bloavezh 3000. Petra a zeskar anañ diwar-benn al "Ledenez"?
- 4) Addisplegañ ton dibenn an arrouad-se.

+ + + + +

Kentel 3

PENNAD-SKRIT

"Un huñvre hoc'h eus dalc'het soñj anezhi."

Da gentañ, klask ar memozioù evel dalc'hmat. Dibab an huñvre. Marteze e vo un hurlink. Erastresañ ar pezh a oa en em gavet ganeoc'h e-doug ar munutennoù-se. Mervout a reot bun eo dishenvel an dever-mañ diouzh ar re all : n'eus ken anv a fram, nag a boell. Kemrañ a c'hall ar skudennoù, en em deuziñ, h.a., hervez ar faltad. Soñjit el livioù, er goullier, en trouz. Na glaskit ket ijinañ re a draoù evit ober van da vezañ faltazioc'h eget ar re all ! Na rit ket ivez diouzh ar skriaoù bet lennet ganeoc'h. Ne dalv ket ar bean. Trawalc'h kontañ ho huñvre eun-hag-eun. Prantadoù an huñvre a dalvo deoc'h da stoufivann. Savit an digoradur, ar c'hloz-

adur hag un tamm pennad diouzh ho krad.

+ + + + + + + + +

Kentel 4

DEBUNADUR : Al Lestr, 1.

War betra eo diazezet ar varzhoniezh el lodenn-mañ eus ar varzhoneg ? War ar skeudennou espar a sav dirak daoulagad ar barzh, met ivez war ar sonioù, war an taolioù-mouezh, war ar mentadoù... Setu 'vo rot deoc'h pleustriañ aketus war ho tistagadur end-eeun. Garv pe c'harvoc'h eo ar sonioù, evel na tere ouzh taolenn un "hurlink". Er c'hontrol, eo flouroc'h kalz ar gwerzennoù a displeg donedigezh al lestr.

Taolit fed ouzh an distagadur eta, lakit a-wel ar skeudennou-lavar, roit o fouez d'an holl sonioù.

+ + + + + + + + +

Kentel 5

LENNADENN RENET : Deizlevr Brezel 1944, gant Youenn Olier, pp. 70-71.

Gwener 9 a viz Mezheven 1944

Nozvezh a vracuac'h.

Ea oan srennet e-tro un eur hanter e klevis dre va mored c'hwitellerezh an evezh; evel boaz e teuas damc'houde frañverezh boud ar c'hirri-nij amerikan. Ne zigouskis da vat nemet pa darzhas a rumadoù harzhadennou an D.E.K.N., a oa chomet norvitellet betek neuze, a zihunas ha dre ar prenestr digor ez arvestjomp ouzh un tan-artifiz : fuzennoù aruz a oa o tiskenn an eil a-dloc'h eben, prin a-walc'h, un dek bennak anezho; tost deomp e hañvalent bezañ ken e toujis d'ur mare na gouezjont war doenn ar savadur bras e skoaz d'hon ti; hogen dre na teuent d'an traoñ e pellaent war-du kreiz kêr... Luc'h aruz ar steredennou iskis-se a fenne ur gouloù diseurt war an toemnoù mein-skient.

Stankat a reas ar ganoliadeg, Spumantif a rejomp ar bolodoù livek o pignat a-hed ur-gremenn betek lein an oabl teñval. Betek neuze na oa ket disheñvel an evezh diouzh kantadoù a evezhoù all.

En un taol kreñn avat e kreskas kement an tousemacth na ne oa ken tu d'en em glevout; a bep lec'h e tiorolle gwagennoù beuzerus an tarzhadennou na oa fin ebet dezho; kavout a reas din merzout en tu all d'an ti melloù skleuriadennou displeget e stum avelerioù nelen; gwashaat a reas c'hoazh an todilhon; strofiset-distrofiset e oa an ti en e bezh; ha sed na voe lazhet ar gouloù en un taol endra na yude ur c'harr-nij bennak a-us d'hor pemnoù, en deñvalijenn, ken e kredemp e oa o vont da blavañ warnomp; ar spouron a grogas ennomp pa c'harvas S. a-greiz-holl : diskenomp d'ar c'hav. An holl en em strinkas a lam e-barzh an dirdi, hogen enru d'an traoñ e kavjomp an nor prenet. An dimezell J. a rankas sevel en-dro da gere'hat an ale'houez, pezh a gemeras anez, rak tost e oa da semplañ gant ar spont, poan dezhi chom en he sav. Erfin, bez' e c'hellas an holl kavout repu er c'hav, siklêrijennet gant un tamm kantol. E-keit-se e kendalc'he ar c'hirri-nij da yudal dibacuez, ar bombezennou da stlakai, an ti da grenañ. Da bep poent e oamp en gortoz da vezañ friket gant ur vombezenn, rak enat e oa an dro-mañ e kouezhe ar bombez en hor c'harter. /.../

Pa voe ehanet strakataerezh an D.E.K.N. e teujomp er-maez eus hon toull razhed ha redek a rejomp betek kevioù Skol-veur al Lennegzh war blasenn Sant Melen e-lec'h e oa bodet ur 40 bennak a dud, led anezho astennet war gollc'hedoù, peuzdilavar, o

c'hedal bepred dibenn an evezh, habask; nemsailhe mai ar ganoliadeg nemet a varmadou. Etreant e oa degouezhet A. a oa bet peket gant ar vombezadeg pa oa o kousket unañ dindan c'hwez ar bombez; goude en em wiskañ prin-ha-prin e oant ast d'ar c'haloup betek kevioù an ti-kêr da repuiñ. Neuze edo ar vombezadeg en he gwashañ.

Goulennoù :

- 1) Displegañ ar gerioù-mañ : bracuac'h, digousket, aruz, kanoliadeg, "an evezh", skleuriadennou, plavañ, peuzdilavar.
- 2) Displegañ ha keñveriañ ster "srennet", "norvitellet" ha "moredet".
- 3) Renablit ar gerioù o tennañ d'an trouz, ha displegit ar re n'anavezit ket.
- 4) Perak n'eus kenmadur ebet war-lerc'h "dor" e : "e kavjomp an nor prenet" ?
- 5) Pelec'h e tremen ar vombezadeg ? Pegouiz ? Petra 'ouzoec'h diwar-benn darvoudoù ar mare-se ?
- 6) Penaos e teu anet an aergolc'h a spouron a rene eno ?

+ + + + + + + + +

Kentel 6

SKRIVADENN

Evel boaz, ha respont d'ar goulennoù.

+ + + + + + + + +

Kentel 7

LENNADENN DISPLEGET : Ar c'helenner meur, gant Ronan Huon.

Piv eo Ronan Huon ? Petra en deus skrivet ? Klaskit en Istor al Lennegzh.

Ha petra en deus hemañ  
Gant e benn barner ?  
Mont a ra gant e hent  
beuzet en e lorc'h  
pe marteze en e soñjoù.  
Al laboused e nijal spontet  
war an doenn  
a sut ez eo ur c'helenner meur.  
Ne wel ket al labousedigoù  
nag ar vugaligoù  
nag an dudigoù  
nag ar man a c'hellfe  
e lakaat da gouezhañ, fidandoustek !  
Ur c'helenner meur eo.  
Ret e vije lakaat dezhañ  
un tog foñs uhel,  
eme ar pintig, pintet war e skourr,  
unan glas evel ur gaolenn,  
eme ar rakerig.

Sellit penaos e kerzh !  
Piv piv eo, piv piv eo, eme al laboused:  
hennezh gant e benn du  
sur en deus poan avu.

Goulennoù :

- 1) Displegañ ar gerioù-mañ : "beuzet en e lorc'h", pintig, rakerig, tog fofis.
- 2) Petra a ziskouez e ra goap ar barzh gant ar c'helenner meur ? Petore goap eo ? Roit skouerioù.
- 3) N'eus aze na gerioù rouez ha heson, na klotennoù, ha koulskoude ez eo gwir varzhoniezh, anat. Perak ?

+ + + + +

PEMPET SIZHUNVEZH HA TREGONT  
=====

Kentel 1

YEZHADUR

Studiañ an araogennoù DRE, RAK, DINDAN, §§ 624, 625, 638 ha 639.  
Boelladenn :

1) War-lerc'h pe verboù e vez kavet an araogen RAK ? Savit ur frazenn gant pep hini.

2) Spisañ ster DRE er frazennoù-mañ :

Debrifñ traoù dre zour.  
Hennezh a gaoze dre "de".  
Mari vihan, o sellout dre zindan.  
Leoù graet dre c'hlaç'har.  
Un evn a gane, ha dre e sen e lavare...  
Evel m'oa marv hemañ dre chon hep heuliañ an alioù.  
Dre m'eo tomm an houarn eo ret skañ warnañ.  
Dre ma kreskent ez aent da c'hoari e-touez ar vugale all.

3) Spisañ ster DINDAN er frazennoù-mañ :

Douar dindan melchon.  
Debrifñ dindan e veud.  
Labourat dindan an holl amzer.  
Menajerien dindan die.  
Dindan biv oc'h amañ ?  
N'eus bragoù ebet dindanañ.  
Ur rouanez dindan dec'h.  
Dindan eich deiz amañ en devezo brezel.  
Hag e vezont eno dindan o acn.  
Bet e oa dindan soutanenn.

+ + + + +

Kentel 2

LENNADENN RENET : An den meur, gant Jakob Konan.

Piv eo ar skridvagner-se ? Klaskit en Istor al Lennerezh.

Antronoz ar heure abred e c'hrevie Jeffig otrerek Lannevern war e varc'h-houarn reder. Kaer an amzer evel en dere'hent. Ur stignad brusem denav a zamskoude en drem-wel : seblant a amzer vray, sur. Chaogentañ a oa gant al laboused er girshier, met ar maout a yae gant ur voualc'h hag a sutelle disper ton gavotenn Skrignag.  
Goude ma'z oa bet skañhus e zvezh-sul er gêr e nije Jeffig, koulz lavarout, marc'h-houarn hag all, war-du e labour. Hañvalout a rae dezhañ e oa kresket e nerzh en ur ober peder eur warn-ugent en un deare burzhodus. Pouezañ a rae war an troadik-elloù hep tamm poan. Riskoazh n'en devoa kavet ken brav all bevañ.  
An holl a seblante e garout. En dere'hent d'an noz en devoa hen gwelst a-walc'h.  
Lid a oa bet graet dezhañ hag en holl diez Lomerven, sur-pat, ne oa bet kaoz en noz-se nemet eus e daol-kaer. Bremaik e Lannevern e vefe, hep nar ebet, degemeret gant distalac'h, rak a-benn bremañ e oa bet lennet Ar C'homor.

Hag evel-se e voe kont, or B.N.B.K. dreist-holl. Rener an ti end-ecun a zeuas o-aman da stardañ e zorn dezhañ en ur zisplegañ "a-berzh holl implijidi an Ti-Bank" an troñsad loro'h a oa emne o kaout en o zouez un den hag a rae enor d'ar Vro a-bezh.

War-dre unnek eur hanter e voe servijet en ur sal gaer eus an are'hantid ur "gwin a enor" evit gouzuliañ kur Jeffig Skeran. Dros avat pa oa an evadeg-se a voutouji o paouez echuiñ hag an enoriad o vonet d'e verenn a-gevret gant e gamaradoù, setu na kavas heman un denig bihan divalav ouzh e c'hortoz e toull an nor. E anavezout ervat a rae Jeffig : an aotrou Loarer, urcher e Lannevern, an hini oa. Gwisket e oa evel meur a urcher treut all war an douar ha koulskoude ne oa ket den all hañval cutañ e Breizh penn-da-benn.

Mourrou hir-hir a zouge stag ouzh lodenn-draoñ e zramm, el lec'h anvet, el levrioù uhel, pont-ar-nic'hi. Ur brank anezhe a herlinke e jod dezhoù, ur brank all o skañ war-du ar c'huzh-heol a rae allazig d'e jod klaz hag ar peurrest a dribilhe dirak e c'henoù. En anet e talvezo al lodenn diwezhañ-mañ dezhañ da sil evit an evajoù hag ar bouad tenn.

Marzhausoc'h kalz e oa c'hoazh ar mourrou stank a oa kresket dezhañ el lec'h n'emañ ar c'hiz gant an holl vroadelezhioù da zougen abrantoù ! Ma seblante ar peotr sellout ouzhoc'h gant e vourrou-krec'h. War-hed daou c'hant metr na tri-ujent e oa'h sur d'e anaout difazi; ne oa ket anezhañ un den bihan treut gant ur fri berr, daoulagad kaouarn hag ur gouzoug hir, hogen ur benn mourrou brech'hek, garez ha troadek.

Ha setu bremañ na ldeve Jeffig Skeran, evit e vrasañ souezh, konzoù evel hen o c'hmiltall a-dreuz ar mourrou-traoñ :

- C'hmil eo, n'eo ket 'ta, an aotrou Jozep Skeran ?
- Ya, ne eo, eme hemañ sabbatuet-naet an tamm anezhañ.
- Mat, a gouzantas Al Loarer.

Hag eñ neuze tapout ur baperenn c'hlas eus ar sac'h-ler a oa gantañ ha kregid da lann buan-buan traoù diase a-walc'h o c'hompren. Pesh a oa fraezh da intent koulskoude eo e oa meneg er benn gerioù iskis a gleve Jeffig evit ar wech kentañ, eur nor, bloñsadennoù, glozadennoù hag all.

- Ha bremañ, eme baotr e vourrou pa voe echu da lann, en ur ziskouez traoù ar baperenn, sinit anañ, nar plij !

- Met komant ha petra e talv se holl. Aotrou Loarer ? a c'houlennas Jeffig Skeran. Ne gomprenn mann !

- Un den ho'h eus kannañ ha dotuet : mixet en deus greunenn ouzhoc'h a-hervez, Aotrou Skeran !

- Un den an eus kannañ ?
- Ya, graet hoc'h eus.
- Ha piv an den-se ?
- Ur Gall, Aotrou Skeran.
- Ur Gall, Aotrou Loarer ?
- Ya 'vat ! Eugène Stromberger, 61 vloaz, o chom 241 straed Glickenfeld e Parns.

Ha kaset oc'h dirak ar barner gantañ abalanour m'ho'h eus e zornet, bloñset e zacul-egad outañ dec'h d'abarhaez e Porzh-Tuzeg e parrez Lokmerven. Dalit ! Sinit anañ, nar plij !

- Dirak ar barner... dirak ar barner, a c'hagoullhas Jeffig Skeran en ur glask harp ouzh moger ar B.N.B.K. o vezañ na seblante, a-sav-taol, an douar tuet da wakat gindañ.

Goulennoù :

- 1) Displegañ ar gerioù-mañ : graviañ, "stignad brumenn", chaogentañ, distal-ae'h, "troñsad loro'h", kur, herlinkat, tribilhal, bloñsadennoù, dotuñ, kouzantia, "mixout greunenn", gougoullhat.
- 2) Petra 'daly "brec'hiek", "garez", "troadek" ? Displegañ ar stummañ anezho ha roit skouerioù all.
- 3) Petore den eo Jeffig ? Displegañ da heul ar fent en arroud-se.

Kentel 3

PENNAD-SKRID

Krogit da glask mennoziou a-zivout testenn ar sizhun. Barrek oc'h bremañ da sevel ur pennad-skrid hoc'h-unan.

Mar kavit diase sevel ar pennoù evelato, setu ur boelladenn aes d'ober : lemm-it unan eus ar skridoù roet deoc'h e-doug ar bloaz, serrit al levr, ha klaskit did-oueziañ mennoziou ar skrid. Er c'hiz-se e teskot an doare da vezañ ar pep pennañ eus un destenn ha da frañañ ho mennoziou e-barzh ur steufiv resis.

+ + + + +

Kentel 4

LENNADENN DISPLEGEGE : Labour an estren, gant Anjela Dival.

Diboure'hañ. Diwlaskañ hor Bro  
 Sibañ dery sañr an Drouized  
 Begv ar Gelted hag o ivin  
 -- Ha kistin hor yaouankiz --  
 Ma kane emne hol laboused-ni.  
 C'hwezhañ tan el lanneg  
 Er brugeler. Er balan o wagennif  
 'Vel morioù o dour acour  
 Ha skridañ war gein noazh  
 Ar Vro gozh, e kenant yezh estren  
 Barzhonegoù a garv  
 Barzhonegoù digened.  
 Gant o lizherennoù sonn  
 Reut 'vel o dremaoù dir:  
 Regannadoù hir a soudarded plon  
 Cwerzennoù dilusk o gwez rousin  
 Dezhe anvioù iskis !  
 Ha dizale... nar na daolomp pled  
 War ograñ meur  
 O c'hoadoù teñval ha trist  
 - Tennet gent luñ hor c'hoad-ni -  
 E c'hoario 'n ur ganañ  
 An Avel Atlantel  
 ... Requien hor Bro.

9-2-67.

Goulennoù :

- 1) Displegañ ar gerioù-mañ : diboure'hañ, ivin, "kistin hor yaouankiz", gwagennif, digened, regannad, tenzañ.
- 2) Displegañ stummadigezh "lanneg". Roit gerioù all hañvel o liester.
- 3) Gant petra eo doaniet ar varvezh ?
- 4) Petra ra aon dezhi en anzer da zont ?

+ + + + +

Kontel 5

DIRUNADUR : Ar c'helamer meur, gant Ronan Huon.

Ur varzhonag-skañv eo homañ : mousfent, goap tanav ouzh un den tonius ha c'hwezhet. A-wechoù heñval ganimp e klevomp richan al laboused, ken sikañv eo ar gerioù. Notit ivez a-wechoù gwerzennoù heñvel ouzh rimadelloù bugale. Arabat e vo deoc'h avat pouezañ re war an tu goapaus. Nann, dibunit ar varzhonag ur minc'hoarzh war ho muzelloù, ha klaskit heuliañ lusk ar frazennoù.

+ + + + +

Kontel 6

SKRIVADENN

Testenn ar sizhun, ha goulennoù.

+ + + + +

Kontel 7

GERIADUR

Studiañ an anvioù-tud hag an anvioù-lec'h, §§ 887-888.

Poelladenn :

- 1) Klaskit pemp anv-den o kregiñ gant KER-, ha displegañ o ster.
- 2) Klaskit hag adskrivit stumma reizh an anvioù kêrioù ha bourc'hioù en-dro d'al lec'h ennoe'h o chom.
- 3) Klaskit war ur gartenn eus Breizh betek pelec'h ez a an anvioù-lec'h enno PLOU, LANN, TRE, GWI ha LOK.

+ + + + +

C'HWECH'HEVET SIZHUNVEZH HA TREGONT  
=====

Kontel 1

YEZHADUR

Studiañ en ho levr ar melladoù 583, 587 ha 588.

Poelladenn :

- 1) Lakaat DAVET pe DAVIT, hervez ar ster :

Aet e oa ... e vreur.  
 Mont ... gour.  
 Mont a reas ... ar roue.  
 Mont da Vontroulez ... stoub.  
 Me a yel raktal e kêr ... ur medisin mat.  
 Ni zo prest da vont ... ar porzh-houarn.  
 Duit neuze ... va ene da vont ganec'h.  
 Pa fell deoc'h dont ... (me).

- 2) Displegañ ster EIRE er frazennoù-mañ :

Etre bezañ naet ha loudour, n'eus nemet ur berad gour.  
 Brezel a oa etrezomp hag ar Saozon.  
 Moizez a rannas ar mor etre daou.  
 Roet dezho da evañ etre meur a wech.  
 Etre ma komze eval-se an daou vugel, e klevjont o c'hoar...

- 3) Pegouls e reer gant KENETRE ? Roit teir skouar.
- 4) Savit teir frazenn gant HERVEZ.

+ + + + +

Kontel 2

LENNADENN DISPLEGET : Er c'hoad, gant Ronan Huon.

Pignat a raent war o fouez gant an hent serzh ha dizarempred, an eil war-lerc'h egile e-touez ar raden. Yann a zeus da zivezhañ, a-drek e dad. Abaoe e gleñved e val-ee heñval gant harp ur penn-bazh. E zivesker marc'hag noan a oa startet e bodroù ler gant lasoù a oa diouzh ar c'hiz en e yaouankiz, rak soñjet en dea e vije bet uhal ha gleb ar geot hag ar raden.

Gant ar c'hrenegelloù don e oa diaes bale ha Yann a soñjas kregiñ e brec'h e dad evit e sikour da bignat, met ne gredas ket hen ober. Daoust ma oa deut an diskar-amzer o devoa ar gwez miret o delioù hag ar gwez kistin a oa heñvel ouzh kebell-touseg bras, rouez o fennoù.

- Divezhat eo an delioù da gouezhañ er bloag-mañ, eme an tad. N'eus bet tamm rev ebet c'hoazh. Un nozvezhiad rev gwann hag e kouezhent diouzhni.  
 Strebotoññ a reas er skoasell hag e kouezhas war e gotez.  
 - Ar marc'h kozh ne chom ket mui en e sav, enezañ o klask sevel gant harp e benn-bazh.

Yann a grogas en e vrec'h evit e sikour. An noter hag a oa dek karned en o raok a oa distroet.

- N'eus ket a zroug ? a c'houllemas.
- Ar marc'h kozh, eme an tad adarre, o farsal.

Tremen a rejont e-biou gwez bras gant ur gouli ruz ouzh o c'hostez. Erru d'al lein war ar plan e reas an tad un ehan. Sevel a reas e benn-bazh evit diskouez an tu all eus an draonienn. Ne gomzas ket aouzhtu, berr warnañ.

- Gwelout a rez an ti gwenn du-hont a-drek ar gwez ? Eno on bet o chon, a-raok mont d'ober va servij-soudard. Ur vereuri gaer, lezardou, ha douar mat.

E porzh an ti-feurm e kavjont ar vero'hig, vak ha digas, o ruzañ he botoù en ur voutañ ur maen en he rack.

- Poent eo echuiñ an devezh, a lavaras ar c'houer o tont en o arbenn en ur naet-aat e zaouarn ouzh e vragoù. Ur banne a gemerfec'h a-raok kemer penn an hent.

Klankañ a rejont o binvioù er c'hirri ha mont en ti. Krog e oa da c'hlizhenniñ pa voent prest da loc'hañ.

- Mont a ran a-drek, eme an tad, muioc'h a lec'h an bo evit va divhar. Yann a guitaas ar vereuri goustadik en ur ziwall da lakaat rodoù ar c'harr-tan e skoaselloù an hent strizh a gase betek an hent bras.

- Chafis hon eus bet memes tra ez eo chonet brav an amzer, emezañ hep treiñ e benn.

An avel a oa krog da c'hwezhañ a-fourradou. War an hent bras e ruilhent bremañ. Treuziñ a rejont ur c'hoad. Ur fourrad kreñvoc'h a hejas ar skourrou en-dro dezho hag un delienn c'hlebe a zeuas da begañ ouzh ar werenn.

- Mat an traoù ? a c'houlemaas Yann. Sellout a reas er meleour. An den kozh en doa serret e zaoulagad. Edo hanter astemet war ar bank a-dreñv, e soñ war e vruched.

- 'N en santez ket skizh ? a c'houlemaas e vab kreñvoc'h. - O nann, emezañ ar wech-mañ, hep digeriñ e zaoulagad, mat on.

Chon a rejont sioul ur reuziad. An delioù sec'h a rede a-dreuz an hent. Tad Yann a gomzas adarre :

- Avel flav, avel c'hlav. Hiboudiñ a reas ur wech c'hoazh :

- Tu vo da gaut kant mil lur anezho... ar marc'h kozh... hag e serras en-dro e zaoulagad, ur mousc'hoarzh o parañ war e ziveuz.

Goulennoù :

1) Displegañ ar gerioù-mañ : dizarempred, "divesker marc'heg", bodreoh, "berr warnañ", "vak ha digas", glizhenniñ, fourrad, reuziad, flav, hiboudiñ.

2) Displegañ ha keñveriañ ster "skoasell" ha "krennegell", ha reiñ henvesterioù. Ober heñvel evit "merc'heri", "ti-feurm", "atant" h.a.

3) Peseurt den eo tad Yann ? Petra a c'hoarvez gentañ ?

4) Lakit a-wel ar munudoù a ziskouez karantez Yann evit e dad.

+ + + + +

Kontel 3

PENNAD-SIKRID

Diwar an notennoù eus ar sizhun diwezhañ e krogot da sevel ar pennad. Dalc'hit en ho soñj an holl alioù a zo bet roet deoc'h, koulz hag an divankadennoù war ho poelladennoù diaraok. Zoken na hoc'h eus tapet notennoù fall, na ankounit morse eo a bouez labourat a-zevri ha strivañ da arakaat.

+ + + + +

Kontel 4

PENNADENN DISPLEGET : Gwelloc'h eo lezhañ ar gouloù, Tin ! (Reun Menez Keldreg).

Kann e oa Tin. Kann ha diframmet, Diouh an daou du. Ha difeson. Ne oa ket per e gamerezh, tann ebet, da hini ar re a ra un hanter-dro war o dargreiz abalamour n'eo distum.

pennoù o eskern, pezh a ra dezho en em enprañ fall e toullioù ar groazle; nann ! tin a oa kann da lakaat unan da skrijañ ! Brudet e oa bezañ gwalleur ha kaout un tenn-spereñ gary. Gwir eo en doa da vare e veuzadenn, tost da zaou-ugent vloaz. Kasl eur, ar sioh a vleuri neuze en e eme o doa kemeret o gwizhoù en darvoud c'hoarvezet gant-aet an tad a'an oferenn-vintin, en doa fellet dezhañ ober war-dro marc'h kellek en ti, evit e vouta. Evel un den. Ur forc'h a oa bet kavet en e gichen. Petra an diaoul en doa graet ganti ? Den n'en deus gouezet. Ar pezh a zo ennav eo e klavas ar varn ur vlejadenñ ken kriz na kouezhas diouh he daouarn ar bolennh a ranke er gaeastell.

Redek a reas davet ar marchosi evit gwelout he mabig kouezhet en e vern evel ur vero'h-odenn vrenn, brevet.

Dastumet en doa un taol pav neretañ, gwintet outañ gant al loen, e-kreiz e vorzhed delioù. Torret e oa bet e askorn-morhed e nouspet tann. Ouchpenn, nerzh un taol e stlapes ouzh ar voger war ur c'hroeg koad sanket ase evit degemer an harnez, pezh a dorras naet ar c'har all. Fregañ a reas ar paour kaezh paotr, paet gantañ en un taol, a lavaras mear a unan, tro-war-dro, an droug an doa graet da bep tra vev a filve e kl.

Ur c'hozhial a re war-dro al loened a oa bet galvet da renkañ e izili. Goude emenn a reas d'e dud e vero'hel en e wels e-pad dek sizhun da nebeutañ, pevar zann planken liammet gant sifellenn-besketa en-dro da bep gar.

Peder sizhun goude, an amprevan a voutaet a-nevez ar marc'h en ur jilgarmañ gant sikour flac'hon hag e blenk sifellennet.

An tad, sotoc'h egetañ, en em estlame dirak an dud a c'houlema keloù eus e vab, en ur lavarout e oa hemañ ur gwaz hep e bar. Pezh a oa gwir sur a-walc'h, nemet ur gwaz kann a reas outañ.

Parañ a reas mod pe vod, rak par e oa d'an astuz ha d'al louzoù fall a c'hoarvez a-ñv gaeñv ha haeñv, rev ha tonner, glav ha sec'hor hep dant. Hemañ a oa eus ar ouenn-ge a dig he fover-ugent hep un disterañ paz. Nemet e chomas divalve e izili.

"Da skrijañ !" a lavare ar re o doa bet an dro d'eo gwelout. Ar varn a enebas kement ha ma c'hellas ouzh an tad hag ouzh ar mab evit dere'hel hemañ en e wels. Ar glac'har a verreas he buhez, a asure ar vero'hed, o walout e pe stad e oa bet lakaet hec'h hini bihan. Mac'hagnet ha distum e teuas evelat da zen. Nemet den na ouie peseurt spontailh a gloze e damig bragou.

Gouzout a reer peseurt lorc'h a vag ar baotred yaouank ouzh o c'horf. O gwilet hoc'h eus o stlepel o rochedoù war al leur da vare an eost pe ar foenn, pe'z eo dav teurel an holl nerzh evit ur choukadenn. Disgvel dargreiz moan, kofoù plat, kigennoù start hep an disterañ behin, dinden lagad an heol - hag ivez hini ar vero'hed - a zo bet a-viskoazh un dud evito. Ne oa ket heñvel-tre evit Tin pa oa bet dav dezhañ an em deurel noazh dirak ar Major da zevezh hizit ar c'huzul-refum.

Daoust d'eo izili diframmet, e nerzh korf a oa dibar. A-had e vuhez an doa bet krogadon d'ober : ouzh ar baotred e c'hoapas pe ouzh ar grennarded, hep kontañ ar choukadennoù a c'houlema e labour a-had ar bloaz; nemet nep kiladenn, nep lamm n'en doa graet dezhañ seurt taol evel an hini en doa bet da c'hoarvez en devezh-se, dinden lagad an holl, gant e izili, tort evel skourrou ar c'hozh dervenn.

Adalek neuze e teuas da vezañ gary ha kriz.

Adalek neuze e teuas da vezañ gary ha kriz.

Adalek neuze e teuas da vezañ gary ha kriz.

Adalek neuze e teuas da vezañ gary ha kriz.

Adalek neuze e teuas da vezañ gary ha kriz.

Adalek neuze e teuas da vezañ gary ha kriz.

Adalek neuze e teuas da vezañ gary ha kriz.

Adalek neuze e teuas da vezañ gary ha kriz.

Adalek neuze e teuas da vezañ gary ha kriz.

Adalek neuze e teuas da vezañ gary ha kriz.

Adalek neuze e teuas da vezañ gary ha kriz.

Adalek neuze e teuas da vezañ gary ha kriz.

Adalek neuze e teuas da vezañ gary ha kriz.

Adalek neuze e teuas da vezañ gary ha kriz.

Adalek neuze e teuas da vezañ gary ha kriz.

Adalek neuze e teuas da vezañ gary ha kriz.

Adalek neuze e teuas da vezañ gary ha kriz.

Adalek neuze e teuas da vezañ gary ha kriz.

Adalek neuze e teuas da vezañ gary ha kriz.

Adalek neuze e teuas da vezañ gary ha kriz.

Adalek neuze e teuas da vezañ gary ha kriz.

Adalek neuze e teuas da vezañ gary ha kriz.

Adalek neuze e teuas da vezañ gary ha kriz.

Adalek neuze e teuas da vezañ gary ha kriz.

Adalek neuze e teuas da vezañ gary ha kriz.

Adalek neuze e teuas da vezañ gary ha kriz.

Adalek neuze e teuas da vezañ gary ha kriz.

Adalek neuze e teuas da vezañ gary ha kriz.

Adalek neuze e teuas da vezañ gary ha kriz.

Adalek neuze e teuas da vezañ gary ha kriz.

Adalek neuze e teuas da vezañ gary ha kriz.

- 2) Fe heuliañ en deus bet e wall-zarvoud evit Tin ?  
 3) Penaos e ra an aozer da reuzasaat ha da zramaeaat istor Tin ?

+ + + + + + + + + +

Kentel 5

YEZHADUR

Studiañ ar stagell, §§ 647-655.

Poselladenn :

- 1) Stagit al lavarennou-mañ gant RAK ha PEOGWIR a bep eil :

Fuloret eo ar mestr / erru int re ziweghat.  
 N'hall ket mont da vagen / izel eo ar mor.  
 Ne vo ket mat an eost / re fall eo bet an amzer.  
 N'eo ket evit dougen ar valizenn / skizh eo.  
 Kouezhet eo klañv / labourat a ra re.

- 2) Stagañ an div lavarenn gant NEMET e-lec'h MET :

Debrñ a ra kalz, met labourat a ra kalzik ivez.  
 Dero'hel a ra an atant he-unan, met harpet e vez gant he breur.  
 N'en deus lavaret netra din, met klevet em eus gant re all...  
 Ne glemme ket, met lenn a raed ar boan war e zrenn.  
 C'hwezek vloaz eo, met kredet e vefe eo ugent.

- 3) Savit pemp frazenn diwar skouer homañ :

En un taol en em lakaas da cuelañ. Ma vo souezhet an holl.

- 4) Savit pemp frazenn diwar skouer homañ :

Dirollet e oa ar mor. Ken na soñjant e veuzjent holl.

+ + + + + + + + + +

Kentel 6

SKRIVADENN

Grit evel dalc'hmata, ha respontit d'ar goulennoù.

+ + + + + + + + + +

Kentel 7

LENNADENN RENET : Eostig Sant-Malo.

Ar marvailh brudet-mañ zo bet addispleget e brezhoneg-kronn gant Roparz Hemon, hervez barzhoneg Marie de France e gallez kozh. Ur c'haer a daol-arnod en doa graet Roparz Hemon oc'h adsevel ar pezh-se e brezhoneg ar Grennamzer. Hogen evit na vo aesoc'h deoc'h lenn anezhañ, hon eus e lakaet e brezhoneg bremañ, pe gentoc'h, hon eus gwisket ar stummoù kozh en hon skritur a hiziv.

Bremañ e komzin deoc'h a ur marvailh, zo galvet gant an dud kozh marvailh eostig Sant-Malo.

En Sant-Malo, zo kêr galloudus ha pinvizik ez edo gwezharell daou varc'hag mat hag a vrud. Tiez an daou zenjentil-se a oa tostik an eil da egile. Unan a'n daou varc'hag a oa demezet da un itron neurbet kaer, mistr a gorf ha flour a deod. Hag e kenderere hi plijadur o wiskañ dilhad priecius hervez feson ha giz he amzer. Ar marc'hag arall a oa c'hoazh dizenez, hag anavezet edo gant e gompagnuned evel den kadarn hag enorus, rak bras oa e largentez, hag evel na c'houeze kalz e tispigne kalz ivez, hag e roe donezonoù hag aluzonoù hep kontañ.

Ar marc'hag yaouank-mañ a roas e garantez da vrag e amezeg. Ha dre he fedañ hir amzer ha he servijañ, dre e vout neulet gant an holl, ha harteze ivez dre mat eo eñ nepred pell diouzh he daoulagad, en berr dermen e teuas hi ivez d'e garst. Hag oa mar bras ha tener o c'harantez, he dero'hel a rejont ken klor na welas nikun ar pezh a oa en o c'halonoh. Ne vo evezhet o sekred gant den, na ne lakaas den harz ouz o darempred, a oa tra assibl dre o bout ken tost amezion. An daou di a oa kichen ouz kichen, sal ha solier ha grignol, ha ned oa d'o dispartiañ nemet ur voger gozh, hag a oa en gwirionez uhel ha graet gant main kreñv.

Ran veze an itron aezet en he c'hambri, n'he deveze da ober nemet stouañ ouz he fenestr evit komz gant he mignon. Hag e c'hallont ivez tourel lizheroù ha profoù koant arall an eil da egile. Ha ned oa netra da ober dezhe displejadur nemet na c'hallont bout kevret ken lies ha na karjent. Rak an itron a veze graet gward war-nezhi pan veze he ozhac'h diouzh ar gêr. Hag ewalkent e c'hallont komz en noz evel en deiz. Na ne c'halle den miret na vijent en o fenestr o sellat an eil dremm egile.

Bremañ, goude hir amzer tremenet evel-se, e teuas an deizoh da vezañ tomm, d'ar pred na vez glas ar pradoh ha'r c'hoadoh, ha gwenn ar berjezoh, ha'n evnad ken prim da ganañ ha na vez prim ar bogennoù da vleuivih. Hag en sasun-se ivez e tigor ar c'halonoh d'ar garantez. Ha pa lavaran deoc'h ez edo ar marc'hag yaouank-se leun a hireezh da vout tostoc'h d'an itron, ha hi o c'hoantaat bout etre e zivvrec'h, na lavaran nemet gwirionez.

En noz, pan veze al loar o sklaeriañ ha'n ozhac'h o roc'hat en e wale, e save an itron didrouzik ha monet bet' ar fenestr ha stouañ da welet dremm an hini a oa ouz he gortoz. Menal a raent i evel-se an darn vuiañ a'n noz, rak ne lavar deoc'h nend eus c'hwekoc'h tra da'r re a gar eget chom ouz arvestañ an hini karet pa ne c'hellont kavout gwel.

Se a c'hoarveze ken lies na teuas d'an ozhac'h ur wezh dihunañ. Hag e c'houlemaas neuze gant konnar pe dre abeg ne c'halle hi chom sioul er gwela.

- Aotrou, - eme 'n itron, - nend eus evidon er bod lovenas ken dispar ha klevet an eostig o kanañ. E gan a sav ken c'hwek en noz, na rankan monet ouz ar fenestr da selaou. Na telenn na rebed ne son ken brav a hanter. Ha gant an hoal an eus da glovet an evr-se, ne c'hallan serrañ lagad bet' ar beure.

Pan glevas an ozhac'h ar prezeg-se gent e vrag, e c'hoarzas anañ e-unan gant errez ha n'alz, hag e tivizas he zouellañ. Gourc'hanonn a eure d'ar neveloh astenn rousedoh hag antell lasoh ha lintagoh en e liorz war gement gwezenn a oa enni. Na voe en berr amzer sezizet an eostig ha kaset da'n aotrou. Ha homañ a voe neurbet joanuz ouz e zero'hol bev, e galonig o krenañ gant ar spont en e zorn. Hag er c'hiz-se ez eas en kambri an itron hag e lavaras :

- Maz edoc'h-c'hwil, na fried ? Deut tost anañ da welet an eostig he mire war zihun en noz. Kouezet c'hwek a c'hellfet ha diskuiñhañ en peuc'h hiviiziken.

An itron pa ententas ar c'hoazh-se a voe anezet hag ankenet gant moder, hag a bedas he aotrou da reiñ dezhi an eostig en donzoh. Hogen e-giz respant e waskas eñ gouzoug en evnig kaezh gant e zacu zorn ken kreñv na voe diframmet e beun diouzh e gorf, ha neuze e taolas ar c'horf en barlenn e vrag, na voe sactret he dilhad gant ar gwad. Hag ez eas er-maez ar kambri leun a araj.

An itron a gemeras ar c'horfig en he dorm en ur skuiñhañ daeroh c'hwerv. Hag e tanallas ar re o devoa astennet rousedoh, he c'halon dalc'het holl gant konnar ha

krasoni ouzhi he fried.

- Gwa ne ! - a le'vas hi, - setu me reuzouidik bremañ, pa na c'hallan mui sevel diwar na gwele en noz ha monet da'r fenestr da welet na c'har. Hag e kreda eñ ez om-me yen en e geñver. Ha nand eus den en metou da'n aliañ penaos e rin. Me a roy dezhañ an eostig hag a gaso dezhañ kaloù a'r pezh zo c'hourvezet.

Ha'n itron glac'haret-mañ a gemeras un tamm seiz gwenn kaer hag a vrodas gant neud aour warmezhañ istor an eostig. Hag en tamm seiz-se e lakas korr' an evn, hag e c'halvas ur servijer feal hag ez arc'has dezhañ kas an dra-se da'r marc'hag yaouank.

Ar nevel a yeas davet ar marc'hag hag en saludas a-berzh an itron hag a eure e gefridi. Ha'r marc'hag a voe melkoniet bras, hag evelkent ne deurezas ket e em veñjañ. Lekat a eure ur mecherour da ober un arc'hig e feson un archead, ha ned oa ket unan houarn na dir, hogen unan aour fin ha mein kner, pinvizik hag a bridz. En arc'hig-se e lakas korr' an eostig, hag ouzhi he bezañ siellet he dougas gantañ kement ma'z ae.

Ar marvailh-mañ ne chomas ket kuzhet pell anzer. Dezrevallet e voe gant ar varzhed ha brudet buan en Breizh.

Goulennoù :

- 1) Displegañ ar gerioù-mañ : "mistr a gorr", donezonoù, "en berr dermen", aezibl, berjezoù, sasun, rebed, amozañ, "em metou", arc'hiñ, arc'hig.
- 2) Klaskit adkavout ar stummoù kozh miret er skrid, displegit anezho, ha klas-  
kit kounañ e peseurt skridoù ho poa o gwelet a-raok.
- 3) Fetore dudi'ho pezh-c'hwil o lenn ur marvailh evel-se ?

+ + + + + + + + +

TAOENN AL LENNADENNOU

|   |     |
|---|-----|
| Abeozen : Crit dlouzh na laran . . . . .                                    | 162 |
| Abeozen : Skrapet . . . . .   | 159 |
| Barzhaz Breizh : Ar ne c'hilas . . . . .                                    | 118 |
| Barzhaz Breizh : Kroz an hent . . . . .                                     | 7   |
| Erwan Berthou : Klennvan ar vartoloded . . . . .                            | 97  |
| Erwan Berthou : Lomenik . . . . .   | 95  |
| Bugale Iar (I) . . . . .  | 47  |
| (II) . . . . .  | 63  |
| Youenn Drezen : An dour er-dro d'an Inizi . . . . .                         | 153 |
| Youenn Drezen : Karm-hañv an aotrou Maer . . . . .                          | 65  |
| (I) . . . . .   | 68  |
| (II) . . . . .  | 71  |
| (III) . . . . .   | 74  |
| (IV) . . . . .  | 144 |
| Youenn Drezen : Skol-loarn Veig Trebam . . . . .                            | 146 |
| (I) . . . . .   | 148 |
| (II) . . . . .  | 182 |
| (III) . . . . .   | 187 |
| (IV) . . . . .  | 107 |
| Youenn Drezen : Mintin war en erin . . . . .                                | 137 |
| Anjela Duval : Labour an estren . . . . .                                   | 140 |
| Eostig Sant-Malo . . . . .  | 139 |
| Arzel Even : Hol lamagezh kollet . . . . .                                  | 89  |
| Maodez Glanadour : Kennadeg evit Nedeleg . . . . .                          | 86  |
| Maodez Glanadour : Menez . . . . .  | 90  |
| Maodez Glanadour : Morann ha Iarv . . . . .                                 | 85  |
| Yeun ar Gow : Ar Gôr villiget . . . . .                                     | 60  |
| Yeun ar Gow : Ar Ierson Touer . . . . .                                     | 165 |
| Yeun ar Gow : Chomet e oa ar vazh e toull an nor . . . . .                  | 164 |
| Yeun ar Gow : C'hoar soudard Kiberen . . . . .                              | 126 |
| Yeun ar Gow : Halverezh ar Roc'h Veur . . . . .                             | 169 |
| Roparz Hemon : Il Lestr . . . . .   | 163 |
| Roparz Hemon : Ar Pech aour . . . . .                                       | 26  |
| Roparz Hemon : Breizh hag ar bed . . . . .                                  | 29  |
| Roparz Hemon : Paotr e vlev ruz . . . . .                                   | 41  |
| Roparz Hemon : Porth . . . . .  | 178 |
| Loeiz Herrieu : Itron varzhudus Trevison (I) . . . . .                      | 184 |
| (II) . . . . .  | 111 |
| Loeiz Herrieu : Un ti hep oaled . . . . .                                   | 117 |
| Ronan Huon : Ar c'helenner meur . . . . .                                   | 105 |
| Ronan Huon : Er c'hoad . . . . .  | 186 |
| Ian Inizan : Trefalagenn e Ienouarne . . . . .                              | 180 |
| Ian Inizan : Paolig ar Sann . . . . .                                       | 170 |
| Ar Joubiouz : D'an buhez . . . . .  | 10  |
| Reun Menez Keldreg : Gwelloc'h eo lazhañ ar gouloù, Tin . . . . .           | 21  |
| Jakez Konan : An den meur . . . . .   | 50  |
| Divi Konan Kongar : Ar Boudedeo, l. Cabloù . . . . .                        | 25  |
| Fañch al Loe : BILZIG . . . . .   | 34  |
| 1. Bilzig ac'h a da glask an aluzen . . . . .                               | 23  |
| 2. Bilzig ac'h a da glask beñt ha gwiad d'ober kevall ha boutegoù . . . . . | 15  |
| 3. Bilzig atav o pichotañ tra pe dra evit an tiegezh . . . . .              | 16  |
| 4. Bilzig hag ar valtouterian . . . . .                                     | 16  |
| 5. Bilzig hag e vennoziou . . . . .   | 16  |
| 6. Bilzig ha per an aotrou person . . . . .                                 | 16  |
| 7. Bilzig dirak ar barner . . . . .   | 16  |

|  |     |
|--|-----|
| 8. Bilzig e bourzh 'Ar Vran'                                   | 55  |
| 9. Bilzig, Gargam ha nab an actrou                             | 37  |
| 10. Bilzig, nous e bourzh 'Ar Gwennili'                        | 43  |
| 11. Bilzig war al Lev-Draezh                                   | 53  |
| 12. Lizeh Bilzig a'e vamm Izabel                               | 59  |
| 13. Nozvezh ar morgazhed                                       | 45  |
| 14. Tiegezh Izabel   | 13  |
| Fañch al Lec : Du an deiz, du an noz, ha du ivez va beznoz     | 99  |
| Langleiz : Dispac'h al loened                                  | 131 |
| Langleiz : Enez ar Rod   | 129 |
| Langleiz : Izold gwenn he minc'hoarzh                          | 127 |
| Langleiz : Tristan fell  | 142 |
| Langleiz : Tristan hag Izold                                   | 108 |
| Mabinogi : Poell Priñs Deved (I)                               | 18  |
| (II)   | 32  |
| Roperzh ar Mason : Ar Sikarned                                 | 137 |
| Roperzh ar Mason : Evit ket ha netra                           | 133 |
| Loeiza ar Meliner : Spontailh Kerfeg                           | 102 |
| Yann Mikael : Tonkad Harkl                                     | 11  |
| Meven Mordiern : An div reizh houarn                           | 121 |
| Meven Mordiern : Bugaleerezh Manos ha Bena                     | 116 |
| Youann Olier : Deizlevr Brezel 1944                            | 177 |
| Youann Olier : Enez ar Vertuz                                  | 175 |
| Orfeo hag Herodis (I)  | 156 |
| (II)   | 177 |
| Jarl Priel : Danevell al levler portugalat Manoel Ortega       | 124 |
| Prosper Prouz : Kimiad ur soudard yaouank                      | 101 |
| Jakez Ricou : Ar Balafenned Gwenn                              | 155 |
| Jakez Ricou : Ian, embanner al ludu                            | 149 |
| Jakez Ricou : Serr-noz   | 151 |
| Taldir : Ar c'han a game Maggi                                 | 83  |
| Taldir : Ur wech e oa... ur c'hrennard, un diskard, ur soudard | 82  |
| Tonkadur Bugale Usnac'h (I)                                    | 77  |
| (II)   | 92  |
| Frañsez Vallee : Eñvorennoù ur brezhonegour                    | 80  |

